



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé
Source : <http://catholique-quimper.ccf.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011

Feiz ha Breiz



It betek Betleem

Petra furch, en douar, da lagad, va den paour,
 Gant kement a bres hag a vall ?
 Dont a ra d'it hirio kals gwelloc'h eget aour :
 Karantez hep priz ar bed all.

Petra glask, hep paouez, da galon, va den foll,
 E goueled flêrius ar poull-fank?
 Daoust ha ne weles ket eo d'it hag eo d'an hou
 Mor doun an dudi digor frank ?

Petra c'hoanta, noz deiz, den gouiziek, da spered
 Henvel ouz eur c'hlasker bara?
 Deut eo, war an douar, euz bro-bell ar stered,
 Ar wir sklerijenn da bara.

Paourkez tud en anken a gest aour talvoudek
 Joaiou ha skianchou ouspenn,
 It, d'ar red, tre da graou ar BUGEL galloudek,
 Plegit ho klin, stouit ho penn.

Aour ho po digantan ha ne verglo biken,
 Joaiou an nenv d'eoc'h a roio,
 Dour beo e ouiziegez ennoc'h hiviziken
 En eur feunteun c'houek a droio.

Digemeret a ra ar paour, ar pinvidik,
 Ha den ebet er maez ne daol;
 D'eomp holl, war an douar, e galon birvidik,
 D'eomp holl, en nenv, plas diouz e daol.

SANT-BRIEG, 12-12-31.
 6, rue du Parc,

J. L'HELGOUACH, O. M. I.

Kanouennou Bleun-Brug Brest

a zo e gwerz e « Keriltud » :

22 real al leor, kaset dre bost.

Evit her c'haout skriva da :

Mlle Pauline Torcol, 11, rue Algésiras, Brest.

Sonjezonou evit ar bloaz-nevez

Eur bloaz all aet diganeomp, eur bloaz nevez o
 tont a rô tro d'eomp da zonjal ha da boueza meur a
 dra, diwar-benn stad ar brezoneg endro d'eomp. N'eo
 ket siouaz war wellaat eo ez a ar bed gantan ha n'eus
 ket ezomm da zellet a-bell evit gwelet hor yez karet,
 en tiez, evel war ar plasennou, o koll tachenn hag o
 rankout kila tamm warlerc'h tamm, dirag ar galleg.
 Ne dalv ket sarra an daoulagad, an dra, daoust pa-
 gen poanuis e c'hell beza evid hor c'halonou a Vreto-
 ned, a zo gwir-bater. Kant ha kant gwech, ken alies
 ha bep miz, *Feiz ha Breiz* en deus diskleriet ar wirio-
 nez kasauz-ze d'e lennerien karet; m'her gran hirio
 eur wech muioc'h, eo evit he lakaat da zanka dou-
 noc'h en o sperejou, evit digeri c'hoaz gwelloc'h o
 daoulagad. Pa vez taget ar vro gand enebourien an
 diavaez, an holl eo a rank beza war zao, evit rei d'ez
 o nerz, hag o buhez ma vez ret; pa z' eo hirio ene ha
 gened hor Breiz-Izel taget, an holl Vretoned leal ha
 gwirion, a dle ive beza war-zao evit stourm hag enebi,
 ar pezh ma c'hellint, ouz ar re holl, dre fallagriez pe
 hep sonjal, a glask mouga hon tenzor kaëra goude
 hini hor feiz.

Er brezel graët enep d'hor brezoneg, n'eo ket gant
 nerz hon divrec'h na gand armou, eo e rankomp
 stourm met dreist-holl gant hon teod gand hor c'ha-
 lon ha gant hor pluenn. Ar brezoneg en hon amzer,
 n'eo ket hepken gwall-gaset, heskinet er skoliou, gand
 an dud e karg, met siouaz war ar maeziou, en tiez,
 gand ar mammioù o-unan, ha kement-man a zo tru-
 builhus meurbed. Ar vamm, rouanez an ti, kelenne-
 rez ar vugale, ne gar mui ar brezoneg hag a zesk ar

galleg d'he re vihan. O bro muia karet va c'halon, o va Breiz, o kaëra bro, o bro va c'havell, peseurt avel yut ha digernez he deus c'houezet war da zouarou, war da diégeziou, evit dizec'ha, evit mouga e kalon ar mammou, ar garantez evidout.

An droug, ar gaou graet da vugale Breiz er skoliou divrezonek a c'helle da vihana beza diarbennet gand ar mammou er gêr; hi a c'helle eüna spered he bugale, o c'hentelia hêrvez he giz. Petra welomp siouaz hirio? ar mammou, n'eo ket hepken o vankout d'an deverze, met oc'h ober kalz gwasoc'h, hag o tont da laza i o-unan, ar brezoneg en e eienenn, e genou o bugale. Bugale reuzeudik, ma tigorfe eun deiz o daoulagad, e c'hellfent mallozi o mammou hag ober rêbechou da veza nac'het outo eun dra hag a oa ken dleet d'ezo eget ar beva hag ar gwiska. Mammou Breiz-Izel, stank hirio, ne fell d'ezo mui e ve bretoned e bugale; hep gouzout sur-awalc'h perak, int deuet da gasaat ha da gaout heug ouz ar brezoneg. Evel en defe heman chachet warno pe war o familh eun disenor pe eun dismegans bennak, e reont d'ezan evel d'eur paour dic'hras, tec'hout kuit pell diouto. Na war an oaled el lec'h m'o deus desket i o gerioù kenta pa oant c'hoaz bihanik war ar varlenn, nag en dro d'an daol m'eo bet azezet ken aliès outi an dud koz, en o zi d'ezo n'eus mui a blas evid ar brezoneg, evel Joseph ha Mari kaset eus Bethleem, hen ive a rank mont da glask digor en eul lochenn bennak. A ! breman e welomp war hor maeziou, ar brezel graet er skol d'hor yez paour, o tougen e frouez put; kompren a reomp perak kemend a wragez yaouank a ra fae war ar brezoneg ha ne fell d'ezo a-briz ebet hen deski d'o bugale, perak ive kemend a vugale diskoliet o deus mez o komz evel o zud.

E miz mae diveza, e tigouezas d'in mont en eur barrez tosta; pask ar vugale a oa, hag evel ma vez

graet peurlies a evid ar gouel-ze, ar beleg er gador a gomzas diwarbenn deverioù ar gerent e kenver o bugale. Poueza reas kalz war garg ar vamm, ha chomet eo heo em spered, ar gerioù-man, am skoas muioc'h eget ar re all. « Ar vamm eo a ra an den; he c'helennadurez a zo evel eun neudenn hag a hench an den beteg ar maro ». En eur zistrei eus an Iliz warzu ar gêr, e ruilhe em fenn ar c'homzou-ze hag e lavaren ennoun va-unan « ya ! nag e lavare gwir ar beleg-se, ma karje ar mammou, pebez bugale vat, pebez bugale fur o defe »; eus tachenn ar feiz e kousjen war dachenn hor Breiz hag ar brezoneg hag e sonjen « ya ! ma karje ar mammou derc'hel mat d'o gizioù koz; ma karjent chom ar pezh ma 'z' int, bretonezed leal, hor bro Vreiz ne ve ket hirio ken toc'hor ha ma z' eo an traou ganti ». Ar mammou a c'hellfe adsevel hor bro ha miret d'ezi he yez, he zenzor, he ene.

Ha dre ma kerzen gant va hent e teue sonj d'in eus ar pezh am oa gwelet, en dervez araok, hag en doa graet poan spered d'in : en eun ti ' oan bet, kuzet duhont, e kreiz ar gwez hag e oa ennan pevar a vugale vihan o c'hoari; hini anezo ne ouezas lavaret d'in eur ger brezonek, hag en eun ti all diou grennardez, c'hoaz er skol, hag a responte e galleg ouz o mamm goz a gomze d'ezo e brezoneg...

Kelennadurez ar vamm a hench an den beteg ar maro, met neuze nag a vugale o sevel da dud hag a zo kollët evit atao d'o bro Vreiz. Kelennadurez ar vamm eo a ro brall d'ar vuhez en tu pe du evid ar pezh a zell ouz ar feiz; hi ive en hor bro, a ro brall d'ar vuhez evid ar pezh a zell ouz ar brezoneg : brezoneg ha feiz, peur e kompreno ar mammou ez eus eul liamm etrezo ha ne c'hell beza torret, hep gloaza ene ha kalon o bugale.

Unan a zaou, pe ar mammou a ouezo ober o dever

war ar poent-se hag hor bro Vreiz a gavo derveziou kaer ha laouen, pe e teuint muioc'h mui da zisprijout o yez hag o gizioù ha neuze hor bro a yelo d'ar bern a gammejou bras. Kousto pe gousto, red eo d'ar mam-mou chom bretonezed leal. Plijet gant lennerien *Feiz ha Breiz* dre o skoueriou hag o aliou o sikour, hervez o galloud, da zerc'hel mat, ha da ziarbenn ar re a zo tec'hed diwar an hent eün. Piou a c'hello sklerijenna ervat ar sperejou, tomm a c'halonou eus eur garantez vrasoc'h evit Breiz, piou nemedoc'h c'houi, o Mabig Jezuz, hag ho peus gwechall skuilhet d'elou a garantez war ho pro. Plijet ganeoc'h, e talbenn ar bloaz-nevez-man skoulma startoc'h starta e kalon pep breizad al liamm etre ar brezoneg hag ar feiz.

L. B.

D'an dud yaouank

Me n'oun mui eur bugel

Pa glevont o c'herent oc'h ober rebechou d'ezo, o veza m'int deuet re ziwezat d'ar gear eus eur gouel beznak, o veza m'int bet gant tud n'eo ket mat o darempredi, ar baotred yaouank a lavar, lorc'h enno. « Me n'oun ket mui eur bugel. »

Hag e kav d'ezo e fleont rei eur vuhez direiz, war zigarez ma teu oad d'ezo, n'o deus mui ezomm da veza kabestret, e c'hellont mont d'al lec'h ma karont, ober evel a garont.

Pourkez pennou skanv, diboell ! N'ouzont ket petra a lavaront. War o meno, n'eus mui lezenn, reiz ebet ken evit an dud deuet da veza bras. Ha d'ar mareze eus o buhez eo e tlefent ar muia plega d'al lezenn, senti, evel bugale, ouz o c'herent, senti ouz gourc'hemennou Doue.

« M'omp mui bugale ! » Rakse ta e c'hellont ober fae war genteliou o c'herent, ha war gourc'hemennou Doue. Breman e c'hellont rei o gwalc'h d'o holl iou-lou, redek el lec'h ma karont da glask plijadur, ha den ne dle ober rebechou d'ezo, rak ar pezh a reont a zo mat.

N'oc'h mui bugale, nann. Gwazed n'oc'h bet ive. N'oc'h nemet lamponed divalo, mezus hoc'h oberou. Merket eo war ho tremm, e lizerennou sklaer, petra a dremen en ho kalon. Ho taoulagad o deus kollet o sked, sellet a rit a-dreuz, ne c'hoarzit ket evel tud onest; c'hoant hoc'h eus ober goap eus pep tra; hag e gwirionez, truezus eo ho stad; n'oc'h eus mui a joa, a levez, ha ma lavarit oc'h eürs, e lavarit geier. »

« N'oun mui eur bugel. » Mat, evit mont da rouantelez an Nenv, eo ret beza henvel ouz bugale. Eun deiz, a lavar d'eomp sant Vaze, an diskibien a dostas ouz Jezus, en eur lavaret : « Pehini eo ar brasa e rouantelez an Nenv ? » Ha Jezus gervel eur bugel bihan hag e lakaat en o c'hreiz ha lavaret : « E gwirionez, m'hel lavar d'oc'h, ma ne zeuit ket da veza tud all hag henvel ouz bugale vihan, n'ez eot ket e rouantelez an Nenv. Evelse, an hini a en em laka bihan, evel ar bugel-ze, hennez eo ar brasa e rouantelez an Nenv. »

Da bep oad eo talvoudus beza bugale, da lavaret eo kaout eur galon naet a bec'hed, glan, kaer dirak Doue.

Glanded ar galon, setu aze ar gaera eus ar vertuziou. Dies eo da ziwall, hag evit he miret eo ret heil-

ha ha stourm kalet. An hini he dalc'h a zo eun den, hag a zo dleet d'ezan meuleudi. Pegen kaer eo ar vertuz-ze ! Ganti tal ha daoulagad an den yaouank a zo splann, e zremm a zo warni eur c'hened skedusoc'h eget traou an douar-man. E vouez, e zoare, kement a ra a blij d'an dud. Koant eo, kaer da welet, dont a ra dioutan c'houez vat ar zantelez. An holl e gar, an holl o deus fizians ennan.

An hini, avat, a lez kabestr gant e ioulou direiz, hennez a zo donjerus da welet; e zaoulagad, e vouez, pep tra ennan a verk eo perc'hennet gant an droukspered, c'houez fall a zo gantan.

« Me n'oun mui eur bugel ! » Rakse ' ta, pa z' eus deuet d'eoc'h nerz ha skiant-prena, grit hiviziken evel an dud vras. En em roit d'al labour a-zevri, savit abred eus ho kwele, na c'hedit ket e vije graet mounourez d'eoc'h evel gwechall, bezit kalet ouz ar boan, n'en em glemmit ket evit an distera tra, sikourit ho kerent, ha mar deus re goz en ho ti, grit o labour en o lec'h.

« Me n'oun mui eur bugel ! » Rakse ' ta, hiviziken c'houi a vezo tud a benn, poellek, ha nann pennou-skann evel ma vez alies ar vugale. Ho komzou, hoc'h oberou a ziskouezo e teu d'eoc'h furnez, hag ho kerent a vezo laouen o welet o deus bugale vat, a raio enor d'ezo, enor d'o ano.

o Me a c'hell gwelet pep tra

Sant Aogustin a gomz d'eomp eus eun den yaouank, Alypius, en doa heug ouz ar c'hoariou kriz a veza laket enno tud d'en em ganna etrezo pe ouz loened. E gamaraded a glaske e gas d'o heulia, met hen a responte gant nerz. « Ne fell ket d'in mont, a lavaran d'eoc'h. »

Eun dervez goulskoude e voe, evel en desped d'e-

zan, kaset ganto d'ar c'hoari-lec'h. C'houez ar gwad a oa ebarz, hag an dud, digor bras ganto o daoulagad, o doa mall da welet adarre emgann ha lazerez. Alypius a zalc'he kloz e zaoulagad. « Me a ziskouezo d'am c'hamaraded, emezan, n'o deus gounezet netra oc'h va digas aman. »

N'en doa ket, siouaz ! klozet e ziskouarn. Eur griadenn spontus a voe klevet a greiz-holl, eur gwall dra bennak a oa c'hoarvezet ; Alypius, o sonjal marteze oa krenv awalc'h evit ober eur zell, a zigoras e zaoulagad. Gwelet a reas ar gwad o ruih, ha ne c'hellas mui distaga e zaoulagad diouz an emgann; plijadur a gemere; edo deuet da veza henvel ouz ar re all; strakal a rae e zaouarn, gounezet oa holl d'ar c'hoariou kriz, hag e kuiteas al lec'h-ze gant ioul da zistrei kerent ha ma kavje tro. »

Den yaouank, pa z' ez d'ar saliou-dans a vez enno gwelet ha klevet traou dizonest, pa z' ez da welet peziou-c'hoari a ra goap eus kement a zo santel ha de-reat, pa z' ez da zellet ouz skeudennou lous eur sinema a rafe da varmouzien ruzia gant ar vez, pa lennez levriou n'eus enno hano nemet eus traou hudur, e teufes da lavaret d'in n'out ket felloc'h da c'houde? Trei geier ne rez ken. Bep wech m'out bet el lec'hiouze, ec'h eus kollet eul lodenn eus da nerz, eus da gaerder, ha marteze ouspenn eul lodenn. Ma kendalc'hez, em' an graet ganez, kement a oa a vat ennot a vezo kollet.

Komzomp sklaer. O lavaret: « Me a c'hell gwelet pep tra », te a c'hoanta lavaret : « Me a fell d'in gwelet ar pez a garan hag a ra fae war genteliou va c'herent hag ar re all. »

Met, o c'hoantaat gwelet pep tra, e teuer buan da c'hoantaat ober pep tra, da lavaret eo en em rei d'ar pec'hejou hudur, hag ar pec'hejou-ze, evel m'eo bet diskleriet uheloc'h, a denn digant an den yaouank

yec'hed e ene ha yec'hed e gorf. Stlabeza a reont ennan skeudenn Doue. P'edo santel, e galon a oa evel eun aoter el lec'h m'edo Doue o chom; dre ar pec'hed, an aoter-ze a zo saotret ha dilezet gant Doue. »

An neb a c'hoari gant an tan a en em zevo. An neb a gar gwelet, klevet traou hudur a en em gollo. Hag eur wech kollet, marteze e vezo evit ato.

Den yaouank, selaou mat. Diwezatoc'h te a vezo tad a familh. Ha c'hoant ec'h eus da veza eürus ha da rei eüfusted d'ar re a vezo o veva ganez, ha dreist pep tra an hini a vezo da bried? Dalc'h kaer da galon. An dud a zo glan o c'halon, ar re-ze eo an dud krenv, ar re a en em ro d'ar pec'hed hudur, eo an dud dinerz, an dud fall, ar re a laka freuz ha dizurz er bed-man. Ha ma teufe tud eur vro a-bez d'en em rei d'ar pec'hejou hudur, ar vro-ze a vije buan-dismantret. Gwelet ez eus bet poblou, bet krenv ha brudet epad eun niver bras a vloaveziou, o vont da netra o veza m'o doa an dud dilezet gizioù fur o zadou. An tiegeziou, ar broiou n'hellont ket chom en o zav, ma ne vez ket sentet enno ouz lezenn Doue.

Met, evit senti ouz lezenn Doue, ez eus da stourm, da stourm heb ehan, ez eus da deurel evez, da veilha war ar skianchou, an daoulagad, an diskouarn, da dec'het diouz an dud fall, diouz al lec'hiou fall. Evelse hepken e c'heller kaout an trec'h.

Y. U.



Geure'hemennoù ar plac'hed yaouank (1)

- I. — Plac'h yaouank a-raok dimezi,
An oad d'hen ober a c'hedi.
- II. — Abredik eo d'it klask kaout gwaz,
A-raok seitek pe driouec'h vloaz.
- III. — War roudou da vamm e kerzi
Ha, fur, 'en he serr, e kreski
- IV. — Heb asant da dud ne gredi,
Gwech ebet, paotr darempredi.
- V. — Danvez eur gwaz mat p'her c'hlaski,
N'eo ket en davarn her c'havi.
- VI. — Nag en davarn, nag en ti-dans,
An tiez-se 'zo eur viltans.
- VII. — Difizians vras a gemeri
Eus ar c'homzou flour a glevi.
- VIII. — Ouz komzou flour diouall ervat :
Ar c'haz a guz ivin e droad.
- IX. — Eur c'hristen mat a gemeri,
Gantan e c'helli dimezi.
- X. — Hag en dro d'ho taol, bugale,
A c'hoarzo ouzoc'h, hep dale !

TINTIN ANNA.

Liziri Perig hag Aziliz

Eur c'helou mat am eus da rei d'eoc'h : Per en deus kavet eur vaquez ! (Eur vaquez fur ha dereat, kempenn ha sioul. Mil aoun en devoa d'en em gaout gand eur c'hla-bouserez; eur vaquez devot eo ivez. N'eo ket er zal-dans, — « en dancing » eo en deus he c'havet met en he c'hêr hag en iliz eo endevoa he gwelet.

(1) O adlakat a reomp dre ma oa faziou moulerrez enno er miz tremen.

En hant tremen he gwele ivez er pardonioù, da lavar-
ret eo en oferenn-bred hag er gousperou, gant he mamm;
e kichen ar feunteun e walc'he he daoulagad gant an
dour burzudus.

He c'harout a rae hep gouzout perak, mat a-walc'h, met
hep tro m'en deveze he gwelet e chome ar zoni anezi en
e spered ha laouenoc'h e veze e galon. Ne grede ket an-
zav e garantez ouz den ebet, nag outi nag ouz hini all rak
n'en devoa ket a c'hoant d'he straffuilha. Hogen, dre ma-
tostae ar bloaz nevez e venne diskleria d'ez, pelloc'h, ar
pez a oa en e galon; prena a reas eur gartenn gaer, eul
labousig rus skeudennet en eur c'horn anezi hag ec'h en
em lakeas da skriva d'e zousig koant. Antronoz e voe la-
ket ar gartenn en eur golo-lizer, a oa warnan hano ha ke-
riadenn ar plac'h ha roet, dre guz, da baotr al liziri, gant
dek gwenneg da brena eun timbr da lakat warnan.

O! pebez lizer brao a en em gavas gant Aziliz, daou
zervez goude; evel moulet e oa ker brao e oa skrivet;
hag e brezoneg c'houek, mar plij! Per a zo desket mat hag
e vestr-skol en deus bet ar skiant da rei d'ezan eur gentel
bennak war ar brezoneg ha d'e alia da genderc'hel gant
ar studi-ze; gouzout a ra trei eul lizer: ma ne gredit ket,
lennit hoc'h-unan; e ziskouez en deus graet d'in ha setu-
hen aman:

Lizer Perig

Aziliz, va mignonez,

*Souezet e vezi, marteze, o kaout lizer diganen-me Perig
Wilhou! Hen anzav a rankan ouzin, eun den aounik ha
gver a-walc'h oun ha n'ouzon ket eus a belec'h e feu d'in
an hardisegez a gavan hizio.*

*Reketi a ran d'it ha d'az tud peb a vloavez mat met
komz a rankan ouzil ivez eus ar pez a dremen em c'halon;
ma n'em eus ket her graet kentoc'h eo dre m'en em gaven
c'hoaz re yaouank da lavarout hano eus a gement-man ha
neuze aoun am oa na rafes fae warnon, te ker mat, kouts-
konde!*

*N'hellan mui tevel; va c'halon a zo d'it, Aziliz; ar ga-
rantez a zo enn n'eo ket diouanet en eun dervez; sioul e
veze peurlies. Met wechou e save he mouez hag e klas-
ken an doare d'he diskleria: va sonj am eus lakat ennout;*

*yaouank out ivez, met eur verc'h krog en he naontek
bloaz he deus skiant a-walc'h evit gouzout petra he deus
da ober.*

*Eur menoz bennak az peus? Lavar hen d'in heb aoun;
ma roes d'in eur respont vat, evel va mamm d'am zad, e
vezin eurusoc'h eget n'oun gouest d'her merka aman;
epad va buhez ne chanin ket da drugarekaat an Aotrou
Doue, rak n'em oa ket kavet c'hoaz war va hent eur plac'h
yaouank evel dont, fall da zansal, mat da bedi, karantezus
ouz ar re goz, tener ouz he zad hag he mamm: bepred
laouen pe hi a rank chom er ger pe hi a c'helle mont da
ober eur bale; ar wirionez eo a lavaran d'it aze penn-da-
benn.*

*Ma leveres d'in az peus sonj da vont da leanez, evel da
c'hoaz, pe ez peus joa ouz eur paotr yaouank all ha n'out
ket evit distrei da spered diwarnan, e kavin diaes, a dra
zur, met ne vezo ket a zroug ennou. Soubla a rin va fenn
hag e kendalc'hin da veuli Doue a ren pep tra hag a oar
rei d'omp atao ar pez a zo gwella d'ouz hon doare.*

*Sonj ervat e kement-man, dirak Doue ha ro aotre d'in da
starda, gant doujans, da zournig em hini.*

D'it evid ar vuhez ha dreist ar bez. Per Wilhou.

*Aziliz p'en em gavas ganti al lizer-ze a dridas gant al-
levenez ha ne zaleas ket da gregi en he fluenn:*

Lizer Aziliz

*Va mamm a zo laouen ha me ivez, Perig, a zo kel
laouen all; ma plij gant Doue e vezimp eureujet a-raok
Morlarjez; n'oun ket gavet da vont da leanez ha va c'ha-
lon a zo dizaotr; Aliès e sonjen: « Hini goz Perig a vezo
eurus! » Eus va zu e poagnin d'az lakat eurus a ma c'het-
li: bezomp priejou kristen, evel va zad he va mamm ha
deus aman a-raok disul, ma kavas eur pennad amzer, rak
mall bras am eus d'az kwelet.*

Da zous. Aziliz ar Prad.

*Al lizer-man n'oa ket hir; na difazi rak er gouent el
lec'h m'oa bet Aziliz er skol ne veze ket desket lenn ha
skriva nemed... e galleg.*

*Perig a lennas d'in al lizer, hep mankout eur ger, rak
dindan evor her goude; p'oa echu gantan e diviris:*

— Ha da belec'h ez eoc'h ho taou? Emichans e chomoc'h er vro ?

— Ya ! ya ! emezan ; an hevelep menoz hon eus ; gwelloc'h eo ganeomp kaout muioc'hik a boan dre aman eget mont d'ar c'heriou da zigeri hor genou ha da fripa gwenneien ; eur goueriadez eo ha me gar al labour-douar ; nefell ket d'eomp kuitaat hor micher nag hor parrez. Va zad en deuz eun tammig vad ; fermi a ray d'eomp eun drederenn eus e atann hag e savimp eun ti krenn, sklêr ha troet mat ouz an heol rak hoc'h unan hoc'h eus desket d'in ;

Eur bann-heol 'barz en ti a bella r c'hlenvejou
A laka nerz en izili hag urz er sperejou!

— Gwir eo, va faotr, a liviris d'ezan. Tro da di ouz ar c'hresteiz, evel m'eman ar c'hiz er vro ; an heol eo ar mestr da laouennaat ha da barea pe da virout ouz ar c'hlenved da spega ; laka ober prenecher bras, war da di, ha gra eul leurenn simant ennan ; aesoc'h e vezo e zerc'hel net ; solier a vezo ? Mat, lakit gweleou reas er zolier ha gweleou klos d'an traon ; arabad eo ober fae warno ; talvoudus int war ar maez, el lec'h nra 'z eus kalsvugale ha red eo esperout e vezo eun tiad mat a dud duze, diwezatoc'h. Hon tud koz n'oant ket diskiantoc'h egedomp. Dereat ha brao eo hor gweleou kloz ; ar re a zo bet ganet enno a garfe mervel enno ha n'ouzon ket perak e rafed kement a vrezel d'ezo evel ma vez graet en dervez hizio !

Eur grusifi eus ar re vrasa, an oa prenet epad ar mission, an eus roet da Ber da spega, en e di nevez, a-zioc'h ar siminal, e penn uhela an ti ; eur werc'hezic gwenn hag alaouret a zo ivez em fres ; houñnez a vezo laket a-zioc'h an nor el logig a raio eviti Jakou ar Mansoner ; ar skeurdennou-ze a verko d'an holl e tle Jezuz ha Mari ren war an tiegez kristen ; degas a raint sonj d'an daou briet yaouank ne reont nemet treuzi ar bed-man, d'ar red, hag o deuz er baradoz skoazellerien dispar, o sikouro da zougen o foaniou hag a zeska d'ezo pokat d'o r'hroaziou rak dourn-madelezes Hor. Zalver n'o fellaint ket diouto.

Ha breman ez an da di ar gemenez da lakat ober eun tavanchier nevez da vont d'ar friko. *Tintin Anna.*

Istor hor Bro-Ni

Moudennou ha Kestell

Kavet e vez c'hoaz, e meur a lec'h, e Breiz-Izel, to-sennou, graet, anat eo dre labour an den hag o deus atao, 5, 6 hag 8 metr uhelder ; hanvet e vezont moudennou ha dishenvel bras int diouz to-sennou all graet ivez gand an dud hag a hanver *tumuli*, e latin, hag e kaver, en o c'hreiz beziou ha ludu an dud pinvidik ha galloudus a veve dre aman, breman ez eus daou vil bloaz pe ouspenn.

An to-sennou a zo bet savet war beziou a zo bihan ; ar moudennou a zo kals brasoc'h ha n'eo ket souez p'eo gwir warno eo e vezo savet kestell rouaned hag aotroned vrasa ar vro-man, breman ez eus mil bloaz pe wardro.


Ar voundenn, eur wech ma veze savet a veze kilhet gand eun douvez douñ ha ledan a c'helled leuna a zour hag, en doare-ze, e veze stanket hent ar c'hastell ouz ar gouezidi hag al laeron a glaske pignat ennan.

Ar c'hastell ker-a-ze ne oant ket gwall gaer c'hoaz, e c'hellit kredi. Eun tour a veze savet enno gant mein pe gant koad ; war leur traon an tour e veze gorrennet ar greun hag ar benviachou-labour hag er zolier war gorre, hag e pigned enni dre eur skeul stag ouz ar voger a ziavaez, eo e veze an aotrou hag e dud o tebri hag o kousket ; toenn an-tour-ze a veze e soul pe e mein-skient.

Stag ouz an ti bras e veze kavet eun all disteroc'h evid ar mevelien ha krevier evid al loened ; ar skeudenn vihan a welit aman, tennet diwar unan vrasoc'h savet gand an A. de Saint Luc, a roio d'eoc'h da c'houzout pebez doare kestell oa re. Nevenoc'h hag hor roua-

ned all breman e zeus mil bloaz; ar skeudenn-ze eo hini Koatmorvan e Mahalon.

Evel m'eo aes d'eo'h her gwelet, ar c'hastell-ze n'en devoa tamm ebet stumm eur palez; tud an amzer-ze n'o deveze ezomm tamm ebet, kouls lavaret eus o ziez, nemed evit tremen an noz; epad an deiz e labourent er parkeier; pa veze fall an amzer ar vamm hag ar mer-



Kastell Koad-Morvan, e Mahalon evel ma kav d'omp e oa gwechall.

c'hed ar gave labour a-walc'h da ober en ti o neza hag o vrouda ouz skleder an deiz a deue en o c'hampr dre ar prenecher moan a veze warni pe ouz skleder tan ar siminal hag a deue dioutan peurliesha muioc'h a voged eged a c'hor.

Pa veze noz a-walc'h e veze sklerijennet an ti gand eur c'houlouenn rousin; ne jomed ket gwall bell da veilha; mont a raed da gousket, ar gwazed diouz eun-

tu hag ar merc'hed diouz eun tu all, e gweleou bras, stignet tu-ha-tu gant krec'hin.

War an deiz ar Aotrou a gare beza o chaseal pe oc'h ober eun dro d'e zouarou pa ne veze ket o vrezel-
lekât e kosleziou Roazon pe e kosteziou an Naoned.


Pa deue laeron da glask trabas e stlaped birou warno hag e skoed warno a daoliou goaf; pa c'hellent kaout an trec'h e kasent ganto kement a veze diouz o doare: greun, loened ha tud; diouz an dud e klas-
kent, goudeze, tenna ar muia arc'hant a c'hellent; a-raok mont kuit gand o semmenn e lakent an tan en ti ha setu aze perak, pa c'houilier el lec'h ma 'z eus bet koz kestell e kaver, alies a-walc'h, mein bet ruziet, anat eo, gand an tan, met ne gaver ket a beziou moniz nag a vraoigou arc'hant pe aour ar pezh a ziskouez ne oa ket anezo er vro; ar pezh a gaver eo tammou podou, pennadoù houarn bet oc'h ober armou pe veniachou-
labour, eskern loened ha netra ken; pinvidigez an am-
zer-ze oa kaout eleiz a chatal er c'hrevier ha trevajou kaer er parkeier ha daoust ha n'eo ket hounnez eo ar wella pinvidigez a oufed kaout, zoken en hon amzer?

Moudennou Leon

Goude ma oant bet e brezelioù ar groaz, p'o devoa gwelet an tiez kaer a oa e broioù ar sav-heol, tudchen-
til Breiz-Izel a gavas re zister o c'hestell-douar; sevel a rejont kestell mein gand eur porz kloz ha tourioù uhel ha mogerioù ledan tro-war-dro d'ezan: setu ar pezh a voe graet, da vihanan, e Penhoad, e Sant Thegonneg; gwelet a c'heller eno c'hoaz tammou mat eus kastell an XIII^{vet} kantved hag eur c'hard eur bale uhe-
loc'h ema ti koz ar Penhoad, hanvet c'hoaz Kastell-Douar, en deiz a hizio: henez eo kastell an IX^{vet} kant-
ved hag anat mat eo atao e voundenn hag e zouveziou.

E Bro-Leon e kaver daou gastell koz evelse eus an IX^{vet} kantved: Kastell Uhel, e Trezilidê ha Leskelenn, e Plabenneg; e kichenik Koat-Méal ez eus ivez eur

C'hastell-Uhel; e Koad-Meur, tost da Landivisiau, ez eus ivez eur C'hastell-Douar; moudennou all a gaver c'hoaz e Koad-an-Tour, e kichenik Kerouzere, e parrez Sibiril, e Tournuz, e Gwineveg-Lokrist, hag e Morizur, e Plouider; moudennou all disteroc'h a gaver e Kera-vel, e Plouenan, e Kerfeulz, e Sant Thegonneg hag e Roudou-hir, e Kernouez : n'eus enno ken nemet kouli-ved ha broc'hed.



Moudenn Kastell-Uhel, e Trezelide

Tosenn Lok-Eginer Sant Thegonneg a zo bet graet, nann evit talvezout da gastell, evel ar re all; met kentoc'h evit teurel evez war an hent bras graet gand ar Romaned da vont eus a Roazon da Blougerne, dre Geraëz.

Moudennou Treger

E Bro-Dreger, an diou voundenn gaera a anavezan a zo e Plouigneo: Kastell-Dinan ha Koad-ar-Ferté; eun all gaer a gaver war menez Charuel e Gwerleskin; re all c'hoaz a c'heller da welet e Porzmeur hag e

Kerhallon e Plouegad-Gwerran, e Trevedern, e Gwi-maeg, er Veuzid, e Lanveur, e Koatelan, e Plourin hag en Tour e Plougouven; ar nioudennou-ze eo mam-mou an holl vanerioù a zo en o c'hichen hag a zoug o hiano.

E Koatelan, end-eeun eo bet savet ar maner e kreiz ar voundenn: Pa vezo lavaret mat, kaera moudenn a zo en tu-zeou-ze eo hini Diskeou, e Plougouven.

Moudennou Kerne

E Kerne, n'eo ket moudennou eo a vank ivez: etre Skrignag ha Karnoet, ema Rozpellenn; gant he moudenn uhel ha bras a-walc'h da ober eur plas-kêr hag a-walc'h he zreid e dour an Aon.

Demdost daRozpellenn, e kichen Sant Gweltas, e Karnoet, ema Kenekilheg ho pezo diwarnan eur gwel eus ar re gaera; war an hent bras a ya eus a Skrignag da Volazeg, ema moudenn Hellez.

E Goueled Kerne e kaver moudenn Killiou, e Plougastell-Sant-Jermen, Botsafam, e Plomelin, an Dreo, e Sant Evarzeg, Luzuen e Nizon.

Kaera hini evelato a gaver er vro-ze eo hini Stang-Rohan, e Pluguffan.


Moudennou all a gaver c'hoaz e Bonescad, e Plougonneg, hag e Pengilly e Peumerid.

A bep seurt marvailhou a red etouez an dud divar-benn ar moudennou-ze: dindan hini Koad-Meal a leverer ez eus eur varrikennad aour hag a zo daou zta-gon ouz he diouall.

Dindan hini Lok-Eginer ema tenzorioù seiz parrez.

War ar voundenn a zo tost da vaner Lezwenn, hag harp en hent a ya eus a Dreglonou da Blouguin eo edo Sant Fregan ha Santez Gwenn o chom gwechall hag eno war a leverer, eo e c'hanas Sant Gwennole. Eno ivez eo e reas Gwennole eur burzud e kenver e c'hoar Klervia. Houman a oa o redek warlerc'h eur wazienn; en eun taol al loen-man a yeas e kounnar, a zailhas

war ar verc'h vihan, a ziframmas eul lagad eur he fenn hag hel lounkas, Gwennole hag a oa, dres war al lec'h, a dapas ar penn-gwazi, a zigoras he c'hof d'ezi gand



D'an nec'h, Kastell Stang-Rohan, e Pluguffan.
D'an traon Kastell Rozpellenn, e Carnoet.



e gourell, a gemeras al lagad hag el lakas adarre en e blas; Klervia a c'hellas gwelet gantan koulz ha kentoc'h; ar wazienn a bareas ivez, war an taol, hag a ziskennas, en eur jorgellat, etrezek ar gwazi all. A-uz feunteun sant Gwennole, e Sant Fregan'eo skeudennaonet ar burzud-ze.

Mondenn ar Ferte e Plouigneo a zo bet ivez pleustret gant treid eur zant bras, sant Erwan hag er bloavez 1330 pa voe digoret e Landreger prosez Santelez Mab Kervarzin, Plezou Pestivien, intanvez Herri Charuel, a deuas da ziskleria he devoa digemeret meur a wech ar beleg mat en he zi, ha dre zoujans evitan, da gredi eo, eo e voe roet e hano da vab ar Ferte, Erwan Charuel an hini a stourmas ker kalonek, e Emgann an Tregont, er bloaz 1351.

Da gloza, setu eur gontadennig verr hag ho lakay da c'hoarzin.

Bremian ez eus kant pe c'houec'h ugent vloaz, parrezioniz Lamber, evel m'o devoa eur person a glaskas ivez kaout eur maer hag en em zistaga evelse a-grenn diouz Ploñger. Trouz a zavas dioc'htu etre ar wazed o klask gouzout piou anezo a vije laket e penn an tikêr; ar re anezo o devoa ar muia c'hoant da gaout ar garg-se a en em vodas war an dosenn uhel a zo e kichen an iliz hag a hanver ar *grugell*; unan anezo a stlapje eun aval d'an traon, gand ar muia herr a c'hellje, hag ar c'henta hen tapje a vije maer kenta ar gommun nevez: ar pezh a oa bet divizet a blijas d'an holl; an aval a voe stlapet d'an traon hag ar baotred wella da redek war e lerc'h en dra c'hellent, eur vres hag eur vount ganto, met p'en em gavjont e traon ar grugell e oa unan eus moc'h Kereozen eno hag a oa kouezet war an aval hag en devoa e lounket; evel ma n'oa ket dereat e henvel da vaer, Lanniz-Per a jomas sioul he ne glaskjont ket ken ober eur gommun eus o farrez.

BOUTOU TAD KOZ



BOUTOU TAD KOZ

1. — Perig em devoa c'hoant da gaout eur c'harr-dre-dan digand ar Mabig Jezuz, da c'houel Nedeleg, met kredi a-rae e oa re vihan e voutou evit ma 'z aje eun auto enno.

2. — Ha setu perak a-raok mont da gousket, e lec'h lakat e voutou e-unan e korn an oaled e lakas boutou e dad koz hag en devoa lizians vat da gaout eun auto enno.

3. — Antronoz, deiz Nedeleg, e savas abred eus e wele, mall gantan gwelet petra en devoa lakat ar Mabig Jezuz e boutou e dad koz.

4. — Tostaat a reas ouz ar siminal hag e welas ar boutou, met n'eus doare ebet d'eun auto da veza enno.


5. — Ar pez a gavas eo eur c'horn-butun hag eur pakad-butun; sionaz! ne oa auto ebet! Netze avat e savas bouñ ha lenv.

6. — *Perig.* — Sell 'ta, Tad koz petra en deus roet ar Mabig Jezuz d'in! Hi! Hi! Hi!

Tad koz. — Re ez poa c'hoant da gaout; ma 'z pije lakat da voutou da-unan ne vijes ket bet tapet evelse!

Boutou-ler Yann ar Garreg

Breman ez eus pemp kant vloaz e oa eur marc'hadour-mezher o chom e Gwengamp hag a oa e hano Yann ar Garreg; eun den mat a-walc'h e vije bet anez ma oa re biz en holl; betek penn-ar-bed en divije redet war-lerc'h eur gwenneg; aoun en devoa o tibri ha n'eo ket dilhad eo a veze war e gein met kentoc'h eur bern truilhou re fall da vont e sac'h eur pilhaouer; e vou-



lou-ler, dreist holl, a oa bet dreset ouspenn ugent gwech ha n'oa ket aes gouzout pehini oa an tamm kenta enno; an holl e kêr a anaveze boutou-ler Yann ar Garreg hag a c'hoarze diwar o fenn.

Eun dervez ez eas d'eun ti d'en eun walc'hi; kaout a eure eno unan eus e amezeien hag a reas brezel

d'ezan abalamour d'e voutou : « Mall eo d'eoc'h, evelato, Yann, mont da lakat ober eur boutou nevez! »


—: « Ya! ya! eme Yann, gwelet a rin an dra-ze, divezatoc'h! »

Pa deuas er maez eus ar gampr m'oa bet oc'h en em walc'hi enni e kavas e kichen an nor, e lec'h e voutou, eur re nevez eus ar re vraoa, hag e teuas da gredi e oant bet paeet d'ezan gaud e amezog ha setu hen d'o gwiska ha da vont en hent ganto, mar gouie; siouaz, ar boutou-ze oa boutou ar gouarner, an Aotrou Kernabad hag unan bennak, dre farserez, eo en devoa laket boutou Yann d'ezan e lec'h e re; graet e voe en-



klask; kavet e voe buan ar boutou nevez ha Yann ar Garreg a rankas rei 50 skoued evid e binijenn: restalet e voe d'ezan e voutou koz. Diwar neuze, pelloc'h, e teuas da gaout kas outo hag e klaskas en eun zizo-ber anezo; mont a eure da zonjal o stlepel er ster, met war an hent e kavas eur voger goz, hag a oa eun toull enni: « Sell, eme Yann, ha ma kreskfenn an toull-man

da stlepel va boutou ebarz! » Yann a greskas an toull hag a lakas e voutou ebarz, met, siouas, en noz war-



lerc'h ar voger a gouezas; ar boutou a voe kavet, Yann a voe tamallet da veza bet pennabeg d'ar voger da goueza ha kondaonet da baea 100 skoned d'he ferc'hen evit he adsevel.

Ar paourkaez Yann a deuas da gasaat muioc'h-mui e voutou hag evid en em ziober anezo da vat o stlapas en eur puns, demdoñt da gêr; siouas dour ar puns-ze eo an hin à veze kaset, d'he gorzennou, betek Kastell

Gwengamp; ar boutou a stankas ar c'horzennou ha pa 'z' ejod da zistanka ar re-man e voe gwelet eo boutou Yann ar Garreg eo a oa ouz o stanka, setu ma voe kon-

daonet o ferc'hen adarre da rei 300 skoued evid ar gaou en devoa graet.

Pa glêvas eun hevelep kelou, Yann, en e gounnar a yeas da stlepel e voutou e dour ster an Treo a red e traon kêr; ar boutou a spegas e roued eur pesketaer hag her rogas; ar pesketaer o welet ar boutou a voe lorc'h ennan, da genta, met pa welas boutou piou e oant e pignas e kêr hag o stlapas da Yann, en e di,



dre ar prnestr, gant kement a herr, ma torrjont gwer ha podou evit talvoudegez mil skoued.

Yann a oa ken nec'het gand e voutou milliget ma lakeas en e benn o devi: « Neuze, da vihanan, emezan, n'am iakint ket ken da gaout koll, evel breman! »

Siouas! ar boutou a oa gleb: Yann o lakas da zec'ha da genta, war gorzenn an doenn, met, eur c'hoz kaz bennak o tremen dre eno, o lakeas da goueza war bent

eur wreg yaouank a zouge eur c'hrouadur, war bleg he brec'h: ar vamm a voe glazet hag ar bugel mac'hagnet evid ar rest eus e vuhez.

Ar marc'hadour kaez a voe lakët er prizon ha kondaonet da baea eur yalc'had arc'hant ker bras d'an daou a oa ket glazet gand e voutou ma voe rivinet ha laket war an douar noaz.

Pedi a eure ar barner d'en em garga da zistruja e-unan ar boutou milliget, ha da rei d'ezan eur paper merket warnan n'en devoa mui da respont anezo.

An Duk Per hag a oa neuze o chom e Kastell Gwen-gamp, gant e bried an Dukez Franseza Amboaz a glevas hano eus trubuilhou ar marc'hadour hag a gemeras truez outan; e garga a eure da evesaat war al leveou en devoa e Lamball ha tro-war-dro hag en doare-ze, evelato, eur wech deuet eus ar prizon, ne voe ket ret d'ezan mont da glask e vara a zor ha zor.

G. P.

Abbé F. MÉVELLEC.

L'Immortelle Carthage

et

Les Mystères du Bled

Préface de Louis BERTRAND, de l'Académie Française

— Un vol. in-8° de 240 pages.

— 47 illustrations, papier de luxe, —

15 francs. Franco, 16 francs.

En Vente chez l'Auteur:

Abbé F. MÉVELLEC, PENHARS (Finistère).

—o— C/C. Nantes 246-34 —o—

ET CHEZ TOUS LES LIBRAIRES CATHOLIQUES DE LA RÉGION



Kontadenn abenn Nedeleg


Va mignoned vihan, an istor emañ o vont da gonta d'eoc'h a zo gwir-bater; c'hoarvezet eo bet epad ma oan c'hoaz yaouankik flamm ha plijadur ho pezo ouz he lenu.

E miz kerzu eus ar bloavezh 1916 e oamp; dere'hent gouel Nedeleg a oa ha va zad hag a oa deuet e permission evid eun nebeud dervezion, — evel an holl dadou all edo er brezel bras, — a reas d'eomp eur c'hraouig koant evit lakat ar Mabig Jezuz.

Ar c'hraou-ze, evitan da veza dister, a reas kals plijadur d'am breur ha d'in hag epad pell hag hir amzer e talc'hin sonj anezan; ma kirit, bugaligoù, e livirin d'eoc'h penaos e oa graet; stern ar c'hraou a oa graet gand eur voest paper kalet ha warni e oa laket eur gwiskad kolo, ilio ha kinvi. Evit rei liou an erc'h d'an doenn, va zad a fuilhas warni eur guchennig vleud. Ar pezh a ranked kaout c'hoaz oa pastored ha denved. En amzer ar brezel e oa diaes kaout traou kaer zoken evid an Aotrou Doue; va zad a gemeras neuze eun nebeud kartennou-post hag e oa skeudennaouet warno paotred koz o vituni, mammou koz o neza, sonerien biniou ha pesketaerien Konk-Kerne pe Zouar-

nenez; gand an dudigou-ze va zad a reas ar bastored a oa deuet da adori Salver ar bed.

Pa voe echu ar c'hraou, gant va zad, va breur ha me a lavaras gant devosion hor grasou hag e c'houlenjomp ouz ar Mabig Jezuz rei d'eomp, da genver nozvez kaer e c'hinivelez, madigou hag eur c'hoariell bennak.



Antronoz, deiz Nedeleg, e savjomp hon daou abred eus hor zwele, mall ganeomp gouzout petra en devoa lakat ar Mabig Jezuz en hor boutou: oranjez, avalou ha peb a varc'h koad bihan d'eomp hon daou: nag e oamp laouen, va Doue!

Neuze, evit trugarekaat ar Mabig Jezuz, e taoulinjomp dirag e graou hag e vije lavaret e oa o vourc'hoarzin ouzomp.

Pa oa echu hor pedennou e klevis Renan o lava-

rout d'in e pleg va diskouarn, en eur zellout ouz ar Mabig Jezuz: « Sell! e sukr emañ! »

Diouz an noz, mamm hor c'hasas da gousket en hor gwele blot ha p'he devoe poket d'eomp ha pa oa aet kuit, Renan a lavaras d'in adarre:

— Klev 'ta, doare en deus da veza mat ar Mabig Jezuz; e sukr emañ!

Antronoz vintin e voen dihonet gant va mamm a lavaras din ankeniet, eun tammig:

— Mabig Jezuz ar c'hraou a zo aet kuit. Daoust ha piou en defe e laeret?

Den ne respontas.

— : Mat, eme va mamm, lakat a rin eun all ha gwelet e vezo ha mont a raio kuit evel egile.

Antronoz vintin ne oa Mabig Jezuz ebet ken adarre. Neuze va zad a lavaras:

— Unan bennak ac'hanoc'h, sur a-walc'h, en deus debret an daou Vabig Jezuz.

— N'eo ket me eo, a liviris d'ezan.

— Na me, kennebeut, a lavaras ivez Renan, lostok eun tammig.

— Te eo, a lavaras va zad; lakat a rin eun all c'hoaz hag e vezo gwelet:

— Nann n'eo ket me... ar c'haz eo.

Va zad a lavaras e chomje da veilha, diouz an noz, en hor c'hampr, evit gouzout piou oa al laer. En nozvez-se, em boe poan o kousket hag e krenen gand an aoun da welout laer ar Mabig Jezuz. Souden eur skeud a dremenas a-uz d'am fenn; en em guzat a ris dillo dindan al linseliou. Pe eur c'horrig e oa pe Baolig, n'em oa ket bet amzer da c'houzout mat a-walc'h; edon o vont da hopal pa glevis eur vouez o lavaret d'in:

— Ro peoc'h; rannet e vezo ar Mabig Jezuz etrezomp.

Ar vouez-ze oa hini va breur hag her gwelis ouz sklerijenn al loar o tostaat ouz an c'hraou hag o kemeroù ar Mabig Jezuz; edo o vont da zistrei d'e wele, pa deuas eun den a-dreñv e gein, goulou gantan, hag a-lavaras en eur gregi en e vrec'h.



— A! laer; setu tapet al laer, en taol-mañ; ha petra raes eus ar Mabig Jezuz?

Va zad oa ha Renan, lostok, paket war an taol, a lavaras en eur lenva:

— E zebri a raen, hi! hi! hi! Pardon d'in! pardon d'in..!

Pardonet e voe d'ezan e laeronsi hag e komprenis neuze perag e selle Renan gant kement a avi ouz ar Mabig Jezuz; lipous e oa hag e kemere tro eus an amzer ma kave d'ezan e oa kousket an holl evit laerez; p'en devoa kavet mat ar Mabig Jezuz kenta e laeras an eil ha graet en divije kement all d'an trede m'en divije gellet ha d'ar re all c'hoaz, goude, mar-teze, betek gouel ar Chandelour.

Ha setu perak, er bloavez warlerc'h, e lec'h lakat eur Mabig Jezuz sukr er c'hraou e voe laket eur Mabig Jezuz koar.

Hervé CAOUSSIN.

(Istorioù va bugaleach).





Markiz koz Kastell Du a oa unan eus an dudchen-til-ze hag a veve sioul ha didrous en o maner, heb en em emmell nemeur eus ar pezh a dremene en dro d'ezo, hag evelato n'oa ket eurus.

Pinvidik mor e oa ha piz-gagn; e vaner a oa goloet a ilio ha diskempenn an traou war e dro; hen e-unan n'oa ket nec'het gand an dra-ze, tamm ebet, met e verc'h Azenor hag a oa he-unan penn o veva gantan, he deveze mez, meur a wech, o veva diudan eun henvelep toenn. A-wechou zoken e krede rebech d'he zad e garantez re vras evid an arc'hant hag ar markiz a responte d'ez:

— Evidout, Azenor, eo emañ o tastum danvez; da argourou int.

Azenor ha n'he devoa neuze m'oar vat nemet c'houezek vloaz n'edo ket troet kals he spered c'hoaz war an diñezi. An amzer a dremene. Eun dervez ar markiz koz a glevas e oa eur prins bras, mab ar roue, a lavaret, o redek holl diez pinvidik ar vro evit kaout eur plac'h yaouank diouz e c'hoant :

— Va Doue, a zonjas Aotrou Kastell Du, ha ma teufe eun dervez Azenor da veza prinsez, rouanez zoken, na pebez eured kaer a vefe aman!

Ar zonj-ze a vire outan da gousket hag eun dervez e lavaras da Azenor ar pezh a zonje :

— Kaer eo an dra-ze, va zad, a lavaras ar plac'h yaouank, met ha kredi a rit hu e tevio mab eur prins da ober e ziskenn en eun ti ken distrantell hag henman ?

Ar pezh a lavare ar benherez a oa re wir; Kastell Du ne jome en e zav nemet dre vuzud hag eun danjer oa chom ennan da veva.

Komzou Azenor a bikas ar markiz koz; ma 'n devoa c'hoant da welet e verc'h hag a oa koanta plac'h yaouank a oa er vro o vont da brinsez, e oa da d'ezan adsevel e di. Hogen, mont a rae buan an amzer en dro hag ar prins budet-se hag a oa Gwelvador e hano a dlee en em gaout e Kastell-Du abenn eiz dez : eiz dez ! birviken ne c'hellje ar markiz kaout labourerien a-walc'h da renka d'ezan e vaner, e ker berr amzer; mont a reas neuze da gaout Nennok ar sorser evit goulenn kuzul digantan :

— Met, en eiz dez, ne c'hello den ebet biken ober eur seurt labour ! a lavaras Nennok en eur zével e zivrec'h er vann.

— : Den, eme ar markiz; ha petra rit eus ho kaloud 'ta neuze? Mil skoued ho pezo ma livirit d'in penaos ober al labour-ze en eiz dez.

— : Mil skoued ! eme Nennok, sebezet.

Biskoaz ne oa bet kemend all a arc'hant etre e zaouarn ! Mil skoued evit lavarout d'ar markiz koz penaos en em gemerout evit sevel eur palez en eiz dez.

P'en devoe graet e zonj e lavaras gand eur vouez izel ha misterius :

— Nann, penn kristen ebet ne c'hello sevel d'eoc'h eur palez en eiz dez met anaout a ran unan evelato hag a c'hellfe hen ober : an Diaoul.

Krena a eure ar markiz o klevout an hano-ze :

— An Diaoul ?

— : Ya ! ya ! Paol Gornok, n'eus ken nemetan hag

a c'hellfe ober ar pezh a c'houlennit a-lavaras Nennok gand eur vouez hag a grene.

— : Mat, trugarez d'eoc'h ! gwelout a rin; met, evit kaout Paolig, petra rankan da ober, eme ar markiz ?

— : Netra aesoc'h ! N'ho pezo nemet mont emberr, goude dek eur diouz an noz, da groaz-hent an Diaou-



Ar markiz ha Nennok, ar sorser

lou-Ruz hag e kavoc'h eno tri gwaz; goulenn a reoc'h outo penaos en em gemerout da zvel ho kastell; hini eus an tri-ze, avat, ne c'hello ho respont, met ho kas a raint da gaout eur pevare hag hennez ne vezo ket neç'het, evit lavarout d'eoc'h, dioc'htu, penaos en em gemerout.

Ar markiz goude beza roet e vil skoued da Nennok, a zistroas d'ar gêr ha da zek eur noz, daoust m'en devoa aoun rak Paol-Gornok e yeas da groaz-hent an Diaoulou-Ruz da glask an hini a zavje d'ezan e di nevez.

Evel m'en devoa lavaret ar sorser, kaout a eure da genta tri gwaz divalo ha ne c'helle hini anezo ar pezh a c'houlenne diganto met eur pevare a zigouezas, yaouank c'hoaz, ha gwisket evel eur prins :

— Petra glaskit, Aotrou ? emezan d'ar markiz koz.

— : Abenn eiz dez aman e-rankan dimezi va merc'h d'eur prins brudet ha va zi, daoust d'in da veza markiz, n'eo ket dereat a-walc'h evit rei digemer d'eun Aotrou bras evel hennez; sonjet em eus ho pije gallet rei skoazell d'in.

— : Kompren a ran petra glaskit, a lavaras Paolig, en eur jacha war e varo; gwelout a ran ac'han ar palez a vefe diouz ho toare; mat, dinoc'h e c'hellit beza; a-raok eiz dez aman ho pezo ho kastell nevez.

Laouen holl e oa Aotrou Kastell-Du. Edo o vont da gimiada diouz an diaoul pa grogas heñman ennan gand e bao blevek en eur lavarout :

— N'ho pezo ho ti nemet diskouez a rafec'h d'in eun dra ha n'em eus ket gwelet c'hoaz ha ne vezo gwelet gant den ebet ken; anez, hoc'h ene a zo d'in hag hini ho merc'h Azenor ivez.

Ar geriou diweza-ze a lakeas ar markiz da grena; c'hoant en divije bet da derri ar marc'had, met al lorc'hentez a viras outan d'hen ober : dimezi va merc'h, da genta, emezan, ha goude e vezo gwelet !

Markiz Kastell-Du a zo laouen; bet en deus e balez savet, evel dre vuzud hag e benherez a zo deuet da veza gwreg ar priñs Gwelvador. Ar markiz a zo stad ennan o welout e verc'h aet da briñsez; deuet eo da veza gwreg ar priñs Gwelvador; deuet eo da wir e hunvre kaer; met, eun nozvez, stouaz, ha n'oa

ket evit serra eul lagad e teuas sonj d'ezan eus ar marc'had graet etre Paolig hag hen. Keuz a zavas gantan. Pelec'h ez aje da glask eun dra ha ne oa bet gwelet morse gant Paol Gornok ha ne vije mui gwelet gant den ? Eun dervez m'edo o tebri eun aval ha n'oa ket henvel ouz ar re all e sonjas n'en devoa ket Paolig, marteze, gwelet hennez c'hoaz.

An noz a ro kuzul, eme ar markiz koz, ha ma teu an diaoul, warc'hoaz vintin, e vezin prest d'hen digemerout.



Setu eun aval ne vezo mui gwelet gant den !

E gwirionez, antronoz vintin, Satan a deuas da skei war dor ar palez.

— Ac'hanta, plijout a ra d'it da gastell ? Ha dimezet eo da verc'h, eme Baolig, gand eur mouc'hoarz goapaüs.

— : Ya ! ya ! eme ar markiz hag emoun o vont

da ziskouez d'eoc'h dioc'htu ar pezh ho poa divizet varlene.

— : Gwella-ze ! eme an diaoul, en eur vouse'hoarzin, lorc'h ennan o sonjal edo o vont da gas gantan, war an hevelep tro ar verc'h hag an hini koz.

Ar markiz a dennas eus e c'hodell eun aval en devoa boulc'het en dervez a-raok ha gand eur mouc'hoarz e lavaras da Baolig :

— Aotrou ker, livirit d'in ha gwelet ho peus c'hoaz an aval-man ?

Kurius, an diaoul a dosteas hag e rankas anzav n'en devoa ket c'hoaz gwelet ar frouezenn-ze.

Mat, setu hanterenn genta va marc'had gounezet a lavaras ar markiz, gand eun ear goapaüs; gwelomp breman an eil.

An diaoul lostok ne c'hoarze mui; neuze ar markiz a daolas an aval d'eur penmoc'h a oa wardro eno o troial hag heman hel lonkas dioc'htu gant plijadur :

— Setu aze eun aval ha ne vezo mui gwelet gant den, n'eo ket gwir, Paol ?

An diaoul, en e gounnar, a yeas ac'hano mezok ha lostok.

Setu penaos e voe paket Paolig adarre gant finnoc'h egetañ.

Herve CAOUISSIN.



KELEIER AR MIZ

1932

Ar bloaz-man a roio tro d'eomp da zistrei war istor hor bro; nag a draou bras a zo bet digouezet, eus an eil kantved d'egile, er bloaveziou 32.

Er bloaz 432, sant Padraig a gas sklerijenn ar feiz kristen da Iwerzon o deuas, e berr amzer, da veza enezenn ar Zeñt; mibien Iwerzon eo a lakas sklerijen ar feiz kristen da lintra goudeze war an holl broioù keltiek all.

Er bloaz 632, ar Vretoned o tec'hout a-raok ar Zaozon, ha Gweltas, ar manac'h bras, a skriv war dismantrou e vro, e leor brudet « *De Excidio Britanniae*. »

Er bloaz 632, ar Vretoned o tec'hout a-raok ar Zaozon. o deus savet, en Arvor, eur vro nevez; he henvel o deus graet Breiz, evel o bro-goz, hag en he fenn ez euz eur zant, ar roue Judikaël.

Er bloaz 732, ar C'hallaoued a deu da glask trabas ouz rouantelez Breiz-Vihan; ar Vretoned a deu a-benn, braobraz, da derri o yeo e Bro-Wened.

Eé bloaz 832, sant Konvoyon, mignon bras ar roue Nevenoe, Salver Breiz, a zav abati Redon, eun ti hag e vezo pedet ennan evit Breiz.

Er bloaz 932, Breiz savet trouz etrezo a zo trec'het gand o enebourien; Breiz a zo maro, dilezet gand an nenv ha gand an douar, gand Doue ha gand an dud !

Er bloaz 1032, Breiz a zo bet adsavet met he bugale n'int ket evid en em glevet: Alan Canhiart a ro lamn d'an Duk Alan III, e Lok-Ronan.

Er bloaz 1132, d'an 21 a viz gouere, menec'h sant Bernez a deu da jom d'ar Releg hag a zav eno eun abati, e traon Menez Are.

Er bloaz 1232, Per Maucledic a glask en em glevet gand Herri III, roue Bro-Zaoz, a-eneb Roue Bro-C'hall, sant Loeiz.

Er bloaz 1332, d'ar 25 a viz mezeven, Yann III, Duk Breiz, a deu da ober eur bale da Lok-Maze Penn-ar-Bed da welet al labouriou bras a ra eno ar venec'h evit difenn o abati ha kêr Lok-Maze ouz ar Zaozon.

Er bloaz 1432, Jili Breiz a zo kaset gand e dad, an duk Yann V, evel kannad da Vro-Zaoz.

Er bloaz 1532, d'ar 4 a viz Eost, Breiz hag ar Frans, disparti a-grenn betek neuze a deu d'en em unani; d'an 13 a viz Eost, Fransez, mab hena roue Frans, a zo laket kuruenn Duked Breiz war e benn, gand an eskob santel, Yvon Mayeuc, ginidik eus a Blouvorn, hag a gemer an hanô a Fransez III.

Er bloaz 1632, ar c'hardinal Richelieu, krouer porz Brest, a gas d'ar ger-se, evel gouarner, e genderv an A. Charlez du Cambout, markiz Coislin.

Er bloaz 1732, ar manac'h Gregor Rostrenen, eus a urz sant Fransez a laka moula e c'heriadur bras, Dictionnaire Francois-Celtique ou François-Breton.

Er bloaz 1832, e varv e Kemper. Olier Perrin, eur breizad ginidik eus a Rostrenen hag a zisklerias buhez ar Vretoned e 120 taolenn en eul leor hanvet *Breiz-Izel*.

Er bloaz 1932, d'ar 24 a viz Gouere, e Keranna, gouel soudarded ha mortoloded Breiz; bez-meur an 240.000 breizad maro er brezel bras a vezo benniget en deiz-se!

Ra vezo ar gouelioù a vezo graet e pevar c'horn Breiz, edoug ar bloaz-man, evit freskaat er sperejou pajennadou brasa istor hor Bro, gouelioù breizek, e gwirionez, da lavarout eo gouelioù hag e c'hello ar Vretoned hag a venn c'hoaz bale war roudou o zadou kemerout perz enno; arabad e vefent hepken gouelioù ar re o deus nac'het o Feiz pe o Breiz pe an eil hag eben rak ma tleont heza gouelioù evelse, gwell e vije chom heb ober hanô anezo.

Y.-V. PERROT.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz kerzu :

An A. Guillevic, vikel vras, 6, rue Noe, Vannes....	1
An A. Cahierre, 9, rue des Carmes, Rennes.....	1
An A. Loeiz Herrieu, Renef Dihunamb, Kerneue Sant Karadeg, Henbont	1
An A. Bescond, person Pleuvian.....	1
An D. Mac'harit an Ozac'h, Skrignag.....	1
An A. Tournellec, person Mahalon.....	1
An A. Cuidennec, mestr-skol, Port-Sal-Guitalméze....	1
An A. J.-M. Prigent, person ar Fouilhez.....	1
An A. Drenou, person Tremeven.....	1
An A. P. Laurent, 2, Rue Victor Hugo, Belfort.....	1
An A. P. Breton, person Loc-Eginer.....	1
An A. G. Guennegan, kure Kastell-Paol.....	1
An A. Erwan Renan, kure Loguivy-Plougras.....	7
An A. J. Kervella, Kerdidreun, Plouguerme.....	1
Intañvez ar Gourvennec, bourk Plouguerme.....	1
An A. Sparfel, kure Plouguerme.....	1

Rakprenet eta er miz-man..... 23

Leoriou rakprenet betek-hen : $869+23 = 892$.

Kloza a raimp da vat roll rakprenerien Leor an A. Gwilhou dal ma vezo tapet ar mil.

Abenn neuze hag ac'han di
en devezo harzet meur a gi,

in eus aoun !

An hini a zivino, er miz-man, pe da zeiz eus ar bloaz
nevez e vezo rakprenet ar milvet leor, en devezo eul leor
evit netra.

Degas an hanoiou d'an A. Perrot, Renez Feiz ha Breiz,
Scrignac, Finistère, ar re o deus c'hoant da brena al leor
a-raok ma vezo moulet : degas an hano heb an arc'hant.



Divinadennou miz Genver



I. — Penn piou eo ar penn-mañ
Skeudennaouet amañ ?

II. — Dibaot e vefent donv, dibaot e vefen du
 Petra e vefent 'ta, livirit d'in dioc'htu.
Degaset gant Lan Jezequel, eus a Vrest.

III. — Petra 'zo henvela ouz penn gwenn eur gazeg
 E prenestr an ti koz e kastell Kervadeg ?
Degaset gant Louis Pellen, eus a Gemper.



IV. — Gwelet a rit daou
 goulin o c'hoari; eul louarn
 a zo harp enno; e pelec'h
 emañ ?


20 poent a zo da c'hounit evit pep hini eus ar pemp res-
 pont-se.

An teir divinidadenn ziweza a zo degaset d'eomp gant Re-
 nan Pleyber eus a Baris.

Dek priz kaer

Ar genstrivadeg nevez a zigoromp gant divinidadennou ar
 miz-man a bado tri miz hepken; gedal eta ma vezo roet
 divinidadennou miz meurz a raok degas ar responchoù.

Rei a rainmp dek priz kaer d'an dek a vezo da genta.



V. — Gwelet a rit ar penn-
 azen-ze a-ze dirazoc'h ;
 klaskit ha livirit e pelec'h
 emañ e vestr ?

Feiz ha Breiz

Pegen galloudus eo ar bedenn hag ar binijenn

Len a reomp er Skritur Sakr petra a reas Moysez
 war ar menez epad m'edo an Israelited o stourm er ble-
 nenn ouz an enebourien. Sevel a rae e zaouarn etrezeg
 an nenv da c'houlenn sikour Doue war e bobl. Hag epad
 ma tale'he e zaouarn troet ouz an nenv, an Israelited a
 c'hounez; met pa ranke, gant ar skuisher, lezel e
 zaouarn da goueza, an Israelited a gule. O welet ar pez
 a c'hoarveze, Moysez a lavaras d'ar re a oa gantan:
 « Krogit em divrec'h ha dalc'hit anezo troet ouz an
 nenv. » Hag e voe graet evel ma c'houlenne, hag an trec'h
 a jomas gant an Israelited.

Ret eo poania evit astenn rouantelez Jezuz Krist war
 an douar, evit dont a benn eus ardou fallakr an drouk-
 spered atao o klask koll an dud; ret eo prezeg, ober kate-
 kiz, skigna skridou mat evit sklerijenna sperejou an dud.

Met ret eo, dreist pep tra, pedi, ober pinijenn. Eul lea-
 nez en he c'houent, eun den klanv war e wele, o pedi,
 o kinnig da Zoue o labourou hag o foaniou pemdeziek,
 a c'houmit marteze muioc'h a eneou eget ar prezeger bru-
 deta eus ar bed.

Setu aze eur wirionez anavezet mat gant eun abosto-
 ler yaouank eus eskopti Seez, en Normandi, nevez maro,
 hag a zo bet o c'houzanv poaniou kriz epad daou vloaz
 warn' ugent. Taget, e kreiz e yaouankiz gant eur c'hlen-
 ved a grigne d'ezan e eskern, kondaonet da zilezel e
 studi, da ehana d'ar mare m'en doa e spered ioul vras
 da zastm deskadurez, koundaonet da jom hep gellout
 lavaret an oferenn, petra a reas? — En em ginnig e-unan
 e sakrifis da Zoue o c'houzanv heb en em glemm, gant
 nerz-kalon, e oll boaniou, en em ginnig evit ar veleien.
 « Ya, emezan, kinniget am eus va holl fedennou, labou-

rou, poaniou a gorf hag a spered d'ar Galon Zakr a Jezus, evit e veleien, ma vezint santel, ma vervo enno tan ar garantez. Evit ar veleien e figemeran pep tra. Fizians am oa ne vijen ket pareet e Lourd, ha n'oun ket bet. Va labour-me eo savetei an eneou, savetei eneou ar veleien. »

Pleustromp'mat war ar c'hloareg yaouank-ze. Doue en deus hen digaset d'eomp evit rei da anaout eur wech muioc'h ne dleer ket lakat ar fizians er c'hirri-brezel, er c'hezeg, en dud krenv ha pinvidik. Doue n'en deus ket ezomm eus kement-se evit ober traou bras, labour santel.

Jozef Girard a oa eur c'hloareg lemm e spered, mat da studia, c'hoant gantan kaout deskadurez vras; barz oa ive ha muzisian. E vistri a lavare: « Setu hag a vezo unan! »

Ha raktal e kouez warnan dourn Doue. Peseurt ezomm en deus Doue eus hon donezonou? Ni a zo douget da gredi eo ret ober trouz, soueza an dud evit astenn rouantelez Doue. Nann, ezomm ebet eus an traou-ze. Jozef Girard, a vec'h graet abostoler, a zo diskaret gant eur c'hlenved hen dalc'ho war e wele evit ato. Paour eo, ha ne c'hello beva nemet diwar an aluzenn; ezomm en devezo da gaout tud da entent outan, hag e kav dies kemeret amzer ar re all; eus gouliou e gorf e teu c'houez fall, her gouzout a ra. Poan benn en deus heb ehan ha ne c'hell ket studia.

Ne deuer ket da veza eur zant en eun taol. Eun dra eo ive hag a vez desket e skol Jezus-Krist. Jozef Girard, o welet e pe stad oa bet lakaet, a voe, er penn kenta, glac'haret holl betek zoken kaout c'hoant d'en em laza. « Gwelit, emezan, ha n'eo ket spontus! Me hag a gare kement ar studi, n'hellan mui labourat, ne zalc'han koun eus netra, n'hellan ket ienn, n'hellan ket skriva, n'hellan netra. »

Ne voe ket dilezet gant gras Doue. Doue a ginnige d'ezan eur groaz pounner da zougenn. Kregi a reas a drovriad er groaz-ze, hag hen dougas betek penn, betek menez kalvar. « Mervei a fell d'in, emezan, d'am c'hoantegeziou, d'am ioulou, d'an ourgouilh, da bep tra. Bolontez Doue da veza graet ennon! »

Doue a c'houlenne digantan beza paour, koll e yec'hed, ebana da studia, lavaret kenavo da holl blijadureziou ar bed-man. Ne vezo ket beleg, n'en devezo ket da lavaret an oferenn, da brezeg, da rei ar zakramanchou, d'ober katekiz, da welet ar re glanv, d'o lakat e stad vat evit mont dirak Doue. P'e gwir Doue a c'houlenn digantan lezel al labour-ze gant re all, trugarez da Zoue, ra vo beniget e hano santel! »

Jezus-Krist en deus desket d'eomp en em harpa war gras Doue hebken, rak, evit gounit ar bed e kas e ebetel. Tud deus ar renk izela, hep galloud, hep deskadurez, heb arc'hant. Met lavaret en deus d'ezo: « Bezit leun a fizians; me a zo bet trec'h d'ar bed. »

Hag an Aviel a zo bet prezeget, hano Jezus Krist a zo anavezet dre ar bed holl hag a gendalc'h da veza karet ha meulet.

Paour evel Jezus-Krist e Bethleem, Jozef Girard a ouezas ive beza henvel ouz e Vestr war menez kalvar. « Evidon-me, emezan, ar boan spered ne vezo morse ken bras ha poaniou ar c'horf, ha goulskoude da heul er boan gorf e teu atao poan spered. Arabad eo en em glemm re. Ret eo kaout mat ar pezh a blij da Zoue da zigas d'eomp. Perak e teu d'eomp ar poaniou-ze, n'ouzomp ket. Na glaskomp ket gouzout. Doue ne c'houlenn ket diganeomp kompren, met plega d'e volonteiz. Kinnig a ran d'ezan kement am eus da c'houzanv. N'oun mat da netra, er prizon em' aoun, hep den war va zro, kouls lavaret, edoug an deiz; n'hellan nag en em drei, nag azeza, na sevel, na bale, na mont d'an ofisou, na klevet kan an iliz, nag an ogrou, nag ar prezegennou; plijadur ebet d'an daoulagad, d'an diskouarn, d'am genou. Kaout diouer eus an holl draou-ze n'eo netra e kichen ar frapadou poan a zigas d'in an derzienn, e kichen an droug-penn a zeu d'in. »

Jozef Girard en deus gouzanvet evit ar veleien. Goulennet en deus evito ar c'hras da veza santel, holl da Jezus Krist, o Mestr. Neuze e vezint hollen an douar, hag e tiouallint ar bed diouz breinadurez ar pec'hed. Buhez ar c'hristen ha dreist-holl buhez ar beleg eo beza henvel ouz Jezus Krist. « Va buhez, a lavare sant Paol, eo ar C'hrist. »

Eured Perig hag Aziliz

D'an 28 a viz genver edo an eured ; amzer awal'h he deus ket bet eta ar gemenez da ober va zavancher seiz.

An daou bried a falvezas ganto beza eureujet, deiz gouel an Tad maner, eur beleg santel, a gare ar brezoneg daoust m'oa ginidik eus a Vreiz Uhel hag a brezegas, pell hag hir amzer, an Aviel en hor bro ; e vuhez o devoa lennet war *Feiz ha Breiz*, ha setu perak evit tenna e vennoz warno o devoa c'hoantaet beza eureujet da zeiz e varo.

Eur c'henderv d'ar gwaz nevez eo a deuas da ober an eured ; eur brezegenn gaer a reas d'an dud nevez ; goude m'oad deuet eus an iliz, Aziliz a ziskouezas d'in al lizer he devoa bet digant he c'hoar, leanez wenn en Afrik ; dont a reas an dour em daoulagad pa lennis ar pezh a skrive ar verc'h vat-se diwarbenn he zud hag he bro. N'em eus ket a zont ken eus kement a oa ebarz, rak ber-raet kalz eo va spered gand ar gozni, met setu aman, da vihana, traou ha ne 'm eus ket o ankounac'haet !

Lizer c'hoar ar plac'h nevez

Birmandreis, d'an 12 a viz Genver 1932.

C'hoar garet,

Brao eo d'it, pa n'ez peus ket ezomm da guitaat da barrez ; kalet eo mont eus ar vro. Pell emañ diouz va c'her ha diouz va zud, met n'o c'haran ket nebeutoc'h evid an dra-ze ; tener eo atao va c'halon en o c'henver ; ho karout a ran holl e ka-

lon Jezuz ; sonjal a ran ennoc'h hag em bro, kant gwech bemdez !

Misionerien ha leanezed, ginidik eus a Vreiz a gaver e pep lec'h ; er C'hanada hag er Marok, er broioù tomm kouls hag er broioù yen ha m'hen asur d'it e trid o c'halon gand ar joa pa glevont hano eus ar gêr, dre lizer, pe pa lennont an traou kaer a gaver e Feiz ha Breiz, moulet e brezoneg ya'h, rak ar gelaouenn vraz-ze a deu bep miz betek enno ! bez 'z eo evito evel eun tamm bara eus bara ar gêr ; c'houez vat Breiz a glever gant he faper ; ouz he lenn e welont, evel en eur mellezour, o yaouankiz e ti o zud, ar balanegoù alaouret, ar c'hoadou doun, kan al laboused o tregerni enno, ar prajou marellet gand ar bleun... kuitaet o deus kement a garent evid en em vouestla da Zoue, lakat ar boblou gouez da anaout e hano, ha gouzanv dre garantez evitan. Met arabad eo kredi, daoust m'eo bet trec'h ar garantez o deus evit Doue d'an hini o deus evid an dud, o defe ankounac'haet ar re-man ; o c'halon a zo aet d'o hent hag ar galon-ze, bez dinec'h, ho kar hag ho karo da viken. Deiz da eured, Aziliz, ne zistag'n ket va spered diouzit ; bez eurus er vro ; kendalc'h da veza eur gristenez vat hag e laki laouen, epad e vuhez, Perik Wilhou, an den a galon vat-ze a anavezan hag a zo fiziet ennout.

Pokat a ran d'it kalonek ha d'am zad ha d'am mamm e kasan va gourc'hemennou ha va doujans.
ANNA-MARI.

Dilhad eured ar plac'h nevez

Ar plac'h nevez n'eo ket troet d'en em ficha ; dilhad kaer evelato a zo prenet d'ezi da vont da eureuji ; gwisket dereat e oa ; eul lostenn zeiz du, eur boutou-ler lugernus, hag eur chal brou-

det a goueze betek an douar ; eun tavancher a liou hag eur c'houef dantelezet a gaerae he gwis-kamant ; chom a raed a-ban da zellet outi o tremen hag ouz he gwelet meur a hini a lavare e oa Aziliz ar Prat koanta merc'h a wiskas dilhad.

Hi avat a deue en he spered ar pezh he devoa lennet diwarbenn eur vaouez santel eus ar XVII^{vet} kantved, an Itron de Forsanz a zouge da zeiz he eured eur gurunenn vleunion, liou an nenv ha dindan houman eun all graet gant spenn lemm a c'hlaze he zal.

Aziliz a jome ar gwel eus an diou gurunenn-ze dirak he daoulagad ; epad an oferenñ e pedas heb ehan : « Va Doue, emezi, na bellañt ket ar spenn diouzin, m'ho peus c'hoant e vefen henveloc'h ouzoc'h ; grit ma kemerin skouer war ar mammou kristen o deus hentchet va c'hammejou kenta war hent ar zantelez ! »

Kan ha levez

Ne voe kanet en iliz nemet latin ha brezoneg : kantikou kaer ha Te Deum ken e tregerne an iliz. Er friko an dud yaouank a ganas ivez soniou brezonek *Feiz ha Breiz* ha kanaouennou dudius ar *Bleun-Brug*.

Janned a zo uhel ha skiltrus he mouez ; kana a eure : *Paotr e c'halle plat*, da lakat an dud da c'hoarzin ha Soazig : *An Durzunell, Kalon ha Kalon...* ha re all.

Renea, ar plac'h enor, daoust ma 'z eo pounner he spered a vennas ober eur gest evid ar skoliou kristen ; eur bilhied a zek lur a lakeas he-unan er plad hag alia a eure he gwaz enor da ober evelti.

Oliv ar penn-avel am eus gwelet ivez... o klask lakat Moris ar Stank, a zo oc'h ober e vloaz sou-

dard e Gwened, da zellet outi... Met, m'he deus c'hoant d'e gaout e ranko prena eun tamm bouedenn-benn ha beilha war he zeod.

N'oa ket echu ar pred pa deuas ar veleien da lavaret ar grasou ; an holl, gant doujans, ar zavas en o sav hag a respontas gant feiz ouz ar pedennou a-raok kendelc'her da varvailhat ha da zebri.

Na laouena devez ! Karout ha beza karet, eno eo eman al levez ! an asurans da veza eurus da viken er baradoz a laka peoc'h en ene, eno eo eman al levez ! an asurans da veza eurus da viken er baradoz a laka peoc'h en ene, er bed-man, ha setu aze al levez. Pa weler daou zen o timezi an eil d'égile, evel Perig hag Aziliz, o reseo sakramant ar Briedelez, en eur zonzal en o deveriou da zont hag en eur c'houlenn skoazell an Holl C'halloudek, n'euze e c'heller en em laouenaat hag ar c'hleier a c'hell seni da gas betek pennou pella ar barrez ar c'helou mat ez eus eur familh gristen muioc'h er vro.

Evel ar gwenan

E ti o zud ema an dud nevez breman da c'hortoz ma vezo savet o zi d'ezo : « Er zizun a zeu, eme Jakou ar mansoner, e stagin gantan ; hirroc'hik e vezo an deiz hag al labour a 'z ay gwelloc'h en dro ! » Eur bern die ema an daou bried yaouank o vont da deurel war o skoaz ; met, kempenn int, troet ouz al labour ; Perig a boanio ; Aziliz a esperno he gwenneien ha sevel a raint war o zreid abarz nemeur.

Ar gwenan nevez kestet a vez goull o zi ; dre o labour e teuont d'hel leunia, e berr amzer.

Perig hag Aziliz a ray evel ar gwenan, gwelet a reoc'h !

TINTIN ANNA.



— : Petra deui-te da veza, divezatoc'h, Goulc'hanig ?

— : Petra 'rin ? ar pezh a rez te Tual, na petra 'ta ! mont da besketa evel va zad koz ha va zad...

— : Ya ! pesketaer, pesketaer war aochou Breiz. Eur vicher gaer eo hon hini, ma 'z eus unan ; karout a ran an traou bras hag an traou kaer hag ar mor a zo divent ha lorc'hus evel eur roue. Me her c'har da zav-heol, pa gouez bannou sklerder kenta an deiz ha pa c'heller en em wet ennan evel en eur mellezour arc'hant ; me her c'har, da zerr-noz, pa deu bannou diweza an heol da ruzia ha da alaouri e goummou ; me her c'har pa deu ker sioul ha tra da floura traez an aod, met her c'harout a ran ivez, pa yud an avel, pa zav e darziou, er vann, ken uhel ha tour-tan ar Enez-Were'h ha pa venn flastra ganto kerreg ar tornaod : n'oun ket evit kaout kas ouz ar mor !...

— : Ha koulskoude e lounkas da vreur ha va zad... Me ivez her c'har, ha pa redan war an tevenn, pa deu an avel da lakat ar bleo da fichañ a-uz va zal, pa zantan an traez kraz o rinkla dindan va zreid em bevez dudi, gwalc'h va c'halon !

— : Dizale, ez aimp da besketa a-bell, d'an Douar-Nevez ; mont da glask kranked, dre aman, ha chifretez, an dra-ze a zo plijadurus, met, ni a zo gwazed vat hag a c'hell ober kaeroc'h !...



Evelse e komze daou baotrig bihan, war an aod, etre Kastell-Paol, ha Lok-Maze Penn-ar-Bed, endra ma kavc d'o mammou ne oant c'hoaz nemet bugale hag i gouest, war o meno, da ober tro ar bed gand o hag pesketa.

Ar bloaveziou a zo aet ebiou ! Goulc'hanig a zo breman eun den kaer, lemm e lagad, yac'h e galon ; pe e vezo heol, glao pe vorenn, atao e vezo kavet war ar mor. Eur pesketaer eus ar c'henta eo hag ezomm en deus da c'hounit rak an tad a zo bet beuzet en Douar-Nevez, da Bask diveza, ha

pemp den a rank beva diwar boan e zivrec'h.

Goulc'han n'eo ket eun den da fallgaloni eo ha kana a ra rak laouen eo evel al labous d'an nevez amzer ; dizale e timezo gant Jannig, merc'h Youen ar Goff, perc'hen ar vag vras « Santez Anna » hag an dra-ze a laka dudi en e galon ha sklerder en e zaoulagad.

Tual a zo ivez eur paotr yaouank drant ha seder ; dizamant eo ouz e boan ; met n'eo mui henvel a-walc'h ouz kent ; tec'het a ra diouz an trouz ; ne gar mui chom da c'hoari boulou, war ar plas-kêr, goude ar gousperou ha pa deu ar biniou da zeni ha da lakat holl dud eun eured da zansal ar jabadao ne ra mui eur van evid her c'hlevet.

Pa zigouez ar pardonioù, neuze avat, e vez gwelet o kregi er bannielou bras, hag o kana abouez penn kantikou kaer Breiz-Izel.

Diouz an noz, pa vez deuet e vag er porz ha gwerzet e besked gantan, Herve a ya da zeski al latin gand an Aotrou Person hag an amezeien a zo nec'het o klask gouzout petra 'raio gand eun hevelep deskadurez.

— : N'eo ket da, emezo, gouzout kement-se a draou evit beza barrek da besketa war aochou Breiz !

— : Sur, a-walc'h, eme eur bleiz-mor, an Tual-ze a dle beza o klask mont da noter pe da veleg.

Tual, kaer e vez goulenn outan petra glask o kemerout hevelep kentelioù, a vouse'hoarz hag a jom dilavar ! Karet eo gand an holl ha den n'eo gouest da gaout abeg ennan ; mignon eo dreist holl d'ar vugale, rak soniou kaer a zeski d'ezo, d'ar re goz, rak dereat e vez atao en o c'henver, d'ar beorien rak daoust ma n'eo ket pinvidik e-unan, e kav tro atao da ober eur vad bennak d'ezo.

Goulc'han, evelato, a deu da veza nec'het gand e gamarad ; eur pardaez e figouez gantan war an aod hag e chomont da ober eun ehan e tal karreg ar vran :

— Gwechall, ne veze netra guzet etrezomp ; n'out mui henvel ouz kent ; gwechall e lavaremp an eil d'egile kement a dremene en hor spered.

— : Asa ! Goulc'han, eme Dual, perak e teues da zisfiziout ac'hanoun evelse ? Daoust ha n'oun ket atao da wella mignon ?

— : Eo ! eo ! met, me gav d'in emhout o klask an tu da guitaat ar vicher a res, hor micher, ar vicher-ze hag a garomp kement hag an dra-ze a ra poan d'in !

— Goulc'han, eme Dual, ken habask ha tra, selaou aman ganen ; ez an da lavarit d'it ar pez n'em eus lavaret da zen ebet c'hoaz nemet d'an



Aotrou Person. Laket eo en Aviel e kuiteas Hor Zalver e vamm, d'an oad a dregont vloaz, ha goude beza graet eur pennad bale ec'h en em gavas war aod Jenezareth : daou besketaer a oa eno o walc'hi o rouejou ; Jezuz a zellas outo hag a lavaras : « Lezit ho rouejou ha deuit d'am heul ha me ho kraio pesketerien tud ! » Hag an daou besketaer a lezas eno o rouejou hag a heulias Salver ar Bed.

Mat, ar Mestr a zo deuet betek ennon hag en deus lavaret d'in, evel d'an Ebestel : « Lez aze da rouejou ha me a zesko d'it an doare da besketa eneo ! » Mont a rin da skolach Kastell-Paol, ha goudeze da gloerdi bras ar misionou diavéz-bro e Paris ema an Aotrou 'n Eskob de Guébriant, eus a Gastell-Paol, en e benn ha goudeze e kimiadin diouz ar re a garan ar muia, diouz, va zud, diouzit te, Goulc'hen, diouz va bro, diouz he ilizou, he fardonioù, he yez, he mor, he menez, evit mont d'ar Chin. Di eo e tleat mont gant va bag ; eno ez eus aochou ivez, ha gwella-ze ma c'hellan ober pesketaerez vat, rak e-leiz a eneo a zo, dre eno, hag ez eus ezomm o gounit da Zoue.

— : O ! Tual, eme C'houl C'han, an daerou en e zaoulagad, n'oun ket souezet o klevet ar pez a leveres d'in aze, rak eun den kalonek out bet a-viskoaz. N'am ankounac'hay ket, du-hont, e broiou ar Sav-Heol. Ped evidon ha ra deurvezo gand santez Anna ha sant Erwan az tiouall diouz peb droug.

— : Ya ! ra deurvezo gant sent hor bro va diouall !

Goulc'han a stardas dourn Herve, a zec'has an daerou a rede war e zivoc'h hag a zistroas d'e di en eur lavaret : « D'ar Chin ! va Doue, na da belec'h ! »

Dies eo bet ar mor, en noz tremen hag ar vag « *Santez Anna* » n'eo ket dizroet d'ar porz.

Eur vaouez, gand eur paotrig dek vloaz ha diou verc'heg vihan, a c'hed, enkrezet holl, war an teven :

— Va Doue ! emezi, gant ma n'eus en em gavet droug ebet gantan, da vihana !

Pa wel n'eus hag ebet war ar mor e tizro d'ar gêr, doanietoc'h eget biskoaz : « Daoust ha chomet e vefe, en taol-man ? »

En eun taol, setu trouz bale hag a-raok m'he devoa bet Jannig amzer da zigeri an nor, Goulc'han a oa en ti, an dour o tivera dioutan :

— A ! eme ar wreg yaouank, nag a enkrez am eus me bet !


— : Nann ! Jannig ; va bag me a zo gouarnet re vat gant he fatronez santez Anna evid en em goll evelse ; met, siouaz, eun dervez fall am eus graet hag...

Jannig o welet e oa fall-galonet a lavaras :

— En han Doue, n'es ket da fallgaloni, evelse ; sonj 'ta, e Tual, a daol ivez e rouejou du-hont e aochou ar Chin ha m'oarvat ne ra ket ivez a besketaerez kaer atao !

— : Gwir a-walc'h a leveres, Jannig... ya ! ya ! pesketaer eo ivez... met...

Ha Goulc'han a wele e vignon bras oc'h ober katekiz d'ar bayaned vihan ; her gwelet a ra o kemeret e bred dister hag o poania goudeze da zeski lenn ha skriva yez e gristenien, studia ha studia atao traou hag a zo eun torpenn o deski... Doare en deus da veza skuiz ha koulskoude nag a laouenedigez a zo war e dal... N'ema ket hep gouzout, ar paourkez Tual, ema sorser ar vro, deuet da gemeret gwarizi outan o welet nag a dud a ya d'e gaout, o klask an tu d'en em zizober anezan... daoust da-ze, ar misioner



Oferenn genta tual




yaouank a labour
 hag a bed evid an
 eneou en deus da
 zavetei hag evit ma
 'z ay mat an traou
 en dro gantan... N'en
 deus ket mousc'hoaz
 e bried, na karant-
 tez e vugale d'hen
 harpa !

Goule'han a wel
 dillo kement-se hag
 o trei warzu e wreg
 ha warzu e vugale e
 lavar :

— Trugarekeomp
 Doue eus ar pezh a
 ro d'eomp ; mat eo
 evidomp ha pec'hed
 eo chom hep hen
 anaout... Tual, du-
 hont er Chin, a rank
 stourm ouz eur mor
 hag a zo eun-tamm
 mat gwasoc'h eget
 mor Breiz... hag o
 trei warzu e vugale :

— Emberr, a-raok mont d'ho kwele e livirimp holl a-unan eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit ma roio an Aotrou Doue da Dual ar c'hras da ober eur besketaerez vat.

YVONIG.



AN AVALAOUER



An A. Pinvidik a zo o paouez gwelout, war e gazetenn, ez eus eul daer brudet o redek ar vro hag ez eo spontet an A. Pinvidik, rak pinvidik mor eo ha ne garfe ket e vefe laeret e arc'hant.



Aoun en deus rak al laerze, hag e teu eur zonz en e spered; en e liorz ez eus eun avalaouer; gant sikour e vatez hen tap hag hen lak e armel e arc'hant goude beza laket e vilheji-bank e lec'h all.




Pa deus Yann an Tachou, al laer bras, eun novez, da glask goulonderi direnn an A. Pinvidik, e youc'has gand ar boan, en eur lakat e zourn war eur yalc'h hag a oa, a gave d'ezan, le... a arc'hant.



Ne oa en armel nemed eun avalaouer, soue e bikou gant war e gein ha barrek d'en em zifenn. Yann an Tachou ne jomas ket hirroc'h en ti hag e redas buana ma c'helias se'hano, o kredi ebb Paol Gornok war e lec'h.

Chapel Itron Varia ar Joa e Penmarc'h

Chapelion e-leiz a zo e Penmarc'h hag a venn koueza pe a-zo kouezet en o foull; unan a zo da vihana hag a zo an traou e-ratre, war he zro : hini Itron Varia ar Joa.



Chapel Itron-Varia ar Joa

Setu aman penaos ha perak e voe savet, hervez ar re goz, ar chapel-zé da Vamin Doue.

Pa voed pedet gand ar Pab da vont d'ar brezel evit diframma an douar santel eus a dre daouarn ar Vusulmaned, mab aotrou Tregalet e parrez Plôveur a stagas ar groaz ruz ouz e vruched hag a yeas da vro Hor Zalver, gant daou floc'h eus e anaoudegez, mab Hellez ha mab Kerfezeg. Duk Breiz a oa ivez ha stourm.

a rejont kalet dindan e urziou. Met e Damiett, e voent trec'het gand an dud divadez; Roue an Ejipt a lakeas kloza ar brizonierien en eun tour enk ha tenval; ar re binvidika anezo a-bouez rei berniou arc'hant a veze lezet da vale hag ar re all a oa urz d'o laza. Mab Tregalet n'oa den evit dont war e zikour.

Ar zoudarded o vont da gas an tri gernevad d'ar maro, a dremenas ganto, en eul liorz, el lec'h m'edo Zobeida merc'h ar Roue o tischeoli gant he flac'hed yaouank. Zobeida o welet ar Vretoned a gemeras truez outo hag a redas da gaout he zad da c'houleunn outan lezel o buhez ganto : « Ya! eme ar Roue, ne vezint ket lazé, met neuze e vezo ret d'ezo, a-raok daou viz aman, heulia relijion Mahomed. »




Zobeida oc'h en em érbedi ouz he zad

— : Me 'n em garg d'o gounid d'hor feiz, eme Zobeida; gwelet a reoc'h e teuin a-benn eus va zaol!

An tri brizonier a voe laket en eur gampr kaer ha Zobeida a deue bemdez da gomz ganto o kredi e teuje a-benn d'o gounit d'he feiz. Ar re-man a roas d'ezi da gompren n'oant ket evit dilezel o relijion a oa ar wi-

rionez penn-da-benn ganti e lec'h he hini a oa diazezet war ar gaou.

Ar plac'h yaouank a oa glañ he c'halon ha lemm he spered; o klevet kenteliou ar gristenien e teuas da garout o religion hag e c'hoanteas he heul. Mab Tregalet a blije d'ezi ivez kement ma savas c'hoant ganti



Tour a Kalvar ar Joa

da veza kristenez evit gellout en em unani gwelloc'h a-ze gantan.




An daou viz a oa tremenet hag an tad a c'houlennas ouz e verc'h ha gounezet he devoa an tri gristen da feiz Mahomed. Zobeida a welas ervat e oa mall d'ezi lakat he frizonierien da dec'het a-raok kounnar he zad; gwerza a eure he braoigou hag, e kuz, e prenas eur vag hag e kargas tud da vont ganti en hent. Eun nozvez, e tiskennas eta betek an aod, gand an tri vreizad; he menoz oa o lezel da vont o-unan etrezeg ar gêr, met pa deuas ar mare da gimiada diouto e lec'h dizrei d'ar gêr e pignas er vag ha dao en hent; eun nebeud deizioù goudeze, mab Tregalet hag e zaou floc'h, a anavezaz a-bell aochou Breiz-Izel; ober a rejont o diskenn ha gand ar joa o devoa da veza gellet distrei d'o bro, e rejont le da zavel eno eur chapel en enor da Vamm Doue.

Mont a rejont goudeze gand ar plac'h yaouank da Dregalet; an aotrou hag an itron a res d'ezo al laouena digemer; Zobeida a voe badezet dem-goude; e-leiz a lavar e timezas gand ar paotr yaouank a gare; re all a lavar ec'h en em c'hreas leanez e Lok-Maria Gemper ha mab Tregalet a yeas da vanac'h da Bont 'n Abad. Ar pezh a zo sur, ar chapel a voe savet war aochou Penmarc'h ha galvet *Ti ar Werc'hez er Joa*, abalamour d'al levenez o devoa bet an tri brezelour kalonek p'o devoa gellet lakat a-nevez o zreid war douar benniget o bro.

Pardon Itron Varia ar Joa a vez graet da Hanter-Eost ha n'eus ket kals a bardoniou ker kaer hag hen e Goueled Kerne.

G. P.

GWERZ KOZ MARKIZ PONTKALLEG ⁽¹⁾



Selaouet holl ha selaouet,
Eur werz a zo nevez savet.

Diwarbenn markiz Pontkalleg,
Eun den gredus ha kalonek.

Gwelloc'h egetan n'eus ket bef
Daoust da ze eo bet dibennet (2).

(1) Tennet eus al levr nevez moulet « La chanson des Siècles Bretons », poèmes et chansons populaires, inspirés par la tradition historique du peuple-breton et présentés avec notices bibliographiques et critiques, musique et traduction française, par Camille Le Mercier d'Erme, éditeur, 36, rue des Casinos, Dinard (Bretagne).

(2) D'ar 26 a viz-meurz 1720; tri dijentil all, an Aotronek Montlouis, Couedic ha Talhouet a voe dibennet ivez gantan en Naoned.

Ar markiz zo bet dibennet,
Nann, avat, evid eun torfed.

Met rak ma tifennas e vro
Gand an dudhantil tro-ha-tro.

Karet a rae ar Vretoned
Ar Fransizien ne laran ket.

Ar Fransizien ne laran ket.
Gouska a reont ar Vretoned !

Pebez anken, pebez glac'har,
Pa redas e wad d'an douar !

Ken na lavare naonediz :
« Peç'hed eo laza ar markiz ! »



C'hoar ar markiz a c'houlenne
Gant mestr ar prizon, en de-ze :

— « De mat d'eoc'h, Aotrou, a laran,
Va breur ganeoc'h e c'houleman. »




— « Ho preur, allas ! c'houi n'ho po ket ;
Re zivezat oc'h eus komzet.

« Re zivezat oc'h eus komzet,
Touchant ez eo bet dibennet ! »

C'hoar ar Markiz, en eur ouela
A youc'has kaer ar c'homzou-ma :

— « Tre Fransizien ha Bretoned,
Penn ar Markiz a vo bepred ! »





Laou o vont da foar Sizun

Skolig an Emglevadeg ⁽¹⁾

IV

Penn ha Lost ar C'haz

D'an Aotrou Markiz an Estourbeillon, bet kannad ar Morbihan, saver ha Penrener Kevredigez-Vreiz.

Eur c'haz rous ' c'hoari gand e lost, 'zo teñv
Ha hir, bievet flour, elfet gwevn ha kreñv :
Gwech war-c'hed, evel pa ve ' logota,
' Ra van da gousket ken sioulik ha tra,
Ha prim ' t'ol warnañ e bao; war-du 'n neñv
Primoc'h savet sounn, goab a ra !



(1) Gwelit ar penn kenta e Feiz ha Breiz miz Kerzu.



Gwech, p'hen gwel, hanval ouz ur pikol naer
 Gourvét 'n e gichen er yeot, disoñj kaer,
 E lamm d'hen tapout ha d'hen danta start :
 Hogen c'hoaz c'houit war e daol trubart :
 Endro, war e gein e lamm al lost taer.
 Pebez ijin 'zo 'barz er seurt kañfard !



Rouzig, 'vat, en deus ive trôidell ;
 'Vit trec'hi, 'lakay nerz ha korvigell.
 Heñ ' red war e lost a-hérr, 'vel barrwent ;
 Al lost dirazañ, herrus-dall, kerkent
 A dec'h ; hag o trei 'giz eur gornigell,
 Penn ha lost 'a ya, a ya 'r memes hent.



Pa vez skuiz eun tu a kornigellat,
 Kornigellat 'ra dre 'n tu all timat
 'Vel gwilenn hedro pa dro n' aveliou ;
 Tro-distro, e lost pa ra 'r penn troiou
 'Rôk pe 'dreñv, a dro war un dro dalc'hmat ;
 Ken ' gouezont o daou faez hep ken fiñvou..



Penn Rouzig 'zo deut mezevellet holl
 Kouls ha pa vije sköet gand an heol ;
 Al lost ne oar ket nemeur petra ' sant,
 'N eil ouz egile ez int drouk-kontant ;
 Ken 'mañ genou 'r c'haz, 'n e vrquez diroll
 Krog e beg al lost gand eur gwall-döl dant !

Eur skrij a sav skiltr : ar penn 'n eus dantet,
 Ar penn eo a glemm ! Al lost 'jar mann 'bet,
 'Met soñjal : — Ma bro ' deuy abarz nebeut :
 Flipad 'vit dantad ! — Ouz 'n em astenn reut,
 War ar min danter en deus diskarget
 Eur c'houistad, a strak 'vel en tan-keuneud.

Eur skrij c'hoaz, ha fuc'h... hag eur fustad all
 War skoarn deou Rouzig 'zo deut da strakal ;
 Ken stank ha grizilh, lostadou 'bep tu
 A gouez war e henn, bloñset du ha ru ;
 Eu lagad tarzet ; euzus o viaoual
 Penn-follet ha fuc'h-difuc'h, gant trefu

E tec'h rag e lost ! Em stokañ 'ra 'r c'hêz
 Ouz ar gwez, ar vein, ar stroez hag an drez
 Hag ar chas ; erfin, pegen gwaz spouron
 Pa wej eo arru war-lez eur stêr don !
 Heñ ' garfe souzañ ; al lost digernez
 A sllap war e choug eun töl, a son,

Ken a renk mont ' rôk ha sailhat en dour,
 'Lec'h ' voe penn ha lost beuzet hep rekour...

Petra 'n doa 'n e gorv ? eun diaoul, m'hen argarz :
 An Dizunvaniez, a ra 'n droug gand c'hoarz !
 Diouz 'n aerouant-se hon diwall, ael flour,
 Emgleo, joa 'n dud reiz, tad pep mad, pep marz !

V

Notennoù skleraat ha peurlunia

I

STURIENNOU

Omnia autem honeste et secundum ordinem fiant.

Sant Paol, kenta Lizer d'ar Gorin-
 thied XIV 40.

Ra vo pep tra graet mat,
 En e reiz dereat.

1. Klevout a ran c'hoaz an Tad mat Rogerie o lenn
 d'eomp ar c'homzou abostolek-se, er penn-kenta eus
 Reolenn e Skol Sant-Charlez, en Sant-Brieg. Enni edon-
 me skoliad, araok dont da gelenner war ar saozneg

hag an almantaj. Eno em boe kenteliou an Abad goui-
ziek L. Duchesne, bet goude ezel eus an Akademi c'hal-
lek; eno em eus kenteliet paotred kalonek, evel ma c'he-
neiled kêr Vallée, Sekretour Breuriez-veur ar brezoneg
hag an Abad Le Clerc, hec'h Eilrener evit bro-Dreger ;
an Aotrou André du Bois de la Villerabel, arc'heskob
Rouan; an Doktor Calmette, eus Akademi ar Gouizie-
gezou, ha re-all (1).

Gant komzou an abostol e haller ober eur werzenn
iambek (da laret eo gant mentadou pe « troadou » berr-
hirek):

Honeste fiant omnia, secundum ordinem;

hag en o yez kenta, ar gregaj, unan *pentamet*r, d. l. e.
pempmentadek :

Pan̄a genoito kal̄s kai kata taxin aei.

N'eus forz e pe zoare, e tellezont beva e spered ha
kalon an holl.

2. Ac'hano e hallomp tenn eur pennad-sturienn.

Evidomp-ni, tud a bluenn.

D'AR SKRIVAGNERIEN

I

Grit ma vo gwir ha mat pep menoz 'n ho skrido
Resisoc'h en yez-plên, c'houekoc'h er gwerzenno
Dibabit piz pep gêr evit ho menozioù,
Pep lizerenn ha peb arouezig d'ho kêrioù.

II

Eur menoz a zo gwir, pa na vez nep fazi
Na gaou ennan; mat eo, 'vel eur wezenn sperius

(1) Etouez ar re a gelennas eno em goude, ne han-
vin nemed an Aotrou Tréhiou, Eskob Gwened, en deus
galvet ken gredus ar Vretoned d'en em glevout gwi-
tibunan. War darnou eus danevell ar C'helenndi bru-
det-se, e haller lenn *L'École Saint-Charles à St-Brieuc*,
par le V^{te} Arthur du Bois de la Villerabel, St-B. 1891 ;
Aux Anciens Elèves de l'École Saint-Charles morts pour
la France, Livre d'Or 1914-1918, St-B. 1928.

Pa vez gouest da deurel frouezioù yac'h ha magus.
Diwallit na deufec'h dre fouge, gwarizi,
Diegi, pe froudenn arall, da sorc'henni
'Vel daoulagad trellet gant an derzienn-janus.

Yannig Pikous, teoget gand ar melenadur,
A lâz, pa verz ul liou hepkén 'barz en Natur:
— Me 'wel pep tra melen : melen eo an holl draou! —
Gantan n'eman ar gwir nemed en hanter, sur :
Goût petra 'wel, anaout ar pezh a wel, 'zo daou ;
Pa varn dremm ar bed-holl, Yannig 'zo Doktor gaou.

Paotr ar-bed-holl melen pa vo dijanuset
Emgavo ken-ha-ken ive difaziet ;
Pec'herien a zistro o klevout komz Doue
Eus o meizadou sot 'zo 'velse pareet.
'Met n'eo ket red bout klanv a gorv pe a ene
Evit fallvenozia : pet ragvarn amzere
'Zo gand an digasted ganet, ha gand ar skouer,
Diouer a gentelioù eus eur gwir gelenner,
Ha hoaz: gwall-ziês eo dizôna eur c'hoz loue!

III

Gwella gêr da zibab, an hini a zispleg
Petra 'vennit laret, a-ouez d'an holl, pœursklêr ;
Ma n'o de ho proiz un hevelep prezeg
Dre reuz, 'n o rannyezou kutuilhit gant preder
Eur gomz koz pe nevez plên he son, nêt e ster,
Gouest da servij an holl, sanket en o eavor,
Ha da zerc'hel o yez en stad kaer gand enor.
'Vid unvander eur yez — 'zo hec'h ezomm kenta
Da chom beo-buhezek — n'eo ket d'ez rekis
Kaout un hano hepkén 'vit pep meizad, pep tra,
Hag e ve 'n hano-ze distaget en ur c'hiz
— Eur gwir koz d'ar varzed, strollada bleunioù briz —
Hogen na ve neplec'h gêr ebet na tenval
Na dianav a grenn na fentus, nep lec'h-all ;
Ma vo splann komz ar vro ha c'houek d'an hoil vroiz.

IV

Er broioù sevenaet en o lizeregezh
E tesk ar vugale ar wir-skrivadurez:

Furm al lizerennou hag o implijou reiz,
 Ar re eus pep tired, ar poenchadur ive.
 N'eus ket er seurt yezou kemmadennou cleiz
 War un dro, 'met 'veldomp e kosaont beindeiz;
 Mar be red, o skritur a gemm eun tamm, neuze.
 Etre mabig rubenn ha koziad gwenn e vico,
 Avat, na komz na skrid na c'han goab, diemgleo.
 Yezou rannet disuj, kemerit skouer dioute;
 D'ho trefodachigou lakit Reiz da genyeo!

V

Ma vo pep menoz gwir ha mat,
 Pep gêr fraez ha d'an holl anat,
 Pep skrid ès, 'n e stumm dereat,
 Pez n'eo ket reiz, red hen reisât!

3. En eur vurutella danvez ha stumm ar *Skolig*, d'o lakat da dalvout mui-ouz-mui evit mad ar brezoneg hag ar vrezonegerien, e vez da eyesât ouz tri sord selladou:
 Da genta, sellad an *taolennour* ha *danevellour*, e galleg « le point de vue descriptif et historique », a ziskouez pep tra evel m'eman, hag evel m'edo gwejjall;
 D'an eil, hini ar prederour ha meizour, « le point de vue philosophique et théorique », a glask e pe c'hiz e vefe an traou en o feurwella-holl;
 Ha d'an trede, hini ar *skianteg* hag an *oberiad*, « le point de vue pratique et actif », a ziforc'h petra 'zo d'ober dioustu, ha penaos, ha c'hoaz petra 'vo da seveni goude hag e pctoro koulsadou, evit derc'hel da vont etrezeg ar pal. Pebez pal? N'eo ket ar beurglokted disi, a vez dizeraezus da vab-dén er bed-ma, hogen eur stad kompes a gempenned klenk, dellezek da rei skouer d'eul lennegezh estren, ha mat awalc'h da lezel da Vreiziz sioulder spered war ze, hag arouaregez da brederia a-zivout kals abegou all a c'houlenn grous o strifou hag o aked dalc'hus.

4. Seurt poelladou *taolenni*, *predera* hag *oberia* n' hellont ket beza penn-da-benn kefridi un dén, hogen ur strollad kevclerien; ne vern pegement e vent, gant ma reno emgleo hag unvaniezh entrez. Arabat e kollfe Per e amzer hag e boan o klask kijout ar pezh a

zo bet kavet gant Paol, hag e tispignfe Kaourintin en aner e strifou hag e nerz dre sachu war an tu kleiz epad ma sach Erwan war an tu dehou, war zigare ne blij ket d'an eil pe d'egile, pe da hini anê o daou, senti ouz eur blenier. Eun dén reiz ne vez ket bleniet gand e blijadur, na gant plijadur bennadus dén ebet, ne-



met gand ar Reiz. Gouzout a ra ne hall gour beza eur mailh dreist en holl vicherou, hag e ranker, da sevel ti, ur mestr-ijinour, ha mansonerien, ha darbarerien, ha maouspet doare oberourien all.

Quam quisque nōrit artem, in hāc se exercent.

Peb-unan ' dle ober
Gredus-mat e vicher,

gouez d'al lavar koz. Hā pādāl, n'aet ket da gredi e ve
e labour-hén distag agrénn diouz hini eun all.

5. Rak *tout est dans tout*, an holl draou a zo e pep
tra. Pa ver o furcha kevrinou eur ouiziegez bennak,
ekreiz dibuna eur gudenn e kaver neudennoù a zalc'h
striz pe strisoc'h ouz eur gudenn all, pe ouspenn; n'hall-



fed ket o feurziluzia, hogen tizout hepmuikén eur sta-
gadenn ouz unan bennak eus an adkudennou pe adku-
dennigou-hont, ha diskulia o staglec'h da zibunerien
all akuit...



EUR C'HUZUL

Me ' ro d'eoc'h eun ali,
 Tud vat, d'ho kudennou a glask eun dibuner :
 Na gemerit hini
 Eus a ouenn ar c'hizier.
 Ho koantik servijer
 Da zilogota 'n ti,

Bisig a gemerfe awalc'h seurt eil micher;
 Hogen skillfou e bao lijer
 D'al labour-ze 'zo binviou dister;
 Hag ouspenn na oar hen ober,
 Ne gar ket ar studi
 Hag ar boan a-zevri
 'Ve red evit diski :

Ne c'houl nemet c'hoari,
 Poulfal, bout flourikaet ha kaout e bred en eur.
 Trueka diroestleur!

'Lec'h diroestlâ 'r roedad, e vez roestlet enni
 'Vel al leon eun deiz, e genderv meur,
 Pa gavas, dre eurvad, eur raz da ziroedeur.


6. Dibunomp, Bretoned, dibunomp eta, gant koustians
 ha skiant; ha pa vimp arri bete poell eur gudenn, e vo
 dre-ze endeeun êsaet diluzia meur a hini all, a zo kem-
 mesket enni kals pe nebeut.

Rakse, lennerien hegarat, e c'houlennan ho prasa evez
 ha pasianted, gant skoazell hoc'h aliou mat, evit ma
 foenchou kenta: goudeze e hallimp trouc'ha berr da
 veur a zisplegadenn, hep dinerza galloud madoberus ar
 wirionez, a die-beza trec'h d'ar gaou.

Emil ERNAULT
 Barz ar Goued,

Rener Breuriez-veur ar brezoneg.

(Da genderc'hel).



KELEIER AR MIZ

1532-1932

Pevar c'hant vloaz a zo, er bloaz-man, abaoe m'eo bet
 staget Breiz ouz Frans; eun dra gristen eo d'ar broiou
 en em unani; ar Pab her goulenñ bemdez; ar brezel a
 zo eun dra ker skrijus, met arabad eo d'ar Frans kendel-
 c'her da flastra, dindan he zreid, evel ma ra, kals re alies
 kement tra gaer ha kement tra vad a zo e Breiz. Evel
 ma lavare an A. Duparc, en e brezegenn bloaz nevez,
 traou a zo hag a zo pec'hed o lezel da vont da goll, evel
 ma 'z eo hor feiz, hor yez, hor giziou hag hor gwiska-
 manchou: « *Nous devons sauvegarder, à tout prix, notre
 foi, notre belle langue, nos usages, nos costumes. Ceci
 dépend de nous. — Un régionalisme modéré serait dési-
 rable et possible. Nous ne l'obtiendrons qu'à la longue!* »

An Tad Abgrall, maro vikel vras e Bro Annam, skouer
 ar Vretoned divroët, a lavare ivez kement all n'eus ket
 gwall bellou: « *Quod Deus conjunxit homo non separet!
 Pas de séparation, si ce n'est en cas d'adultère; alors que
 la France cesse d'adultérer; c'est elle qui deviendrait
 séparatiste. Notre foi, notre langue, nos traditions...
 autrement... torr e benn!* »

Ni zo bepred, Bretoned,
 Bretoned, tud kalet!

*Qu'on le montre! non d'une pipe! Torr e benn! Des
 protestations platoniques comme dans le passé, bêtise...
 Par ici, quand on est victime d'une injustice, on « nam-*

và », c'est-à-dire qu'on s'étend par terre, et on y reste jusqu'à mourir, au besoin.

C'est l'arme des faibles contre les forts et ceux-là vrient à bout de ceux-ci!

Sine sanguinis effusione nulla est redemptio.

La paix dont nous jouissons ici actuellement est une fleur qui pousse sur le sang de nos martyrs.

EUR PAOTR KOZ,

Breizad, penn-kil-ha-troad.

Ra vezo komzou an daou vreizad kalonek-se, an A. Duparc hag an Tad Abgrall, evel diou c'houlaouenn gaer a skleray dalc'h-mat an hent hon eus da heulia edoug ar bloaz nevez-man!

Tud yaouank « à la page »

En eur barrez ne hanvin ket, evid ar gentel, ze n'eo ket red, eo bet c'hoariet kement-man, en deizioù tremen, gand ar merc'hed :

I. — Trois bonnes sous un bonnet.

II. — Cœur de Gitane.

III. — Les Tribulations de Madame Buchembois.

Ar baotred evit en em lakat kement « à la page » hag ar merc'hed o deus c'hoariet :

I. — Vers la lumière.

II. — Le Baptême du Sang.

III. — Niquedouille chez le Colon.

C'hoariet eo bet ar peziou-ze en eur barrez hag ema an holl enni bemdez o komz brezoneg: ar barrez-se a oa, a gave d'in, etre Menez Are hag Enez Werc'h; breman sur awalc'h e rank beza, tostaet ouz Paris !

Epad an amzer-ze, e Landerne, el lec'h ma ne c'hoariet nemet galleg e stager da c'hoari brezoneg : istor ar bed a zo bet atao evelse: darn o vont ha darn o font; darn o koueza e poull ar zotoni ha darn o-sevel anezan!..

Tud yaouank, roit atao ar plas a enor da yez ho pro: neuze hepken e vezo anat ho peus deskadurez hag emaooc'h « à la page »; keit ha ma n'her greoc'h ket ho kemerin evit beza tud diwarlerc'h p'eo gwir, daoust m'o

peus ugent vloaz hag ouspenn, n'o peus ket bet amzer c'hoaz da zeski istor ho pro !

Deskit kentel Kado:

— Kas an den ne garo

Ar vro gaer her mago!

Oxford

Caerfyrddin, 27 a viz kerzu 1931.

AOTROU PERROT KER,

Setu me eur wech c'hoaz distro d'ar gêr, goude beza tremenet daou viz etcuez studierien a bep gouenn, a bep liou hag a bep yez. Eus unan hepken eus broiou ar bed ne oa den ebet eno hag eo eus Breiz. Gallaoued e-leiz a oa eno, merc'hed ha gwazed, o studia, met Breizad ebet! Red eo kemma an dra-ze. Fiziens am eus e welin eun deiz pe-zeiz eur Breizad bennak o lakat e dreid e Oxford, breman, dreist-holl, pa 'z eo kouezet al lur zaoznek ha denet ar bevans e Bro-Zaoz da veza kals gwelloc'h marc'had evid an diavaezidi. Hag ouspenn-ze, eun degemer kalonek a vezo graet aman gant Kembreiz d'ar Vretoned a zegouezo ganto dont aman da studia. Kaout a raint aman eun ti keltiek ha kan ha plijadur vras en hon touez.

Epad an tri miz diweza n'em eus ket gellet lenn « Feiz ha Breiz » evel m'oun boaz d'hen ober abaoe meur a vloaz ha setu perak ne welis ket ar pezh ho peus goulennet digand ho lennerien diwarbenn ar gwellaennou da zegas er gelaouenn. Met eur blijadur vras am eus bet o lenn ar respontchou a zo bet degaset d'eoc'h hag a ziskouez ez eus c'hoaz tud e Breiz prest da labourat gant gwirionez ha gant lealded evit difenn ha goudori yez ha lennegezh kaer ar vro a enep d'o enebourien.

Met, war va meñs, e ller poueza muioc'h-mui, war ar re a zo gouest da skriva ha da aoz gant evez peziou-c'hoari, marvailhou ha kanouennou evid ar vugale.

E pep bro ez eus tenzorioù talvoudus da virout ha da fizioù er vugale, met *alc'houez an tenzorioù-ze eo yez ar bobl*. Evelse, pa zegouezo gant ar vugale ankouna-

c'haat yez o mamm e c'heller lavaret ez eo merglet an alc'houez ha kollet an tenzoriou. E Bro Gembre ar yez a zo hanter-zavataet p'eo gwir hen desker er skoliou. Daoust da-ze e skriver bep bloaz wardro tri ugent pe gant leor evid ar vugale hag hevlene ez eus bet moulet. evid ar wech kenta, e kembraeg eul levr a 250 pajenn, leun a skeudennou, istoriou ha kontadennou a bep seurt, a lakaio ar vugale da c'hoarzin ha da zeski o yez en eur lenn. Perak ne c'hellfed ket embann eun hevelep leor e brezoneg?

Kenavo ha bloavez nevez mat d'eoc'h ha da « Feiz ha Breiz ».

Geraint Dyfnallt Owen.

Respontet em eus d'ar studier yaouank-man — en deus desket brezoneg mat, evel a welit, p'eo gwir her skriv gwelloc'h eget an darn vrasa eus paotred yaouank skolachou Breiz-Izel, — ec'h embannin e lizer ha gwella-ze ma ya tud yaouank eus hor bro, da genderc'hel o studi da Oxford, kêr vrasa an deskadurez er bed; n'eo ket tiez, dalc'het gant Tadou sant Fransez, sant Dominik, sant Beneat, pe Dadou Kompagnunez Jezuz eo a vank eno evit rei degemer d'ar gatoliked.

Goueliou ar Zakramant e Dublin.

D'an 20 a vezeven a zeu, ma c'heller boda 200 pardonner, ar Vretoned a 'zay da Zublin, ker-benn Iwerzon, da gemeret perz er goueliou a ra eno kristenien ar bed-holl en enor d'ar zakramant meulet ra vezo, eus an 22 d'ar 26 eus miz mezeven; tro a gemerint eus ar goueliou-ze evid ober eur bale dre an holl vroioù keltiek rak goude beza gwelet lec'hioù ha traoù kaera Iwerzon e tiskennint e Bro Gembre hag e Kerne-Veur.

Dek dervez a lakint da ober o zro; hirra ma kousto an dro vale-ze eo 2.000 lur, eus a Vrest da Vrest ha seul vrasoc'h e vezo niver ar bardonerien ha seul nebeutoc'h en devezo pep hini da baea.

Ar re o deus c'hoant da ober an dro gaer-ze a zo pedet da gas o hano d'an A. Marc Le Berre, *secrétaire général du Bleun-Brug, 6, rue du Château, Pont-l'Abbé.*

Ar wech kenta eo d'eomp da c'hellout gwelet goueliou meur ar zakramant en eur vro geltiek, ha marteze ar wech diveza!

A-raok an deiz kenta a viz Ebrel e ranker boda 200 pardonner, da nebeuta; anez ne vezo gallet ober netra.

Bleun-Brug Brest

Ar Bleun-Brug a raio goueliou e XXII^{vet} kendalc'h e Brest, d'ar 4, 5, 6 ha 7 a viz Gwengolo a zeu.

Goueliou e vezint en enor da Vreiz ha d'ar Brezoneg a jom beo c'hoaz daoust peger goasket int a gleiz hag a zehou. Kement hini a gar e vro, e gwirionez, a c'hello kemeret tro, eus ar goueliou kaer-ze, d'hen diskouez.

Kanaouennou Bleun-Brug, Brest a gaver e gwerz, adalek ar miz-man, e Keriltud.

Evid o c'haout, dre bost, skriva d'an dimezell Pauline Torcol, 11, rue Algésiras, Brest.

Ar priz anezo eo 20 real p'o frener en ti ha 22 real pa ranker o c'has d'ar prener dre bost.

Y. V. P.

E Keleier ar miz tremen, pajenn 40, an eizvet linenn a zo bet kollet hag en he lec'h eo bet laket an unnekvet; an eizvet linenn oa houman:

Er bloaz 532, ar Vretoned a zo trec'het gant ar Zaazon.



Leor an A. Gwillou

O deus rakprenet al leor e miz Genver:

An A. Cong, person Plounéour-Trez	10
An A. Athanas Ruellen, Kloerdi Kemper.....	1
An Dell Anna ar Fur, er vourc'h, e Sant-Evarzec ..	1
An Dell Jann Lossec, Kerbrad-an-Dour, Plougerne..	1
An Tad Rozec, Ti ar visionerien, Josselin.....	1
Skol gristen Poullan	1
An Dell Jann Conan, Mestrez-Skol, Poullan	1
An A. P. Bourdellès, Serval, dre Lanuon.....	1
An A. Y. Calvez, quartier-maitre électricien, Croiseur	
<i>Duguay-Trouin</i> , Toulon (Var)	1
An A. Foll, person Lok-Maria-Plouzané	2

Rakprenet eta er miz-man..... 20

Leoriou rakprenet betek-hen: $892 + 20 = 912$.

Ne glozimp ket roll rak prenerien leor an A. Gwillou ken na hon devezo tapet ar MLL.

Petra eo 1.000 rakprener pa 'z eus e Breiz 1.500.000 den o komz brezoneg bemdez?

NEBEUD A DRA, sur a-walc'h, pa zeller ouz niver ar Vretoned HA KALZ evelato pa zonjer NE ZESKER KET C'HOAZ LENN BREZONEG, ER SKOLIOU, DA VUGALE BREIZ!

Re wir eo atao ar pezh a skrive an Tad Abgrall, — mar-vef viket vras e Bro Annam, n'eus ket pell, — en unan eus e-liziri:

« An traou digristen ha diot, e galleg, a vez moulet, « prenet ha lennet; traou kaer Brei-Izel a vez lezet da « vont gant an diaoul... N'eo ket d'in-me lavaret kement-« se, mes

Sotoc'h eged an den
e gelenn! »

Degas an hanoiou d'an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz, Scignac, Finistère. Ar re o deus c'hoant da brena al leor a-raok ma vezo moulet : degas an hano heb an arc'hant.



Divinadennoù miz C'houevrer



N . . e . . e
 R . . e . . r . . z
 G . d . r . v . . m . . o


I. — Lakit en teir linenn uhe loc'h al lizerennou a vank.
Degaset gant Herri Caouissin, Paris.

II. — Tad uhel, mamm c'haro,
Mil bugel, rouz ato.

Degaset gant Lusian Bellec, Plouider.

III. — Dib houarn ha marc'hig mein
Marc'heg pri sounn war e gein.

Degaset gant Mac'harit an Ozac'h, Scrignac.



IV. — Ar c'hilhog a zo bet
lammet diwar beg an tour,
gand ar gurun ; pelec'h
ema ?

V. — Ar c'hi n'ema mui
en e log ; deuet eo a-benn
d'en em zistaga ; pelec'h
ema ?

Degaset gant Renan Pleyber, Paris.

Dek priz kaer a vezo roet, da Bask, d'an Dek a vezo
da genta evit divinadennoù genver, C'houevrer ha meurz;
arabad degas ar respontchoù eta a-raok ma vezo emban-
net divinadennoù miz meurz.

Feiz ha Breiz

Ar Peoc'h etre ar Poblou

Brezel atao, brezel dalc'h-mat, brezel en eun tu
pe du, setu ar pezh a zo bet gwelet, er bed-man, abaoe
ma 'z eus anezan. Hervez eur studiaden, nevez bet
graet gant tud a zeskadurez bras, edoung an 3400 vloaz
diveza tremenet, ne 'z eus bet nemet 258 vloaz hep
brezel etre ar poblou : hogen, breman, e oar stag a-
zevri, e Genev, da ober brezel d'ar brezel ha gwella-
ze ma c'hell pennadureziou ar bed en em glevet pel-
loc'h evit ma ne vezo brezel ebet ken etre ar broioù.

Arc'heskob München, ar c'hardinal Faulhaber, unan
hep mar ebet eus kaera sperejou an Iliz, en amzer-
man, a zo o paouez ober, e iliz-veur sant Bonifas,
war ar peoc'h etre ar poblou, eur brezegenn hag e
fell deomp he lakat aman dirak daoulagad hol len-
nerien : vad a ray da gement hini hel lenno :

Daoulagad ar bed-holl a zo troet breman warzu Ge-
nev, kêr sant Fransez ar Zal ha kavell ar Groaz-Ruz.
N'eo ket a-walc'h deomp lenn er c'hazetennou ha se-
laou er radio ar pezh a vezo bet renket gand an Aotro-
ned a zo en em voded eno evit labourat da ziazeza da
vat ar peoc'h er bed ; endra ma labour a-zevri an dud-
ze da zegas ar peoc'h e tleer ivez pedi c'houek, dre
holl, evit ma tevio ar peoc'h.

An neb a hed a zo tost e spered da spered Doue ha
Doue eo an Hini a c'hell lakat pennadureziou ar
gouarnamanchou d'en em drei ouz ar peoc'h. Ni hag

hon eus gwelet darvoudou skrijus ar brezel diveza ha gouzanvet an holl drubuilhou a deuas d'e heul a die, kals kentoc'h eged ar re n'o deus ket gwelet ar pezh hon eus gwelet, na klevet ar youc'hadennoù hon eus klevet, sevel hon daouarn etrezek an nenv ha pedi kalonek evit ma roio an Aotrou Doue ar peoc'h d'ar bed. Poania a dleomp muia ma c'hellimp da lakat an holl poblou d'en em glevet evit ma ne vezo brezel ebet ken ha ma n'en em rivino ket ar bed holl oc'h ober binviachou-brezel hag o terc'hel kement all a zoudarded dindan an armou.

Selaouomp ar vouez a deu diwar lein ar menez :
« Eurus ar re a gar ar peoc'h, rak hanvet e vezint bu-
« gale an Aotrou Doue ! »

Evit dibuna kudennou ar brezel koulz hag evit dibuna kudennou ar peoc'h eo red a-grenn lakat menozioù nevez da zanka er sperejou. Red eo, aze n'eus ket da lavaret nann, diarma da genta, ar sperejou ma 'z eus c'hoant da c'hellout diarma ar zoudarded.

Kaeroc'h eget soudarded renket mat, gwisket klok hag armet henvel, o tremen, dre eur gêr, ken drant ha tra, en eur lakat he leurtiou da zeni dindan o zreid, a c'heller gwelet.

Ar c'hanaouennou-brezel, gwella ma 'z int breman eo da veza gorrennet en eur sanañh bennak etouez hernachou merglet ar brezelioù gwechall.

Estreged oc'h en em ganna e c'heller en em vruda hag estreged etouez ar vrezelourien e kaver tud kalonek.

An Iliz he-unan a ranko nevez he c'helennadurez war ar brezel; kenderc'hel a ray da lavaret ez eus brezelioù hag e c'heller, *pa vezont just*, kemeret perz enno, met, a-raok diskleria eo just eur brezel bennak e ranko sellet a-dost ouz an nevezentioù a zo di-

gouezet er bed, er bloavezioù diveza, hag a laka kement a gemm etre an amzer vremen hag an amzer wechall. An nevezentioù-ze hag a vir ouz eur brezel hag a garfed diskleria breman da veza just eo an aezamant a gaver d'en em glevet a-bell; ma vefe aoun da welet brezel o sevel e c'hellfed dillo a-walc'h, kas an affer da lezvarnioù hag a deuo a-benn da lakat ar re a oa o vont d'en em ganna da jom a-zav; ar benviachou-brezel sebezus e oar deuet da ober breman, an ezennou brein hag ar c'hirri-nijal a zo traou ker gouez ma tefe beza a-walc'h klevet hano anezo evit pellaat da viken diouz spered eun den ar c'hoant da ziskleria brezel d'eun den all; eur brezel breman a raio atao kement a c'haou d'an hini a c'hounezo ha d'an hini a gollo ha setu aze perak e vezo ken dies kaout eur brezel hiviziken hag a vezo just.

Ha ma n'eus den ebet ken gouest da lavaret en defe gwir da ziskleria brezel d'eun all, perak e kendalc'hfe ar broioù d'en em rivina oc'h ober kemend all a vinviachou-brezel hag o terc'hel kemend all a dud dindan o armou ?

Komz brudet an amzer goz : « *Si vis pacem para bellum* », — ma fell d'it kaout peoc'h, aoz brezel ! — a dlefe beza stlapet a-stal gostez, mesk-ha-mesk gand ar c'hoz listri-brezel didalvez; en hon amzer-ni eo red lavaret : « *Si vis pacem, para pacem !* » — Ma feil d'it kaout peoc'h, aoz peoc'h ! — Diouz m'hen aози, her c'havi !

Ha dreist-holl, pedomp : *Oremus* Savomp eun armead tud hag a bedo. Ar merc'hed hag ar vugale a c'hell en em lakat en arme-ze; ouz an aoter, ar beleg a bedo : « *Aotrou, pellait, diouz ho pobl, ar brezel !* » Er manatioù, bugale Doue a bedo, i ivez, evid ar peoc'h hag a bedo gand eur feiz krenv a-walc'h evit lakaat menezioù da vale; hag, e gwirionez, menezioù

dies da loc'h int ar c'hasoniou a vir ouz ar peoc'h da ren etre ar poblou.

Pedomp eta ma teuio muioc'h mui an dud d'en em drei ouz ar peoc'h ha ma klasko ar poblou dirouesta ar c'hudennou a laka yenienn da zével etrezo, kentoc'h dre gaer eget dre heg; ra dregerno dre bevar c'horn ar bed komzou ebestel ar peoc'h.

Ar peoc'h a zo eun dra hag a deu digant Doue : « Hen eo an hini a laka ar stourmadou da jom azav betek pennou pella ar bed. Hen eo a dorr ar warreg hag a bleg ar goaf. » Ps. XLV. 9.

Ma fell deomp kaout eun dra bennak digant Doue, goulennomp an dra-ze outan; ar peoc'h ne ziskenno ket war an douar nemed ar bedenn hel lakafe da ziskenn; n'eo ket a-walc'h kaout c'hoant da welet ar peoc'h o tont, na komz anezan, na goulenn ma roio pennadureziou ar bed labour vat e Genev : stourm ha pedi a dleomp evid ar peoc'h !

En de-man eun niver bras a gatoliked a zo en em vodet en ilizou evit pedi; en Alamagn, er Frans, er Suis ha zoken e Genev e leverer oferennou evid ar peoc'h. Eur ganevedenn gunv a en em stign hizio auz holl boblou an douar; e peb oferenn e pedomp seiz gwech evid ar peoc'h. Lennit mat en ho levriou-oferenn ar pennadou ma peder enno evid ar peoc'h. Ni, beleien, a lavaro an oferenn, meur a wech all c'hoaz, evit ma vleunio ar peoc'h er bed hag a zavo etrezek an nenv ar c'halur benniget ema ennan gwad ar C'hrist, ouz e bedi da virout ne rankfemp gwelet adarre o redek e-harz hon treid steriou gwad eur brezel nevez.

E kalon Jezuz ema an Testamant sakr-man : *Pacem relinquo vobis*. Ra deurvezo gand an Aotrou Doue rei deomp e skoazell ma teuio ar peoc'h d'en em skigna dre ar bed-holl, hervez e c'hoant hag hon hini.

Evelse bezet graet.

Hent ar Groaz

A holl viskoaz ar gristenien a zo bet mat da bleustri war ar poaniou a ziwaskas Hor Zalver evit savetei ar bed, met, a-raok bloaveziou diveza ar xv^{vet} kantved ne vez ket kavet en ilizou an taolennou hent ar groaz a gaver enno breman. Eur Flandrezad, Yann Van Paesschen, manaç'h eus Karmel Louven, maro wardro ar bloaz 1532, eo a reas ar muia evit renka hent ar groaz evel m'eo renket breman ha menec'h Sant Fransez eo a skignas goudeze an devosion-ze dre bevar c'horn ar bed kristen.

Ar vad a c'heller da denna eus hent ar groaz a zo dispar; evel ma lavare Beneat XIV, en e lizer *Cum tanta*, skrivet gantan d'an 30 a viz east 1741, oc'h ober hent ar groaz eo e teu ar bec'herien da dec'het diwar hent ar pec'hed, ar gristenien glouar da veza birvidik hag ar re vat da veza sent.

O veza ma ne ouied ket mat a-walc'h ken, pegement a induljansou a c'helled da c'hounit oc'h ober hent ar groaz, Pi XI en deus diskleriet kement-man, d'ar 17 a viz mae 1931 :

1° Hiviziken kement hini a raio hent ar groaz penn-da-benn, — o lavaret eur *Bater*, eun *Ave* hag eur *Gloria* bep taolenn ha goude an daolenn ziveza pemp *Pater*, pemp *Ave* ha pemp *Gloria*, en enor da bemp gouli Hor Zalver hag eur *Bater*, eun *Ave* hag eur *Gloria* evit Hon Tad Santel ar Pab, — a c'hounezo, *ken alies gwech*, eun induljans plenier;

2° Eun induljans plenier all a c'hellint da c'hounit en deiz m'o devezo graet hent ar groaz, ma komuniant ivez en dervez-ze, pe, m'o devez graet hent ar groaz, dek gwech, ma komuniant er miz warlerc'h;

3° Ma c'hoarvesfe gand unan bennak ne c'hellfe

ket mont da benn gant pevarzek taolenn hent ar groaz e c'hounezo da vihana eun induljans a 10 vloaz hag a 10 koraiz bep taolenn m'en devezo pedet dirazi.

4° Ar re ne c'hellont ket ober hent ar groaz en iliz, evel ar re all hag o deus eur groaz venniget bet staget outi induljansou hent ar groaz a c'hounezo eun induljans plenier gant ma livirint 20 *Pater*, 20 *Ave* hag 20 *Gloria Patri* evel ar re a ra hent ar groaz en iliz.

5° Ar re glanv ha ne c'hellont ket lavaret pedenn ebet, ker gwasket int gand ar boan, a c'helle gounit eun induljans plenier gant ma pokint pe ma sellint ouz eur groaz bet staget outi induljansou hent ar groaz.

Ar c'hardinal Lauri en deus roet da anaout an nevezentiou-man d'an 20 a viz Here 1931 hag e skrid a zo bet moulet e *Acta Apostolicæ Sedis* ar 26 a viz Kerzu 1931 p.p. 522-523.



Chapel Lokrist e Koray

E miz kerzu diveza oun bet oc'h ober eur bale betek Coray; goude beza saludet chapel sant Andre, e penn pella parrez Ergue-Gaberic, hag iliz Langolen ha treuzet teir gwech ar ster Odet, e ti-gouezomp en eun tiegez

kaer, el lec'h m'eo bet ganet unan eus ar re a oa deuet ganen da ober an dro; e gerent a reas d'comp eun degemer eus ar re-laouena; an ozac'h a zo eur paotr a zoare, kaer ha krenv; dougen a ra dilhad ar vro koulz hag e wreg hag e c'hoar gaer; ar vugale a zo koant gand o bleo melen hag o daoulagad glas; n'int ket gwer (1), tamm ebet, evel ma vez alies ar vugale war

(1) gwer = aonik.

ar macz hag o c'homzou drant a ziskouez a-walc'h n'o deus ket a aoun o welet diavaezidi dirazo.

Mestrez an ti he deus aozet d'eomp eur pred hag a ziskouez n'eo ket ret beza bet savet e kêr evit gouzout ober keusteuenn vat.

Er maez, an heol a zo goloet; an avel a ra d'ar vorena kerzet ha da ilio ar gwez koz heja; nemet bravoc'h a-ze n'eo ken beza dindan eun doenn vat.

Hon youl oa mont betek chapel Lokrist da welet nagellet e vije c'hoaz miret outi da beurgoueza en he foull.

Evit mont betek enni e tiskennomp gand eur vali goz goloet a lann hag a c'heot; e traon ar c'hrec'h an hent a reomp a gouez war eun all kel ledan ha ker koz hag hen hag e leverer d'eomp eo an hent-se hent koz Kemper da Geraëz; meur a gant vloaz a zo abaoe ma ne dremener ket kals ken dre eno; treuzi a reomp, war eur pont graet gant kef eur wezenn goz, eur wazenn zour hag a gouez pelloc'hik en Odet hag e welomp o sevel a-uz eun toulladig gwez, eun ivinenn bennak en o zouez, tour chapel Lokrist.

Peurlïesa ar chapeliou savet en enor d'ar Christ a zo bet graet gant urziou menec'h hag a veze atao dindan o armou evit beza barrek d'en em zifenn ouz o enebourien, pa veze ezomm; evelse chapel Coadry, e Scaer, a zo bet savet gant menec'h an Templ, ar *venec'h ruz*, evel ma vezent lezhanvet, koulz hag hini Lokrist-an-Izelve. Lokrist Coray a dle beza bet savet ivez gant ar venec'h ruz p'eo gwir ema war eun hent koz hag a veze heuliet gwechall gant pardonerien ar Poher pa 'z aent da Gemper da bedi dirak relegou sant Kaourintin ha sant Ronan.

Ar chapel hon eus dirak hon daoulagad a zo bet savet er XVI^{vet} kantved ha stumm eur groaz a zo het roet d'ez. E tu ar c'huz-heol ema an tour; an noriou a zo het kizellet a-zoare hag ar prenecher a zo rannet gant mein-ben; ar chapel, en he fez, kouls lavaret.

a zo graet zoken gant mein-ben; gwasa pez a zo ez eus ouspenn ugent vloaz abaoe ma n'eus bet toenn ebet warni hag arabad eta beza souezet neuze ma 'z eo aet an doenn, tamm ha tamm da fall; ma vije bet graet eur renka bennak d'ez i bep bloaz ne vije ket bet kals a dra he c'hempenn; breman avat e vezo ret dispign meur a vil lur; ar mogeriou, evit c'hoaz, n'o deus ket bet kals a zroug, met, na pebez tristedigez eo mont en diabarz; an doenn a oa a-zioc'h an aoter vras hag ar chapeliou-kroaz a zo kouezet; bale a raer war dammou sklent torret ha war beziadou koad breinet; toenn penn an traon ar chapel a jom c'hoaz en he sav hag ar merour tosta a laka dindanni e irvin hag e avalou!


Dont a ra an dour e daoulagad eun den pa wel dilezel traou ker kaer savet gand ar re goz ha n'eo mui gouest ar vugale vihan d'o derc'hel en o sav. Ar re goz, gand o frofou, o devoa savet ar chapel-ze; pedet o devoa eno; dont a raent laouen di, da hardona, da zul kenta viz mae, pa dregerne dre-holl kanaouennou au nevez amzer, da heul kroaziou arc'hant ha bannielou bras Coray. Petra o divije lavaret m'o divije klevet e teuje eun amzer hag e vije gwelet o bugale o chom hep dont ken wardro al lec'h benniget-se d'en em erbedi ouz an Aotrou Krist da gaout truez outo, hag o lezel e chapel, — kaera tamm labour graet gant dourn an den a oa en o farrez, — da goueza en he foull?

Petra o divije lavaret m'o divije gouezet e vije gellet kacut etouez o bugale vihan tud digristen a-walc'h, daoust d'ar vadiziant a zo war o zal, evit klask an tu da werza mein mogeriou chapel Lokrist evit gellout lakaat eur gwennegig bennak da goueza e kef ar gomman?

Daoust m'eo kouezet an doenn, ar zent a zo chomet c'hoaz, en o flas; ugent vloaz a zo m'emaint eno dindan an heol bero en hanv, ar glao dour-bil er goanv, o c'hedal gwelet unan bennak o tont da gaout truez outo.

E tu kleiz an aoter vras e weler eur C'hrist koad, ment eun den, o sevel eus e vez, liou ar maro warnan, ken dislivet ha ma 'z eo gand an amzer. En hevelep tu e weler eur Werc'hez gant he Mabig hag eur zant Sebastian, skarnilet gand an heol, debret gand ar preuned, skeudennou kollet! En tu dehou ema sant Laurans; heman en deus gellet en em ziouall gwelloc'h dre ma 'z eo bet kizellet e mein gwenn ar vro; n'en deus kollet nemed eun dourn; gwechall e weled livet e verzerenti war eun daolenn a-uz an aoter; ne weler tamm ebet anezi ken; eur zantez Barba a oa dre eno ivez, gwechall; aet eo en he hent.

En dra ma tizroe va c'hamaraded d'an ti m'oamp bet ennan o leina, e chomis eur pennad da zellet ouz ar c'halvar a zo e kichen ar chapel hag a zo kosoc'h eged ar bloaz 1700 a lenner warnan. Azeza a ris war



Chapel Lochrist

eun tamm maen da skeudennaoui ar chapel; gwella ma c'hellis ec'h en em jouchis rak yen e oa an avel ha kregi a rae ar yenenn em daouarn. Ki an ti tosta, ouz va gwelet a denas warzu ennon en eur harzal hag en eur ziskouez d'in e zent lemm; komz a ris braoa ma c'helljen outan hag e tosteas ouzin, a-nebendou; goude beza va c'houesaet, tu ha tu, e c'hourvezas stok em di-esker, evel m'en divije bet c'hoant d'en em domma diouzin; heb an amzer e selle ouzin gant fizians ha pa zavis ac'hano, eur wech ma oa echu va skeudenn gannen, em oa evel diegi o vont dioutan ouz e welet o krena gand ar riou.

Kaout a reoc'h aman ar skeudenn a ris; a-benn eun nebeud bloaveziou aman marteze, ne jomo nemeti da ziskleria d'ar re a deuo war hon lerc'h penaos e oa gwechall chapel Lokrist.

Hag ar pezh a zo truezusa, e meur a lec'h, siouaz, e tigouez ar pezh a zigouez eno. E Lokrist, da vihana, ar zent koz a jom c'hoaz; n'int ket prenet gant tud divadez; chom a reont atao en o zi disto. Piou a lavaro petra leveront an eil d'egile, epad nozveziou hir ar goan pa hirvoud an avel er gwez ha pa hiboud an dour en draonienn o tiskenn warzu ar mor?

Breiz-Izel hag a oa gwechall « douar ar zent » a ankounac'ha he brasa madoberourien: ar re o devoa diazezet en he c'hreiz rouantelez Jezus-Krist: eur vez eo evid ar vro a-bez ouspenn ar pec'hed.

Daoust hag ar zent ne deuint ket da skuiza d'o zro, o welet pegen divalo e raer d'ezo?

Ma ne garomp diouall!

War don: Jezuz peger bras ve.

Eun deiz trist a deuo,
Hor zent koz a dec'ho,
Bagad warlerc'h bagad,
Daerou 'n o daoulagad.

'Vel diwar eur c'halvar,
Kroumet gand ar c'hlae'har,
E tec'hint holl eun noz
Eus o chapeliou koz.

— : Den ne deu war hon tro,
Divroet omp 'n hor bro,
Ha pa deu hor pardon
Den ne drid e galon.

— : A-grenn eo diskaret
Ar Vreiz hon doa savet
Rak Breiz n'eo mui hor Breiz
Hep brezoneg na feiz!

Diwar dreujou o dor
E tiskennint d'ar mor
Hag en o bagou mein
Ez aint diouz hor bro vrein.

Goude sklerder seiz deiz
Deuet da heul ar feiz
War hor Breiz e paro
Noz yen du ar maro!

G. P.

Sent koz Breiz ⁽¹⁾

Nebeud a dra a ouzomp diwarbenn sent koz hor Breiz, ha c'hoaz, tra souezus, — an nebeudig a ouzomp diwar o fenn a-wella n'eo ket en istor ar zent eo e vez kavet. A-nevez 'zo ez eus bet klasket, dre studia hanoiou al lec'hioù hag hanoiou ar zent, sila eur beradig sklerijenn a-dreuz al latar a uz ouzomp derou ar feiz kristen e Breiz. Eur skiant nevez a zo bet savet, kouls lavaret, gant he binvioù hag he reolennoù hec'h-unan, skiant hag a zoug e galleg eun hano... *distrantellik a-walc'h*: « *Topo-hagio-onomatique* » pe ma kirit istor ar zent dre an hanoiou-lec'h. »

— « Eun doare eus ar re wella eo, eme an A. Loth, evid anaout buhez ar zent e Breiz, koulz hag e Kerne, Breiz-Veur hag e Bro-Gembre. En teir bro-ze, n'eo ket istor ar zent eo hor sklerijenno ar sura war o buhez ha war stad ar relijion el lec'h hag en amzer ma vent, met an hanoiou-lec'h. »

Evit ar pezh a zell ouz buhez ar zent, e c'hellomp ranna e tri rummad hanoiou-lec'h Bro-Vreiz : an hanoiou e « Lok », an hanoiou e « Plou- », « Lan- », « Tre- »; an hanoiou e « Sant-X... » evel Sant-Divy; hag an hanoiou e « X... » evel Beuzec, Gouesnou, hag all.

I. — AN HANOIOU E « LOK »

Ar ger « lok » a zeu eus al latin « locus », ha douget e vez gant eul lec'h santel bennak, eur manati, eur prioldi, pe aliesoc'h eur chapel; hano eur zant a

(1) Diverra teir studiadenenn bet graet da gloareged Kemper, er goanv tremen, ha tennet eur c'hals anezo eus leor an A. L'argillière *Les saints et l'organisation chrétienne primitive dans l'Armorique bretonne*.

vez atao stag outan. Hogen, kement hano e « Lok- » a anavezet a zo bet savet war an diwezadou; rak ne gaver ket anezo er c'horn-ze eus Breiz a gomze gwechall ar brezoneg ha ne entent mui nemed ar galleg abaoe an XII^{vet} kantved da ziwezata; meneg ebet anezo kennebeut er c'hosa buhezioù sent. Lavarout a c'heller eta, diarvar a-walc'h, ne oa ket eus an hanoioù e « Lok- » araoek an XI^{vet} kanved. Rak-se, n'o deus netra da welet gant buhez hor sent koz, an hanoioù-lec'h evel Lok-Mikael, Lok-Majan, Lokrist, Lok-Maria hag all.

II. — AN HANOIOU E « PLOU », « LAN » Ha « TRE »

Ar ger « Plou » a dalv evit holl dachenn eur barrez; « lan » a verk eur chapel, eun ermitaj; « tre » eur geriadenn bennak diwar ar maez. Hogen, an hanoioù savet gant an tri ger-ze a zo koz tre, rak kaout a raer anezo er c'hosa buhezioù sent kerkoulz hag er c'hornadou a Vreiz-Uhel ma komzed enno gwechall ar brezoneg. Ouspenn, da heul ar ger « plou- » e kaver ar memes hanoioù sent eget warlerc'h « lan- » ha « tre- », ar pezh a ro d'eomp da gredi eo an tri ger-se eus an hevelep oadvez. Hep dale koulskoude e rankont beza kollet o ster, o zalvoudegez, nemet « plou », a zo bet savet gantan goude- eur rummad kenta a hanoioù e « Plou- », eun eil rummad a hanoioù e « Plounevez- ».

III. — AN HANOIOU E « SANT X... », HAG E « X »

An hanoioù e « Sant-X... » evel Sant-Vaudez, hag an hanoioù n'eus anezo nemet hano ar zant hepken, evel Edern, Gouesnou, a zo a oadvez dishenvel, diaes awalc'h da verka resis. Eus « Sant-Herbot » ne gaver na roud na meneg kentoc'h eget an XIII^{vet} kantved. Met led all eus an hanoioù-ze a zo ker koz hag ar re e « Plou- », « Lan- » ha « Tre- »: Edern a ro e hano da Blouedern ha da Lanedern ha Langouesnou a-raed gwechall eus Gouesnou.

Ret eo hen anzao, istor pep sant drezi hec'h unan a zesek d'eomp nebeudik a-walc'h a dra. Eur poent hepken a zo diazezet start: ar zent-se, ankounac'haet hirio, o deus roet o hano da lec'hioù santel, chapelioù ha parrezioù. Pouezet o deus eta, int-i pe an enor rentet d'ezo, war buhez ar feiz en hor bro. Koulskoude, dre lakaat kenver ha kenver buhez meur a zant, e c'hellimp pennaoui gwirionezioù ha n'hon dije morse kavet e buhez ar sant-man-sant e-unan. Evelse, derc'hel a c'heller da wir n'eo ket bet anavezet nag enoret a-ziabell ar zent o deus leshanvet ar parrezioù e « Plou- » ha « Lan- »: evit an darnvuia anezo, n'eus nemet eul lec'h o tougen o hano. Ouspenn, tro a zo da gredi eo koz koz ar zent-se, hag e vevant d'an ampoent m'edo ar feiz kristen oc'h en em skoulma ouz bro nevez hon tadou tec'het a-raok ar Zaozon. Sur eo ive o deus bevet en hor bro int-i o-unan, ha n'eo ket hepken dre an enor rentet d'ezo.

Mar deo bet an darn vrasa eus hor sent koz o chom e Breiz, penaos eo bet hadet o chapelioù aman hag ehont? Rak alies gwech e kaver, dindan ar memes hano, eur chapel en arvor hag eun all en argoad; hag a-wechou eun trede demdost d'an aod, Perak? Diaes eo gouzout. Setu hag a c'hellfe beza kar tost d'ar wirionez; wardro chapel genta an arvor e vije bet dilestret ar zant, pa deuas eus an enezenn; diwezatoc'h, c'hoant d'ezan tec'hout diouz an dud a ziredè d'e gaout en abeg d'e vrud; e vije pignet en argoad da guzat, hag eno e vije bet savet an eil chapel; an trede chapel a verkje al lec'h ma touaras goude eun eil beaj, pe c'hoaz eun trede ermitaj goude dizrei eus an argoad, rak ar Vretoned a gar ar mior. N'eo ket difennet sonjal kennebeut e voe enoret ar zent, goude o maro, ouspenn el lec'h m'o doa bevet, hag e kreskas evelse niver o chapelioù.

J. L. GOUZIEN.

Me a fell d'in reiza va buhez evel a girin

Senti, plega d'ar re all, goulenn kuzul digant tud fur, n'eman ket mui ar c'hiz. Hiviziken an den yaouank a lavar a vouez uhel eo gouest d'en em c'houarn e-unan, hag e fell d'ezan ober evel a garo.

« Me, emezan, a c'hoanta kaout plijadur em buhez, me a c'hounezo arc'hant buan ha da c'houde ne van-ko netra d'in. »

Gwechall e veze lavaret oa dleet da bep den ober e zevel, labourat, kerzout atao dre an hent eün, beza leal, onest, ober vad d'ar re all. Hag eur vuhez implijet evelse a oa eur vuhez leun, a dremene buan, a roe eürusted hag a zigase enor en familhou.

Gwechall e veze lavaret d'an den yaouank : « Bez war evez, ar bed a zo touellus. Evit en em ziwall diouz ar stlabez hag an dizurz, e vezo ret d'it stourm heb ehan, hag evelse hepken e vezi trec'h d'ar iou-lou direiz ha da skoueriou all ar bed. »

Ar zent, da lavaret eo ar re wella eus an dud, ar re a zo enor an douar, o deus poaniet evit dont a benn eus holl enebourien o ene, hag evit kaeraat ha pinvidikaat an ene-ze, o deus graet brezel d'o c'horf, gouzanvet naon, sec'hed, skuisder, pep seurt poaniou, heb en em glemm. Tud ar bed a grede oa truezus o stad, met i a en em gave eürus hag a lavare : « Barr leun eo hor c'halon a levenez. »

Santez Katell, gwerc'hez Sienn, a gomze evelhen ouz Jezuz Krist he doa kemeret da bried : « Taolet am eus pell diouzin pep karantez evit traou an douar. Netaet am eus va zreid diouz poultrenn ar bed; ha ret e vezo d'in o c'hailhara a-nevez ? » An Aotrou a zes-

kas d'ez eus el Lezenn daou c'hourc'hemenn : unan da garet Doue, eun all da garet an nesa. « Me a fell d'in, eme ar Mestr, da welet oc'h heulia an daou c'hourc'hemenn-ze, oc'h ober hent war an daou droad-ze, o nijal gant an diou askell-ze etrezeg an Nenv. Hag ankounac'haet ec'h eus da garantez virvidik evit silvidigez an eneou ? Perak neuze klask mont war da giz ? Perak en em glemm ? N'am eus ken c'hoant nemet da welet o kerzout dre an hent m'out bet galvet ennan abaoe da vugaleaj. » — « Me, eme Gatell, n'oun nemet eur vaouez hep deskadurez. Petra oun-me gouest d'ober ? — « Evidon-me, a respontas Jezuz, n'eus na gwazed, na merc'hed, na tud desket, na tud dizesk, ha selaou mat an dra-man. En amzer a hirio an dud desket o deus, gant o ourgouilh, savet ken uhel o fenn ma fell d'in o izelaat. »

Neuze Katell a zoublas he fenn hag a zisklerias : « Servicherez oun da Zoue. »

Hag, evel kustum, Jezuz a lavaras a-unan ganti pedennou an ofis, ha pa glevas kreisteiz o seni, e c'hourc'hemennas d'ez mont da gemeret he fred. « Da dud a zo ouz taol, emezan. P'az pezo leinet, e tizroi da bedi adarre. »

Hiviziken Katell a raio ar gefridi fiziet enni gant ar C'hris. Embann a raio e pep lec'h, dirag ar re vras, dirak ar re vihan, menoziou ar C'hris,

Ober war an douar-man bolontez Doue, derc'hel mat beteg ar fin hep morse fall-galoni, setu aze ar vuhez kristen. Ar re a ra evelse, hag ar reze hepken a zo dleet d'ezo enor ha meuleudi.

En deiz a hirio ez eus kalz tud hag a gred n'o deus war an douar-man netra d'ober nemet klask plijadur, n'o deus ket da labourat, da c'houzanv poan, d'en em zieza. « Pa vez d'en em zieza n'eus ket a blijadur. »

Gwir da gaout plijadur ! Eus pelec'h e teu d'ezo ar gwir-ze, ha digant piou ? War o meno, o deus

gwir da zebri hep labourat, da rei o gwalc'h d'o holl ioulou. Ma klasker enebi outo, ez aint dre nerz hag e roint taol ar maro d'an hini a glasko stanka outo an hent.

Piou ne wel ket em'an an dud-ze oc'h en em zével enep pep roll, pep reiz ? Gant hevelep tud ne vije da gaout war an douar-man nemet brezel ha tabut. — « Kement a blij d'eoc'h a glaskit kemeret. Met re all a zo perc'henn d'ar pezh a c'hoantait, hag a zifenno o zra, evel just. An hini krenva eo a vezo mestr, an hini n'en deus ket a nerz da zifenn e dra a ranko plega.

Plijadur, emezo, ha liberte d'ober evel a garomp. Hag o redet warlerc'h al liberte, e teuont da veza sklaved. Senti a reont ouz o ioulou fall, kase' ha digaset int ganto du-man, du-hont, e pep lec'h, ha morse n'o deus o gwalc'h, morse ne gavont peoc'h ebet nag eurusted ebet, hag alies, skuiz, inouet gant bec'h ar vuhez, ez eont d'en em laza. En em laza a reont, ha laza a reont re all. Ar vaouez a c'hoanta beva en he roll ne fell ket d'ezi mui kaout bugale. « Pa vez d'en em zieza, n'eus ket a blijadur. » Ar yugale a vez poan ganto, pell e vezont o sevel, da zispign e vez ganto. Perak neuze kaout bugale ? « Klaskomp plijadur, na deomp ket d'en em zieza, ha pa vezimp maro, ra zeuio an dour-beuz da c'holoi an douar ! »

Ar fals-doktored, ar skrivagnerien dizoue a zo o stlabeza sperejou ha kalonou an dud yaouank, o teski d'ezo en em rei d'ar pec'hed, d'an hudurnez, a zo o labourat evit ar maro. Lakaat a rafent gouenn an dud da vervel, ha ne jomfe mui war an douar nemet al loened mud.

N'eus nemet Iliz Jezus-Krist, sklërijennet gant ar Spered Santel, o tisplega d'an dud ar wirionez, oc'h en em zével eneb ar geier hag an droug, o terc'hel ar hed en e zav.

Y. U.

Ti nevez Perig hag Azilis

Savet eo an ti nevez; war eun dorgenn emañ; e vogeriu a zo gwenn hag e doenn glas: kaer eo evel eur skrin; daou brenestr hag eun nor a zo d'an traon; tri brenestr a zo er zolier hag a-zioc'h ar zolier ez eus eur c'halatez: « Ker-Uhela » eo hanvet gand ar re goz.

I. — DIOUALLERÉZ AN TI.

Ar Werc'hezic alaouret a zo en he log, he daouarn astennet evel evit digemeret ar re a deuo en ti hag he daoulagad digor da zifenn ar re a vezo ennan; dinec'h e c'hellont beza, war evez e vezo anezo; astenn a ray he dourn da lavaret d'ar paour: « Deus heb aoun ha sko a war an nor; digoret e vezo d'it; e kichen an tan e a vezi kaset da domma; eur skudellad voued a vezo aozet d'it ha ma 'z peus riu d'az treid e vezo roet a kolo fresk d'it da lakat en da voutou, rak aman ez eus a eur vestrez hag a lenn an Aviel benidez diouz an noz; a karout a ra ar beorien hag enno e wel skeudenn veo a Hor Zalver Jezuz-Krist! »

Lavaret a ray ivez d'an amezeien ha d'ar vignoned: « Deuit en ti da c'houlenn sikour; m'hoc'h eus ezomm a tud, binviachou, loened da ober ho labour ne vezo a nac'het netra ouzoc'h! Pa zigouezo gant tud an ti-man a kaout ezomm ne vezint ket nec'het ken nebeud oc'h en a em 'erbedi ouzoc'h; m'ho peus eun ali mat bennak da a rei e vezo selaouet ha laket da dalvezout. »

Arabad e vezo avat d'an diaoul dont tost d'an ti-man, I. V. ar wir zikour hen anavezo war deod eur gwall gristen a rofe eur gentel foll d'an daou bried yaouank; e anaout a rafe e dourn eun all a ginnigfe d'ezo eul leor digristen pe eur gazetenn etre daou, na mat, na fall; e anaout a rafe e daoulagad eur judas ha ne vez en e vleud nemed pa c'hell goapaat ar veleien hag an traou santel. An diaoul n'eo nemet spered; gouzout a ra en em guzat dindan eur billied-vot kouls ha dindan eur bil-

hed-bank; met ar vaouez dinamm he deus flastret e benn d'ezan eur wech hen diskulio atao ha n'hén lezo ket da lakat e dreid en eun ti hag a zo bet fiziet enni: eurus eta ar re a zo a-us o dor skeudenn ar Werc'hez venniget. Poaniou, klenvejou, dienez a c'hell mont en ti, rak traou int hag a deu a-berz Doue hag ar c'hristen mat a boko gant karantez d'e groaziou, met an enebour fallakr a jomo er maez da yudal.

II. — ARDREMEZ HA DIABARZ AN TI.

Taqlit eur zell war diabarz an ti nevez; ne welit ket peger brao eo renket an arreburi? Souezet e chomer o welet al listrier, kement a blajou a liou ennan. Luita da ra an traou en ti-ze; bemdez e teu ar wreg yaouank da ober tan-skolpajou er siminal evit sec'ha ar plastr hag ar mogerioù rak n'eo ket yac'hus mont da jom en eun ti hag a zo kel leiz all e vogerioù. A! meuleudi a c'heller rei da Jakou en dro-man; labour vrag en deus graet ha labour zillo; sec'hor vat a zo bet epad m'edo an ti war ar ramp; an Aotrou Doue a oa a-du gantan evit doare; eun neiz, eus an dibab, en deus fichet d'an daou bried hag hep dale e teuint da jom ennan.

Evid e c'houkori, Perig en deus laket gwez pin en tu diouz ar wadarn ha, tro-war-dro d'an toul-hanvoez, en tu diouz ar say-heol; gwez elo en deus laket ivez, eun daouzek bennak, en izelenn, war lez an dour hag e tu ar c'hreiz-deiz; Aziliz he deus hadet bleunioù c'houez-vat ha fourret eur bod-roz da zével ouz ar voger:

« Henman, emezi, a vezo skeud hor buhez; e pep buhez
 « ez eus bleun ha drein, evel er bod-roz, da lavaret eo
 « dervezioù laouen ha dervezioù trist, mesk-ha-mesk;
 « evito holl e rankomp trugarekaat an Aotrou Doue! »

Pep tra wardro he zi her-c'heleñn. Pa jom a-zav dirak an orclach a zo etre an daou wele e lavar enni he-unan:
 « Setu ar momenter a skoio tra ma vezin war an deuar;
 « setu an nadozioù a verko eur va maro; niveret e vezo
 « va amzer eur da eur ha va Ael mat a zougo an euriou-
 « ze dirak Doue: euriou sklér, euriou tenval; euriou hir
 ar c'hlenved, euriou skanv ar yac'hed; euriou ar bedenn;
 « euriou al labour; euriou an ehan; holl e vezoc'h bar-



Kuzit hoc'h aluzen e kerc'hen ar beorien, rak evel ma voug an dour an tan, evelse ivez an aluzen a voug ar pec'hejou.

« net ha pouezet; holl e chomoc'h d'am gedal er bed-
« all! »

Arabad eo kredi ez eo tenval penn Aziliz dre ma vez
traou poellus war he spered a-wechou; kana a oar ha
c'hoarzin 'ta : eul laouenedigez eo sellet outi; he bleo a
zo melen; he divoc'h rus-wenn; he muzellou mouse'hoar-
zus; aer vrao he deus; n'eo na re aonik na re hardis;
sellet a ra eun ouz an dud rak ar peoc'h a zo en he
c'honsians hag al levenez en he c'halon. Sal e vije bet
kals evelti e Breiz!.. reketi a ran peb a Vreizadez heh-
vel-outi da gement paotr yaouank a lenn *Feiz ha Breiz*;
neuze e chomint er vro, war ar mæez, el lec'h ma 'z eus
poan, met el lec'h ma 'z eus ivez aer vat, bara, sklerijenn
ha yec'hed!

III. — AN TI NEVEZ BENNIGET.

Disul diweza, goude ar gousperou, e voe benniget an
ti nevez gand an Aotrou Person, eun den hag a gemer
poan gand e barresioniz, m'hen asur deoc'h; c'hoant en
deus d'o chacha holl d'e heul, d'ar baradoz. Eul litrad
gwin deus en devoa prenet Perig hag an Aotrou Person,
ken dilorc'h ha tra, a evas eur banne gand ar re a oa
er-o da yec'hed ar priejou yaouank, en o c'hîer nevez;
Aziliz evit tenna bennoz Doue war he ziegez a roas gwerz
eun oferenn d'ar beleg hag arc'hant an ugent lur genta
a vieud gwiniz he devoa bet diwar he greun: pemp sa-
c'had a gant lur en devoa roet tad Perig, p'eo gwir e
wele e oa krenv e greun da baka an east.

An daou zen yaouank a zo hano ganen anezo aman
n'int ket pinvidik, pell diouz eno; feiz o deus avat e
komzou Hor Zalver ha fizians e madelez Doue; biken
ne jomint hep rei d'ar velleien ha d'ar beorien ar pez a
zo dleet, rak gouzout a reont ervat eo an aluzen eun
deyer striz; laket ez eus gwenneien etre daouarn darn
d'ober o zreuz war an douar evel ma lakeont o-uan-
eur bilhed a gant lur etre daouarn o mevel pe o mæez
pa 'z eont da ober kefridiou evito hag e c'houlenner o
c'hount outo pa deuont d'ar ger; evelse ivez an Aotrou
Doue a c'houlenco ouz pep den: « Petra 'z peus graet
eus ar pez am oa fiziet ennout? »

Per hag Aziliz a oar kement-se ha ne fell ket d'ezo beza
paket fall gand o Mestr.
Tintin Anna.



Ar goanv. Ar marvailhou e tal an tan.

Kanaouen ar Goanv

Me eo ar goanv : gant eur sae wenn
Oun gwisket euz an troad d'ar penn;
War Breiz-Izel, tri miz, me ren
Ha dirazoun an-holl a gren.

Me eo ar goanv : d'an heol dremm rus
E kemennan « pella ha kuz »
Ha, deut an noz, d'al loar hep par
E kemennan « Dihun ha par ».

Me eo ar goanv : prim d'am goulenn
En em zispleg ar goumoulenn;
Prim, en oabl skler, hervez va c'hoant,
En em ziskouez ar stered koant.

Me eo ar goanv : a blas da blas
E nij d'am heul va halan sklas;
Hag ouz va zroad hag ouz va dorn,
Endra ma 'z an, e ruilh ar skorn.

Me eo ar goanv : c'houek ouz an erc'h
E komzan : « Nij eus da neiz gwerc'h »
Ha diouz an nenv, skanv evel plun,
Puilh d'an douar e kouez he bleun.

Me eo ar goanv : douar en douar
Me aoz d'an had gweleou klouar;
Hag euz e vez, pa vo an eur.
E savo gant an hanv, va breur.

Me eo ar goanv : va skilfou gouez
A lamm o mantell diouz ar gwez;
Hag er c'hoajou ar skourrou paour
A gan o c'haon d'o deliou aour.

Me eo ar goanv : ac'han abred
Eo aet ar wenneli d'ar red;
Da vro an heol, d'an oablou sec'h
Meur a labous bemdez a dec'h.

Me eo ar goanv : dre-holl, d'am c'hri,
Va avel foll a blant he fri;
En tiez soul va avel-yud
Tostoc'h d'an tan a vunt an dud.

Me eo ar goanv : gant riou ha skorn
E vezan kavet e pep korn;
Kriz oun lia goulskoude me eo
A ro d'ar bed an Doue beo.


Me eo ar goanv : war ma brec'h d'eoc'h
E tigas an Roue ar peoc'h;
D'eoc'h e tigas an war va choug
Hader ar mad, Lazer an droug.

J. L'HELGOUACH, O. M. I.

Sant-Brieg, 4-2-32.

An teir bran

Eur pardaez, — pell a zo abaoe, — goude m'oan
bet o welet maner Koad-ar-Skour, e parrez Plourin,
edon o vont d'ar C'hloastr da gemerout an tren da zis-
trei da Vontroulez. Heulia a raen hent bras koz Ka-
raez, dilezet, koulz lavaret, abaoe m'eo bet digoret an
hent nevez hag en eul lec'h trist ha gouez ec'h en em
gaven. An hent koz a bigne efin war menez Are, dre
douez al lanneier hag ar brugeier hag an amzer a oa
ker sioul ma klevet, daoust ma oan teir leo diouto-
kleier Plouneour o seni an Angelus.



Maner Koad-ar-Skour

En eun taol e kavis, war va hent, eun tregeriad koz azezet, e tu kleiz an hent, war eur c'halvar torret hag a zouge, breman, eur groaz houarn, e lec'h ar groaz vaen en devoa gwechall. Eun nebeud gwez a oa adre kein ar groaz hag eun tammig straed da vont d'eur vengleuz koz dilezet ha leun a zour gwern.

Ar paotr koz en devoa klevet va zrouz-hale; trei a eure e benn da zellet ouzin hag e lavaras d'in :

— Brao an amzer da vale !

— : Ya! laouen! emedoun, ha gwelet a ran oc'h deuet hoc'h unan dre aman da glask aer vat !

— : Eun tamm diskuiz a ran, paotr yaouank, emezan, rak pa deuer da gosaat an divesker a bounera. Me a zo eus ar Gerveur hag ezomm am eus da vont da Gelern. Mall eo d'in zoken kendelc'her gant va hent, rak an noz a deuo buan ha daoust ma n'eo ket ken danjerus ha kentoc'h an hentchou n'eo ket me eo a garfe en em gaout da veza va-unan war vale. Da gemeret an tren emaac'h, 'm eus aoun. Ma kirit, neuze, e raimp hent hon daou.

— : Ya! laouen! avat, tad koz! livirit d'in 'ta perak e komzit eus danjeriou an hent ? Ma anavezit eun darvoud bennak c'hoarvezet el lanneier-man, livirit hen d'in, en eur vont gand an hent, rak me em bevez plijadur atao o klevet traou an amzer goz.

An hini koz n'en devoa ket kalz a zoare d'am se-laou; en e zav, harpet war e vaz, e selle ouz teir pe beder bran a oa kludet war skourrou uhela ar gwez. Al laboused du a goage hag a nije eus an eil gwezenn d'eben hag, en eun taol, ez ejont ac'hano, a-denn askell, etrezek ar c'hoad tosta.

— Ya ! a lavare outan e-unan, setu dizroet ar brini; aze emaint atao; ar re-ze eo ar re o deus gwelet ar gwall zarvoud; kant vloaz e vevont hag ouspenn, zoken, a-wechou. An Aotrou Doue a zo bras e c'hal-loud ! Ra vezo meulet e hano santel !

Daoulina a eure dirag ar groaz da lavaret eur bedenn ha setu ni da ober hent hon daou.


Eur pennad e chomas dilavar; anat oa e oa eun dra vras bennak o pikat e galon; ne rannis ger ; kemeret a eure e yalc'h-vutun ha goude beza laket tan war e gorn e stagas da gomiz :

— O c'houlenn eun istor edoc'h diganen, bremaik; n'em eus ket ezomm da jom pell na da vont pell da glask unan; ma c'hellfe ar brini-ze komz e ouesfent kalz gwelloc'h egedoun penaos e tremenas an traou emañ o vont da ziskleria d'eoc'h : va istor a vije mat he rei da anaout d'ar re ne gredont ket emañ lagad an Aotrou Doue o teurel evez ouz pep tra.

Gwelet ho peus an toull mengleuz a zo adre ar groaz; el lennad dour a zo enni e voe kavet breman ez eus pevar ugent vloaz bennak korf eur marc'hadour eus Karaëz a oa en hent da vont da foar an nec'h da Vontroulez. Kalz amzer en devoa kollet, rak e loen a oa kamm hag e oa bet ret d'ezan chom d'e houarna e govell ar Skiriou, e Berrien; loc'het e oa ac'hano, wardre peder eur diouz ar pardaez ha goude den n'en devoa klevet hano anezan. E wreg enkrezet a lakeas e glask hag e voe kavet e gorf e toull dour ar vengleuz; lazet e oa bet rak e dreid hag e zaouarn a oa en ereou. Ar yalc'h a oa aet gantan eus ar gêr n'edo mui warnan. E loen ne voe klevet hano ebet anezan, ken nebeud. An archerien, kaer o devoe poania, ne deujont ket a-benn da lakat o dourn war an dorfetourien o devoa mouget ha beuzet ar marc'hadour reuzendik-ze; ne jome roud ebet anezo e nep lec'h: den ebet n'en devoa o gwelet nag o c'hlevet ; trouz bras a voe diwarbenn an torfed hag a-nebeudou e skuizjod o komz anezan pa ne oad ket evit koeza war an hini en devoa her graet : tri bloaz goude ne oa hano ebet anezan ken.

Va zad, d'ar c'houlz-ze, en devoe ezomm da vont da

Vontronlez da gaout eun alvokad evit gouzout penaos en em zifenn ouz eun amezog a glaske trabas outan



Torfed an daou Hamonou

diwarbenn an dour. Pa dremenas ebiou ar groaz m'edon harpet outi bremaik, e savas c'hoant gantan da jom eur pennad da ziskuiza, en he c'hichen. Evel ma oa avel e lammas dreist ar c'hleuz a oa en he c'hichen hag e c'hourvezas eno, er goudor, war al leton.

A greiz e ziskuiz e klevas trouz daou zen o tont gand an hent bras; sevel a eure, en e zav, ha dre douez deliou gwez ar c'hae ec'h anavezaz an daou vreur Hamonou, eus ar C'hloastr, daou baotr ouesk

ha ne oa ket kals a dra da damall d'ezo ha ne greded ket evelato fiziout re en holl enno rak n'o devoa vad ebet da ober da zen. Eun tiegez bras a oa ganto; berr e oa bet an traon ganto, eur pennad, met, dre o labour, da gredi eo, e oant deuet a-benn d'en em zis-lea ha zoken da brena chatal eus ar c'henta.

P'edo an daou vreur o vont da dremen ebiou ar groaz, teir bran hag a oa kludet war skourrou ar gwez tosta d'an hent a en em lakeas da nijal, da goagal, evel ma vijent e kounnar, a uz d'an daou vreur ha goude eleiz a droidellerez ez ejont da ziskuiza pelloc'h war eur wezenn bin a oa he-unan e kreiz al lannog vras :

— Sell, eme unan eus an Hamonaoued, setu aze brini marc'hadour Karaëz; hopit, hopit, loened di-valo, kement ha ma kerot; den ebet ne ouezo petra livirit.

— : Ro peoc'h, eme egile ker rok ha tra. N'ouzon ket perak omp deuet dre aman. N'eo ket bet gwelet va zreid, en toull-man, abaoe an nozvez ma... Ro peoc'h sell n'out nemed eur glabouser ! taol evez na vefes tapet a bouez da deod.

— : Te a zo oc'h hunvreal, eme ar c'henta. Neus nemedomp hon daou aman hag evelse ne 'z peus ket ezomm da gaout aoun evit komz krenv. Ya ! c'hoarzin a rankan pa zonjan er marc'hadour-ze a bede ar brini, pa ne wele dirazan krouadur beo all ebet ken, d'hon diskulia. Testou kaer en devoa kavet; keit ha ma ne zavo nemet testou evelse en hon eneb e c'helli kousket dienkrez.

— : Ro peoc'h, sell, a lavaran d'it, eme ar breur hena; deomp ac'han, dillo, en aoun ne redfe spez an hini maro war hon lerc'h. Perak out deuet ivez dre an hent-man fenez ? Birviken ne vezin tapet ken da zont tost d'an toull-ifern-man !

— : N'es ket da lavaret sotoniou evelse, eme ar

breur yaouanka; eur wech ma vezer maro e vezer maro mat, daoust d'ar pezh a lavar ar veleien gaouiad. Bez en habaskder; bremaik e paein eur chopinad d'it e ostaleri ar Groaz-Verr ha goudeze, marteze, ne greni ket kement.

Mont a rejont ac'hano gand o hent. Va zad, avat, en devoa klevet tra a-walc'h hag eur wech en em gavet e Montroulez e lavaras d'e alvokad ar pezh en devoa klevet; heman her c'hasas raktal betek Barner bras ar Roue, — en amzer Charles X edod neuze, — hag her pedas da lavaret dirak heman ar pezh a oa digouezet gantan. Antronoz an archerien a yeas d'ar C'hloastr hag an daou Hamonou a voe prizoniet. A-bouez klask piz a-walc'h e voe kavet dindan eur bern deliou eun-tamm eus hern mal ar marc'hadour a voe anavezet mat gand an intañvez; an dorfetourien o devoa devet ar mal met n'oant ket deuet a-benn da zevi an houarn a oa outi; ar marc'h a voe kavet ivez e kosteziou Komanna gwerzet ganto da unan bennak diwardro eno; gand arc'hant an hini maro o devoa paeet o dle ha prenet loened kaer da leuna o c'hrevier.

An daou vuntrere a nac'has beza graet an torfed, da genta; pa weljont nag a desteniou a oa, en o eneb, ec'h anzavjont, evelato, o fec'hed. Pa c'houlennas ar harner outo hag en em erbedi en devoa graet ar marc'hadour ouz ar brini e lerverjont: — Pa welas edomp o vont d'e vouga, evit ma ne vije den diskulia e sellas en dro d'ezan spouronet hag o wetet teir bran war skourrou ar wezenn dosta e youc'has d'ezo: « Brini, Brini, m'ho kemer da dest ema an daou-man ouz va laza! » Ne lavaras netra ebet ken; me c'hoarze ouz e glevet hag a stardas ar gordenn en dro d'e c'houzoug!

An daou vuntrere a voe kondaonet d'ar maro ha dibennet e Montroulez war blasenn ar Pave Nevez.

Va zad, Doue r'hen pardono, a gontas an istor-ze d'in a-lies, ha bep wech ma tremenan ebion ar groaz-se e choman a-zav da lavaret eun *De profundis* evid an Anaon ha da bleustri war justis an Aotrou Doue; an testou en devoa kemeret ar marc'hadour a oa en em zavet a eneb e vuntrerien ha kastizet e voent: rak Doue a zo just ha pep pec'hed a vez kastizet abred pe ziwezat, pe er bed-man pe er bed all.

G. P.




Gwez ivin berejou Breiz.

Ne weted bered ebet kouls lavaret gwechall ha ne vije ket a wez ivin enni; ar wezenn-ze gant he liou tenval a gomze eus ar maro ha gant hirder he buhez e komze eus padelez da viken an ene. Abaoe an amzer gosa ar gwez ivin oa gwez ar re varo ha gwella douar a oa diouz o doare oa douar ar berejou. E enezenn Brehat e lavared, breman ez eus eun tri ugent vloaz, e veze eneoù ar purgator war skourrou gwez ivin ar vered oc'h ober o finijenn.

Ivinennou a oa hag a oa brudet evid o c'hozni hag o zeoder; er bloaz 1780, hini iliz Sant Servez, e kichen Callac, oa war a lavared, uhela ha teoa hini a oa er bed-holl. E bered Plouagat, etre Gwengamp ha Kastelaudren, e oa eun all hag a dlee kaout, diouz he gwelet, 8 pe 900 vloaz. E kichen ilizou Sizun ha Rumengol ez eus ivez gwez ivin ledan hag a jom atao en o sav; ivinenn Sizun, abaoe ma n'ema ket ken

ar vered en dro d'an iliz a zo disteraet ha n'eo ket souez rak he magadurez wella a denne eus ar beziou.

Ivinennou kaer a gaver c'hoaz e Landouzan, e parrez an Drenec, e Lok-Majan, e Plouguin, e Plourac'h, e Landudal, e Kernilis, e Penhars, e Sant-Laurans e parrez Goulien.



Ivinenn Landouzan

E Bro Roazon e kaver gwez ivin e Acigné, La Baussaine, Bourgbarré, Clayes, Bazouges-sous-Hédé, Sang-Brieg-an-Ivin, Plesder, Treffendel, hag a zo kosoc'h ha startoc'h, en o sav, eged an ilizou a waskedont. Darn anezo o deus gwelet e-harz o zreid templou payan ha diou pe deir iliz savet an eil goude eben.

E Breiz-Izel e veze graet kals stad ouz ar gwez ivin; pa ziskaret ar gwez all er berejou e veze espernet atao an ivin hag ar gwez a veze diskaret e veze laket re all en o lec'h, ar pezh ne vez ket graet breman.

En eskopti Roazon avat ez eus bet eun eskob, eun den a zoujans Doue, Per Cornulier ha n'oa ket evit gouzanv ar gwez ivin. Gourc'hemen a eure o diskar. D'an 26 a viz east 1636, barner bras Parlamant Roazon, Jili Huchet de la Bédoyère, a en em glemmas eus an eskob o veza ma roe urz dre ma 'z ae da ziskar kement ivinenn a wele dindan boan a eskumunugenn : « Ar gourc'hemenn-ze, eme an A. Huchet, a zo douget a enep pep gwir, rak ar gwez ivin-ze a zo bet laket er berejou evid eun digarez vat ha war urz Duked koz Breiz. »

Ne anavezet ket urz an Duked nemet dre lavar an A. Huchet, met e Bro-Zaoz e lec'h ma 'z eus eleiz a ivin, ar Rouaned o devoa gourc'hemennet planta gwez ivin evit kaout koad da ober gwaregeier ha birou; met n'eo ket evit kaout danvez binviachou evel-se hepken eo e plantet ivin rak ar Roue Edouard kenta (1272-1307) a roas urz da blanta ivin en dro d'an ilizou, evid o gwaskedi ouz ar gwall avel.

E Breiz ez eus bet laket gwez ivin er berejou evit meur a zigarez hag ar c'hoad ivin a veze implijet, sur a-walc'h da ober armou. War gontchou an Duk (1306-1308) e welomp e oe paet 10 gwenneg da iliz Plemy evid eur skour ivin prenet da gempenn gwaregeier ar zoudarded a oa o chom e Jugon. Hon Duked a zaremprede kals neuze rouaned Bro-Zaoz ha marteze o deus laket da dalvezout en hor bro al lezennou douget gant Rouaned Bro-Zaoz divarbenn ar gwez ivin. Gwez a zo bet a-holl viskoaz hag a zo bet muioc'h a zamant d'ezo eget d'ar gwez all. Epad ar brezel 1914-1918, gouarnamant ar Frans a zifennas

diskar ar gwez kraon o veza ma vez implijet ar c'hoad kraon da ober treid fuzuliu.

Ne ouezer ket mat a-walc'h perak en devoa kement a gas eskob Roazon ouz ar gwez ivin evel m'en devoa : « Klevet en devoa, emezan, e rae an dud diwar ar maez implij fall eus ar gwez-ze ! » N'ouzomp ket avat pe seurt implij fall a c'hellent da ober ganto.



Ivinenn Plouagat

Ar re goz a lavare e oa mat an deliou ivin da laza ar razed. Re all a lavare e oa fall mont da gousket dindan ar gwez ivin. Ar C'hallaoued koz evit spega kontamm ouz o birou o soube e dour tennet eus deliou ivin gwasket. En hon amzer e leverer e varfe al loened a zebrfe deliou ivin.

Parlamant Breiz a enebas ouz eskob Roazon hag a zifennas diskar ar gwez ivin; kuzulierien an iliz a veze laket ken nec'het hag eur c'hi war eur c'hra-vaz o klask gouzout ouz pui senti. Ar Parlamant a oa en e wir o tougen ar gourc'hemenn a zouge rak hen oa bleiner kuzuliu ar parrezioù hag eskibien Breiz ne c'hellent ket heb e aotre rei urz da ziskar ar gwez a oa en dro d'an ilizou ha d'ar chapelioù. An tabut a badas eur pennad brao. E Cintre e voe dis-wriziennet ar peder ivinenn a oa er vered; e Retiers ar barresioniz ne zentjont ket ouz an eskob hag heman a zifennas outo lakat o c'horfou maro en o bered kez, setu ma rankent o bezia en iliz; ar pezh a oa diaes bras rak eur c'hlenved spegus a oa er vro ha kals tud a varve gantan; prosez ar gwez ivin a voe kaset da Baris hag eno kuzul ar roue a roas ar gounid d'an eskob. Person Retiers a verk war e baperou e voe diskaret ivinenn ar vered d'an deiz kenta a viz kerzu 1637 hag e c'helled, evelse, kendelc'her adarre da vezia an dud er vered.

D'an 22 a viz gouere 1639 e varvas an A. Cornulier, enebour touet ar gwez ivin; meur a hini eus ar re n'oa ket bet deuet a-benn da ziskar en e amzer a zo c'hoaz en o sav.

G. P.

Skolig an Emglevadeg

V

Notennoù skleraat ha peurlunia

II

Hano ar Werzig

Brezoneg ha galleg ; tud, gouennoù ha Kevredigezioù ; Komz ha skrid

*Chacun a son défaut, où toujours il revient :
Le malheureux Breton se déchire lui-même.*

Dioc'h LA FONTAINE.

Peb-unan en deus e dech fall
Ma kouez hepret pa ña ziwall :
Drouctech ar Gelted, 'n em zispenn
Gant skilfou, dent, teod ha pluenn.

Bona nec sua quisque recuset

Na zinac'homp hini	Ovid Friek
Eus hon doareoù mat :	Diouz giz an Itali,
Eur gwir eo 'vidomp-ni	Karomp gant pridiri,
Ha dreistoll eun dlead.	Breiziz, ar brezoneg;
Daoust d'atiz de Monzie,	Ma vo en hon yez c'houek
Combes, ha... <i>tutti quanti</i>	Skouerioù kaer d'ar re-all.
'Vel 'larer e galleg.	Hag enor d'hon Bro-C'hall!

1. *Skolig an Emglevadeg* a dalv kement ha *Skol vihan* evit ragaozañ an *Emgleo meur*. Graet eo da heul *Skol an Emgleo*, eur werz hiroc'h a gomze eus *Emgleo ar Skriva-gnerien*, bet divizet e 1907 e Sant-Brieg etre Bretoned Leon, Kerne ha Treger, diwar skouer eun *Emglevig* pe *Emgleo bihan* a oa o paouez unvani darnouigoù ar rann-yez vrezonek all, hini Wened. An *Emglevadeg*, hetet ha diouzanel e penn-diwezan ar werz-se, a adsava emberr,

etre rannou lavar Breiz-Izel, ar beurunvaniez a oa o ren gwejall, hag a ren brema er galleg penn-da-benn, evit brasan mad e gomzerien ha lennerien en holl bed.

2. Em *Geriadurig brezonek-gallek* a zigor *Levraoueg Breuriez-veur ar brezoneg*, « Bibliothèque de l'Académie bretonne » (Sant-Brieg e-ti Prud'homme 1927), e vez disklariet *skolig* er gêr *skol*, a zo e « wrigienn », pe da laret rasoc'h, e « gef », *emgleo* er c'hentzer (e galleg *préfixe*) *em-*, a zo e zarn genta; hag ar gourfenn-gér (e galleg *suffixe*) *-adeg* a ra intent an hano diveret (e g. *dérivé*) *emglevadeg*; *keveratait* ive, er penmadig *em-*: *emwel* « entrevue »; *emweladenn* « une seule entrevue »; *emweladeg* « entrevue collective ». Evelse, ma na gaver ket eur gêr brezonek bennak en hon *Geriadurig* akademiek, e vez koulskoude displeget peurliesa e ster eno, dre ziskleria pep kevrenn anezañ en he lec'h, a gement zoken a sell ar yezadur, evel arnezioù ad liester hag a implijou reiz : *rann-ou*, *ran-ed*.

3. An droidigez c'hallek: *la petite école de l'entente commune*, a ziskouez tri sord kemm etre an diou yez. Da gentañ, er stumma-gériou: ar galleg n'en deus hini kevatal gand an « hano-bihanaer » *skolig*, na gand ar « strolader » (e g. *collectif*) *emglevadg*; — d'an eil, er « framma-komzou » (e g. *syntaxe*): ar galleg n'hell ket dioueret amañ ar gérigou *la* (an), ha *de* (eus); — ha d'an trede, er skrivadur: hini ar brezoneg a vefe pedost *la petit écol de l'añtañt komun*.

4. War ar poent kenta amañ ar brezoneg pinvidikoc'h ha muioc'h ouesk, peogwir en deus ar choaz etre eur gomz kenstrobet: *skol-ig*, *skolig*, evel er *provañseg escoulet*, en italian *scoletta*, hag unan distrob he diou rann: *skol vihan* « petite école »; gallout a hell diforc'h etrezo kemmouigoù tanav a-zivout resisted ar ménoz, pe c'houekter ar son.

Dibabou damheñvel a zo ivez e galleg, evel ma weler em leorig *Manuel pour l'étude du français par les Bretons*, S. Brieg 1925, p. 10: *pire* falloc'h, ha *plus mauvais* muioc'h fall. Hogen dibaot eo seurt furnou giz-koz, ha peurvuia n'heller ket o boazia a-grenn evel ar re-all: « ar bara-mañ 'zo bihanoc'h » a vez lavaret « ce pain-ci est plus petit », neket *moindre*, na *mineur*.

Majeur a zo an derez-keveria trec'h (e g. *comparatif de supériorité*) eus *magne bras* (miret e gériennou evel *Charlemagne* Charlez-veur, *magnum* ene-hael), hag edo *graignor* derez-trec'h *grand*; hogen *graignor* a zo maro, ha *majeur* a chom hepken en lavarennou e-giz « *la majeure partie* » an darnvuia; deut eo da veza eur *gér* nevez, distak-net eus e ouennad kenta, en « un garçon *majeur* », eun den-a-dra. Ar brezoneg, er c'hontrol, a lavar bepret *brasoc'h* kenkouls ha muioc'h bras, evel an italieg *maggiore* ha *più grand*.

Gériou koz o chañj evelse a implij a arboell stumma gériou nevez-flamm: *majeur* a dalv kement ha « *brasoc'h* en oad (n'eo kén eur bugel e gwardoniezh e gerent) »; dén yaouank, *quasi* « *major (natu)* », o c'hortoz ma vo arri dén koz, « *arrivé à un grand âge* », *grandævus*.

5. El *Jeor* hanvet « *Eléments de la langue des Celtes Gomeristes, ou Bretons: Introduction à cette langue et par elle à celles de tous les peuples connus...* par M. Le Brigant, avocat à Tréguier », Strasbourg 1779, e vez diforc'het, p. 3, 4, pemp derez keveria en hanoiou-gwan (gériou-doarea, e g. *adjectifs*), a zo ive ragverbou, evelhen: « *just*, Positif, juste... *justic*, Diminutif, un peu juste; *justoh*, Comparatif, plus juste, *justan*, Superlatif, le plus juste, *justed*, Admiratif, qu'il est juste! » P. 31; ar pemp derez-ze a vez sellet evel unan eus levezonou ar brezoneg, ha na gaver e nep yez all er bed. Ar veuleudi-ze n'eo ket *peurjust* — *gér* doarea en eur sord derez-plén, a dle peb oberer eur-yezadur klask delliezout en e gelenn, kenkouls ha pep kelenner e n'eus forz pe ouiziegezh.

Gwir eo, avat, n'eus ket kals yezou a ve gouest d'aoza gant gozik pep *gér*-doarea pe ragverb kenstrobadoù evel *justik*, *justoc'h*, *justañ*. A zo *kaproc'h*, an derez-estlamma (« *exclamatif* » kentoc'h eged « *admiratif* »): *justet* ne weler ahend-all nemed e brezoneg tremor, er c'hembreeg. War ar furmou-ze: krenn-brezoneg *cazrhet* pegeñ kaer! e Gwened ha Treger *kaeret*, e Treger ive *kaerat*, e haller gwelout ma *Glossaire moyen-breton* 1896, er gériou *goaz* 3 ha *guen* 1; *Revue Celtique* III 235; IV 145; XI 206; XVIII 392; XXII 385; J. Morris Jones, *A welsh grammar* 1913, p. 241-244; Pedersen, *Vergleichende Grammatik der keltischen Sprachen*, 1909-1913, I, 410; II 118, 119.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz C'houevrer:

An A. A. de Rodellec du Porzic, Kermael, Konk- Leon	1
An Dimezell Maria Bocher, Scignac.....	1
An Dimezelled F.-J. ha M. Chapalan, Scignac..	1
An Dimezell Jann Nicol, Guerlesquin.....	1
An A. Henri Caouissin, 15, rue de Siam, Paris.....	1
An Dimezell Jann Madec, Trouzilit koz, Treglonou.	1
An A. J. Bescond, Kervarzec, Poullan	1
Ar gevredigezh Armorica, magerez Gouellou ar Var- zed, Keraez	2
An A. Henri Tanter, Kereil, Plogonnec	1
An A. Merien, person Lanhouarne	2
<i>Rakprenet er miz-man</i>	12

Leoriou rakprenet betek-ken: 912 + 12 = 924.

Er bloavezh 1887 e voe moulet skridou prosez santelezh sant Erwan: eul leor a dalvoudegezh evid ar Vretoned, mar deus unan, p'eo gwir sant Erwan eo ar c'henta breizad he deus Hiz Rom laket war roll ar Zent. Pet a gav deoc'h a rakprenas leor prosez santelezh sant Erwan?

Mat, 75 nemet ken hag en o zouez ne oa nemet 5 eus eskopti Kemper ha Leon.

Leor an A. Gwilhou a zastum muioc'hik a rakprenerien; tamn ha tamn e tostaomp ouz ar mil; arabad fall-galeni; dont a raimp a-benn eus hon taol.

Degas an hanoiou d'an A. Perrot, rener « Feiz ha Breiz ». Scignac, Firistère, ar re o deus c'hoant da brena al leor a-raok ma vezo moulet; degas an hano heb an arc'hant.

Keleier ar Miz

AR RE A NAC'H O BRO

Ar pennadig hon eus skrivet e *Feiz ha Breiz* miz C'houevrer diveza, diwarbenn tud yaouank, merc'hedi ha pao-tred, hag o deus c'hoant evel ma leveront d'en em lakaat « à la page » hag a gav d'ezo hen ober en eur nac'h o bro en deus plijet kals d'hol tennerien:

— *Mat ho peus graet, eme unan anezo, sevel ho mouez a-eneb ar froudenn-ze a grog e tud a zo da c'hoari galleg hepken e parrezioù ha ne gomzer enno nemet brezoneg!*

— *Aman, gant meur'arjez, a skriv d'eomp eun all, ez eus bet ivez peziou-c'hoari gallek, diouz doare eun hanter dousenn ratikou eus ar vourc'h, marteze, met, ne oant tamm diouz doare ar re all hag o vont er maez eus ar zal, unan, em raok, hag he deus deskadurez, ne rae ket a c'henou bihan evit lavaret: « Berniou kamambre! N'eus bet nemet ranellerez c'hallek ganto. »*

— *Pedit, mar plij, a skriv d'eomp eun all, ma ne vezo klevet hano ebet ken eus « gouenn an douristiked » a va kement a zroug, dre aman, da Vreiz ha da Zoue; diouz hor gwella e reomp evit diouall hor parrezioù hag hon tiez diouz ar galleg: skuiz omp gant farodaj ar galleg ha gant breinadur al lodenn vrasa eus e leorioù.*

— *Pe ni a c'hell chom e Breiz pe ni a rank tec'het diouti, dalc'homp mat atao d'hor brezoneg, a skriv d'eomp eun all, diwar douar an Afrik; seiz breizad omp aman ha seiz mat; m'hel lavar deoc'h. Evid ar gouelioù bras e vezont klevet o kana Soniou Feiz ha Breiz hag o komz brezoneg. Eur vombard o deus hag e vez laketa da zutal; va zud keiz, tregerni a ra ar vro gant he sutaden-nou skiltrus. Aben eun nebeud aman e tenuio eur binitou da rei sikour d'ar vombardig ha da zeski d'an Arabed: an Hini Goz, Bro Goz va Zadou hag ar c'hanouennoù all.*

— *Eur brezegerez eus kêr-benn ar Justineien, a skriv d'eomp eun all, a oa bet er miz tremen, oc'h ober eun tamm prezegenn da verc'hed unan eus ar parrezioù tosta d'he hini; peziadou bommoù galleg a deue ganti ha, war*

he meno; ne ouie ger brezoneg ebet! Perak ne 'z a ket da Baris neuze ha chom eno pa vezo aet? eno ema he bro!

— *Gant plijadur, a skriv d'eomp eun all, — hag a zoug war e vruched seizenn ruz ar groaz enor ha seizenn c'hlas ar groaz-brezel, — eo e lennan va Feiz ha Breiz bep miz. Ho meuli a ran evid an nerz-kalon a lakit da zifenn hor brezoneg hag eun druez eo gwelet ne vefe ket desket c'hoaz, da vihana, da vugale ar skoltou kristen; hor Yez hag hor Feiz a goll o zachennou an eil da heul eben ha d'eomp-ni eo rei an dourn d'eoc'h e kreiz ar stourmad emaoch o ren.*

N'eo tamm ebet mezus d'eur Breizad hag a oar brezoneg beva e Breiz hep gouzout galleg: en e vro ema ha yez e vro a oar; ar pezh a renker eo; mezus eo avat d'eur Breizad beva e Breiz hep gouzout brezoneg pe oc'h ober evel ma ne ouesfe ger brezoneg ebet! *nac'h a ra e vro.* Pe nac'h ar Feiz pe nac'h ar Vro, eur pec'hed eo atao ha pa gavomp tud hag her gra, gwella hon eus da ober eo tec'het diwar o zro.

BLEUN-BRUG, BREST.

Gouelioù bras ar *Bleun-Brug* er bloaz-man a vezo graet e Brest, d'ar 4, 5, 6 ha 7 a viz gwengolo a zeu.

Kanaouennoù *Bleun-Brug* Brest a zo e gwerz e Keriltud, 11, rue Algésiras, Brest; 20 real eo al leor ha 22 real p'her c'haser d'ar premer dre bost.

Al leor-ze a zo savet gand an Aotronez Mayet, Guillerme, Guillermit ha Boucher hag an Dimezell G. de Kermenguy, da lavaret eo gant muzikerien vrasa hor bro.

Pemp kanaouienn a zo ennan evit kanerien o kana o-unan ha peder evit kanerien o kana a-strolladoù gand diou. teir pe heder mouez.

ISTOR BREIZ

Lennit ha lakit lenn Istor Breiz, dreist-holl er bloaz-man, hag evit-se kemerit *Histoire de Bretagne* an A. Poisson, eul leor hag a zo bet meulet gand holl Eskibien Breiz.

Her c'haout a reoc'h evit 16 real, e Keriltud, 11, rue Algésiras, Brest.

GOUELIOU THEODOR BOTREL

Goueliou an enor d'ar c'haner brudet Theodor Botrel a vëzo graet e Pont-Aven d'ar 7 a viz Eost a zeu. Eur breiz-uhelad e oa, met deski a eure yez Breiz-Izel hag eun nebeud eus e zoniou a zo bet skrivet gantan e brezoneg.

MARO AN A. DE GUEBRIANT

Da C'houel Nedeleg diveza e varve d'e 80 vloaz, e Kastell-Paol an A. Alan de Guébriant, eun den hag e c'hello e-leiz kaout keuz d'ezan; maer e oa e Kastell-Paol pevar bloaz ha daou ugent a oa; mat e oa evid an holl; harpa a eure atao difennourien ar brezoneg hag e vugale vihan a zo bet desket d'ezo yez Breiz. Doue r'e bardono!

GINIVELEZ DIOU VREIZADEZ

An A. hag an I. Chassin du Gerny a gemenn d'eoc'h ganedigez eur verc'h: Mari Hellna, d'an 19 a viz Genver. An A. hag an I. O. Chevillotte a gemen d'eoc'h ganedigez o merc'h Mac'harit. Kervasdoue, 15 a viz c'houevrer.


Hor gourc'hemennou laouen.

« FEIZ Ha BREIZ », MIZ EBREL

« Feiz ha Breiz » miz Ebrel a en em gavo er parrezioù a-benn goueliou Pask Hor Zalver Jezus-Krist.

—msu—

Divinadennou miz Meurzh



- I. — Livirit pe seurt komz a zo bet c'hoant da ziskleria dre ar skeudenn a welit uheloc'h?
- II. — Eun ti bihan, dre va zi,
Rannet e mil ha mil di,
E pep ti neziou e-leiz,
Eul lapousig e pep neiz;
Pa gan unan anezo
E kanont holl war eun dro.

Degaset gand Anna Wilhou, Scrignac.

III. — Pe da vare e vefec'h vag
 Da zont davedomp da furaat?
Degaset gand Barba ar Bris, Scrignac.



IV. — Eur c'horr a welit o
 tansal war an daol-
 vaen; daou a zo,
 evelse, e pelec'h em
 egille?

V. — Mamm goz n'eo ket
 evid ober stamm
 ken; kollet he deus
 he linnedou; pelec'h
 emaint?

An diou zivinadenn ziveza-man koulz hag ar genta a zo degaset gand H. Caouissin eus a Paris.

Degas respontchou tri miz kenta ar bloaz a benn ar 25 a viz meurz da ziwezata: 10 priz kaer, *Miz Mari* an A. Gall, Renner koz *Feiz ha Breiz*, a vezo roet d'an 10 o devezo ar muia poenchou.

Degas ar respontchou da *M. le directeur du « Feiz ha Breiz »*, *Scrignac (Finistère)*.

Feiz ha Breiz

Dansou - noz

Dansou - sul

Poent e oa !

Setu aze penaos eo bet digemeret, dre holl, er miz tremen, gant an dud fur ha poellek kemennadurez an aotrou 'n eskob diwarbenn an dans. « Poent oa lakat harz d'an dizurziou ! »

Eur vaouez hag a zo en he zi kirri-dre-dan da fermi hag a vez a-wechou hec'h unan o kas tud, a zisklerie da berson he farrez : « Gwelet am eus va-unan petra a dremen etouez tud yaouank aet da bourmen a-bell. Klevet em eus petra a lavaront, petra a ganont. Ma ouesfe an tadou hag ar mammou, e vijent spontet, da vihana ar re o deus c'hoaz eun tammig koustians. Biken n'am bije kredet pegen izel eo kouezet lod eus an dud yaouank ! »

An aotrou 'n eskob en deus klevet ive petra a vez graet en e eskopti, hag o veza m'eo tad an eneoù, m'en deus da ziskouez d'an dud fiziet ennan e pelec'h eman an hent mat, e pelec'h eman an hent fall, en deus savet e vouez da goundaoni an dizurziou.

I. — AR RE A ZALC'H SALIOU-DANS.

Lavaret a ra e flier kemeret evit pec'herien touet ar re a zalc'h saliou-dans evit boda an dud da zal, en noz,

ha war be digarez. Rak o micher eo ober an droug, lakat an dud e riskl d'ober pec'hejou ha pec'hejou bras. Ne dleer ket rei d'ezo sakramanchou an Iliz, ha ma varvont hep beza djskouezet keuz ha roet o ger da ziskleria ne c'houzanvint mui an dansou fall, ne vezo ket gellet ober ganto eun anterramant kristen.

O bugale, o chom er memes ti ganto, n'hellint ket kaout an enoriou a vez roet d'ar re all evit ar badiziantou, eureujou, sakramanchou.

Met, a lavaro lod, ret eo gounit ar bara. Ar re a-zalc'h saliou-dans a ra eur vicher hag a ro d'ezo peadra da veva. Ma sarront, setu i taolet war an douar noaz. Pennaos e c'hellint kaout peadra evito hag evit o bugale ?

E nep lec'h, biskoaz, n'eus bet aotre d'ober an droug evit gounit arc'hant. Koll tud, koll eneoù, lakat an dud yaouank d'ober pec'hejou mezus, a zo eur vicher fall, difennet, hag an hini en deus kemeret eun hevelep micher a dle he dilezel, hag an abreta ar gwella.

II. — AN DANSERIEN HAG AN DANSEREZED.

An danserien hag an danserezed a en em laka e riskl d'ober pec'hejou ha dre o skouer e tougont re all d'ober evelo. Bez emaint eta e stad fall, eur stad ne zere ket ouz kristenien, ha m'en em blijont er stadze, n'eo ket graet evito sakramanchou an Iliz. An traou santel da dud santel.

Ar re a zo o lakat an dud da zansal gant eun akordeon pe eur benveg all da vuzikat a zo da damall kement hag an danserien. An dourn a roont da skigna an droug. Evito ken nebeut ar zakramanchou n'int ket graet.

Met neuze 'ta an aotrou 'n eskob a zo o klask kas pell diouz ar vro pep plijadur? Ma ne c'heller mui dansal, e vezo gwall denval ar vuhez. Tud yaouank ha ne ouzont mui na dansal na kana n'e ket tud yaouank int. Pa vezint koz, e chomint fur ha sioul. Met,

epad m'eo tomm ar gwad en o izili, ra vezint lezet da fringal ha da c'hoari.

An aotrou 'n eskob a oar pell zo petra eo tud, petra eo tud en oad, petra eo tud yaouank. Anaout a ra e vro Breiz-Izel, ha gwelet en deus meur a eured. Abell zo e vez danset e Breiz d'ar frikojou. Kerkent ha ma teue ar priejou nevez eus an iliz, edo ar c'hiz da zansal war ar blasenn. Ar re goz a zanse, ar re yaouank a zanse, m'oa eun dudi. Da c'houde e veze debret lein, hag e veze danset adarre, hag an deiz a dre-mene laouen. An dansou a oa koant, dereat, hag ar plijadureziou a oa onest. Pa zigoueze an noz, an dud a gemere hent ar ger, ha setu echu an dervez.

An aotrou 'n eskob a ro aotre da zansal en deiz pa vez eureujou, hirio evel gwechall. Gwelloc'h eo dansal er maez, emezan, pa c'heller, eget e saliou. Hag a zo gwir, ha yac'husoc'h eo ive. Dansal dansou dereat, onest, dirag an holl, kana kanaouennou onest, a ra plijadur da glevet hag a laka an danserien da vont en dro, netra da lavaret. Grit evelse, ha ne glevot rebech ebet.

Met an dansou-noz, goude ma vezer bet epad an deiz o tebri hag oc'h eya, gant kanaouennou divalo, dansou a c'hiz nevez deuet eus Paris pe eus an Afrik digant an dud gouez, dansou hag a gendalc'h betek div eur, teir eur goude hanter-noz hag a-wechou beteg ar mintin, piou a c'hellfe rei d'ezo meuleudi ha lavaret e c'heller o darempredi hep riski bras evit an ene? Ha goude ma vez echu an dans, petra a ra an danserien ha danserezed etre ar zal-dans hag o c'hear?

An tadou hag ar mammoù a lez o bugale da vont evelse d'ar saliou-dans epad an noz, ne garont ket o bugale, hag eun deiz pe zeiz o devezo da geuzi ha da lenva.

An dansou, dreizo o-unan, n'int ket fall. Evel ar c'hoariou all, mar dint dereat, e reont vad d'ar c'horf,

e lakont ar gwad da labourat en izili : Koant int da welet, pa vez tud hag a oar dansal.

Met perak ne vije ket gwelet dansou gant gwazed hepken pe gant merc'hed hepken? Perak e vez atao mesket ar gwazed hag ar merc'hed en dansou? Eno eman an dalc'h. Ma vije an holl onest, gouest d'en em c'houarn, da harpa ouz o zechou fall, e vije direbech an dansou. Met, ma teuer d'an dansou gant c'hoantegeziou direiz, hag e teuer, ma ne glasker nemet digeri hent ha rei o gwalc'h d'ezo, ma weler dirag an daoulagad gwiskamanchoù amzere, ma klevet kanaouennou direiz, penaos ne vije ket a riskl er salioudans? A-walc'h eo kaout en eur zal-dars eun nebeut lamponed fall, evit ober droug bras da gement hini a zo diredet. Penaos chom glan a galon e kreiz eur mor a hudurnez? Pep tra en dansou a zo graet evit entana ar c'hoantegeziou fall, hag ar re a zo atao o klask tro da zansal a ziskouez a-walc'h petra int: pennou skanv, tud yaouank kollet.

Pa grog en dud klenved an dansal, ez a fall an traou en eur vro. Mikael an Nobletz, an Tad Maner, o deus bet poan o tont a-benn eus an dansou, hag an danserien ha danserezed eo a veze e pep lec'h oc'h enebi outo, o tistrei an dud diouto. Person Ars, pa zigouezas en e barrez, a gavas enni gizioù fall ive : ar salioudans hag an ostaleriou a veze leun a dud enno da zul, ha da heul ar gizioù-ze e teue kalz dizurziou er barrez. Hag e labouras dioc'h tu da derri ar gizioù-ze. Ret e oa evit trei e barresioniz ouz Doue.

Pa gomzomp eus Person Ars, lakomp aman ar pezh a lavare en eur brezegenn diwarbenn an dansou : « Sant Fransez a Zal, emezan, a zisklerie eo an dansou henvel ouz ar c'hebell-touseg : ar re wella ne dalvezont netra. »... Ar mammou a lavar a-walc'h : « Teurel evez a ran war va merc'h ! » Teurel evez a reont war an dilhad kaer ; n'int ket, avat, evit

teurel evez war ar c'halonou... Ar re a laka dansal en o zi a gemer war o diousoaz eur gwall zamm da vont dirak Doue. Da respont o devezo evit kement droug a dremen er zal-dans, evit ar zoijezonou fall, ar wall-gomzou, ar warizi, ar gasoni, an hoil bec'hejou. Ha ma oufent mat petra eo barnedigez Doue, hepken ne lakafent dansal. »

III. — AR C'HIRRI-DRE-DAN.

Guspenn an dansou-sul hag an dansou-noz ez eus eun dra all hag a zo kondaonet kalet gant an Aotrou'n Eskob hag eo ar redadennoù a ra breman ar yaouankiz, war an distera digarez, hag e vezont gwelet o vont, heb o c'herent, paotred ha merc'hed, gant antoiou a fermont hag o c'has e berr-amzer, pell diouz ar gêr : Redadennoù evelse a zo da veza diarbennet.

Poent oa. Ya, poent oa en em lakat gant ar yaouankizou d'o distrei diouz ar gizioù diskiant hag an dizurziou mezus. An dud yaouank ne dleont ket en em rei d'an droug, d'ar pec'hed, met en em zerc'hel glan, direbech. Ma tremenont mat, dereat, santel, amzer o yaouankiz, neuze, met neuze hepken, e vezo enno danvez tadou ha mammou a familh a raio enor d'o bro ha d'an Iliz.

NEVEZ-AMZER

En e garr alaouret d'an nenv an heol a bign,
A hep tu, hep konta, bannou klouar a skign;
E doug ebrel ha mae, hirroc'h eo e vale
Hag en oabl pelloc'h e zale.

An douar, bet keit all seizet dindan ar skorn,
A zihun prim, evel dre allazig eun dorn,
Hag an nevez-amzer, d'an daoulamm deut en dro,
A skuilh buhez ha c'hoarz er vro.

Al laboused laouen, savet araog an detz,
A-douez an deliou gleb d'an dud a daol o geiz;
Hag ar zoniou a gouez euz o begou melenn
Euz peb skourr a ra eun delenn.

Dillo evel eur c'had ha skanv evel eun aer,
Ar waz el leton fresk a zans he dansour kaer;
Hag, henchet gant e vamm, du-man du-hont, eun oan
En dour-red a walc'h e benn gloan.

Ar maeziou, dec'h noaz-pilh, o deus kavet o bleun,
Diskennet int er yeot, nijet int war ar c'hleun;
Hag ar gwenan warno, mevzet net gant o c'houez,
En eur voudal, bemdez a gouez.

Digoret o c'hostez gant dent lemm an oged,
An douarou nevez en êr a daol maged;
Hag an ed du, warnan tennet eur meli golo,
A vleunio abenn gwengolo.

Chadennet pell en ti gant an oad pe ar remm,
An tad koz a vale, laouen breman e zremm;
Ha dezan e seblant, en e wazied fall
E red an nerz en doa gwechall

Tremen a ray ivez da c'hoanv kriz, o va breur,
Da boan ha da zaelou a dec'ho kuit d'o eur;
Ha Doue gant e joa da galon a leunio,
D'an nevez-amzer e vleunio,

E vleunio du-ze pell, en eur Vro hep he far,
En tu all d'an heol aour ha d'ar stered a bar
El lec'h-ze an dudi morse ne ehano...
Ar baradoz eo e hano.

J. L'HELGOUAC'H, O. M. I.
Sant-Brieg, 11-3-32.

Hent ar Groaz

War *Feiz ha Breiz* ar miz diweza, p. 91, hon eus komzet eus an induljansou kaer a c'hounezer oc'h ober hent ar groaz, met o lavaret e oa 20 *pater*, 20 *ave* hag 20 *Gloria Patri* da lavaret evit gouñit an induljansou-ze hon eus foziet, eun tamm, rak *ar re a ra hent ar groaz en iliz, n'eo ket ret d'ezo, ma keront, lavaret pedenn ebet*; n'eus nemed ar re a ra hent ar groaz, *er maez eus an iliz*, en o c'her, pe e lec'h all, war eur groaz hag a zo bet staget outi induljansou hent ar groaz, hag e vefe *ret d'ezo lavaret 20 pater, 20 Ave hag 20 Gloria Patri*.

Ha p'eo gwir eo ken aes ha ma 'z eo gouñit eun induljans plenier oc'h ober hent ar groaz, eo dleet e kreskfe ivez niver ar gristenien a glask heulia roudou benniget. Hor Zalver war hent glac'harus ar C'halvar.



Aziliz ha Perig en o c'hêr nevez

Setu Aziliz mestrez ha rouanez, en he c'hêr nevez; ma lavarfe n'eo tamm ebet n'het e lavarfe gevier; lammat a ra he c'halon pa zont e ranko ober he-unan ar pezh a ra e serr he mamm ha dont a ra sonj d'ezi eus ar gomz fur-man: « Arabad d'ar verc'h diskregi diouz dourn he mamm ken a vezo ker barrek hag hi ! » Hag ar wreg yaouank, enkrezet, a zav an dour en he daoulagad pa lavar outi he-unan: « Va mamm a ouie ober pep tra! Penaos e rin-ni breman? Ha ma n'en em blij ket Perig ganen ez ay eus ar gêr ha piou nemedoun a vezo da damall? O! Mammig kaez! ho merc'h a zo bet dihoell p'he deus diskroget eus ho tourn pa n'he devoa c'hoaz nemet naontek vloaz! » Met, ne jom ket pell da fall-galoni: « En eun doare bennak e vezo graet, emezi; va Ael mat am sikouro ha me a boaniol »

A-istri! a-zioc'h ar siminal, he deus speget ar groaz an oa roet d'ezi ha da zul ar bléuniou he deus staget outi eur bod beuz benniget da bellaat an drouk-spered; aliës e ra eur zeil ouz kroaz Hor Zalver hag e vez kennerzet raktal.

Da zadorn-Fask he devoa kerc'het eur vuredad dour meur eus pinsin an iliz; sin ar groaz a ra gand an dour-ze diogz ar beure ha diouz an noz; ne ankounac'ha morse diskarga eur banne anezan er pinsin a zo skeudenn Itron Varia Lourd warnan hag a oa deuet d'ezi gant he zad eus a Lourd, breman daou vloaz.

Gouldé koan, bemdez, Perig a laka eur c'horniad, petra bennak n'eo ker ar butun hag Aziliz a lenn eur pennad eus « Buhez Hor Zalver » pe eus a « Vuhez ar Zent ». Lenn a oar; he mouez a zo flour; distaga mat a ra ar geriennou; eun dudi eo he c'hlevet ha Per ne zont ket e c'hellfe dont da inoui ouz he selaou; re verr eo e kav atao ar pennad lenn-ze: « N'eus ket ken, va dous, emezan! » — « Nann! echu eo evit hizio, eme e hini goz ». Ar pedennou a leveront ivez, evel just, a-raok mont da gousket hag e serront o daoulagad; en o gwele-kloz, peoc'h en o c'honsians ha karantez en o c'halon.

AR C'HONTCHOU

Kenta tra he deus prenet Aziliz eo eur c'hayer da verka he dispignou hag he gounidou, unan a 20 real; war ar bajenn a-zhou e vezo merket an dispignou ha war ar bajenn a-gleiz an arc'hant a denio en ti. Eur groaz he deus graet war an delienn genta ha dindan he deus skrivet braoa ma c'helle hano Per hag he hini; disul pa erruen en ti e oa digor bras ar c'hayer hag em eus getlet lenn hep lunedou:

<i>Gwerz eun oferenn d'an Aotrou Person</i>	10 lur
<i>Ugent lur vleud d'an Aotrou Person</i>	20 lur
<i>Da Berig, disul</i>	5 lur
<i>Daou bakad chikore hag eul lur gafe</i>	15 lur

Diouz an dra-ze e ouezan e ro ar wreg eur bilhed a ugent real bep sul da Berig: 10 real evid e vutun; 10 gwenneg evid an alumetez; 8 gwenneg evid an iliz, 4 real evit kaout peb a vanne, Jammur e gamarad koz hag hen; hi, avat, a ra gant nebeutoc'h c'hoaz, rak kempenn e ranker beza; p'he deus roet daou wenneg evit he c'hador ha kement all e plajou ar fabriker n'he deus ezomm netra ebet ken hag e kerz d'ar gêr laouen. Abenn eun nebeud amzer he devezo amann da werza rak eur vioc'h a zo prenet hag a zo leuc warni. Hag Aziliz a zont gant plijadur e c'hellfe kaout an diankajou gand arc'hant an amann hag ar viou; met n'he deus c'hoaz nemet feir yar: diou o tefi hag unan o klochal; er bloaz a zeu he devezo yer meur; er bloaz-man eo re zivezat; n'eo ket kempennet brao a-walc'h o zammig lochenn d'ezo c'hoaz. Lorc'h a zo enni o sonjal en amzer da zont, met n'eo ket henvel, evit-se, ouz « *Ferrinaig he fodad laez* » a reas eul lamm a joa war an hent, o sonjal er pezh a c'hellfe kaout gant gwerz he laez hag a dorras he fod hag a gollas he marc'hadourez ha... kenavo pinvidigez! Dizrei a rankas d'ar gêr ker paour ha biskoaz!

Aziliz n'eo ket eur vaouez skanv-benn evelse eo; gouzout a ra n'en em zaver ket en eun dervez met, aliës he deus klevet gand ar re goz eman ar boued hag an arc'hant e serr al labour hag hi koulz ha Perig n'eo ket troet da jacha war an ibil berr: daou boaniër unanet evid ar vuhez, setu aze petra int. Evit c'hoaz n'eo ket drus ar peuri ganto, met kalon a zo ha skiant.

Bep sul e vez merket, war ar c'hayer, dispignou ar zizun gand Aziliz ; paea a ra war an tomm ; bep tro m'he deus prenet eun dra bennak ; aesoc'h e vez ha dizanje-roc'h rak pa ne raer ket, e vezer souezet, e fin ar miz o welet ar zomm arc'hant a ranker rei ha ne vezer ket pell evit kaout die ! Aesoc'h e vez ivez d'ar gonderanted pa c'hellont kaout o arc'hant en eskemm d'o marc'ha-dourez ; ezomm o deus eus o gwenneien.

Evid ar pezh a zell ouz ar boued Aziliz a ra muia ma c'hell gand ar pezh a zo er gêr ; tost eman d'he zud kaer hag ar-re-man a ro d'ezi pour, ognon ha karotez da lakat er zoubenn. Er miz a zeu e verkin aman pe seurt sou-benn a ra. Gouzout a ra en deus ezomm he fried boued krenv evit gellout labourat met n'eo ket ret d'ezan kaout kement-se a friko evid an dra-ze ha n'en deus ket. Ha koulskoude ma welfec'h Perig o tont d'ar ger, da boent ar pred, kel laouen ha tra e lavarfec'h : « Friko en deus da gaout ! »


Teurel a ra eur zell en dro d'ezan hag e vouse'hoarz : urz a zo e pep korn ; leurenn zimant an ti a zo nevez sku-bet ; luia a ra an arbeuri ; c'houez vat a zo gand ar boued ; eun doubier lien-koaret (toile cirée) net ha skler a c'holo'an daol ; Aziliz bepred hegarat, a c'hoarz outan, gant karantez ha setu ar sonjou tenval hag ar menoziou Joanius o tec'het kuit hag o teuzi en he spered, evel an amann war an fan ; en em lakat a c'hell ouz taol ; e voued a ray vad d'ezan rak laouenedigez ar galon eo a ro c'hoant da zebri. Korf an den a zo evel eur « mekanik » ; ober a ra e labour brao bras pa ne wigour netra war e dro, met, dal ma weler ez eus eun dra bennak o stourm outan eo red beza war evez. Daou seurt boued a zo : boued da rei nerz ha boued da gempenn ; ar bleud, ar sukr, ar gres, a ro nerz ; ar c'hig, ar bevin eus ar c'hig moc'h a zo da gempenn ar c'horf'ha da viret outan da vont da fall. Ar frouez a grenfa an nervennoù.

Aziliz he devoa lennet eur skrid diwarbenn kement-se. setu perak e taol evez ; a-hed ar c'hleuz he deus lavaret da Ber fourra gwez avalou p'eo gwir e reont kement a vad.


Tintin Anna.

KLEMVANOU!


Andante.



O! ma vi - jen bet bar - zez! m'en di - vi - je Dou -



e La - ket em dourn he flu - enn, hag em fenn he spe -



red, Gant pe - bez ka - loun la - ouen ha gant pe - bez fou -



ge Em bi - je bet e gwer - ziou va me - no - ziou ren - ket :

I

O! ma vijen bet barsez! m'en divije Doue
Laket em dourn he fluenn hag em fenn he spered
Gant pebez kaloun laouen ha gant pebez fouge
Em bije bet e gwerziou va menoziou renket !

II

Flour em bije bet kanet war doniou dishenvel
Kaerder hor-maeziou sioul ha mouez ar mor bras
Freskadurez dour ar ster hag an heol o sevel
Pe ar gliz-noz o lintra a beg ar yeotenn c'hlas.

III

Dre gals skridou birvidik hag e brezoneg reiz
Em bije bet displeget evid an neb a gar
Madelez 'n Holl-C'halloudek en deus krouet hor Breiz
Da veza eur vroig koant ha n'he deus ket he far.


IV

An holl galonou klouar 'vije bet entanet
 Evid eur vro ken dispar, gand ear gwir garantez
 Breizad ebed, goudeze, n'en divije nac'het
 Rei da vro gaer e gavell, e nerz hag e vuhez!

V

Siouaz! red eo d'in tevel, ha gwelet va bro haour.
 Disprijet gant tud diboell, mouget enni ar Feiz!
 Rak n'oun tamm ebed barzez! va c'homzou 'zo dizaour
 Met en deiz ma varvin-me, e varvin evit Breiz!

TINTIN ANNA.



**Penaos e veze hanvet
 maer Brest er XVII^{vet} kantved**

Breman ez cus tri c'hant vloaz, maer Brest ne veze hanvet nemed evit bloaz; goudeze e teuas ar c'hiz d'hen henvel dioc'htu evit tri bloaz ha d'ar 6 a viz kerzu 1618, gouarnar ar C'hastell ha bourc'hizien kêr a en em vodas e ti an A. Theaud, noter, evit renka evid ar braoa gouel ar maer nevez.

Bep tri bloaz, da zul kenta viz kerzu, goude pron an oferenn-bred, daou vourc'hiz a deue, en hano tud Brest, da c'houenn aotre, digand ar gouarnar a veze azezet war e skañ, e penn an neç'h an iliz, da henvel eur maer nevez; peulies a an aotre gouennet a veze roet.

J. — D'AR BLOAZ NEVEZ.

Ar maer nevez, neuze, a veze hanvet da zeiz ar bloaz nevez hag e veze graet eur prosesion kaer en e enor. Ar maer koz hag e guzulierien a en em gave e iliz ar Seiz Sant, a oa tost d'al lec'h m'emam breman ar pont bras; ac'hano e loc'hent holl a-unan da vont da glask ar maer nevez d'e di. Distrei a raent o daou, dourn ouz dourn ha gwisket kaer, mantellou voulouz herminiget hag alaouret war o c'hein; eur maer, en amzer-ze a oa eun den a renk uhel; war o lerc'h e veze sonerien, arche-

rien ha soudarded. Beleien iliz ar Seiz Sant a veze bodet dirak an iliz; kanet e veze an *Te Deum* ha kantikou all; goudeze e veze kaset ar maer nevez dirak ar porched; eno e oa eur maen plat, eun toull en e greiz; lakat ar ranke eun troad en toull-ze ha chom eno, evelse, hep finvat, endra ma tistage ar maer koz eun tamm prezegenn verr da rei d'ezan da anaout a vije karet ha doujet gant holl dud kêr; ar maer nevez, d'e dro, a doue e raje gwella nia c'hellje evit servicha mat ar gêr hag ar roue ha goudeze e pokent an eil d'egile.

II. — AL LAOUENANIG.

Red e veze ivez kaout aotre roue Paris; etre Brest ha Paris, neuze, e oa hirroc'h an hent eget breman, pe, da vihanan, pelloc'hik anzer a ranked lakaat d'hen ober, met an dud ne vezent ket nec'het evit kaout dillo aotre ar roue; eul labous a zo hag a zo hanvet laouenanig e brezoneg; gand ar C'hallaoued eo hanvet « roitellet » da lavaret eo « roue bihan ». Da c'houlou-deiz maer Brest hag e guzulierien a ziskenne en eur c'hoat bennak da glask eul laouenanig; m'oarvat, e veze paket al labous-ze a-raok ma teue aotronev vras Brest d'e glask; eur wech paket, al labous kaez a veze lakat en eur gaoued ha pevar eus pennou brasa kêr a veze karget d'hen dougen betek doriou ar C'hastell.

Eno e veze ar gouarner o c'hortoz tud chentil Brest; ar maer a c'houlenne outan aotre da zigeri dor e gaoued d'al laouenanig; ar gouarner a doue e virje da gêr he-holl frankizou; digeri a rae goudeze dor ar gaoued hag al labous a zistroe d'e goad a-denn askell. Raktal e veze klevet eur pezh tenn-kanol ha goudeze ez aed da lein ar maer nevez, pep hini o paea e skodenn.

III. — AL LAMMADEG.

Goude ar pred e tiskenned d'an aod da zellet ouz al lammerien, ar re zimezet en tri bloaz diveza, hag ar re o deveze lakat sevel pe eun ti pe eur voger bennak, ar ranke lammat er mor; an dud pinvidik a c'helle paea re-all da lammat en o lec'h; an hini a lamme evid ar roue a veze eur gurunenn gantan, var e benn; ne dlee ket beza


gwall blijadurus lammat en dour evelse, e kreiz ar goanv; met lammat a ranked evelato, pe e vije klouar an amzer pe e vije erc'h oc'h ober.

Ar maer ha pennou brasa kêr a bigne war ar braoa lestr a oa er porz hag hen eo an hini a lenne hanoiou al lammerien; eur bern tud a veze war an tevenn o sellet ouz ar c'hoariadeg; bagou bihan eleiz a veze evit mont war zikour ar re a venne en em veuzi; ar bagou-ze a gerze ker buan ma troent a-wechou war an tu eneb; setu ma tirolle c'hoarz, e c'hellit kredi, etouez an dud.

Eur wech echu al lammadeg e veze dans ha kan hag antronoz ar maer nevez a stage da c'houarn e dud. Gwechall n'oa nemed ar c'heriou bras pe ar re o deveze roet skoazell vat d'an dud pe d'ar roue, en eun doare bennak, hag o divije gwir da henvel o maer.

Erwan Berthou.





An dra-man a dremene, da zul Fask, er bioaz 1450. Daou vihan, Dorig ha Jabel a rede ar prajeier hag ar c'hoajou o klask ar viou Pask a oa bet fuilhet, war ar maeziou, evit brasa plijadur ar vugale fur, gand ar c'hleier o tont eus a Rom!

— C'hoarig vihan, a lavare Dorig, penaos ne rofe ket an Aotrou Doue d'omp ar c'bras da gaout ar vi aour a lez da goueza bep bloaz, en eun tu pe du, kaera kloc'h a zo e Breiz. Na pegen laouen e vefe hor mamm, vat ma rafemp ar gavadenn-ze!

— : Ya! Dorig! ra deurvezo gant Hor Zalver Jezuz-Krist savet eus e vez leun a vuhez da genver an deman, selaou da bedenn, eme Jabel, he daoulagad savet etrezek an nenv.

Pa vezo lavaret ar wirionez, abaoe m'oa maro o zad, a oa e vicher kempenn keuneud, ar vugale geiz-man a oa trist o doare hag o mamm he devoa poan o c'hounit bara d'ezo. Dorig, ar c'hosa, n'en devoa nemet dek vloaz; n'oa ket krenv a-walc'h c'hoaz da zougen ar

vouc'hal war e skoaz ha da vont d'ar c'hoat da bilat gwez. Eur paotrik c'houek e oa ha ne c'houlenne ket gwelloc'h eget mont da labourat, met e vamm, abaoe ma oa intanvez, he devoa aoun mantrus d'e goll ha n'oa ket e chal d'e welet o vont da c'hounit e vara pell diouz ar gêr.

Ha setu perak eni deiz-se, diouz ar beure, Dorig ha Jabel, a gerze dourn ha dourn hag a zelle tu ha tu da welet ha ne gavjent ket ar vi aour. Klasket o devoa pell hag hir, en aner, pa glevjont klemmadennou truezus o tont eus a lez ar c'hoad.



Doaniet o klevet ar c'hlemmou ha mall ganto ober vad d'an hini a oa er boan ez ejont etrezek ar c'hoad. Sebezet e chomjont pa zigouesjont gand ar bodennou gwez kenka ha pa gavjont etouez ar geot, eur c'hiig bihan dilezet ha doare d'ezan da veza bet glazet gand eun dra bennek. Jabel pa welas al loenig paour her c'hemeras war he harlenn hag evel eur

vamm her stardas war boull he c'halon, evel evid e laouenaat.

Ar c'hi a zelle outi gant daoulagad ker kunv ha ken tener ma lakeas Dorig da vouc'hoarzin; met ar c'hi paour, dem-goude, a en em lakeas adarre da yudal gand ar boan; Jabel, enkrezet, a zellas outan hag a welas e oa daou zrean sanket en unan eus e dreid; gant sikour Dorig e tennas an drein hag e stardas he mou-

chouer en dro d'an troad gouridik; ar c'hi bihan di-boanief a lipe, evit diskouez e anaoudegez vat, daouarn ar verc'h vihan vadelezus he devoa bet truez outan:

— Ne zalc'hi ket ar c'hi-ze, evelato, eme Zorig; sell pegen divallo ha peger kignet eo e groc'hen.

— : Hag ez pefe ar galon, eme Jabel, da lezel ar paour kaez ki-ze da vervel aze e korn ar c'hoad, hen ha ne c'houlenn ket gwelloc'h eget beva? Hag ar verc'h a starde muioc'h-mui al loenig paour war he c'halon.

— : Eur vi Pask a c'hiz nevez ez peus kavet aze hag evidon-me a vije bet gwell ganen koueza war ar vi aour.

— : Asa! Dorig, bez furoc'h 'ta hag e lec'h en em glemm trugareka an Aotrou Doue da veza laket al loenig paour-ze war hon hent.

— : Ba! hennez ne roio d'eomp biken ar binvidigez hon divije bet m'hon divije bet kavet ar vi aour, eme Zorig, ker pennok ha tra.

— : Asa, eme Jabel, gra allazig d'ezan eun tamm hag e kroge e dourn he breur evit e lakaat da floura ar c'hi.

Dorig o welet peger mat e oa e c'hoar ouz ar c'hi a zavas mez gantan hag a c'hoarzas ouz al loen reuzeudik hag e lavaras da Jabel:

— Sell 'ta! ha ma rofemp d'ezan eun hano.

— : Eun hano? pe hano?

— : Pask!

— : Pask?

— : Ya! p'eo gwir hon eus e gavet da genver ar zul Fask.

— : Eun hano brao eo! Pask!

Paskig! Ya! ya! Mat eo an hano-ze.

Ha Pask a voe galvet Pask.

Ha Pask karet gand e zaou vestr ha gand o mamm a greskas hag a deuas da veza eur c'hi kaer eus ar re gaera ha mat da zifenn e dud.

Eun dervez m'edont o zri, Dorig, Jabel ha Paskig o redek ar c'hoad e klevjont unan o hopal: « Deuit d'am sikour! deuit d'am sikour! »

Enkrezet, Dorig ha Paskig war e lerc'h, a redas betek al lec'h ma teue anezan ar c'hlemmou. Kaout a eure eno eur vaouez koz astennet war an douar ha pelloc'hik eur gwaz hag a dec'he buana ma c'helle gand eur c'hrouadur bihan war e vrec'h.

Dorig a c'halvas Jabel, chomet warlerc'h hag e sikourjont ar gaez koz da da zavel en he sav.

— : Petra a zo digouezet ganeoc'h 'ta, eme Zorig.

— Eul laer, emezi, hag e lenve, en deus diframmet, eus a dre va daouarn, ar bugel a oa bet fiziet ennoun; graet en deus an dra-ze, sur a-walc'h, evid kaout eur yalc'had vat a aour, rak an hini bihan-ze eo mab Aotrou Coatluzek, pinvidika den a zo dre aman.

— : Va Doue, eme Jabel, en eur ouela; pebez tra spontus; mantrus eo e vefe kavet tud fall a-walc'h da ober judazerez evelse.

— : Ha ne anavezit ket an den-ze, eme Zorig; mar-teze n'ho peus ket e welet gwech ebet?

— : O! va Doue 'tra ha neuze an den-ze a oa mouc'het e benn gantan; hag an hini goz kaez a ouele gwasoc'h gwas.

— : Ra deurvezo gand an Aotrou Doue ho sikour da gaout ho paotrig bihan, eme Zorig, o klask laouenaat an hini goz.

Dorig ha Jabel a zikouras ar vaouez kaez da zistrei d'ar maner. An dadchentil pa glevjont petra oa c'hoarvezet a voe rannet o c'halon. Dorig ha Jabel o welet o glac'har a glaskas dont war o sikour.

Met petra o divije graet? penaos dont a-benn, i ken dinerz all, da ziframma mab an Aotrou eus a dre daouarn al laer. En eun taol, e teuas sonj d'ezo e c'hellje Paskig dont war o sikour hag e redjont gantan etrezeg al lec'h-m'oa bet laeret ar bugel. Dorig a glaskas rondou al laer, evit gouzout dre be hent e oa tec'het. En

eun taol, Jabel a gavas, eun tamm mezer speget ouz an drez:

— A! eme Zorig, an tamm mezer-ze a dalvezo d'comp; degas hen d'in buan.



Dorig a gemeras ar begad mezer hag ouz e ziskouez da Baskig en eur vouse'hoarzin e lavaras:

— Klask! Alo Paskig, klask! Ar c'hi goude beza c'housaet ar pezh dilhad, a redas a-gleiz hag a-zehou hag a gouezas heb dale war an hent en devoa graet al laer.

Dorig ha Jabel a yeas da heul Paskig, didrousa ma c'hellent. Ar c'hi a gerze atao; er fin e tigouesjont e lost ar c'hoad ha Paskig a yeas da ober an dro d'eur c'hoz tamm lochenn a oa dre eno; Jabel ha Dorig, kuzet a dre kein eur c'harz a zelle outan, met ne gredent ket en em ziskouez en aoun da veza gwelet gand al laer; goude beza harzet ouz an nor, ar c'hi a deuas war e giz da gaout e vistri, en eur ficha e lost.

— Mat eo, eme an daou vihan, aze eo eman al laer.

Dizrei a rejont d'ar red da gaout an Aotrou ha da gonta d'ezan ar pezh o devoa gwelet. Henman a voe seul laouenoc'h ouz o gwelet m'en devoa bet kemenadurez da gas d'al laer eur yalc'had vat a arc'hant, m'en devoa c'hoant da gaout e vab-adarre, en dizro.

Dorig a gontas ar pezh en devoa gwelet ha penaos e

oa deuet a-benn da goueza war lochenn al laer. An Aotrou a vodas e wazed ha diouz ar pardaez, hentchet gand Dorig, Jabel ha Paskig, ez ejont etrezeg lochenn al laer.

P'en em gavjod tost d'an ti, an Aotrou a roas e urziou; pevar den a voe laketa da gelc'ha an ti, en aoun ne glaskje al laer tec'het; ar re all a skoas war an nor hag a c'houlennas digor. Den ne respontas. Klevet e voe evel trouz unan o komz a vouez izel. Evel ma ne zigored ket mevelien ar maner a skoas krenfoc'h ha pa ne zigoret ket atao e torrjont an nor hag e pakjont



al laer en e neiz; klask a reas en em zifenn, met Paskig a yeas a lamm d'ezan hag a grogas e kov e e c'har.

O welet e oa koll ec'h anzavas en devoa laeret mab an Aotrou, met ne roas e c'her da rei ar bugel en dro nemet lezet e vije gantan e vuhez.

An Aotrou a bromettas ha dem-goude edo e vab-

big war e zivrec'h. Al laer a voe kaset d'ar maner ha laketa er prizon, met diskouez a eure kaout kement a geuz d'e bec'hed, ma voe lezet da vale.

Dorig ha Jabel hag o mamm, diwar an deiz-ze n'eo ket bara eo a vankas d'ezo :


— Gwelet a res, eme Jabel, pebez taol hon devoa graet o kemeret Paskig en hon ti?

— : Ya, eme Zorig, ha me a oa o klask miret ouzit d'hen degas ganez!

— : Breur paour o klask ar vi aour edos; her c'ha-
vet hon eus ha setu hen aman ha Jabel a ziskoueze
Paskig a zelle outo gant teneredigez.

Skrivet ha skeudennaouet gant

HERRI CAOUISSIN.



Promesa Erwan Garadeg

An heol a gase e vannou skedus eus an eil tu d'egile d'an oabl glas hag ar mor a lake e goummou da bi-gnat an eil goude egile war draez gwenn an aod.

Ar gwez a zispake o deliou kenta hag al laboused a gane ma oa eun drugar o c'hlevet. War ar mor ha war an douar, en draonienn ha war lein ar menez, dre holl e tregerne kanaouenn an nevez amzer.

Goueliou Pask a oa hag ar bed-holl, an dud hag an traou, a gane meuleudi Hor Zalver Jezuz-Krist savet eus e vez leun a vuhez.

Léna ar Morvan a oa bet e oferenn ar zul fask ; eun hanter eur vale he devoa graet ; azeza a eure war eur garreg da ober eun tamm diskuiz da zellet ouz ar mor o vont hag o tont ha da zelaou an alc'houeder o kana e ganaouenn e barr an neav.

Ken troet e oa he spered ouz an traou kaer a oa dirazi ma ne gleve ket an trouz-bale war he lerc'h.

Eun dourn a skoaz gouestadik war he skoaz hag e chomas sebezet o welet dirazi, gwisket e martofod, eun den yaouank eus he amezeien, Erwan Garadeg. Tri bloaz a oa ma n'o devoa ket en em welet, rak hien a oa bet aet, da ober eun dro hir hag a badas pell, da vroïou ar Sav-Heol, war ar « Porsmoger » leshanvet « Primauget » gand ar C'hallaoued. Eun dudi e voe evito en em gaout au oil gand egile, da genver ar zulvez kaer-ze e-touez au holl zulvezioù-kaer, i hag a'en em anaveze a-baoe ma oa anezo hag o devoa graet o Faskou asamblez e Gwitalmeze. Erwan a zelle ouz daoulagad glas Léna, glasoc'h eged an oabl, glasoc'h eged ar mor, glasoc'h eged ar c'holier a oa en dro d'e c'houzoug hag e lavaras d'ez, en eur vousc'hoarzin :

— N'ez peus ket a zonz Léna, pa ne oas nemed eur verc'hig vihan o c'hoari tiegezig aze, war an tevenn e-lavaren d'it e oamp graet da vont an eil gand egile ?

Ar verc'h yaouank a blegas he fenn hag a lavaras :

Ya ! sonj an eus eus an dra-ze... met...

Ne c'hellas ket mont da benn gant he c'homz ; he mouez a deuas da veza raouliet ha daerou a berlezenas he daoulagad. Sur a-walc'h e vije bet laouen o timezi gant Erwan a oa eur paotrig yaouank fur, eus ar re fura a oa er barrez, hag eul labourer ha n'en devoa ket a zamant d'e gorf ; en e zerr, sur a-walc'h he divije bet bara hag eurusted.

Met, kerent Léna, daoust ma ne oant ket gwall binvidik a yea er maez anezo o-unan pa glevant hano d'o merc'h-da zimezi gant Erwan rak heman a oa eun emzivad, hep tad, na mamm, ha ne jome ket kals a beadra gantan warlerc'h e dud.

Ar Morvaned a oa tud hag o devoa c'hoant da gaout eur mab kaer pinvidik ; o merc'h a oa koant hag eleiz a deuje d'he goulenn : ar verc'h yaouank avat a ouie n'eo ket an arc'hant eo a ra an holl eurusted er bed-man : an dud an hini eo hag e lavare d'he zad

ha d'he mamm, ma ne oa ket kals a arc'hant e godelloù Erwan en devoa eur yalc'h hag e oa muioc'h a binvidigez enni eget ne oa e Kerrom, en Hili-Houarn hag e Kergrôadez hag oa e galon aour.

Pa gontas Lena da Erwan an enkreuz a oa war he spered, henman a lavaras d'ez :

— Mat, p'eo gwir evelse eo, mont a ran da labourat a-laz korf ha da zastum arc'hant bras ha neuze marteze da dud a vezo laouen ouz hor gwelet o timezi an eil d'egile. Va amzer vartolod a dlee echui da viz mae a zeu.

— : Ha neuze, petra ri ?

— : Chom er zervich ha kemeret gradou.

— : Ya ! ha mont da redek ar moriou pell da lezel enno da relegou. Gwelloc'h eo d'it chom dre aman.

— : Ret mat eo, p'eo gwir n'eus netra hag en defe talvoudegez evit da dad ha da vamm nemed an arc'hant. Evito an arc'hant eo alc'houez an eurusted.

— : Ha ma ne zistroes ket daoust hag e vezin erus ?

— : Ya ! Gwir a-walc'h a leveres ; chom dek vloaz all da redek moriou ar sav-heol ; tapa terziennou ar broïou tomm ;... beza goueledet gand eur gwall varramzer... Nann ! pell a-walc'h oun bet o tanva soubenni ar martolod.

Hag e zaoulagad a deuas da veza gleb ha daerou a rede war e zivoc'h duet gant bannou an heol hag ezenn ar mor.

En eun taol, evel ma c'hortoze Lena eur respont, Erwan a lavaras :

— Unan eus va c'hamaraded, hag a oa martolod ganen, a dle mont, hep dale, d'an Amerik-Uhela, d'an Alaska, el lec'h m'en dus eun eotr hag a zo perc'hen d'eur vengleuz aour. Ma lavar d'in mont gantan, ez in ha neuze marteze e c'hellimp beza eureujet aman, e Gwitalmeze, en hon iliz parrez, e traon aoter hor pask kenta.

— : O ! an Amerik a zo pell ; pell ! pell ! paourkaez.

N'eo ket da lavaret zoken ez pefe arc'hant a-walc'h da vont di; ma keres e prestin d'it.

— : Nann! Lena! Me bigno evel mevel war al lestr hor c'haso du-hont hag a-benn eun nebeud bloaveziou aman e vezimp pinvidik!

Lena a voe laouenaet holl gant komzou ar martolod hag Erwan a roas d'ezi e c'her, o kimiada diouti, e ti-zroje a-benn daou vloaz, da zul Fask, hag e vije gan-



Erwan o kimiada diouz Lena

tan peadra a-walc'h da brena eun tammig tiegez bihan, eur gazeg, diou veoc'h eur prad ha daou pe dri bark.

Ar bloaveziou a zo aet ebiou, ar goukour he deus kanet meur a wech hag Erwan n'eo ket dizroet atao.

Lena ar Morvan her gortoz bepred daoust pegement e c'hoarz d'ezi he c'herent hag he amezeien.

Eleiz a baotred yaouank a zo bet ouz he gouleunn, met Lena a oar ne dlie kaout eun den nemed eur ger ha n'eus nemed unan gouest da ober he eurusted er bed-man.

— : Selaou, a lavaras he mamm d'ezi eun dervez, dies ez a va fenn o welet pegen troet out ouz ar paotr yaouank-se; mont a ra an heol ebiou da brenestr ha, glaoustre, e chomi dizemez.

— : Erwan a deuio, mamm; roet en deus d'in e c'her.

— : Ya! Met teir gwech o deus sonet kleier Pask abaoe m'eo aet Erwan Garadeg eus ar vro, hag abaoe den n'en deus klevet hano anezan, eme ar Morvan koz e kounnar.

— : Marteze, zoken, eme ar vamm, en deus dastumet arc'hant bras, du-hont, en Amerik, hag ez eo dimezet d'eun Amerikaner.

— : Nann! mamm, Erwan a zo eur c'hristen mat; n'oa ket furoc'h paotr yaouank egetan e Gwitalmeze; ne 'z ay bisken a-eneb e c'her; re a zoujans en deus evid an Aotrou Doue — eme Lena, hag e feue an daerou en he daoulagad.


Ha bep noz, a-raok mont d'he gwele ar plac'h yaouank a en eun erbede ouz santez Anna hag ouz sant Erwan, a oa o skeudennou war saminal he c'hampr hag a c'houlennie diganto diouad he muia karet hag hen digas d'ar ger, ar c'henta 'r gwella — ha Tad ha Mamm Breiz o devoa doare da lavaret d'ezi: « Ya! Kemer fizians! »

Kleier Pask o deus sonet an Alleluia, meur a wech abaoe, e touriou Breiz-Izel.

Hogen, eur bloavez, deiz gwener ar groaz, diouz an noz, eun den, gwisket fall, liou ar gernez war e dal, a en eur gavas e iliz Gwitalmeze, a zaoulinas en eur c'horn hag a reas e hent ar groaz gand ar re all a oa en em zastumet eno da enori Pasion Hor Zalver. An hini en divije taolet evez ouz an den reuzeudik-ze,

en divije gwelet pebez kalvar en devoa pignet, pebez kroaz en devoa douget ha pebez buhez doanuis oa bet e vuhez : treut e oa; e varo a oa diskempenn hag e zaoulagad dispourbellet en e benn; henvela m'oa oc'h den oa ouz an « *Ecce homo* ».

Pa yoe echu hent ar groaz, ez eas da heul ar re all eus an iliz hag en dre ma serre ar c'hloc'her an noriou e kemere hent an aod. Skuiz e oa, skuiz maro; anat



Lena o tomma

oa evelato, e ouie c'hoaz an hentchou, dre eno; a-greiz-holl, e chomas a-zav hag e skoas eun taol er geot gand e vaz:

— Aman oa... aman oa... hag e spered a nije etrezek an amzer wechall hag evel eur mousc'hoarz a baras, ouz sklerder al loar, war e benn kosaet gand ar bloaveziou, an enkreiz hag ar boan.


Kenderc'hel a eure gand e hent, heb ober trouz, en aoun da veza klevet gand ar chas a en eun lakaje rak-tal da harzal...

Mont a eure warzu eun tiegez... digeri a eure an dray; tremen a eure ebiou lok ar c'hi; eur zell a eure ebarz; goullo e oa: Maro! e flee beza ar paourkaez Dorig, hen ivez! »

Tostaat a eure ouz an ti; goulou a'oa en unan eus ar prenecher; aoun a grogas ennan; ne grede mui tostaat; distronsa a eure war e benn, e dok dislivet gand ar glao hag an heol, ha gouestata ma c'hellas, en aoun da veza klevet, e tosteas ouz ar prenestr hag e sellas a-dreuz ar gwer.

Dirak ar siminal, e oa ennan eur guchenn geuneud lann o tevi, e oa eur vaouez gwenn he bleo, doare yaou-ank d'ezi c'hoaz evelato. An den kaéz ouz he gwelet a lavaras: « Hi eo! Hi eo! Ra vezo mealet an Aotrou Doue! »

Hag ez eas ac'hano adarre gouestata ha didrousa ma c'hellas...



Kleier Pask a zone an Alleluia. Lena a oa bet e offis ar zadorn zantel hag a zistroe d'ar ger. Al laboused a gane e begou ar gwez ha Lena a gave d'ezi e klev e c'helou mat ganto: « Alleluia! Alleluia! savet ei ! a lavarent! »

Evel gwechall ec'h azezas eur pennadig war eur

roc'h da ziskuiza pe gentoc'h da zellet ouz ar mor o wenna war ar reier.

En eun taol, eun dourn a skoas war he skoaz... dizrei a eure buan he fenn hag e welas dirazi eun den skuiz maro gand al leoiou en devoa graet, war e droad, gwisket fall hag a vousec'hoarze outi.

— : A! ta! emezan, o welet n'oa ket anavevzet, n'eo ket dizroet c'hoaz?

— : Piou? Piou n'eo ket dizroet? eme Lena, sebezet.



Erwan o klask aour

— : Lavaret en devoa koulskoude e tistrofe, eme an truilhek.

Lena, a deuas da veza gwenn evel eun tamm paper. Neuze, ar paourkaez den a gemeras he daou zourn etre e zaou zourn hag a lavaras:


— Ar bloaveziou a zo tremenet, met gwelet a-walc'h sa ran, kalon Lena a zo chomet stag atao ouz...

N'hellas ket kenderc'hel, rak Lena, a drouc'has warnan:

— Erwan gaez! Erwan gaez!

— : Ya! Lena, me eo, pelloc'h!

Hag Erwan Garadeg a gontas da Lena an trubuillou en devoa bet da c'houzany abaoe ar wech diweza ma oant en em welet. P'en em gavjont, e vignon hag hen, du-hont, en Alaska, ar vengleuz aour a oa bet laeret digant he gwir berc'hen... Goude beza klasket epad pell hag hir amzer, e kavjont eur vengleuz all hag e wersjont o aour e New-York hag e klaskjont dizrei d'ar ger.



Erwan o tizrei da Witalmeze


Hag o veza m'en devoa Erwan lavaret da Lena e tistrofe abenn goueliou Pask ha m'edo hanteret ar c'horr-raiz pa guitae an Amerik e pignas war eur c'harr-nijal a dlee qber e ziskenn e Brest; sionaz, eur barr gwall amzer a zavas, ar c'harr a gouezas er mor; Erwan a c'hellas kregi en unan eus eskell ar c'harr ha chom.

evelse war an douar ken a dremenas ebiou d'ezan eul lestr hag a reas eun ehan e Cherbourg. Erwan Garadeg hag en devoa kollet e arc'hant p'oa kouezet e garr er mor, a rankas ober war e droad an hent etre Cherbourg ha Gwitalmeze, o vevad diwar an aluzen, evel eur paour; e'hoant en devije bet da gaout labour, met re goz her e'haved.

Erfin an Aotrou Doue a roas d'ezan ar c'hras, da e'hellout gwelet, da zul Fask, a-nevez, an hini m'en devoa roet d'ezi e c'her hag her gortoze atao.

Eun nebeud derveziou goudeze, kleier Gwitalmeze a zone laouten evit eured Lena ar Morvan hag Erwan Garadeg; karantez Doue e goueled o c'halon en devoa laket ar garantez a oa etrezo da jom beo, daoust pe geit bennak a oa ma oant dispartiet.

Skrevet ha skeudennaouet gant Herri CAOUISSIN.



JOBIG HA JULIG



1. *Jobig.* — Aïou ! Aïou ! Julig ! Julig ! Julig ! Deus aman 'ta, buan; c'maoun o vont da veza lounket ez-veo; eul loen gouez, sell, eun tigr, m'arvat, a rec' war va lerc'h; t'ebret e-vezimp-gantan, paour kaez.

Deus buan ! Deus buan 'ta !

2. *Julig* (a zired o klevet Jobig o yaouc'hal). — Na pebez paotr aounik a res-te ? Sell aze, petra ez peus kemerec' evid eun tigr; eur o'haz bihan azezet dirak ar c'hon-lac'hañ-ze hag e-weles e skeud war ar voger; n'es ket da gaout kement-se a aoun gaud a ri ken !

Moutig, Bizig hag ar pod laez

1. — *Moutig.* — Sell 'ta! Hennez ar pod-se a dle beza laez mat ennan!

Bizig. — Ya! vat! karout a rafen eva eur banne anezan!

2. — *Moutig.* — D'in-me da genta, ha d'it te, goude, Bizig!

Bizig. — Me gortoz! a! nann, avat!

3. — *Moutig.* — Mat eo kenan!

Bizig. — N'em bezo ket re gand eur podad all... Moutig, tenn da benn 'ta! n'hell ket daou benn mont e genou ar pod.

4. — *Moutig.* — Tenn da hini te; poan a res d'in.

Bizig. — N'oun ket gouest... Petra 'zo? ar pod a venn kosteza!...

Moutig. — Tapet oun!






5. — *Bizig.* — N'oun ket evit tenna va fenn, paour kaez!

Moutig. — Chom sioul! graet eo ganeomp en taol-unan!



6. — *Moutig.* — Va fenn! va fenn! aiou! va Doue!

Bizig. — Maro mat oun en taol-man.

Moutig, Bizig hag ar pod laez



VI PASK JOBIG



1. *Jobig*. — Kavet em eus eur mell vi, eur vi autruch hag eun dro gamm a rankan da c'hoari gantan da Julig.

3. — Ha Julig, p'her gwelo, her c'hemero raktal evit eur vi pask, graet gant chokolat...

5. Julig, a deu an flour en e c'henou, o welet eun dra hag en deus kement all a zoare vat hag a zank e zent er vi... Pask...

2. Gand eun tammig liouaj gell, evel ar c'histin pa strinkont eus o c'hloz, ar vi-ze a vezo kempennet kaer...


4. — Sell, Julig, pebez vi Pask am eus bet digand ar c'hleier o tizrej eus a Rom. Del; d'it eo.

6. — Klozenn ar vi a dorr hag ar melenn hag ar gwenn a oa ennan a vastarenn genou ha dilhad Julig... ha Jobig a c'hoarz, gwal'h e galon.


Rouzig hag an « Express »



1. *Ar Mestr*. — Sell 'ta « express » Paris-Brest! Ema graet ganeomp!



2. *Rouzig*. — Ro peoc'h, mestr, bremaik e weli! N'eo ket da d'it kaout aoun!



Bing! Bang!!!! Bing!




Rouzig. — Peger genaouek eo an dud: mont da ober kement all a drouz evit ken nebeud all a dra.

Ar c'houlin, an avalaouer hag ar gveskler



1. — Per ar c'houlin ha Laouik an avalaouer a glaske gouzout, eun devez, piau anezzo o daou oa ar buana. Pedi a rejont Zizik ar Gveskler a zont da varn o affer.

2. — Per a oa eun trouc'had lorc'h ennan; sonjal a rae e vije da ganta ha truez en devoa onz ar paourkaez avalaouer: « Biken! emezan, ne c'hello dont d'am heul! »



3. Laouik n'eo ket eur ga-naouk eo; en em lakat a ra en eur voul hag, a rodellou, e fiskenn da draon ar c'hrec'h kals buanoc'h ebged eun auto, hag a ra 50 kilometr d'an heur.

4. Per a rañk chom war-lerc'h; koll eo; ar gveskler a ro priz kenta ar redadeg da Laouik ha Per a gouez beg e skouarn, war e benn, kement a vez en deus!

FARSEREZ



— Re verr en holl ho peus trouc'het va bleo d'in!

— Re verr? Mat, m'ho peus c'hoant e rin eun trouc'h all d'ezo!



— Asa! Saik, perak e res lizerennoù ken teo-ze?

— Gouzout a rit, ervat, va mamm, eo buzar va zad koz.



— N'ez peus ket aoun rak eur c'hoanenn, war da veno?

— Nann, avat!


— Mat, kea da laza an hini a zo aze war fri al leon neuze.



Ar barner. — Hag e livirit ez eus pemp bloaz abaoe ma n'oc'h ket bet kondaonet?

Ar barnet. — Ya, aotrou, rak epad ar pemp bloaz-ze e oan er prison.

Spered ar Vugale



Ar Mestr. — Arzur, ho preur a zo bet o chascal hag en deus tapet 1 c'hlujar, 2 c'had, 3 goulin ha 2 zub; pet loenig a oa en e zac'h p'eo dizroet?

Arzur. — Hini bet, Aotrou!

Ar Mestr. — Hini bet?

Arzur. — Nann! Rak va breur a zo ker genaouk ma svo a'ao ebion!



Janedig Lirzin, eur verc'h vihan paou vloaz, a zo aet gant he zad da besketa. Goude beza c'hoariet he-unan, eur pennad, war al leton ha dastumet en vriad tyat a vleuniou da gas ganti d'ar gêr e tizro da gaout he zad.

— Va zad, emezi, evit miret ouz ar peskad d'en emi veuzi eo o zapes evelse, n'eo ket 'ta?

Bretoned vihan, livirit d'ho mistri ha d'ho mestrezed-skol deski lenn ha skriva brezoneg d'eo, rak ar brezoneg eo ene Breiz.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz meurz :

An A. chaloni Derrien, person Gwitalmeze.....	1
An I. J. Leon, Plouvien.....	1
An A. Joseph Breton, Pengourven, Plougerne.....	1
An A. Chaloni Mesguen, Rener Skolach Kastell-Paol.....	1
An A. E. Stang, Skolach Kastell-Paol.....	1
An A. R. Audic, 59, rue Boissière, Paris XVI°.....	1
Rakprenet er miz-man.....	6

Leoriou rakprenet betek hen : 924 — 6 = 930.

Al lizer kaer-man hon eus bet er miz tremen eus Paris:

Paris 4 a viz Meurz 1932.

Aotrou Perrot,

Poan a ra d'in gwelout, pa lennan Feiz ha Breiz, pegen tenn eo peurober ar miadiad rakprenerien a zo ret kaout evit advoula leor an Aotrou Gwilhou. Eur vez eo. Rak-se ho pedan da lakaet va ano udr ar roll, evit ma vo, da vihana, unan ouspenn etouez ar re a fell d'ezo rei sikour d'eul labour vat. Evelse ne c'hello ket beza lawaret o deus an holl re-zivroet « dizonjet o brezoneg » ha n'int ket evit ober netra evit brud-vat o yez..


Degemerit, Aotrou Perrot, va sonjou leun a zoujans ouzoc'h hag e garantez e kenver ar brezoneg.

ROPERZ AODIG.

Ra deuiou 70 all da zonjal... ha da ober evel ar breizad mat-man hag e tapimp ar mil.

Degas an hanoiou d'an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz, Scrignac, Finistère, ar re o deus c'hoant da brena al leor a-raok ma vezo moulet : degas an hano heb an arc'hant.


Divinadennou Miz Ebrel



I. — Gwelet a rit aze kleier o tizrei euz a Rom; pemp a weler raktal, met c'houec'h a zo; e pelec'h ema ar c'houec'hvet ?

II. — Petra reomp holl heb her gwelet na steki outan gwêch ebet ?
 Degaset gant *Herve Rolland, Keranroux, Dirinon.*

III. — 'Vit mont d'an ifern da leski,
 Petra zo ret ouspenn pec'hi ?
 Degaset gant *F. Lucas, Breles.*



IV. — Erru an tren hag ar gloued a zo digor; e pelec'h ema ar vaouez karget d'he serra ?

V. — Ema deuet an nevez amzer; Azenorig a glev eun eostig o kana. E pelec'h ema ?

Arabad degas ar respontchou ac'han ma vezo embannet tri miziad divinadennou. Re ar miz-man eo re ar miz kenta.

KELOU LAOUEN

Maner Langongar, Plouzane.

*Tonig, Jobig, Herve, Gwenn, Aannaig Jenovefa hag Erwan de Parcevaux de Traonjoli a gemenn d'eoc'h, gant le-
 venez, ez eo ganet o breur SANE.*

16 a viz C'houevrer 1932.

Enor d'an tiegeziou niverus ha d'ar paeroned ha d'ar maeronezed a oar rei hanoioù kaer sent Breiz d'o filho-
 red ha d'o filhozezed.

Divinadennou

I. — RESPONCHOU DIVINADENNOU TRI MIZ KENTA AR BLOAZ.

GENVER. — I. Penn Th. Botrel. II. — Ar gedon. III. — Penn eur marc'h. IV. — Penn al louarn a weler e penn an nec'h ar wezenn deoa. V. — Penn ar mestr a zo pok-ouz-pok gant moue an azen.

C'HOUEVRER. I. — Novenoe, Roue Breiz, Tad ar Vamm-Vro.

II. A Ar wezenn gistin. III. — Eur pod-pri war an tre-bez, war an oaled.

IV. — Ar c'hilog a zo war e gein, e benn e penn an hent bras.

V. — Ar c'hi a zo war e gein, etre skourrou diou euz ar gwez.

MEURZ. I. — Breiziz, tud a galon, karomp hor gwiz vro!

II. — eur gestennad gwenan.

III. — E miz mae war ar gliz
e vez furaet ar re vriz.

IV. — An eil korr a zo e penn an daol-vaen.

V. — Mam goz a zo he lunedou e kreiz al listrier hag o skourrou a zo troet warzu an nec'h.

Er miz a zeu e roimp hanoiou ar c'honideien wella.

Kanaouennou Bleun-Brug Brest

Prenit *Kanaouennou Bleun-Brug Brest*, eul leor nevez flamm savet gant an Aotrouned Mayet, Guillerm, Guillerm, Boucher hag an dimezelle G. de Kermenguy, hag a zo e gwerz e Keriltud, 4, rue Algesiras, Brest.

20 real eo al leor p'her prener en ti ha 22 real p'her c'haser dre ar post d'ar prener.

Feiz ha Breiz

Mamm Doue, en han' Doue, deuit d'hor savetei !

O Mari ! steredenn-vor, selaouit hor pedenn ha deuit d'hor sikour ; saveteit Iiz ho Mab Jezuz a venn koueza en he foul rak Nazareth, da lavaret eo an tiegez kristen a gren ken hejet all ha ma 'z eo, tu ha tu, gand-avel foll an Dispac'h hag an Dizurz...

Mamm Doue, en han' Doue, deuit d'hor savetei !

O Mari ! hor Mamm hag hor Rouanez, tron Hor Zalver eo a glasker diskar... ha diskaret e vezo ma ne garomp diouall rak ar mammou kristen, ar mammou kristen gwirion, ar mammou kristen penn-kil-ha-troad, kaer a zo o c'hlask, n'o c'haver ket ken, kouiz lavaret e nep lec'h...

Mamm Doue, en han' Doue, deuit d'hor savetei !

E tal an oaled, ne vezo mui, dizale, buhez Doue na buhez den ebet ken, rak niverus eo ar mammou hag o deus mez pe aoun o kaout bugale...

Mamm Doue en han' Doue, deuit d'hor savetei !

Siouaz, ar re yaouank hag e oa dleet d'ezo beza bet bleun an amzer da zont, n'eo ket bleun int ken ; eun avel ifern ha n'o deus ket gouezet tec'het diouti he deus o suilhet... ha lavared e vefe o defe kollet, an darn vrasa anezo, gened-o c'horf ha glanded o ene...

Mamm Doue, en han' Doue, deuit d'hor savetei !

Hag ar vugale vihan geiz, breudeur an Elez, hag a rank sevel ha kreski e kreiz kemend all a skoueriou fall hag a gomzou hudur hag a wel traou ha n'oa ket dleet d'ezo gwelet hag a glev traou ha n'oa ket dleet d'ezo klevet... n'eo ket bugale int ken... Siouaz ! n'eus ket a vugale ken !

Mamm Doue, en han' Doue, deuit d'hor savetei !

O Rouanez ar Verzerien, Itron Varia a Druéz, n'eus nemedoc'h hag ho Mab Jezuz hag a anavesfe ervat pegen izel eo kouezet an tiegeziou kristen ha pegen doun eo sanket gwriziou an droug er c'halonou. O ! dre ho taerou, dre ar seiz kleze a dreuzas hoc'h ene war menez Kalvar, dre bokou hag hirvoudou Jezuz, dre e angoni hag hoc'h hini, diredit, ni ho ped, C'houi, Mamm an Drugarez, da zavetei hon tiegeziou an eil goude egile ; grit ma vezint adarre tiegeziou kristen, rak i eo, koulskoudé mein-diazez rouantelez ho Mab, hon Doue hag hor Roue !...

Bezit, evel gwechall, Rouanez an tiegeziou ; fuilhiht drezo c'houez vat ho vertuziou ; C'houi eo Lilienn ar Baradoz, grit ma vezo klevet, adarre, e pep ti c'houez-vat ho klanded ; adsavit en hon touez Nazareth ha Bethani ; bezit eur wech c'hoaz an hini a deu da adsevel ar pezh a oa bet diskaret gand eun allo, C'houi hag a zo hag a vezo hor buhez, hon dudi hag hor fizians, « *vita, dulcedo et spes nostra !* »

Mari, saveteit an tiegez da Jezuz !
Jezuz, saveteit an tiegez dre Vari !

An Tad Mateo Crawley-Boevey,

hag a zo breman oc'h ober eun dro-brezeg e Breiz-Izel.

Sant Erwan, Tad hor Bro



MAE 1932

Sant Erwan, difennit gwirioù Breiz!

Sant Erwan, anvet ivez sant Eozenn e Bro-Leon ha sant Youenn e Bro-Gerne, a voe ganet er bloavezh 1253, d'ar 17 a yiz here, e maner Kervarzin, harp

ouz Minic'hi Lndreger. Tanguy Helouri, e dad, a oa bet e brezeliou ar groaz ha pa zizroas d'ar gêr, e ti-mezas gand Azou ar Genkiz, eus à Beurit.

Erwanig oa an eil eus a bemp. i vamm a lavare d'ezan : « O va mabig, bez fur, ma vezi eur zant, eun deiz! » hag ar c'hrouadur a responte: « N'em eus ken youl, va mamm ! »

Karet e oa gand an holl, dreist holl gand ar vugale; mat oa da c'hoarzin ha laouen e veze atao evel ar Spered Santel. Eur wech edo gant kamaraded yaouank eveltan o tiouall eur parkad ed ouz ar brini ; kana a rae kantikou ha psalmou gand e vignoned met ar brini ne zeujont ket da ober droug d'an ed daoust ma 'z edont o nijal a-uz d'ar park: eun aelig gwenn a oa e kreiz-ar park hag a vire outo da blava.

P'en devoe pevarzek vloaz e voe kaset da Bariz da zeski ar skianchoù sakr. Eleiz a baotred yaouank eus e vro a oa eno gantan o peur-echui o deskadurez; kousket a raent holl war ar c'holo, ne pell diouz an « Université » pe ar Skol-Veur a oa neuze en he fenn mistri brudet dre ar bed-holl, evel sant Albert ar Bras, sant Bonavantur ha sant Thomas Akin; kallet e veze evid an dud yaouank-se buhez Pariz rak paour e vezent peurliesha hag o zud a veze red d'ezo en em ziaeza evit kas o bugale di.

Nebeud amzer goude, roue ar Frans a roas urz da gas skol lezennou an Iliz da Orleans, setu ma rankas Erwan mont di gand e gamaraded. Eno e labouras d'en em zantelaat muioc'h eget biskoaz. Eun den hag hen anaveze mat a lavare evelhen: « Ne zebre ket a gig, ne eve nemet dour ha bep gwener e yane! » An holl a oa zouezet o welout peger buan e teske pep tra ha peger fur e chome. Epad m'edo e Orleans eo e voe gouezet pebez prezeger mat e oa ha dreist-holl pebez alvokad mat a gavje ennan diwezatoc'h ar beorien; o difenn a rae dirak al lez-varniou met da gen-

ta e selle da welet hag ar gwir a oa diouz o zu rak evel ma lavar an « *Très Ancienne Coutume de Bretagne* » :

Den ne dle digeri affer
Ma n'eo ket e gaoz gwir-bater!

D'e nao bloaz war nugen, peure'hraet e studi gantan e kemeras ar vicher a alvokad. Peurliesha e veze o chom e Landreger.

Eur pennad e chomas e Roazon, evel barner, met eno n'en em blijas ket kaer; tud Roazon, war a leverer, a veze atao o tabutal an eil ouz egile hag o klask mont e prosez; sant Erwan ne zougas barne-digez ebet morse hep ma vije an daelou, en e zaou-lagad, rak en dre ma varne ar re all, e sonje e vije barnet e-unan, eun dervez.

Konta a raer e c'hoarvezas an istor-man gantan epad m'edo e Roazon: eun aotrou bras en devoa gwarrizi outan kement a vrud vat en devoa digand an holl ha setu ma klaskas e nec'hi eun dervez. Mont a eure d'e gaout, war zigarez en em glemm eus eur paourkaez klasker-bara a oa bet chomet war dreuzou e di da c'houesaat ar c'houez-vat a deus eus e gegin hag e c'houlenne eur skoued aour evid ar c'houez-vat-ze a oa aet gand ar paour. Sant Erwan a lavaras d'ar pinvidik: « Goulenn a rit eur skoued aour ouz henman evit beza chomet, eur pennadig, war dreuzou ho tor da c'houesaat ar c'houez-vat a deus eus ho kegin, mat, selaouit breman trouz sklintin ar pez aour-man, — hag ar zant a laka eur pez aour da zeni e kichen skouarn ar pinvidik, — gand an trouz-ze ho pezo klevet aman e vezoc'h ker pinvidikaet ha m'eo bet henman gand ar c'houez-vat en deus klevet flu-ze, ha rak-se lezit hen da vont gand e hent, en habaskder! »

Sant Erwan a voe beleget d'e vloaz ha tregont; eskob Landreger hen hanvas raktal da berson e Tredrez (1284); eiz vloaz goude e voe hanvet da berson e Louaneg (1292). Epad an trizek vloaz diveza eus e vuhez (1291-1303) e prezegas.

Ugent ha tregont gwech muioc'h a dud a veze ouz e zelaou eget ne veze o selaou prezeger all ebet ha goude ma vije ar prezeger all-ze eun eskob.

E di a oa kentoc'h eun ospital eged eur presbital; leun e veze atao gand « e vignoned », da lavaret eo gand ar beorien hag eun dervez zoken e roas digemer d'Hor Zalver Jezuz-Krist e-unan, gwisket e stumm eur paour hag a lavaras d'ezan, e brezoneg, en eur gimiada dioutan : « Kenavo, Doue vo ganeoc'h ! »

Bepred, e doug e vuhez, e tifennas, a-eneb ar Fransizien, gwiriou an Iliz ha gwiriou Breiz.

Mervel a eure, d'ar zul warlerc'h ar Yaou-Bask, d'an 19 a viz mae 1303. Kelou e varo a lakeas Breiz a-bez e kaonv; lidou kaer a voe graet d'ezan hag ar beorien a ouele hag a lavare : « Kollet hon eus hon Tad, penaos e c'hellimp-ni beva breman ? » Dioustu goude e varo e reas eun niver bras a viraklou ma youc'he an holl gand ar garantez hag ar feiz : « Erwan Helouri a zo eur zant, brasa hini a zo bel ganet biskoaz e Breiz ! »

Graet e voe d'ezan, e iliz-veur Landreger, eur bez kaer, a badas beteg an Dispac'h; bruzunet e voe neuze gand an dud difeiz, met er bloaz 1890 e voe benniget bez nevez sant Erwan, kaeroc'h c'hoaz, mar-teze, eged e hini koz.

O veza ma 'z eo mab Kervarzin kaera bleunvenn hor gouenn, Pi XI, war goulenn Eskibien Breiz, en deus e roet da batron d'hor bro, d'an 12 a viz meurzh 1924. Ra vezo eta e c'houel, an 19 a viz mae, Gouel Breiz, evel ma 'z eo gouel Padraig, gouel Iwerzon,

gouel Divi, gouel Kembre ha gouel Jann d'Arc, gouel Frans; ra vezo gwelet en deiz-ze bannielou Breiz o ficha ouz tiez ar gwir vretoned ha ra vezo klevet kleier an Arvor ha kleier an Argoad, da heul re Landreger, re Zant Brieg, re Roazon, re an Naoned, re Wened, re Gemper ha re Gastel-Paol o kas o c'ha-naouenn dudius eus an eil menez d'egile :

Ne 'z eus ket e Breiz, ne 'z eus ket unan.
Ne 'z eus ket eur zant, evel sant Erwan.

Erwan BERTHOU.

Periğ Hağ Aziliz

Ar Boued

Beziñ kempenn. a lavare ar re goz, gwechall, rak « Maqueñ kempenn a dalv argourou bras » ha pa labourit, grit labour vrac; ar peñ a zo da veza graet a zo da veza graet mat!

Ma 'z eo gwir an dra-man evit pep tra, ez eo gwir, dreist-holl. evid ar boued a rank beza aozet gant kals a breder.

Azilis a vez hepred net ar podou ganti, hag a-raok o lakat war an tan, e ro atao eun taol torch d'ezo en diabarz; goude ar pred e skaot al loaiou hag al listri-kegin, en dour net, e lec'h o zeurel, evel ma ra darn, er pod gouelienn a zo war an oaled, dour drus ennan hag eun torch-listri hudur a vez lakat, beb eil, da zec'ha al listri ha da derchi friou ar vugale... eun donjer eo sellet ouz kement-se hag eur vez eo hen anzav.

Er boued ez eus, evel pa lavarfen louzeier kuzet hag a vir ouz ar c'hlenvejou da spega en den: en amann, er frouez, el legumach, er zaladenn, en tomatez, ez eus peadra da yac'haat ar c'hort, da grenfaat an nervennoù, da retaat ar gwad; el laez ez eus ivez, met arabad eo e lezel da virvi re hir en holl war an tan rak anez e koll e nerz; kerkenf ha ma verv e ranker ober implij anezan.

N'eus fors pegen direüs e vez an den, n'eus fors peger kous e kav e voued, e teute, evelato, da skuiza ma ne vefe aozet d'ezan nemed eur seurt.

Eun den ha n'en devez nemet laez, traou graet gant laez, a zo a-wel da dapad ar c'hrig-beo e sac'h-e-voued. Azilis a oar an dra-ze hag a boagn da lakat dishenvel ar boued eus an eil d'eviz d'egile, rak c'hoant he deus da ober he eured hanter kant vloaz. Abenn neuze, m'ichans, e vezo leun an ti a vugale hag a vugale vihan.

Ar Yod, Ar vran hag ar sparfell

Ma laka da Ber kig ha fars da zul, da veurz ha da yaou e laka ivez boued-laez da wener ha yod silet diou wech, er zizun, da lein; en em gaout a ra mat gantan, bep taol; ne jom ket kals a dra, er pod, eus o dilerc'h.

Eur pred mat eo ar yot-ze; eur pred dinaon ha skanv hag aes labourat diwarnan. En eur gemmesk he yod, Azilis a zonz en he mamm a oa brudet d'ober yod mat. Bep tro, e teu ivez en he spered, ar zonz eus an deiz m'edo ar palarat, tud diavaez leun ar park... ha m'oa en em gavet eun taol a zichans gant he mamm. Pegeit a zo abaoe? Daouzek vloaz hennak, met Azilis he deus dalc'het sonj: dare oa ar yod, pe dost, pa zigonezas gand eur peziad tamm huzil distaga diouz ar siminal ha koueza klok e kreiz ar podad yod.

A-raok m'he devoa gallet he mamm soubla d'e denna kuit e kouezas eun tamm all hag eun all; o tec'het a-raok eur sparfell eur vran a oa kouezet er siminal hag oc'h en em zifreta da vont er maez, e tistagas tammou huzil gant he ivimou: « Ema kollet va fodad yod breman! » eme ar vamm hag her c'hasas da draon an ti da yena a raok e deurel d'an daou benmoch d'o lein. A drugrez Doue he devoa, en eur bailh, danvez eur podad all a yod; kemeret a eure ar sil d'e zila hag eur gaoter all d'e lakat war an tan.

A-benn eur c'hart eur goude e klevas eun den o tont en ti hag a lavaras: « Sell, aman eo stlapet ar podad yod war leun an ti! » Anaout a reas mouez Manuel, ar rederbro, eun den ha n'eus neudenn gamm ebet ennan hag a vez o klask e voued dre ma 'z a: « Petra, eme ar wreg, avi ez peus ouz va yod? Gortoz eur pennad neuze, rak en hennez ez eus kouezet huzil; n'eo mat nemet d'ar roc'h! »

— « D'in-me eo mat ivez, da vihanan, emezan, nemed em bezo eur banne laez d'e zouba! »

Jann a gasas d'ezan eur skudellad laez hag e gendalc'has gant he labour. Eur pennad goude e klevas Manuel adarre: « Jann! » emezan.

— « Ya! emezi.

— « Daoust ha n'eus ket kouezet a huzil en hennez ivez? Henman a zo lipet ha n'eo ket torret va naon.

— Kerz pelloc'hik, da klask kemend all, neuze, eme ar wreg: en eur c'hoarziu hag Azilis a c'hoarz atao pa deu sonj d'ezi eus an taol-ze.

Ar Zoubenn

Er Geruhela e vez soubenn vat ivez ha kig yar ha kig lapin, heb an amzer ha gwestell poazet er gêr.

Soubenn ar c'hig

D'ober ar zoubenn e pren Azilis eun tamm kig saout pe askourn; e lakat a ra er gaoter gant pevar pe bemp litrad dour, dre lur gig; lakat a ra c'hoaz: karotez, kignen, irvin, pour, ar pezh he deus hag a-raok ma verv ar podad-dour e lamm an eonenn diwar c'horre ar zoubenn gand eul loa-zil; da c'houde, e lez an traoù da vervi epad c'houec'h pe zeiz eur.

Soubenn an amann rouz

Eur guchennig ognon he deus ivez; a-wechou e ra soubenn-vijil; drailha a ra an ognon; o lakat a ra war an tan da rouza, en eun tamm amann pe en eun tamm gres; eun nebeudig bleud a laka goude gand eur banne dour d'o c'hemmesk; a-raok teurel ar zoubenn war ar bara e laka c'hoaz eur melen vi rak ar viou n'int ket ker da werza hag ar boued gand eur vi a vez magusoc'h: ne ankounac'ha morse lakat pebr hag holenn ha trouc'ha a ra tano ar bara, rak Per en devez muioc'h a c'hoant debri eget pa vez re deo.

Soubenn ar patatez

Setu aman eur zoubenn all hag a ra Azilis ha n'eo ket fall. Lakat a ra pour ha patatez da boazat en dour ha pa vezont poas e laka eun tamm amann fresk ganto.

Soubenn ar fa-munut (haricot)

Gand ar guchen fa-Brezil, pe fa-munut he deus er zolier e oar ober ivez soubenn eus ar gwella: o lakat a ra e glec'h, en dour yen, en dervez a-raok hag, en dour yen,

adarre, er gaoter, antronoz, gant kignen pe chalotez, gres pe gig-moc'h drailheth ha, me lavar d'eoc'h, e vez laouen Per, p'en devez bet eur pred aozet gant preder, gand e vuia karet.

Respont a ra ouz an Angelus, gant devoision, hag ez a kalonek d'e labour; n'en deus ket a geuz da veza dibabet ar plac'h yaouank fur-ze ma 'z eo Azilis da veza mestrez war e diegez, met krena a ra o sonjal en divije gallet en em gaout gand eur verc'hodenn dibalamour ha dibreder, eur strinkell ha n'he divije ket hast nemed ouz he mellezour hag ouz he dilhad kaer!

Ar bara

Tud a zo hag o deus laket e penn eleiz eus o c'hervroiz e oa gwelloc'h ar bara gwenn eget bara ar gêr, ar bara prenet eget ar bara poazet er fourniou war ar maez. Pe seurt tud eo ar re-ze? Paotred fin hag o deus c'hoant da c'houit merc'hed diegus a gave re labourus ober bara er gêr!

Ar pezh a zo skler hag anat eo an dra-man: ar bara n'eo mui na founnus, na magus, na mat, evel gwechall. Ar re o deus anavezet ar bara segal-winiz a oar aman ar wirionez ganen: bouk ha blazet mat e chome betek an tamm diveza. Ne deui mui ar c'hiz eus ar bara segal-winiz en dro, met perak ne deufe ket ar c'hiz eus ar bara gwiniz?

Menez Azilis eo lakat staga eur fourn ouz penn he zi, p'he devezo laket eur gwenneg bennak a gostez ha n'eo bet bet tost d'in-me he dislavaret pa lavare d'in e laka bara ar gêr pell a-raok ar bara prenet ha me a oar n'eo ket gant damant d'he c'horf eo e chomo heb ober eur fournikad bara er zizun.

Kerent em eus e Goueled-Leon ha warlene e oan bet ouz o gwelet; eur banne kafe am oa bet d'am merenn hag eun tamm bara ker mat, ken tener, ker fetis, ma kave d'in e oa eur gouign aozet er gêr; teuzi a-rae em genou: « Peneos a res, Annaik, evit kaout kouls bara hag an dra-ze? »

— Evel ma veze graet gwechall; touezia-bleud ha dour; lakat eun nebeud goell-bier ebarz ha terri an toaz gwella ma c'hellan, kiniterv goz, emezi, en eur c'hoarzin.

— Mat, eme, pec'hed o deus ar merc'hed, re va bro, da vihanan, pa reont fae war bara ar gêr, pa lezont ar ouenn da goll he nerz gant bara gwenn, ne oar den petra vez oc'h ober an hanter anezan. Pell a oa n'em oa ket debret netra kerkouls!

An dud gouiziek, medesined hag all, o deus klasket gouzout perak e oa ker fallat an dud abaoe ar brezel!

Kavet o deus e ranked tamall kement-se d'ar bara n'eus nerz ebet ennan ken, ken tamouezet ha ma vez ar bleud taolei e vez etouez ar brenn ar pez a oz a wella rak tro-war-dro d'ar c'hreunenn eman ar pez a zo a wella er winizenn ha ne vez laket er bara gwenn nemed ar pez a zo e kreiz: ar bleud gwenna eo ar bleud falla. Ar vedesined a zifenn ouz meur a hini debri bara rak gwelet a reont e ra muioc'h a zroug eged a vad d'ezo ha ha setu aze perak e vez gwerzet ha debret kals nebeufoc'h a vara breman eget gwechall.

Ma karfemp ober evel ar re goz, pozat bara adarre er gêr hon divije boued magus ha yac'hus hag e teufemp da veza kals krenfoc'h.

Lakat a rafen eur glaoustre ouzoc'h, ma stagfed adarre da ober bara er gêr evel gwechall, e vije gwelet nebeufoc'h a dud oc'h uza war ar maeziou, eget breman, rak breman an « tuberculose » a en em-skign evel al lorgnez dre ar vro.

Bara! gantan blaz ar gwînz
Ma chomo krenv gouenn vat Breiziz!

Tintin Anna.



Peorien Breiz-Izel

Breiz an amzer vremen a goll tamm ha tamm he stumm a vro dishevel diouz ar broiou all; an holl draou koz n'int ket da veza miret, met an holl draou nevez, ken nebeut, n'int ket da veza gouzanvet.

Keuz am eus da zarn eus gwiskamanchou va bro a oa ker kaer met, daoust pegen talvoudus e oant, n'int ket ret evit miret spered Breiz hag eleiz a dud a weler bemdez hag a zoug dilhad e giz Leon, pe e giz Kerne, pe e giz Treger pe e giz Gwened ha n'int nemet Bretoned hag o deus nac'het o bro o nac'h ar pep wella anezi... he ene... he yez... ar brezoneg, ha darn all a weler gwisket e giz Paris ha n'eus ket gwelloc'h egeto da zifenn, a eneb ar bed, gwiriou sakr ar Vretoned.

Eun dra all a zo c'hoaz hag a welled e Breiz ha ne gaved ket e lec'h all: he feorien.

: « Gwechall (1) e oa kals anezo : betek re a lavar darn.

Diouan ha kreski a raent didrabas war douar Breiz-

(1) An diveza klasker — Bara, Dir-na-dor — Feiz ha Breiz
Miz Meurz 1920.

Izel, evel al lann hag ar balan. Testou ' oant eus madelez ar Vretoned, d'ar c'houlz ma ne gaved ket c'hoaz, skrivet war droul ar bourkou, e galleg dipitus : *la mendicité est interdite.* »

Breman, ne vez ket gwelet kals anezo ken; peorien a vezo atao koulskoude; ar c'hlenved, an dichans hag a-wechou zoken ar siou fall a laka darn da goueza en dienez ha pa n'o devez ket a nerz a-walc'h d'en em zavel e rankont mont da glask o bara a zor, da zor ha beva diwar an aluzen.

Ar pezh ne weler ket ken, evel gwechall, avat, eo balerien-bro hag a gave o micher ken enorus ha n'eus fors pe seurt micher all; mont a raent da beorien evel ma ya re all da gilvizien pe da gereourien : kroui a raent evel eun tammig rouantelez hag e savent o zailhou diwarni, en hano Doue, dindan an hano a aluzen; ne vent ket dreist, e c'hellit kredi, met beva raent dibreder; o bara pemdeziek a gavent, heb ezomm da zerc'hel tiegez, daoust ma oa hiniennou anezo hag a oa dimezet; imaget e vezent diwar goust an holl; war an deiz e redent an hentchoù, o kas ar c'heteier a gêr da gêr, ha diouz an noz e kavent eur c'hraou hag eur guchenntg plouz da gousket... pa ne vire ket ar yenienn outo d'hen ober : « Ho mantell a zo bras, a lavare d'in, eun dervez, Jann an Dantec, eur baourez eus Menez Are, met hini an Aotrou Doue a zo brasoc'h c'hoaz rak anez e vijen bet marvet gand an anoned (1) er goanv tremen! »

Enn dervez m'edoñ o vont da Blougasnou, e kavis, war va hent, eur paourkaez koz, eur bisac'h ouz e gefn, eur vaz en e zourn, eur pezh boutou koad, en e dreid, a gerze gouestadik, kroummet warzu an douar. Doare vat en devoa. Komz a ris outan hag e rejomp eun hanter leo vale o komz an eil gand egile. O tont edo, emezan, eus kosteziou Plougonven hag ar C'hloastr, el lec'h m'en devoa tremenet eur miz o leina en eun tiegez hag o koania hag o kousket en eun all. Goude beza graet an dro-

(1) anoued = rion, yenienn.



Peorien o c'houlenn an aluzen.

ze edo o vont da staga gand eun all, e kosteziou Plougasnou ha Sant Yann ar Biz : « Emberr, emezan, e kouskin hag e febrin e Kerzinoury; warc'hoaz e leinin e Goasven; ha diouz an noz e koagnin hag e kouskin e Kerbiked; en dervez warlerc'h ez in da Draonvilin, da Ger-vorfezen hag e peure'hrañ tro an aod. Goudeze, ez in da Vro-Leon, e kosteziou Taole, Gwelet a rit, n'eo ket

da d'fin kaout aoun da vervel gand an naoun; anavezet aoun; tud vat a gavan war va hent; evid ar boued a roont d'in e pedan evid o zud aet da Anaon e kontan d'ezo marvailhou hag e kanan d'ezo ar soniou a ouezan. Va micher a blij d'in; evit hen ober e ranker kaoui divesker mat ha va re, gwsa pez a zo, a venn-horjella, eun tamm, dindannoun. N'oun ket bet koz atao, na dic'halloud evel ma 'z aoun breman. — Er bloaz 1870, e oan etouez-sou-darded' ar « Finistère » a zaveteas ar C'houarnamant edo an Dispac'nerien o klask diskar; ar Flo, eus a Lesneven eo a oa en hor penn; stourmet e meus ouz ar Brusianed e Champigny, en Hay, e Buzenval, ha breman n'oun mui mat da netra nemet da redet an hentchou. »

Frederik ar Guyader en deus kontet d'eomp istor eur paour eus Brasparts hag a deue bep sizun da c'houlenn eun aluzen a zaou wenneg digand e gerent. Epad eur miz, penn-da-benn e chomas heb ober e dro hag er miz warlerc'h ec'h en em gavas adarre d'an dervez eus ar zizun m'oa boaz d'en em gaout. Ar vatez a roas d'ezan daou wenneg evel en troiennou all; ar paour a zellas ouz ar pezh a oa bet laket en e zourn hag a lavaras d'ar plac'h, ken dinec'h ha tra : « Lavar d'az mestr n'em eus ket bet va c'hoant; epad eur miz oun chomet hep dont hag evelse n'eo ket daou wenneg met dek gwennege eo a dleer d'in en taol-man. » Evit beza e welet eo en deus ivez ar Guyader skrivet e « *Chanson du Cidre* », portred ar paour golet a astu hag a oa leshanvet Sammal-Laon.

Mat a veze da welet ar beorien-ze oc'h en em gaout en tiegeziou; digemeret e vezent evel bugale reuzeidik an Hini n'en devoa ket eun doenn d'e zisc'havi nag eur maen da harpa e benn; digoli a raent ar re o loje gand ar c'heleier hag ar marvailhou a ouient konta ker brao hag a lake nozveziadou hir ar goañv de veza ker berr.

Fanch an Uhel, en e skridou, a lavar d'eomp pegement a blijadur e veze gwechall en e gêr, e Kerarborn, e Plouaret, pa veze gwelet ar C'herandel koz, leshanvet ar *C'hopagnon Dall*, o tont da c'houlenn an aluzen: Homer, gwechall, er Gres, ne live ket bravoc'h egetan e varvailhou. Ar C'herandel a oa eur barz dall a veze o c'hou-

tenn an aluzen a zor da zor hag a bae e distera vad a veze graet d'ezan gand unan pe unan eus ar soniou kaer, eus ar gwerziou trist pe eus ar marvailhou sebezus a oa sanailhet en e spered. Mantrus oa an traou a ouie, dindan evor; eur vouez kaer en devoa ha bleo ha baro hir. Rollou rouaned a veze roet d'ezan er peziou teatr brezonek a c'hoaried neuze e Plouaret ha tro-wardo. Pa veze oc'h ober Charlemagn, e veze c'hoant da gredi e weled an impalaer koz unan savet eus e vez ha deuet da ober eun dro adarre war an douar. Pa veze c'hoaried mister Santez Triphina, e veze roet d'ezan roll Abacarus, roue Bro-Zaoz, koz ha dall evel dan hag e oa eur souez gwelet peger brao e ouie en em dent a gantan: kerkent ha ma veze klevet, endre ma ruihe en e benn e zaoulagad maro, o staga gand e ziviz :

Me a zo eur roue galloudek war ar bed
Me garfe beza paour ha kavout ar yec'hed,

an holl a strake o daouarn d'ezan, en eur youc'hal :
Kompagnon-Dall ! Kompagnon-Dall !

Fanch an Uhel a dle d'ezan eur bern eus ar soniou, ar gwerziou hag ar marvailhou en deus embannet hag anzav a ra e veze atao tenzoriou spered ar C'herandel kosoc'h ha sebezusoc'h eget traou spered ar re all en devoa dastumet o marvailhou; ra vezo benniget gand an Aotrou Doue ene ar paour-ze pinvidikoc'h eun tamm mat eget eleiz a vilionerien !

Daoust ma 'z aent pep hini diouz e du, ar beorien a ouie en em voda hag en em gaout niverus; en eur manner, d'an deiz ma veze roet an aluzen, pe en eun anteramant pa c'helled gortoz eur gwennege bennak digant kerent an hini maro, pe en eur pardon bennak e lec'h ma veze kals tud o pardona. E Rumengol, e Santez Anna ar Palud hag e Sant Yann ar Biz, ar beorien a en em gave a gantchou; diskouez a raent d'ar bardonerien gouliou estiammus ha n'oant ket holl gouliou gwirion; truezus e veze o c'hlevet oc'h ober o lenvou hag o fedennou; en em ginnig a raent da ober, e lec'h ar re o deveze



Eur paour hag a veve breman ez eus 100 bloaz

graet al le-ze, diou pe deir zro, d'ar chapel, war bennoir
o daoulin noaz, pe da gaout, war o fenn, eur skudellañ
zour, evel an hini a ranked da breña pa 'z aet da bardona
da Zant Laurans ar Poull-Dour; kana a raent gwerziou.

ha kantikou ha ne veze fin ebet d'ezo; an Aotrou Ker-
varker a gavas, e sant Yann-ar-Biz, eur paour hag a sta-
gas gand e gantik kerkent ha goulou-deiz hag a oa deuet
an noz ha n'oa ket echu e gantik gantan c'hoaz. Emi
Souvestr a lavar d'eomp e welas, e Rumengol, ar be-
orien bodet en dro d'eur pez tantad tan a daole eur skle-
rijenn zomezus war o zruilhou ha war o fennou liou an
astuz warno. E Santez-Anna e oant « rouaned ar Palud » ;
mont a raent da ziambroug ar bardonerien hag e you-
c'hent de'zo : « A-raok mont pelloc'h, paeit gwir ar be-
orien ! » Anez stlepel eun nebeud peizou mouniz er vann
n'helled ket en em zizober anezo. D'ar zul, da zeiz ar
pardon bras, evelato, e rankent goullonderi ar blasena,
hag e vezent gwelet o vont kuit a-raok goulou-deiz, han-
ter vezo, darn anezo, ouz sklerijenn al loar, en eur ga-
na kantik santez Anna :

En eskopty a Gerne, war vordig an mor glas

E Kemper ar beorien a en em vode, er goanv, en eun
ti furn a oa e plasenn Toull-ar-Laer; eno e veze tomm
d'ezo hag e c'hellent kousket; a-wechou darn a bigne
zoken war ar furn, evit beza tommoc'h d'ezo, hag a
varve eno mouget gand ar c'hor.

Abaoe amzer Salaün ar Foll a veve, er XIVvet hantved,
e welomp ez eus bet darempred, a-liës a-walc'h, etre ar
beorien hag ar zoudarded! Pa zavas Dispac'h, e Breiz-
Izel, diwarbenn ar *Paper Timbr*, er bloaz 1675, eleiz a
beorien a voe kondaonet d'ar galeou evit beza bet aet
a-du gand ar re a oa a-eneb ar C'houarnamant. Markiz
Pontkallek, er bloaz 1720, a voe diskuldit d'an dragoned
gand eur paour en devoa e anavezet.

Epad Dispac'h 1789 hag ar bloaveziou warlerc'h, e
voe kavet trubarded etouez ar beorien, hag ivez, a dru-
garez Doue, tud a galon, evel Louis Tretou a oa en em
ginniget, ez-yaouank, da laza eur c'hi klanv; taget e voe
gantan, siouaz, en e c'ahr, hag e chomas gondeze eur
gouli enni. a veze goloet gand eur plak aluminium ar
pez a roas tro d'an dud d'e leshenvel *Gar Arc'hant*.

Chom a eure mac'hagnet ar rest eus e vuhez; e gen-



Eun tiegeizad peorien o klask an aluzen er bloaz 1835

vroiz, dre anaoudegez vat, her beve, pep hini d'e dro. Mont a eure war harzou Breiz ha betek an Anjou da tourm ouz ar Re C'hlas.

Pa en em skignas ar c'holera er vro, er bloaz 1832, breman ez eus kant vloaz, e voe karget ar beorien da

gana, dre ma 'z aent, eur werz savet gand al Ledan, a oa mouler neuze e Montroulez, da zeski d'an dud ar pez o devoa da ober evit diarbenn ar gwall glenved-ze.

An Aotrou Kervarker, en e Varzaz-Breiz a gomz d'eomp-eus an hanoiou tener a ro ar Vretoned d'ar beorien: paour kaez! tud keiz hag all.

Ma c'helled kaout truez ouz ar wir beorien e oa re all, evelatc, ha ne oa ezomm ebet da gaout truez outo rak o labourat, ma ne vijent ket bet kel lezirek ha ma oant, o divije bet gellet gounit o bara, bep ezomm da droial an-hentchou.

Maneriu a oa hag e c'helle ar beorien chom enno keif ha ma karent. E maner Lanuzouarn, e Plouenan, e veze gwisket, maget ha lojet, er bloaz 1573, eur paour mae'h-gnet hag a oa eno c'houec'h vloaz, e hano Guyen ar Madec.

E Kervarzin, e kichenik Landreger, er bloaz 1292, eun nozvez c'hoanv, ma oa glao hag avel, sant Erwan a roas digemer da eur soner, d'e wreg ha d'e vugale, a oa o redek ar vro; en em blijout a rejont, rak pemzek vloaz goudeze edont eno atao!

Ar c'hiz a virer atao, derc'hent pardon sant Erwan, tad ar beorien, da lavaret eo d'an 18 a viz mae, da rei da zebri ha da loja da gement paour a deu da Gerarzin.

Eur bloavez e oa kement a c'hlae derc'hent ar pardon, ma ne lakas gwreg Kervarzin, nemed eur pod bihan, war an tan, da ober soubenn d'ar beorien; siouaz! ne voe ket pell e oa aet kouls lavaret ar podad soubenn da hesk hag ar beorien a en em gave atao. Unan eus ar re a oa en em gavet da ziveza, ha n'oa anavezet gant den, a yeas betek an oaled hag a lavaras gouestadik: « Gand an nebeul a jom e vezo gellet, da vihana, ober vad d'ar re vianka, ha d'ar re glanfa! » Ar wreg a en em lakeas da drempa skudelladou ar re a gave d'ezi o devoa muioc'h a ezomm eged ar re all da gaout eun dra domm bennak, met kaer he devoa tenna soubenn eus ar pod e kave atao da denna, hag hini eus an 50 pe 60 paour a oa eno ne jomas, er pardaer-ze hep kaout e skudellad voued. Unan hepken, an hini en devoa lavaret d'ar vestrez servicha da genta ar re glanv, ne deuas da klask tamm hag an holl a gre-

das e oa sant Erwan e unan eo a oa deuet da ober ar burzud-ze e kenver e beorien hag e verourez vadelezens.

Eun dervez hag a oa eun dervez a laouenedigez evid ar beorien gwechall, oa antronoz an eured. An dervez-ze oa o dervez, ar wazed a veze servichet gand ar gwaz nevez hag ar merc'hed gand ar plac'h nevez hag eur wech m'o deveze kemeret o fred, ar plac'h nevez a roe he dourn da unan eus ar beorien hag ar gwaz nevez da unan eus ar baourezed hag e veze graet eun abadenad zans betek ar pardaez: an treid a fringe er pri, met ar c'halonou a dride er baradoz.

Istor'ou kaer a red ar vro diwarbenn ar beorien. Anatol ar Bras en deus skrivet istor Ervoanig Prijant a laeras anduilhenn person Tredarzec hag a yeas goudeze da govez d'an hini en devoa laeret, hag a ouezas trei ker brao e gomzou, ma c'hellas, war ali ar beleg, derc'hel gantan e laeradenn p'eo gwir en devoa he c'hinniget d'an hini laeret ha n'oa ket bet mat gant heman he c'hemeret.

Eur paour all a yeas eun dervez d'ar C'harbont, e Lambaol-Witalmeze ha n'en devoe ket kement a chans hag Erwanig Prijant: eur bodezad yod a oa war an tan den ebet war e zro ha setu hen da staga ganti, en dra c'helle. A greiz m'edo o febri an ozac'h a deuas en ti. eur gwall zen, ma oa unan, an Aotrou Kersalaun, hag a roas urz d'ezan dindan boan da veza lazet, da zebri ar bodezad yod en he fez: peadra a oa enni da lema dek den. Ar paour a en em lakeas da zebri, met stegn e teue warnan. A drugarez Doue, unan bennak a deuas da c'hervel Kersalaun, hag a greiz m'edo oc'h ober e dro ar vatez a lavaras d'ezan: « Taol ar pezh ne c'helles ket da zebri en da roched hag en hent-se, ne grenvi ket gant da govad! » Ar paourkaez laer a lakeas eta ar restad yod war e gof hag evelse e voe diboaninsoc'h d'ezan e zougen eget ma vije bet abarz! Eur gentel vat en devoa bet eno hag he devoa e zizonet, en eur wech, diouz ar c'hoant mont da laerez yod.


G. P.




MONIG

M. MAYET.


Allegretto.



Ka-vet em oa eur ves-tre - zig Hag a



oa he ha-no Mo-nig, Eun ha-no brao d'eur plac'hig



koant, si-ouaz! Kol - let em euz va c'hoant!

I

Kavet em oa eur vestrezig
Hag a oa he hano « Monig »
Eun hano brao d'eur plac'hig koant
Siouaz ! Kollet em eus va c'hoant !

II

Va « Monig »-ma a lavare
Araok ma oa an eost dare :
« Pa vezo dournet ar gwiniz
« Ni a 'z ay hon daou d'an iliz.

III

« D'an iliz evid an eured
« Hag eun dro, goude, er vered :
« Er vered war beziou hon tud
« O deus lezet ganeomp o brud !

IV

« Gand brud-vat ha gant karantez
 « E vezer trec'h d'ar baourantez :
 « Da viken ni en em garo
 « Betek ha dreist eur hor maro! »

V

Met, ar maro kris p'he c'hlevas
 D'an daou-lamm rus a ziredas !
 Deiz he eured Mon a verkas
 Ha... d'an deiz-ze e tremenas !

VI

Eureujet gand an Ankou dall
 A zamm an holl ha mat ha fall
 He c'horf d'ar vered voe kaset
 Ha va c'halon-me voe rannet !

T. A.



“ Bleun-Lann ”

*Istor wiz kinniget gand unan eus Paris
 da gement breizad yaouank a c'hoanta
 kuitaat douar Breiz evit mont da glask
 gounit e vara da Baris.*

Bleun-Lann! evelse e oa bet leshanvet, en eur c'hoar-
 zin, gand unan eus e gamaraded, a oa o labourat, en e
 gichen, hag an hano-ze a oa bet dalc'het warnan goudeze.


N'eus hano fall ebet hag hen-man, da vihanan, a roe da
 c'houzout. d'an holl, e oa an hini hen douge eur brei-
 zad e weled. en e zaoulagad glas liou ar mor, eun eul-
 fenn eus gened hep par e vro gristen.

Herve a oa ginidik eus a Landreger; n'oa tamm ebet
 henvel ouz ar wazed all a labour e en e zeñr; deuet e
 oa da Baris evit gellout sikour, gwelloc'h a-ze, a gave
 d'ezan, e vamm intanvez da zevel e zaou vreur hag e
 c'hoar vihan; bourc'hizien Paris a wele, pa deue an hañv,
 o tont da heolia war aochou Breiz o devoa roet d'ezan
 da gredi ne oa nemet mont da labourat war laeziou evit
 gounit arc'hant bras... Ar paour kaez paotr en devoa o
 c'hredet; dienez a oa en ti hag e oa aet da glask labour
 d'ar gêr veur evit gellout sikour e vamm...

Ar c'hêriou da welet a zo kaer,
 A-bell, o lintra p'o gweler,
 Met pa 'z aer enno da veva
 Trumm e sav keuz gant neb a ya!

Herve, eur wech digouezet e Paris, a lakeas meur a
 zervez a-raok ma c'hellas kaout eun toullig kampr, war
 dosenn Montmartr... ac'hano e tiskenne bemdez da vont
 d'e labour d'eur vouleres...

Pebez kemm etre ar vicher nevez en devoa kemeret
 hag an hini en devoa graet betek vremen; gand e diegez
 bihan ne c'houneze ket kals a dra... Met, bara a c'helled
 da gaout evelato... aman Herve, hag hen triouec'h vloaz,
 boaz betek hen da veza bet mestr en e di... a rank plega



Herve oc'h hunvreal e Paris

ne oar ket mat a-walc'h da bet... ha deski eur vicher ha ne oar ket hag hen a deui biken d'he gouzout ervat... Keuz a deu d'ezan da veza selaouet mouez an douristed... Bemdez e rank labourat, dindan an douar, ouz sklerijenn ar goulou, en eun toull heb aer vat, hen boaz betek neuze, da veza e kreiz e basketier, tommet epad an deiz gant bannoù an heol... ha nag a gemm, dreist-holl etre an dud a zaremprede en e vro, tud a zoujans Doue, hag ar re a zarempred aman ha n'eus ket unan war gant anezo hag a lakafe e dreid en eun iliz... Herve a vez skuiz e benn a-benni an noz gant trouz ar mekanikou o vont en dro, a bep tu d'ezan, ha skuisoc'h c'hoaz gand komzoù tud hep kredenn hag hep lezenn hag a oa, war o menô, gwelloc'h eged ar gristenien vat evel ma 'z eus c'hoaz e Breiz hag a boagn da vale war hent ar baradoz... Er penn kenta, pa gleve dispenn e feiz e klaske he difenn, met buan e teuas da welet n'eus netra da c'hou-nit o klask kelenn tud hag a stank o diskouarn en aonn da glevet ar wirionez hag a stouf o daoulagad en aoun da welet ar sklerijenn...

Edod e miz mae hag e spered a nije etrezek ar vro ma vleunia enni al lann alaouret... klevet a rae ar goukouk o kana e gwez Kervarzin... gwelet a-rae da zeiz pardon bras Landreger... penn sant Erwan douget e kreiz ar bleuniou hag ar meulediou war diskoaz pe gentoc'h var galon eur bobl a-bez... klevet a rae, edoug nozvezioù hir, ar goanv, marvailhou Mari-Sent ha kanouennoù Pipi Goz ar c'hlsker bara en devoa sanailhet en e spered kement kanouenn a oa bet sa-
yet gant barzed Bro-Dreger en daou c'hant vloaz diveza bremenet!



Eur vouez c'haro a grozas hag a roas da anaout d'ar paotr yaouank n'edo mui en e vro: « Selaou 'ta te, aze hunvreer! taol evez ouz da labour 'ta, zo gwelloc'h d'it eget sonjal e merc'hed Lanhuon pe Bempoull! » Hag ar paotr a zo tenval e benn evel eur gampr hag a zo aet an heol ebiou he frenest. Abaoe m'eo deuet da Baris ha n'eus ket a c'houec'h miz c'hoaz en deus kollet e liou ha skanvaet eo eus a zek lur pe ouspenn. Deuet eo ha ne zebr ket ken ha pa deu an noz n'eo ket evit kousket!..

Eur pardaez, e vestr a lavaras d'ezan gand eur vouez c'haro: « Fenez, Bleun-Lann, ez i da gas ar pakad traou-ze d'an hini en deus e brenet; ne ri ket kals a dro o vont d'ar gêr ha neuze an dra-ze az lako da ziroufenna da zivesker! » Herve en divije bet c'hoant a-walc'h da lavaret d'e vestr e oa skuiz, hanter-glanv hag e oa yen, met ne gredas gwikal ger...

Pignat a eure, d'ar red, tosenn Montmartr a zoug war he c'hribenn iliz ar Galon Zakr; n'oa ket hanter wisket, treuzet e voe dillo gand gand ar glao, ha p'en em gavas en ti m'en devoa da vont, an Aotrou n'edo ket er gêr hag ar vatez, ken dichek ha tra, her pedas da zistrei: diaes e kavas beza graet kement-all a hent, gand eun amzer evel ma oa, hep beza gellet ober ar pezh a oa bet fiziet ennan!



P'en em gavas en e gampr e krene gand ar riou... mont a eure d'e wele hep tamm... trei ha dizrei a eure ennan, hep serra eul lagad; terzienn en devoa hag urziou garo e vestr a deue war e spe-red...

Antronoz, mestrez an ti m'edo ennan, o wellet... ne ziskenne ket da zebri e lein, a bignias d'e gampr; plijout a rae Herve d'ezi

o veza ma oa eur paotr yaouank fur hag a-zoare;

moredet e oa, badauet gant skuizder an noz; ar vaouez vat-ze a grogas en e zaouarn; an tan a oa enno ha koulskoude n'eo ket gant gor ar gampr eo e oant tomm evelse, rak houman a oa yen a-walc'h; mont a eure raktal da gerc'hat ar medesin; heman p'en em gavas, a zellas tu ha tu ouz ar c'hlanvour, a welas raktal e oa taget en e skevent: « Ma harp e galon marteze, emezan, e vezo gellet e barea, met kenta tra a zo da ober eo e gas d'an ospital ha rei eus e gelou d'e dud... »

Eur renkennad gweleou gwenn, gweleou hennel, gweleou tud ha ne gouskont ket kement a boan o deus, setu petra eo an ospital; en eur gwele evelse, e penn eur zai eo ema Herve; ne gouez tamm e derzienn; e vedesin a zo nec'het rak e wad n'eus ket a gas a-walc'h gantan!

En eun taol an nor a zo e penn ar zal a zigor hag eur vaouez o tostaat ouz he hanter kant vloaz a lak he zreid war an treuzou, an enkreiz war he zal hag an daerou en he daoulagad; unan eus diouallerezed ar re glanv a ziskouez d'ezi gwele he mab, rak hi eo mamm Herve; hen anaout a ra raktal: « O! va mabig me, na peger chenchet out e ker berr amzer... met, ne varvo ket, n'eo ket 'ta, Itron, emezi d'an diouallerez, her parea a reoc'h, ha dioc'htu ma c'hello bale e teuio d'ar gêr hag aer vat ar vro a roio d'ezan adarre an nerz en devoa gwechall! »

Herve o klevet e vamm o komz outan, e brezoneg, o deu, evel pa lavarfen diwar dreuzou ar bed-all da lavaret eun nebeud geriou c'hoaz da dud ar bed-man; sellet a ra ouz e vamm gant e zaoulagad glas ha tener, dispourbellet gand an derzienn: eur ger a deu eus e c'henou: « Mamm! » anavezet en deus evelato e vamm; en em starda a ra outi gant karantez: « Mamm, emezan, degase! ez peus d'in bleun-lann? » — « Va mabig paour, n'ema ket ar bleun el lann c'hoaz! » — « O! me garfe beza bet gellet gwelet eur bodig hepken eus lann alaouret va bro! »

An derzienn a gresk hag ar galon a falla; ar vamm gaez strafuilhet a ziskenn d'ar red da glask eur beleg; war he hent e kav eur varc'hadourez bokedou hag e pren diganti eur boked bleun melen-aour henvel o liou ouz bleun-lann Breiz-Izel; mont a ra e kenta iliz a zigouez ganti hag e ped eur beleg koz a oa eno o lavaret e beden-

nou e kichen eur gador-govez, da zont d'ar red, en hanv Doue, wardro he mab a zo fall...

Herve en deus gellét reseo e Zoue ha nouet eo bet ivez... ar skleur eus ar peoc'h a zo en e ene a bar war e dal... e vamm a bed en e gichen, evel an Itron Varia a Druéz e tal ar grôaz p'edo he mab benniget o vervel warni: Fiziâns he deus' atao, an Hini a lakeas mab intañvez Naim da zével eus a varo da veo a zo Holl C'halloudek...

Herve a zigor e zaoulagad hag a stard war e galon ar bleun a zo deuet d'ezan gand e vamm hag a gemer evit bleun' hant: « O! Mammig, me, emezan! ol na peger brao eo bezâ'er gêr! kan d'in evel ma kanes gwechall d'am luskat... c'hoant kousket am eus! »

E lec'h kana ar vamm gaez a garfe lenva: « O! va Doue! emezi, roit d'in evelato nerz a-walc'h da gana d'ezan c'hoaz, ar ganaonenn a ganen gwechall p'hei luskellen en e gavell! »

Ha setu ma stag ar vamm baour gant diskan he luskellerez daoust pegen doaniet eo:

*Kousk! kousk! Breiz-Izel, bro dispar,
Setu an noz o tont war an douar,
Kousk! Breiz-Izel, bro ker mat,
Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat!*

Hag o klevet ar vamm o kana, ar mab a vouse'hoarz hag ar ganerez a gendalc'h gant he c'hanaouenn lirzin daoust d'he c'halonad:

*En traoniennou didrous, me glev kan an eastig,
Telenner-noz, sont f flour ha dousik!*

Hag ar beleg koz, o pedi evid an ene-ze hag a zo hep dale o vont da nijal diwar an douar-man a glev ar vamm gaez o kana adarre:

*Breiz-Izel, douar sakr, a greiz kalon n'ho kar,
Bro all ken kaer n'eus ket war an douar!*

Ar vamm a-greiz he c'han he devoa graet eun hunvre: gwelet a rae du-hont he zi, e Landreger, sklêr gand an heol o para warnan, Herveig o c'hoari en e gavell hag he



Maro Herve e Paris

gwaz o tont d'e bred, gand ar mousc'hoarz karantezus
a rae outan e vab hena!

Pa d'avas e sellas ouz he c'hlanvour; ker gwenn hag
he, c'houet e oa e benn: « O! emezi d'ar beleg ema o vont
da vervel! »

Ne fazie ket: « Mamm! Mamm! eme Herve, sell 'ta ar
bleun-ze du-hont, henvel int ouz eskell aour! » Ne lava-
ras ger ebet ken goudeze; an dourn, gand ar bokedou a
oa ennan, a gouezas war al linsel ha « Bleun-Lann »
kutuilhet gant an Elez a voe douget d'ar baradoz da
vleunia. hep paouez, dirak tron an Aotrou Doue!

*Komzou savet gand Yvonig
ha skeudennaouet gant Herrî Caouissin.*



Da Vari

O Mari, o Mari, na c'houek eo da hano !

Bemdez, bennoz ni da gano

Ha morse d'az meuli hor mouez ne ehan

Karantez, o Mari d'id en deus diskouezet,

Tan beo ennout en deus c'houezet

Ha grasou dreist muzul warnout a zo kouezet.

An nenv splann, o Mari, eo da Rouantelez,

Dirazout e stou an Elez

Ha keit eo da c'halloud eget da zantelez.

Te zougas, o Mari, Mab Doue, ha ni oar

Eo breman skedusoc'h da c'hloar

Eget dremm aour an heol pe mantell flamn al loar.

Hor Mamm out, o Mari, ha klemm da vugale

A sko da skouarn hep dale

Ha war an henchou eun, te a stard o bale.

Ni da c'halv, a-Mari, ar Vamm a drugarez

Ennout na tro, na digarez,

Digor eo da galon d'ar bed paour a garez

War Satan, o Mari, te a peus bet an trec'h,

Nerz a zo ato en da vrec'h

D'hon derc'hel sounn ouz traon ha d'hon blenia

[ouz krec'h.

Euz da du, o Mari, bepred ni a zello,

Te, diouz da dron, hor skoazello

Ha dreizout tre d'an nenv sevel ni a hello.

J. L.HELGOUACH, O. M. I.

Sant-Brieg, 8-4-32.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz Ebrel :

An Itron Sez nec, Kergaradec, Plonevez- Porzay	1
An A. Cabon, Penn-an-Dref Stank, Lanriouare	1
An A. Libouban, Scolasticat des Père-Blancs, Carthage	1
An A. Couloigner, kure Lesneven	2
An A. Abgrall, person Goulc'hen	1
An I. Cloarec, Kergroaz, Sant-Nouga	1
An Dell M. L. Caer, Sant Nouga	1
An A. François Quinquis, Loc-Maria-Plouzane	1
An A. P. Rothel, Plouziri	1
An A. J.-M. Jegou, Milin Seigné, Cesson, Seigné (Ille-et-Vilaine)	1
An A. hag an I. Ernest Pastol, Milin Seigné, Cesson, Seigné (Ille-et-Vilaine)	1

Rakprenet er miz-man 12

Leoriou rakprenet betek-hen 930 + 12 = 942.

Ra deuiou 58 all da ober evel an 942-man hag eman tapet ar mil ha ne vezo ket gellet lavaret n'eus ket a 1000 den e Breiz gouest da enori, awr eun dro, ar spered kaer ma oa an Aotrou Gwilhou hag ar yez hep par ma 'z eo ar brezoneg.

Degas an hanoiou d'an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz, Scrignac (Finistère) ar re o deus c'hoant da brena al leor-a-raok ma vezo moulet : degas an hano heb an arc'hant.



Selaouit 'ta, Bugale



RETONEZ vihan ha plijout a ra d'eo'h Feiz ha Breiz ar Vugale?

Gwelet em eus darn ac'hanoc'h ouz e lenn ha diouz klevet o c'hoar-zadennoù ker skiltrus e oa anat o devoa plijadur gant o levrig bihan; mat, ma fell d'eo'h e welet o tont d'eo'h, bep miz, e rankit da genta degas lennerien nevez d'ezan ha d'an eil rei an dourn d'e skriva : ya! ya! an dourn d'e skriva, rak gouest oc'h d'hen ober; c'houi a zastumo, en dro d'eo'h, gerioù bugale mat da lakat an dud da c'hoarzin, marvailhoù koant hag istolioù berr, ha ni o skeudennaou d'eo'h...


Ma vennit o skeudennaou hoc'h-unan, gwella-ze, grit hen ha ni a vezo ho skeudennaou gant ho sinatur.

Skrivit d'eomp, evel ma c'helloc'h, e brezoneg, pe e galleg : na ne ouezit ket skriva e brezoneg; livirit d'eomp ar pez a zonjit diwarbenn ho Feiz ha Breiz nevez; skrivit d'eomp heb aoun ebet; pe vras pe zivalo e vezo skrivet ho liziri, an dra-ze ne ra netra gant ma vezo eun dra bennek warno hag a ziskouezo, d'eomp ho peus spered hag e karit an Aotrou Doue hag e fell d'evit kerzet, en ho Pro, war Roudou ho Tadou.



HERRI LEONAD.

P. S. — Kasit ho liziri d'an Aotrou Perrot, Rener Feiz ha Breiz, Scrignac (Finistère) a en em gargo d'o degas d'in.




Gwechall e oa e Breiz-Izel eur c'hilhog kaer hanvet Kaner-Ker ha n'eo ket heb abeg eo e oa bet roet an hano-ze d'ezan rak pa zave war e dreid ha pa zistage e « gotogogog » ne oa kilhog ebet e Kastell-Paol, na tro-war-dro, trec'h d'ezan : nak e Leon, nag e Kerne ne oa hini par d'ezan.

E Roudouz-an-Dour, e kichen Kemper, e oa eur yar wenn hag he devoa daouzek labous bihan, melen aour ; unan anezo a dapas brud e berr amzer ; Piaouik oa e hano, eul labous ha n'oa nemet lore'h en e gorf ; ar verc'h m'oa korret e glossen, ma tigoras daoulagad bras ha ma chomas sebezet o klevet a-bell kanaouenn skiltrus Kaner-Ker.

— : Pegouls, emezan, e c'hellin ober kement all ?

E vamm a skrabe an douar hag a zizoloe boued d'ezan : Piaouik n'oa ket nec'het gand an debri ; eun dra hepken em




devoa c'hoant da ober : gouzout kana evel Killohog Kastell-Paol !

Konta a eure e venoz da holl loened ar porz-kloz ; ar C'hilhog-Indez, hag a zo koulskoude eun tamm mat a deilok, a zirollas da c'hoarzin ouz e glevet : « Asa ! Piaouik, hag ez pefe c'hoant, dal m'out deuet eus da glosenn, da vont da glask beza tenc'h da Ganer-Ker a laka an heol, bemdez, da zavel ; n'ema ket mat da benn, sur a-walc'h ! Me, hag em eus eua tamm brao a oad warnout, em bevez poan oc'h ober koulz hag an Aotroun Paün ! a ! a ! a !

Hag ar C'hilhog-Indez hg an Houidi hag ar Gwazi a c'hoarze da Biaouik. Kement-se n'hel lakeas ket da furaat tamm ebet ; mont a eure da gonta an taol kaer en devoa c'hoant da ober da Vindu, ar veoc'h, da Gaborig, ar c'hi ha da gement dube a welas er porz ha kement hini her c'hleve a c'hoarze leiz e gof.

Eun nozvez ma oa skler ha klouar an amzer, Piaouik a dec'has diouz e vamm ker sioul ha tra hag a gemeras penn an hent da vont da Vro-Leon da glask Kaner-Ker.

O treuzi Menez-Hom ec'h en em gavas gant Saik ar Sparfel a c'houlennas outan da belec'h edo o vont. Piaouik a glaskas tec'het met Saik a hejas a ziouskell hag a youc'has gant kounnar :





— Petra, c'hoant az peus da veza lounket en eur c'henaouad ?

Piaouik a grenas evel eun delienn :

— O vont da Gastell-Paol emoun, emezan, da lakat an heol da zevel !

— : Petra ? eme Zaik, c'hoant ober goap ac'hannoun ez peus; taol evez !

— : Goap ebet, eme Biaouik, da Gastell-Paol ez an hag ez an !

— : Kastell-Paol, paourkaez bihan, Kastell-Paol a zo pell a c'han !

— : Rodig a dro a ra bro,


en em gaout a rin.

— : Ma karan me ivez ! eme Zaik. Sell ! trouez am eus ouzit; pign war va c'hein ha me az kaso !

— : Mil drugarez d'eoc'h, aotrou, eme Biaouik.

— : Az kas a rin, ya, gant ma laki an heol da zevel war c'hoaz; a hent all az lounkin en eur c'henaouad, kig ha plun hag all.

Ha setu Piaouik war gein Saik, hag o daou, mar gouient, etrezek Kastell-Paol. Eun tammig a-raok tarz an deiz ec'h



en em gavjent e kêr. Saik a lakeas Piaouik war gorre beg tour Kreisker :

— Ac'halese e vezi uhel a-walc'h da gana ! Distag da zon pa giri !

Piaouik ne grede ne kana na sellout e tu ebet, kement a aoun en devoa da goueza d'an douar eus a gen uhel all, rak tour Kreisker eo kaera hag uhela tour a zo e Breiz :

— Hast afo 'ta, eme Zaik, ma vezo gwelet pebez kanaouenn a zistagi !

Piaouik a zavas war e dreid, a astennas e c'houzoug, a glas-kas kana, met ne deuas gantan nemet... : — Kouik ! kouik !

Eun nevezenti a zigouezas evelato: al loar a zispakas he fenn, droug enni :


— Petra, emezi, ne vezo ket roet a beoc'h ken d'an dud da gousket !

Saik ar Sparfel a gemeras truez ouz Piaouik, o welout peger genaouok e oa c'hoaz hag hen dougas war e ziskoaz betek porz-kloz Roudouz-an-Aour; konta a eure d'e vamm an distro lous a oa en em gavet gant he mab ha Piaouik mezik a redas da guzat etouez e vreudeur endre ma tirolle an holl da c'hoarzin d'ezan ha ma klevet adarre, a-bell, Kaner-Ker o kana da lakat an heol da zevel war Breiz-Izel.

Ar gentel a zo da denna eus an istor-man eo :

Mat al laez dous, mat al laez trenk
Mat da bep dien chom en e renk !

Herri CAOUISSIN.





1. — Eun dervez Yann ar Paotr fin a deus da ostaleri Jakez da c'houlenn leina:

— D'uit, en ti 'ta, eme ar Mestr, laouen bras.

— Ya! eme Yann, c'hoant am eus da zebri eun dra ben-
net evit va arc'hant.



2. — Petra ho pezo? Eur c'hilhog poazet ouz ar ber, avalou-douar fritet en amann Kemper?

Ha da eva gwin Aljeri pe chistr Breiz?

— Ya! ya! ya! eme Yann, mat a-walc'h eo evit va arc'hant.



3. — Ha Jakez a gasas da Yann meuziou, aozet eus ar



4. — Breman, eme Jakez, m'ho peus leine! mat, e i'ci

c'henta. Da echui lein e voe segaset frouez, fard gwini hag eur banne kafe: e c'hellit kredi Yann a lipe e vourrou. N'en deveze ket a leinou evelse bemdez, na zoken bet eil dervez.


15 lur d'in me.

— 15 lur? eme Yann, en eur denna eur pezh dek gwenneg eus e c'hodell n'em eus netra ken; lavaret em oa deoc'h rei d'in evit va arc'hant.

Ha Yann ha dao kuit o lezel paotr an ostaleri da gounnari ou'han war dreuzou e zor.

Renan Pleyber.

Ar pesketaer farsus



1. — Eur pesketaer a-raok mont da besketa a yeas, eun dervez, en eur stal vras a vezer da c'houlenn eun tamm lien pe eun tamm mezer rus da brena.



2. — An Itron a zegasas rolladou lien ha mezer da ziskouez d'ar pesketaer, met kaer hec devoa dispaka mar-c'hadourez, netra ne blije d'ar prener.



3. — Ha setu an Itron bet piz hag hi ha furcha kement toull o oa en he stal ha dispaka a bep seurt mezer hag a bep seurt bien dirak ar peske'aer: re rus-tan-glaou darn anezo ha re all rus-gwad pe rus-wenn; eur bern ken uhel hag eun den a oa anezo:

— Emichans, emezi, ez ay, da nebeuta, eur rollad a-bez gantan!



4. — Pa gave d'ar prener en devoa graet a-walc'h an heg ouz ar werzerez, e lavaras d'ezi:

— An tamm kenta dispaket eo ar gwella c'hoaz evit doare; trouc'hit 10 santimetrad d'in anezan da vont da baka gwesklevi!

— C'houi a zo eun tamm ma' a wesklev, ya, eme an Itron e kounnar, mont d'am lakat da zispaka kemend all a vare'hadourez evit prena ken rebeud all a dra!

André Prat.

Kanaouennou Bleun-Brug Brest

Prenit *Kanaouennou Bleun-Brug Brest*, eul leor nevez flamm savet gant an Aotrouned Mayet, Guillerm, Guillerm, Boucher, hag a zo e gwerz e Keriltud, 4, rue Algésiras, Brest.

20 real eo al leor p'he prener en ti ha 22 real p'her c'haser dre ar post d'ar prener.


Spered ar Vugale



— Mam-m-goz, gwir eo e vez kresket an traoù gant ho lunedou!

— Ya! Elisa!

— Mat! tennit ho lunedou neuze pa lakeoc'h amann war va bara.



Ar mestr-skol. — Pe hano ho peus?

Ar paotr bihan. — Gwennole Lirzin.

Ar mest-skol. — Penaos e vez skrivet an dra-ze.

Ar paotr bihan. — Gand eur bluenn, Aotrou!

DIVINADENNOU

Setu aman hanoù an unnek, — e lec'h dek, rak n'helled lakat kemm ebet etre an daou ziveza, — o deus gounezet prizioù divinadennoù tri miz kenta ar bloaz-man; kaset ez eus bet d'ezo, en deizioù tremen, peb a levr nevez flamm. *Miz Mari gant santez Tereza ar Mabig Jezuz*, skrivet gant an A. Gall, chaloni a enor hag embannet gant an A. Riou, 10 Plasenn Thiers, Montroulez.

1. Maria Bocher, Scignac : $5 + 5 + 5 = 15$.
2. Jean Kerouanton, Kelercun, Loc-Eguiner-Plouziry : $3 + 5 + 5 = 13$.
3. Mari Rosec, skolac'h Lesneven : $5 + 4 + 5 = 13$.
4. Louis Floc'h, Plomeur : $5 + 4 + 3 = 12$.
5. M. A. Moal, Kerfrevat, Tregarvan : $4 + 4 + 4 = 12$.
6. Suzanne Simon, gar Gwitevede : $3 + 4 + 4 = 11$.
7. Herri 'n Arvor, Meillar : $4 + 4 + 3 = 11$.
8. Therese Fave, Folgoat : $4 + 3 + 4 = 11$.
9. Therese Germaine Guezennec, Kerivoas, Kerlouan : $4 + 3 + 3 = 10$.
10. J. Marc'hadour, Gottorn, Cast : $4 + 3 + 2 = 9$.
11. Tanguy Creignou, Vourn, Cleder : $3 + 2 + 4 = 9$.

Divinadennou Miz Maë

I. — Petra dreuz spern ha drez ar c'hoad ha ne rog tamm bet he dillad?

Degaset gant Mari, Rosec, Lesneven.

II. — Petra nij heb eskell
Hag a gan o vervel?

Degaset gant Kadou ar Wern-Aon, Scrignac.

III. — An dud er bed-man zo xxxxx
D'en em zikour, d'en em xxxxx

Echuit gant daou c'her a bemp lizerenn ar c'houblad gwerzou-ze degaset gant A. M. Moal, Tregarvan.



IV. — Aze ez eus eur Feiz-ha-Breiz war an daol; e pelec'h ema al lenner?

Arabad degas ar respontchou ken na c'helloc'h degas respontchou tri miziad dioc'htu, da lavaret eo re ebrel, mae ha mezeven.



V. — Aze ez eus logod o fringal; harp eo ar c'haz outo koulskoude; E pelec'h ema?

Feiz ha Breiz

Ar vaouez a nerz-kalon

War zao eman araoek goulou-deiz; hep koll amzer-e krog el labour, ha ma n'he deus ket a-walc'h eus an deiz, e labouro eul lodenn eus an noz oc'h sklerijenn ar goulou.

Anaout a ra mat an dud a zo endro d'ezi, gouzout a ra petra a c'hellont ober ha merka a ra e labour da bep hini. An holl a zent outi hag a ra ar pezh a zo bet gourc'hemennet d'ezo. Urz a zo en he zi; pep tra en e blas, pep labour en e amzer.

Leun a garantez hag a vadelez, e kav tro da zikour an dud ezommek, digeri a ra he dourn d'ober aluzenn, hag ar pezh a zo gwelloc'h c'hoaz, da ene ar re all ive e ra vad dre he aliou fur hag he c'henteliou. Gouzout a ra lavaret ar c'homzou a ro fi-zians, frealzidigez d'an dud glac'haret ha poaniet.

Leun a habasketed, e laka ar peoc'h da ren endro d'ezi, ne gar ket an trouz, an tabut, pardoni a ra an ofansou. Pell diouti kement a zo eneb ar garantez; en he zi ne vez ket dispennet an nesa; dirazi an teodou fall ne gredont ket ober o labour divad.

Leun eo, dreist pep tra, a zoujans evit Doue, *mulier timens Deum*. Morse ne gomanso he dervez heb ar bedenn, hag alies c'hoaz, e doug an deiz, he c'hailon a zavo etrezeg an Nenv da ginnig da Zoue he c'harantez:

Pa zigouez an noz, debret koan, an holl d'an daoulin, da drugarekaat Doue. Doue eo ar Mestr

en ti, an holl o deus doujans evitan ; an holl a zo aketus d'e bedi... Da zul, al labour a eham. En deize, deiz an Aotrou Doue, an holl a gemer hent an iliz parrez ; eno e kanont meuleudi da Zoue hag e c'houlennont e vennoz war ar zizun a zo o tigeri...

En he zi ez a mat an traou, rak bennoz Doue a ziskenn warnan. He bugale, savet mat, o deus doujans evit o c'herent hag evit an dud all ive. He amzer a dremen eürus, rak an hini a ra e zever a lavar : « Pebez maouez ! Pebez tenzor ! » Muic'h a dalvoudegez he deus eget holl denzoriou ar bed, rak tenzoriou ar bed a c'hell beza kollet pe laeret ; ar vaouez fur, avat, n'heller ket tenna diganti he furnez.

Eun tenzor eo eviti hec'h-unan, rak dre he santelez hag he furnez e c'hounezo ar baradoz.

Eun tenzor eo evit he familh, evit he gwaz, evit he bugale, a zo bleinet ganti war an hent mat hag a zesk beza eürus er bed-man hag er bed all.

Eun tenzor eo evit he nesa : an dud fall zoken n'hellont lavaret netra en he eneb, hag alies e vezint, dre he skoueriou, troet da wellaat.

Eun tenzor eo evit an holl, eun tenzor ne vihana ket, kaer zo tenna anezan ; seulvui e c'houlennet diganti, seulvui e ro.

Eürus an ti a zo gouarnet gant eun hevelep maouez ! Eürus he gwaz, eürus he bugale, eürus ar re holl a zo endro d'ez !

E pelec'h, a c'houlenn ar Skritur Sakr, e vezo kavet ar vaouez-ze, ar vaouez a nerz-kalon ?

Araok donedigez J. K. eo bet kavet el lec'h m'oa doujans evit Doue, el lec'h ma veze sentet ous e lezenn, hag en Testamant koz ez eus bet meur a hini anezo.

Met kalz stankoc'h int abaoue m'eo deuet J. K.

war an douar da brezeg e Aviel, selaouit. Ar vaouez a gemer skouer war Hor Mestr, Hor Zalver Jezus Krist, a c'hoanta, e pep tra, plijout d'ezan, ar vaouez a gemer skouer war Mamm Jezus, ar Werc'hez Glorius Vari, hounnez a vezo ar vaouez fur, santel, kalonek, am eus komzet anezi.

Lennet hoc'h eus e Buhez ar Zent petra o deus graet evit o Doue merc'hed a bep oad hag a bep stad. Lennet hoc'h eus petra a c'hell mammou kristen. Ha mammou ar zent ? Peadra a vije d'ober meur a brezegenn evit o meuli. An dud o deus graet vad d'an nesa, enor d'an Iliz, pa c'houlennet diganto penaos int bet hentchet ha troet da garet Doue, a lavar atao : « Gant va mamm ! Ah ! peger santel oa ! »

Gwelit santez Monika, mamm Aogustin ! Chomet intanvez hag hi c'hoaz yaouank flamm, e savas he mab e doujans Doue, o rei d'ezan ar gwella kenteliou ha skoueriou. Siouaz ! Aogustin a ankounac'heas kenteliou e vamm, a droas kein da Zoue, a vevas eur vuhez diroll. E vamm ne fall-galono ket, kenderc'hel a raio da lenva, da bedi, ha dre he fedennou e tenno Aogustin diwar an hent fall, hag e roio d'an Iliz eur beleg, eun eskob santel, eun Doktor brudet dre ar bed holl.

Gwelit Blanch a Gastilh, mamm sant Louiz, roue Frans. « Va mab, emezi, da garet a ran, her gouzout a rez. Mat, gwelloc'h e vije ganen da welet maro eget stlabezet gant eur pec'hed marvel hepken. »

Ha breman, e pelec'h ne gaver ket ar vaouez a nerz-kalon ?

— Ne yez ket kavet etouez ar merc'hed yaouank-ze ne zonzont nemet e dilhad kaer, nemet e plijadureziou ar bed. O c'halon a zo pell diouz Doue, hag abalamour da-ze a zo goulllo ; ne gaver enno netra

vat. Na c'houlennit ket diganto en em zieza, en em ankounac'haat evit ober vad d'ar re all. N'int ket gouest. A-walc'h o deus d'ober o sonjal enno o-unan.

Ne gavoc'h ket ar vaouez a merz-kalon etouez ar mammou-ze ha n'o deus tamm santelez, ne glas-kont nemet beva en o aes, ne reont van evit gwel-let o gwaz, o bugale o tizenti ouz lezennou Doue hag an Iliz.

N'he c'havoc'h ket kennebeut en tiez-ze n'eus enno urz ebet, el lec'h m'eo diskempenn an traou, lous ; n'eus pred ebet d'an eur ; ar vugale a zo lezet da zevel evel ma karont, ne glevont morse kentel vat ebet ; ar gwaz a vez mezo hep gwech ma kav tro. Nann, eno ne gavoc'h ket ar vaouez a nerz kalon.

He c'haout a reoc'h, avat, el lec'h ma z'eus urz vat ha peoc'h. Ne lavaran ket : el lec'h ma z'eus pinvidigez. N'eo ket ret kaout pinvidigez evit beza eürus. Eus vaouez a benn, daoust ma n'eo ket pinvidik, a oar lakaat en he zi urz ha peoc'h. An traou a zo kempenn, net ; ar vugale a zo gwisket dereat, hag ar gwaz en deus plijadur o tont d'ar gêr, hag a en em blij e kreiz e familh.

He c'haout a reoc'h etouez ar merc'hed-ze a dro kein da blijadureziou fall ar bed, a gar al labour, ar bedenn, a oar n'emaint war an douar-man nemet evit anaout, karet, servicha Doue ha gounit ar baradoz.

Hevelep merc'hed a zo bet en hor parrez, ha stank c'hoaz, abaoe m'eo deuet aman sklerijenn an Aviel. Ra bado o gouenn, ra vo'e pep ti merc'hed fur, merc'hed a benn, merc'hed santel, da rei endro d'ezo skouer an holl vertuziou. Evelse-bezet-graet.

Y. U.



Sant Peran⁽¹⁾ ha Sant Keran

Sant Peran ha sant Keran, war a lavar darn, a zo daou hano dishenvel a roer d'an hevelep sant; ar c'henta, Peran, eo an hano brezonek hag an eil, Keran eo an hano iverzonk; kement-se a c'hellfe beza gwir rak eur bern hanoioù hag a zo o lizerennou kenta *p* e brezoneg, evel *Pask ha Penn* a vez o lizerenn genta *k* e iverzoneg hag a deu eta da veza *Kask ha Kenn*.

War skeuden ar bajenn-ma e weler, d'an nec'h, iliz Perran-Uthno, e Kerne-Veur ha d'an traon, kroaz sant Perran e Perran-Zabulo ; ar groaz-se a zo koz mil bloaz hag ouspenn.

(1) Pennad kenta ar skrid-man a zo troet eus levr saosnek ah A. Doble: *Saint Perran, Saint Keverne and Saint Kerrien*.

I. — SANT KERAN SAIGIR

Sant Keran, lezhanvet ar c'henta ganet eus holl zent Iwerzon, a deuas er bed, wardro ar bloaz 352; d'e dregont vloaz ez eaz da Rom el lec'h ma voe badezet; chom a eure eno ugent vloaz da zeski ar Skritur Zantel ha lezennou an Iliz. Sakret e voe eskob ha kaset da brezeg ar feiz da *dud e vro*.

Kloc'h sant Padraig

P'edo o tizrei eus a Rom e kavas war e hent, en Itali, Padraig, an hini a dlée beza divezatoc'h arc'heskob Iwerzon.

Laouen bras e voent o veza gelllet en em gaout an eil gand egile, keit all diouz o bro. Padraig a lavaras da Geran : « Dizro em raok da Iwerzon ha kea d'eur feunteun hag a zo e kreiz an enezenn hag a hanver Fuaran ha sav eno eur manati; eno e vezi enoret divezatoc'h hag a c'hano eo e savo da gorf eus a varo da veo ! »

Sant Keran a respontas : « Me ne guezan ket e pelec'h em a feunteun-ze ! »

: « Bez dinec'h, breur karet, eme Badraig, n'en em golli ket; kerz gant da hent e peoc'h; an Aotrou Doue a vezo ganez. Kemer ar c'hloc'h-man, chom a ray didrous ken a zigouezi tost d'ar feunteun e komzan anezi d'it; p'en em gavi eno e sono skiltr ha laouen ; abenn tregont vloaz aman me zistroio ivez da Iwerzon ! »

An daou zen Doue e en em vriatas; sant Kerean a digas da Iwerzon ha sant Padraig a ziskennas da Rom.

Ar pezh en devoa lavaret Padraig a zegouezas ; p'en em gavas Keran e Fuaran, e gloc'h a en em lakeas da zeni. Keran a azezas e disheol eur wezenn vras ; eur penmoc'h gouez a oa o chom ivez dindañni ; o welout ar zant al loen a dec'has gand e spout. Met an Aotrou Doue hen donveas hag e tizroas da gaout an eskob santel evel eur mevel da gaout e vestr ha setu penaos e teuas eur penmoc'h gouez da veza kenta diskib hag evel pa lavarfen kenta manac'h sant Keran; en em lakat a eure dioc'htu da derri skourrou gwez gand e zent ha da ziframma eus

an douar, gand e fri, peedra a-walc'h da ober mogerion ha toenn peniti e vestr ; a-nebeudou goude e teuas, eus ar gouezeri, loened all da veva e serr ar zant, dreist holl eul louarn, eur broc'h hag eur bleiz ; chom a raent en e gichen, heb aoun ebet ha senti a raent outan evel menec'h ouz o abad.

Louarn sant Keran

Eun dervez, koulskoude, al louarn hag a oa, war e veno, finnoc'h eged ar re all, skuiz o veva e serr eur manac'h, a laeras boutou-ler sant Keran hag a vennas mont d'o debri, e-unan, en e doull distro, e goueled ar c'hoad. Pa glevas an Tad Keran ar pezh a oa en em gavet e kasas ar broc'h da gerc'hat al louarn d'ar gêr; ar broc'h a anaveze holl hentchoù hag holl riboulou ar c'hoad ha ne voe ket pell evit koueza war e vreur al louarn a oa o staga da zebri boutou an Tad. Tapa a eure krog en e skouarn hag her chacha a eure, en dro d'ar manati da ober pinienn. Al louarn pa n'oa ket evid enebi a zistroas gand ar broc'h da gaout sant Keran d'e beniti, wardro teir eur; an den santel a lavaras d'al louarn : « Perak out aet da ober droug evelse, va breur? Eur manac'h ne ra ket a draou evelse ; daoust ha ne ranner ket etrezoc'h an hevelep dour hag an hevelep boued? Ha ma rankes kaout kig, evel ma leveres, te 'gav d'it ne c'hell ket an Aotrou Doue lakat kroc'hen ar gwez-se da drei e kig evidout? »

Al louarn a c'houlennas pardon a yunas hag a jomas hep debri ken na roas ar zant aotre d'ezan d'hen ober. O welout ar c'halloud en devoa sant Keran war al loened e teuas diskibien a vagadou da veva en e zerr ; e vanati a voe brudet, hep dale, e pevar c'horn ar vro ; al loened a jomas da veva ennan betek o maro ; a-nebeudou, skle-rijenn ar feiz a zavas war Iwerzon.

Marc'h sant Padraig

Sant Padraig evel m'en devoa lavaret da Geran a zistroas da Iwerzon hag a c'hounezas ar roue Aengus d'ar feiz kristen. Eun den, mab Ere'h a zigouezas gantan laza, dre zarvoud, marc'h sant Padraig; Aengus p'her c'hle-

vas, hen lakas er bac'h; Keran a gemeras truez ouz ar paourkaez hag a roas d'ar roue aour hag arc'hant evit ma lesje ar c'haez den-se da vale. An aour hag an arc'hant, avat, a yeas kercent da netra; ar roue o welet kement-se a yeas e kounnar ouz Keran; koll a eure ar gweled hag e kouezas d'an douar, liou ar maro warnan; Keran a roas d'ezan ar gweled hag ar yec'hed.

Ar seiz telenner

Ar roue Aengus en devoa seiz telenner a zone dirazan hag a gané meuleudi Iwerzoniz kalonek an amzer wechall; an delennourien-ze, a voe lazet, eun dervez, p'edont o-treuzi Muscraige Tire; o-enebourien a stlapas o c'horfou: en eul lenn hag a lakeas o zelnennou a-istribilh ouz ar gwez: a oa war lez ar ster; ar roue n'oa ket evit gouzout petra a oa degouezet ganto, met Keran a lavaras d'ezan; ar zant a yeas d'al lenn, a yunas eun dervez hag al lenn a deuas da veza sec'h; an delennourien hag a oa bet eur miz, din-dan an dour, a deuas buhez enno, a zastumas o zelnennou: hag a ganas soniou dudius d'ar bobl, dirak ar roue hag an eskob. Al lenn a zo chomet sec'h abaoe, met hanvet eo bepred *Loch na gCruitireadh*, da lavaret eo Loc'h an delennourien (1).

Ar seiz beoc'h rus penn-gwenn

Eur zant Keran all a oa c'hoaz neuze e Iwerzon hag a oa abad e Cluain Meic Nois; prizoniet e oa bet gand ar roue Furbytheus hag heman n'en devoa c'hoant ebet d'elezel da vont en e frankiz nemet rei a roje d'ezan seiz beoc'h rus penn-gwenn.

An abad a roas e c'her e tegasje d'ar roue, hervez e c'houlenn, hag ez eas da gaout Keran da Saighir; an daou zant Brendan a en em gavas ivez dres eno er c'houlz-se; Keran ha n'en devoa netra da rei d'ezo da zebri nemed eun tamm kig moc'h hen troas e pesked, legumach ha mel hag

(1) Ar ger loc'h hag a zo anavezet e Iwerzon koulz hag e Breiz-Izel, eo ar ger koz a implijed gwechall kentoc'h eged ar ger lenn.

a roas d'ezo eur pred eus ar gwella. Eur manac'h ha ne gave ket mat eun dra hennak aozet gand kig moc'h a raio fin fall, war a leverer. Ar pevar zant a reas eul leo asamblez ha rei a rejont o bennoz an eil d'egile; raktal e kavjont seiz beoc'h eus al liou a oa c'hoant da gaout; sant Keran Cluain meic Nois o c'hasas d'ar roue a roas d'ezan adarre e frankiz; ar zaout, avat, dem-goude, a yeas da netra hag ar roue a welas hag a anzavas e bec'hed.

Tan nevez Pask

Eur paotr fallakr eus a Cluain Meic Nois, hanvet Cricchidh Cluana a lazas tan benniget ar zul Fask e Saigir. Keran a lavaras dioc'htu e kouesje malloz Doue war ar paotr yaouank-se hag, e gwirionez, antronoz e voe lazet gand ar bleizi; sant Keran Cluain Meic Nois a glevas ar c'helou hag a deuas da gaout sant Keran Saigir; degemeret e voe en eur gampr yen-skourr rak ne oa ket a dan er manati; sant Keran Saigir, dre druez ouz e genvreur, a bedas; eur voul-dan a gouezas eus an nenv; ar zant he dougas e pleg e zae d'ar gampr m'edo enni abad Cluain Meic Nois; dem goude e reas d'ar paotr yaouank distrei eus a varo da veo hag henman a zistroas d'ar gêr, gand e vestr.

Teir bedenn sant Keran

Ar zant, deuet da veza koz bras, a oa o pedi eur pennad a-raok e varo, p'en em ziskouezas dirazan eun ael eus an nenv; Keran a c'houlennas tri dra digant Doue, dirak an ael hag henman a lavaras d'ezan e vije selaouet mat e bedennou:

1. — Ma ne jomo en ifern, goude ar varn ziveza hini eus ar re a vezo bet sebeliet o c'horfou tost d'e gador.
2. — Ma vezo pinvidik war an douar-man hag eurus er baradoz kement hini a viro e c'houl.
3. — Ma vezo tud Ossory hag o deus e gemeret da batron trec'h atao d'o enebourien pa ne raint brezel nemed war o douar o-unan hag evid en em zifenn.

Maro sant Keran

Sant Keran benniget ne zongas nemet dilhad garo ; ne zebras ket a gig ha ne danvas morse eun evach hag a vije gouest d'e vezvi ; kousket a rae nebeud ha dizamant oa ouz e gorf..

Beleget en devoa eleiz a veleien ha sakret eleiz a eskibien ; gounit a cure d'ar feiz pobl Ossory a-bez ha zoken karteriadou all a dud.

Mervel a eure dre gorzni hag a-raok tremen e c'halvas e dud, e prezegas d'ezo, o bennigas ha goude beza resevet eur wech all c'hoaz korf ar C'hrist, e ene a bignas da vro ar zent d'ar 5 a viz meurz : tregout eskob santel, konsakret gantan, a varvas ivez en hevelep nozvez-se.


II. — SANT PERAN

An A. Loth gouizieka den marteze a zo war ar yezou keltiek a gred eo sant Peran eur zant dishenvel diouz sant Keran.

Sant Peran a zo enoret kals e Kerne-Veur, e Bro Gembre hag e Breiz-Izel ha diaes eo kredi en divije gellet sant Keran Saigir, redek en e amzer, kement all a vroïou.

Sant Keran e brevier Leon moulet er bloaz 1516 koulz hag e hini Treger skrivet gand an dourn er XV^{me} kantved en deus eun ofis a nao gentel.

Sant Peran a dle beza ginidik eus a Kerne-Veur hag er vro-ze, da gredi eo, e tremenas e vuhez penn-da benn. E Perran-Zabulo e chom c'hoaz en o sav al lodenn vrasa eus mogerïou mein eun iliz vihan hag a rank beza bet savet gant menec'h ar manati bet diazezet eno gant sant Peran e unan hag a zoug e hano (Lampiran), hag a vir e relegou ; ar mogerïou-ze e zo bet dizoloet er bloaz 1910. Patron eo da deir barrez e Kerne-Veur : Perran-Zabulo, Perran Uthno ha Perran Arwothal.



Iliz Perran Zabulo e Kerne Veur

Sant Peran e Bro-Gembre

Sant Peran a oa enoret ivez e bro Gembre; eur chapel en devoa e Caerdez (Cardiff) hag ar roue Herri II a glevas an oferenn enni eur zulvez eus ar bloaz 1172. Glaouaerien ar vro o devoa doujans evitan. Eun dervez e reas eun oaled gant mein rodell dastumet gantan ; er wech kenta ma reas tan warni goudeze da boazat e bred e voe souezet o welet e rede eus darn anezo eur metal gwenn evel arc'hant; kouezet e oa war eun toullad mein hag e oa staen enno; deski a eure evelse d'an dud an doare da gaout eur metal hag en devoa talvoudegez.

Sant Peran e Breiz-Izel

War lez hent Kastell-Paol da Lesneven, eur wech m'ho peus treuzet dour ar C'hilleg, war bont nevez Kergiduff, — ar pont koz el lec'h ma stourmas Leoniz

ouz soudarded ar jeneral Canclaux, d'ar 24 a viz meur 1792, a zo izeloc'h — ha pignet an hanter eus ar c'hrec'h, e welit, en tu dehou, orator sant Peran. En eul lokig, toullet en eur voger, ha c'houec'h derez da bignat betek ennan, e kaver eur zant maen, kuzellet gand eul labourer ha ne ouie ket kaer e vicher

Diouz eun tu d'an orator ez eus eur peul-vaen a c'hell beza bet oc'h ober kef gwechall ha diouz an tu all ez eus eur maen plat, toullet, eun tamm, en e greiz; sant Peran, war a leverer, a vevas dre eno hag ar maen-ze a zo bet uzet gant pennoù e zaoulin rak warnan eo e lavare e bedennou ha setu aze perak e vez astennet warnan breman ar vugale glanv evit tenna warno bennoz ar zant.

Sant Peran eo patron iliz Trezilide ha m'oarvat en deus d'edronet eur zant all kosoc'h hag a zo chomet e hano d'istummet marteze, e hano ar barrez. Heñ eo ivez patron Sant Peran, e kichen Penpont, e eskopti Roazon, chapel Loperan, e Sant Malo an Teir Feunteun, e kichen Ploermel hag iliz koz Porz-Louis, e kichen an Oriant hag a oa hanvet gwechall Loepezran; enoret eo bet ivez e Pledran, e Glomel, e Paul, e kichen Karaez hag e Roscanvel.

Sant Peran, hervez al leoriou koz a voe eskob e Kerne-Veur ha dilhad eskob a zo gantan e iliz Trezilide, met ar skeudenn-ze n'eo ket koz; an hini a zo en e orator hen diskouez d'eomp gwisket e manac'h; ar skeudenn-ze, evel hon eus lavaret, a zo graet fall a-walc'h hag ouz he gwelet meur a hini o tremen a c'hoarz diwar goust ar zant, met ne zaleont ket da veza kastizet.


Eun dervez, eun den eus a Gastell-Paol ha ne grede, war e veno, nag e Doue nag e Diaoul, a dremene, war e varc'h houarn, dirak an orator; pa welas ar zant, en e log, e lavaras d'ezan eur gomz dizoare; n'oa ket aet kant metr pelloc'h ma oa diskaret, evel gand eun



Orator Sant Peran, e Trezilide

dourn ha ne wele ket ha stlapet a-fardigleo d'an douar. Blonset e oa e gorf outan pa zavas ac'hano: « Biken ken, cmezan, goudeze, ne vezin tapet o vont da ober goap eus eur zant! »

Tud eus a Zanteg a glaskas, eun de vez, c'hoari eun dro gamm da barrisioniz an Drev: samma a rejont ar zant en o c'harr, met flemmet brao e voent; diskenn a



Iliz Trezilide e Gorre-Leon

rejont ar c'hrec'h, met goudeze, kaer o devoa skei war o c'hezeg ar c'harr ne gerze tamm war a-raok; kompren a rejont raktal ne felle ket d'ar zant mont eus e barrez; hen distrei a rejont d'e orator ha paea a rejont e liva a-nevez.

Eur wech all e oa eun toullad gwazed o tremen ebiou an orator gand eur c'harrad keuneud; unan ben-

nak anezo a c'hoarzas diwar goust ar zant ; kerkent, hep digarez ebet, ar c'hezeg a dec'has spontet diwar an hent hag a droc'hollias ar c'harrad keuneud e foz an hent bras; e c'hellit kredi ar baotred n'o devoa ket kals a c'hoant c'hoarzin ken goudeze.

Eui liver bennak eus a Gastell-Paol, o tremen dre an Drev a reas goap ivez eus ar zant dre ma oa re vras ha dispourbellet e zaoulagad gantan. Kerkent e krogas ar boan zaoulagad ennan ha n'eo ket hepken ar gweled eo a gollas met ivez ar c'homz ; strafuilhet holl, e ti zroas d'an orator da c'houlenn pardon ouz ar zant a gemeras truez outan hag a roas d'ezan en dro ar gweled hag ar c'homz. Al liver, dre anaoudegez vat, a roas e c'her da liva ar zant penn-kil-ha-troad, goudeze, hep bloaz, a-raok e bardon ha derc'hel a eure d'hen ober betek e varo.

Pardon sant Peran a vez graet, hep bloaz, da c'houel ar Yaou-Bask.

G. P.

Periğ hağ Azilis

Eun dervez, e teuas Oliv d'ar Gerhuela da welet he c'hamañadez, ha goude beza huanadet pemp pe c'houec'h gwech e lavaras :

« N'ouzout ket Azilis, eman ar pardon ganeomp disul? Dont a ri d'hor gwelet, n'eo ket 'ta? O, eur pez tud a deuy du-man, rak tost d'ar vourc'h emaoamp, hag eur mareat anaoudegez hon eus; ha n'ouzout ket pe seurt menoz a zo em fenn? me garfe e teufe Marianna ar Stang! mamm Moris... ma ne deu ket hen! Ro sikour d'in eta Azilis! ne weles ket pegen enkrezet oun-me? »

— « Penaoz e c'hellan da zikour, Oliv? Mont da juben? N'ouzoun ket o c'hedal petra emaoout diganen! eme Azilis en eur mouse'hoarz.

— « Arabad eo d'id ober goap ouzin, eme Oliv. Te a zo eur vaouez a benn, an holl hel lavar, ha me a zo brudet da veza eur penn-avel: met fellout e ra d'in chench, rak abaoe da friko em eus taolet pled war meur a dra; ar botred yaouank fur, her gwelet a ran, ne zimezont ket gant merc'hed dibreder... ha Moris ne zello morse ouzin! Met, outan em eus joà, koulskoude, hag outar hepken! »

— « Mignounez ker? bez déréat ha sioul, aketus d'az teveriou, aketus da bedi, ha bennos Doue a vezo ganez, n'eus fors e pe seurt stad e vezi; me oar ez out eun tamik dibenn da welet, met n'az peus ket eur begad fallagriez, ha da galon a zo mat; lavar eta petra c'hoantaez? »

— « Ma rofes eun ali bennak d'in, d'am hentcha war an hent mat... ha da zeski d'in aoza boued evel ma rest Petra lakafes da lein disul, ma vijes em lec'h, evit digemerout mat ar gerent hag ar vignoned? »

— « Ober a rafen gand ar pez a zo em c'hêr, muia ma c'helfen; eur c'hillog kamm az peuz? laz hennez; soubenn vat a ri ganthan ha da c'houde hel laki da beur-boaza en amann; eur guchennik krampouez war-lerc'h, pe eur gouign, pa eun tamm fars-fourn hag ez pezo aozet eur pred dispar.

— « Eul lapin a zo ive, bet lazet dec'h gand ar c'hi; klevet em eus traou gant va mamm diwar e benn zoken, rak me am boa lezet digor an or war e doull p'oañ bet o kas boued d'ezan.

— « Hennez, al lapin-se ne jomo ket mat betek disul, potrez kaez! kempenn hen abenn warc'hoas, p'e gwir eman arru da baeroun du-ze, ha me a zo vont da verka d'it war ar paper, an doare d'hen aoza. »

Ar wreg yaouank a lakeas he fodad patatez war an tan hag e krogas en he fluenn da renta servich da Oliv: Lakat war an tan eun tamm amann kement hag eur graonenn, drailha diou chalotezenn ebarz, lakat eul loiad bleud, hag o lezel da veleni, met nann da rouza! goude, neuze, e lakan eur banne soubenn, eun hanter-werened gwin gweun, hag e taoler an tammou lapin ebarz da boaza.

Doare all

Lakat an tammou kig lapin, pe an tammou kig yar war ar billig en eur banne heol, lakat pebr hag hollen, eun tamm kignenn, ognon draihbet ha derc'hel eun tan sklêr; pa vezo liou brao gand ar c'hig, e drei en tu-all araok e lanmet eus al lipig; lakat, goude, eun dournad bleud, eur banne soubenn, pa vez, pe eur banne dour, eur banne gwin ardant, trei eur pennad gand al loa war an tan ha sila al lipig pa vezo poaz...

Oliv ne lezas ket amzer ganti da echui: « Mall eo d'in mont d'ar gêr, emezi, warc'hoas e tetin adarre, en eur redadenn, hag e peurverki d'in. »

Hag ar plac'h yaouank a ieas war-eun d'ar gêr, kel laouen ha tra.

Antronoz, pa zizroas, oa tenval he fenn:

— « Fazia peus graet war ar paper, Azilis! graet em eus en doare m'oa merket, ha n'oun ket en em gavet! An amann a oa feuzet war an tan araok m'am oa gellet kregi er chalotez hag ar re-ze a zo devet ive! »

— « Ginaouegez ma 'z out, eme Azilis en eur c'hoarzin, taolet az peus da amann war an tan? war ar « four-neau »? heb e lakat en eur gaoter pe en eur plad? »

— « Ya avat! evel m'oa merket em eus graet, a lavaran d'id!

— « An dra-ma a zo eur gentel d'id, Oliv! ma kartes sonjal ervad arak ober, ne vijes ket barnet penn-skauv evel brema! N'eo ket da d'in, emichans, skriva d'id aman an doare da grampoueza? en hor bro, an holl e oar ober krampouez, o leda war ar billig, o larda... hag o Jibri!

E Kerne e reer krampouez tano, e Leon krampouez teo, e Treger krampouez dous ha re zizous; e pep korn eus Breiz e reer krampouez mat, ha tener, a deuz er ginou hag a ra vad d'an holl. Ar re o deus c'hoant d'c c'haout teneroc'h a lakaio laez livris er c'haot; ar re n'o deus ket aez da lakat kals a viou a lakay neubeud, pe a lakay eun drederenn bleud kerc'h kemmesket gand an diou drederenn a vleud gwiniz, ha me a lavar d'it, an dra-ze a zo eur hanvez d'ar staon! ar re figusa a rank lipat o bizied!

— « Kleo 'ta Azilis, laka eur gouign d'in war ar paer, ma 'z in ac'halen, mar plij.

— « *Setu aman : Kouign ar Vadozen.*

C'houec'h vi, ha wardro eun hanter-lur sukr da gaout o fouez; eun hanter neubeutoc'h a amann hag a vleud; teuzi an amann, terri ar viou da zispartia ar gwenn diouz ar melen, stlepel ar gwenn kuit ha kemmeska an holl draou asamblez. Ar bleud a zo da lakat da ziveza. Lakat er fourn ha teurel evez.

— « Kea d'ar gêr d'an daou-lamm, eme Azilis, ha disul da noz e liviri d'in ha mat eo bet kavet da bred gant Moris hag all.

N'eo ket brao d'id fall-galouni; ar fisians da veza eurus en amzer da zont a zo o tere'hel an dud war o zreid. Ma 'z eo youl Doue e iafes gant hennez ez i; ma n'eo ket, e kavi da hent en eun tu bennak all; n'az peuz ket a geuz da gaout ma vezes fur ha direbech.

Oliv a boanias da heulia kuzulioù he amezeges; he faeron a gavas mat he c'heusteuren; hag a gavas ive he devoa prenet e filhorez eun tamm skiant: siouloc'h oa, aketusoc'h d'he labour, muioc'h war evez da zikour he mamm; ne vijen ket sonezet o klevet en deus he meulet dirak Marianna ar Stang, a zo kinitery dezan, rak bez e oan bet ive e ti Oliv d'ar zul war-lerc'h, ha... evidon da veza koz va daoulagad a zo lemm! Gwelet em eus meur

a dra, ma n'em eus ket komzet kals; gwelet em eus Oliv, rus he fenn gand ar fô a oa en ti... met ive gand ar garantez a oa en he c'halon; he gwelet em eus lent dirag ar potr yaouank a zelle outi beb an amzer, he gwelet em oa o pedi c'houek en iliz goude an ofereñ vintin; gwelet em eus mamm Moris o sellet ous an arrebeuri a oa en ti; an diou vamm a zo aet asambles d'ar gousperou, Moris em eus gwelet neuze o tostaat ous Oliv; eur gomz en deus lavaret hag en deus he laket da jench liou; ar c'homzou o deus galloud!...

Han! daoust ha fall eo va daoulagad?


TINTIN ANNA.

AN ARAB LEZIREK

Bez e oa gwechall, e kêr Damas, er Syri, eun Arab hag e teuas d'e welet unan eus e gerent a oa o chom war ar maez; daoust ma ne oa ket pinvidik e reas d'ezan gwella ma c'hellas; egile a gavas an ti diouz e zoar : chom a eure eur miz ha daou ha ne oa hano ebet ken gantan da zistrei d'ar gêr.

Epad an deiz e chome gourvezet dindan eur wezenn fiez a oa dirak an ti ha dre ma troe an heol e troe e-unan da glask an disheol; a-hent-all avat ne rae ket eur seurt gand e bemp biz. An Arab evelato, daoust pegen dizoare e oa e ni n'en em glemmas ket rak er Sav-Heol e oar mat dreist da zegemeret an dud.

Eun dervez m'edo gourvezet adarre ker brao ha tra ar paotr bras dindan ar we-



Eur c'horn eus kêr Damas

zenn fiez e gar a lavaras d'ezan :

— « Ahmed, kerz 'ta d'ar marc'had da brena kig, gand ar pez arc'hant-se evit hon lein. »

— : O! Daoud, kerz da-unan, ma kères; me a zo brao aman!

— : Mat! chom 'ta; epad ma rin va zro gra tan da boazat ar c'hig.

— : N'es ket da c'houlenn kement-se diganen, Daoud, re vrac emañ aman evit mont ac'han.

Daoud a yeas; pa deuas en dro, eun hanter eur goude, gand eun tamm kig maout en e zourn, ar c'hanfart a oa atao o tisheolia dindan e wezenn :

— Mat, Ahmed, p'eo gwir ne 'z peus ket c'houezet an tan, kerz da gerc'hat eur banne dour d'in epad m'her grin.

— : Asa! Daoud, te zo eur bourreo! Va lez eta en habaskter aman p'eo gwir eo klouar an amzer ha pa deu kement a c'houez vat diouz ar gwez roz evel ma teu.

Daoud a c'houezas an tan, a yeas da gerc'hat dour, hag a lakas an tamm kig da boazat ha goudeze ez eas da gaout e baotr yaouank.

— : Ahmed, deus da renka an daol breman endra ma taolin-me evez ouz an tan.

— : N'out nemed eun torr-penn, Daoud; ro peoc'h d'in en hano Doue! Graet ez peus kement a oa da ober. Evidon-me n'em eus ket a nerz da zével ac'han ker brao all ha me'n em gavan aman.

Daoud a lakas ar plajou, a drouc'has bara hag a zigasas ar c'hig maout war an daol :

— A! 'ta! Ahmed? prest eo lein; met n'eo ket da lavaret e teufes d'hen debri p'eo gwir ec'h en em gaves ker mat el lec'h m'emaout.

— : Selaou aman ganen Daoud; keuz am eus da veza chomet heb ober da lavarou ouzit, ha laket em oa em spered e rajen, war an taol, kenta tra a c'houlennjes ouzia : setu ma savan ac'han dioc'htu evit diskouez d'it n'oun ket kel lezirek ha ma vefes gouest da gredi. Ha

p'eo gwir e leveres d'in mont da zebri, ez an da zebri evid ober plijadur d'it. Emichans, evelse, ne c'helli ket lavaret ez oun eun-den digar ha ne ran nemet va fenn va-unan.

Hag e tebras e lein ha digoroc'h eget biskoaz e oa e skrin.

LES COSTUMES BRETONS MODERNES

gilets, pullovers, vestes, ensembles pour garçonnets, dames, fillette

TRICOTÉS EN LAINE DE BRETAGNE brodés soie (motifs celtiques)

Créés et déposés par la Maison

CHOLEAU, DE VITRÉ

SONT EN VENTE A :

QUIMPER, chez LE BOZEC, 10, Avenue de la Gare * RENNES, "TI BREIZ", 4, rue Hoche

S'ADRESSER AUSSI A : BREST, Mademoiselle CRÉAC'H, 93, rue de Siam

CHATEAULIN, café RIOU, 13, Grand'rue, le pre- * PONT-CROIX, restaurant POUPON, le troisième jeudi du mois.

Dépositaires demandés en chaque ville - GROS : CHOLEAU, VITRE (I.-et-V.)

l'éco

délivre

des


TIMBRES PRIMES SUR TOUT

donc, y compris Sucres, Pétrole, Apéritifs
et Liqueurs de Marque, Beurre, Œufs,
Fromages, Légumes, Fruits, etc., etc...

sur tout.

N'euz ket 'giz barz Bannaleg

SOLO.




N'euz ket giz barz Ban - na - lec, D'ho yec-hed, ma



mi - gnon! N'euz ket giz barz Ban - na - leg 'Vit




b: - va drant ha gè, N'euz ket giz barz Ban - na - leg,




D'ho ye - c'hed, ma mi - gnon! N'euz ket giz barz Ban -

SOLO.



na - leg Vit be - va drant ha gè, 'Vit be - va drant ha

CHŒUR.




gè, gè, gè, 'Vit be - va drant ha gè, 'Vit be - va drant ha

SOLO.




gè, gè, gè, 'Vit be - va drant ha gè N'euz ket giz barz Ban -

CHŒUR.



na - leg, D'ho ye - c'hed, ma mi - gnon, N'euz



ket giz barz Ban - na - leg, D'ho ye - c'hed, ma mi - gnon.

I

N'eus ket ' giz ' barz Bannaleg
 D'ho yec'hed, ma mignon.
 N'eus ket ' giz ' barz Bannaleg
 'Vit beva drant ha gê,
 'Vit beva drant ha gê, gê, gê,
 'Vit beva drant ha gê.

II

Disul, kog Loj - C'houildero,
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 Disul, kog Loj - C'houildero,
 Oa koueet ' barz Pont-Torret,
 Oa koueet ' barz Pont-Torret, ret, ret,
 Oa koueet ' barz Pont-Torret.

III

Meo oa gand ' r c'hovad souchenn,
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 Meo oa gand ' r c'hovad souchenn,
 E zilhad 'n eus kollet,
 E zilhad 'n eus kollet, net, net,
 E zilhad 'n eus kollet.

IV

Merc'hed Niyn, war o c'hoefou,
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 Merc'hed Niyn, war o c'hoefou,
 Lako e glipenn ru,
 Lako e glipenn ru, ru, ru,
 Lako e glipenn ru,

V

E lost war dok eur paotr koz,
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 E lost war dok eur paotr koz,

Da sponta ar brined,
 Da sponta ar brined, ned, ned,
 Da sponta ar brined,

VI

Mamm goz gand e ziouaskell,
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 Mamm goz gand e ziouaskell,
 A skubo ar c'horn-toull,
 A skubo ar c'horn-toull toull, toull,
 A skubo ar c'horn-toull,

VII

Ar plunv vo vit va faotrig,
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 Ar plunv vo vit va faotrig,
 Penn-wele ' barz toutou,
 Penn-wele barz toutou, tou, tou,
 Penn-wele ' barz toutou,

VIII

Pa wel ar yer o c'hoarzin
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 Pa wel ar yer o c'hoarzin
 Kog lamm ris 'barz pod-fer,
 Kog lamm ris 'barz pod-fer, fer, fer,
 Kog lamm ris 'barz pod-fer,

IX

'R vatez a lar d'ar mevel
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 'R vatez a lar d'ar mevel
 Koueet ar c'hog 'barz 'r zoubenn,
 Koueet ar c'hog 'barz 'r zoubenn, benn, benn,
 Koueet ar c'hog 'barz 'r zoubenn.

X

'R mevel a lar d'ar vatez
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 'R mevel a lar d'ar vatez
 Gantan greomp fest dimi,
 Gantan greomp fest dimi, mi, mi,
 Gantan greomp fest dimi,

XI

Va Mestr, d'ar fest ni yelo
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 Va Mestr, d'ar fest ni yelo
 Benn 'kano ar goukou,
 Benn 'kano ar goukou, kou, kou,
 Benn 'kano ar goukou.


XII

Per ' diskenn d'eomp eur bannac'h
 D'ho yec'hed, ma mignon,
 Per ' diskenn d'eomp eur bannac'h
 Deus va gwella chistr koz,
 Deus va gwella chistr koz, koz, koz,
 Deus va gwella chistr koz.

Gerioù diaes evid ar re ne anavezont ket mat ar brezoneg

- III. — *Souchenn* eo ar ger kernevek evit lavaret *dourvel*.
- IV. — *Merc'hed Nigun*, da lavaret eo *merc'hed Nizon*.
- V. — *Ar paotr-koz* = eur spontailh. — *Ar brined* = ar brini.
- VI. — *Ar c'horn-toull* = toull ar tan.
- VII. — *Penn-wele barz toutou* ; penn-wele = plunveg ; *toutou* eo ger bugale Kerne evit lavaret gwele ; e Leon e leveront *lala*.
- VIII. — *Lamm ris* : lamm eün.
- X. — *Dimi* = dimezi.

Skouarniou Bretoned



Breman ez eus
 eis vloaz e oan ket
 o welet iliz Ploare,
 a ziskouez, diwar
 beg he zour uhel,
 kroaz Hor zalver
 da gement peske-
 taer a vez bemdez
 o vont hag o tont
 dre vor Douarne-
 nez. Taolet em oa
 eur zell war an ao-
 teriou kaer ha war
 bez Mac'harit an
 Nobletz c'hoar ar
 misioner bras ;
 lennet em oa a-
 us aoter sant You-
 enn an ali mat-
 man d'ar re a
 rank mont alies
 dirak al lez-
 varnioù : TUD :

Iliz Ploare

VAD : ARAOG :
 PROCEZI : GOU-
 LENNIT : SKLERIGEN : TAL : AN : AUER : MA :
 SAVET : DA : HENORI : SANT : YOULEN.

En eur vont er maez ; e oan o sellet ouz ar vein gi-
 zellet a ziskouez al laboused-mor o pesketa, pa en em
 gavas ganen eur beleg yaouank, kure en unan eus ar
 parrezioù tosta, a anavezen eun tammig.

— : Pebez tour kaer, Aotrou kure! emeve.

— : Ya! kaer hag uhel. An Aotrou Tymen, n'oa ket

— : An Aotrou Tymen, piou eo hennez? n'em eus eun den aonik pa grede pignat e beg uhela an tour-ze! ket klevet hano anezan biskoaz.

— : O! n'eo ket souez, rak maro e oa a-raok an Dispac'h; ar re goz, er vro, n'o deus ket ankouna-c'haet e nerz-kalon; aman edo o chom ha pa droe, en e benn. e pigne. hep tenna e lostenn-zu, betek beg uhela an tour a zo pemp hag eiz ugent troatad diouz an douar; eno ec'h azeze a-c'haoliad war ar groaz hag ec'h en em lake da gana kantikou brezonek gand eur vouez ker krenv ma veze klevet betek Rosmeur hag ar Ris. Eun dervez, evelato, e voe diskaret gand eun taol avel; e lostenn, a drugarez Doue a spegas an eun tach, hag e c'hellas kenderc'hel da bignat; en em gavet war ar beg e pignas adarre war ar groaz hag ec'h en em lakeas da gana ken drant ha biskoaz! Ne vefe ket kavet eun den ken da ober kement-se! »

C'hoant am oa da vont da dapout an tren d'ar Yeuc'h; ar beleg yaouank hag en devoa ezomm, dres, da vont da brespital, ar barrez-se, a ziskouzas an hent berra d'in. Tremen a rejomp ebiou Coatanezr hag e chomjomp eno da ober eur sell war ar pezh a jom eus ar maner koz, nebeud a-walc'h a dra, e gwirionez, ha c'hoaz ar pezh a jom a zo goloet gand an drez ha gand an ilio. Diskenn a rejomp diwar grec'henn Ploare, en eun draonienn hag e red enni ar wazenn zour a ya-d'en em goll e traez aod ar Ris.

E traon ar c'hrec'h, en tu kleiz, an hent a dremen tre e kichen eun tiegez el lec'h ma oa gwechall eur maner koz; tro-dro d'an ti e weled mogeriou hanter gouezet hag eur valiad wez a oa en he fenn eur pezh dor-borz goloet gand an ilio.

— : Petra a zo aze? a c'houlennis ouz eur c'houer o tremen.

— : Maner Keratry, emezan.

Anaout a raen an hano-ze a zo bet douget gand

eul lignezad tudchentil ha laouen e oan o veza gellet koueza war gavell o gouenn; siouaz, ne jome netra ken, koulz lavaret, eus o zi koz; an nor vras am eus komzet anezi hag eun all vihanoc'h gand eun darzell d'he difenn. Gwella pezh a zo, en ti nevez savet e kichen e oa miret, en o c'haer, mein-benez dor ha prenecher an ti koz, ar pezh a dlefed ober atao ha ne vez ket graet alies.


Ar beleg a oa ganen en devoa klevet hano ivez eus a Aotrou Keratry, o devoa, war o skoued, eur c'hleze hag eur c'hornboud, ar pezh a ziskoueze e oa, en o zouez, brezelourien ha chaseourien hag a oa o ger : *Gens de bien passent partout*, met ne anaveze anezo nemet daou, August-Hilarion, kont Keratry, a voe depute er bloaz 1818, 1827 ha 1849 hag e vab a voe unan eus pennou brasa ar C'houarnamant, er bloaz 1870.

— : Eur C'heratry all a zo, emeve, hag a blij gwelloc'h d'in eged an daou Geratry-ze hag eo tad koz August Hilarion ha p'eo gwir ho peus kontet d'in istor an Aotrou Tymen, ar pigner en teuriou, ez an, da gonta d'eoc'h, ivez istor Aotrou Keratry, difennour enor Breiz.

Er bloaz 1730, pennadureziou Breiz a en em vodas e Sant Brieg. Ar Roue a gasas daveto e gannaded da c'houlenn arc'hant an tailhou; atao o deveze c'hoant da gaout kals muioc'h eget n'o deveze ar Vretoned c'hoant da rei. N'oa nemet dek vloaz abaoe n'oa kouezet penn Pontcallec ha re e dri genvreur, war bave an Naoned, ha n'eo ket eun hevelep krisder eo a c'helle startaat ar garantez etre Bretoned ha Galloaed; hano a oa kals e Paris eus an digemer fall a oa bet graet e Sant Brieg da gannaded ar Roue; eur pardaez ma komzet a gement-se e ti an Itron d'Estrees, gwreg gouarner Breiz, he ni, an Aotrou de Sabran, eun dijentil yaouank ha lore'hus, eus ar c'hreis-

teiz, o tenna eus e c'hodell e vouchouar dantelezet leun a c'houez vat, a lavaras :

— : M'o deus c'hoant ar Vretoned da ober o fenn



Maner Keratry, e kichen Ploare

fall eo mall o diarbenn ;ouz eur red, ec'h en em gargin va unan eus al labour-ze pa 'z in du-hont da heul va eontr; setu aze eur mouchouar, Itronezed? Mat. me 'ro va ger d'eoc'h e vezo leun a skouarnioù Bretoned pa zizroin aman abenn eur miz.

— O! na pebez tra heugus, a lavaras en eur c'hoarzin, an itronezed vras a oa eno.

Ger an Aotrou de Sabran a voe anavezet ne voe ket pell, e Breiz, ha meur a Vreizad a en em glevas evit rei d'ezan eur gentel a zoare; fiziout a rejont ar gefridi-ze en unan anezo, an Aotrou Keratry, eus a Gemper; heman a oa lorc'h ennan da veza bet dibabet evit difenn enor e vro ; n'oa ket bras, mar kirit, met eur paotr ouesk ha da c'hoari gand ar c'hleze n'en

devoa ket e bar. Pa glevas e oa loc'het an Aotrou de Sabran eus a Baris e yeas d'e ambroug betek Roazon; her c'haout a eure eno o nozvezia e ti unan eus pen-nou brasa kêr hag anaout mat a eure raktst e ganfart, rak abeg a gave e tud chentil Breiz-Izel ne ouient ket ober an ardou a veze graet e Paris hag en o gwragez a zouge dilhad a c'hiz koz. Azezet e oa ouz taol o c'hoari 'r c'hartou. An Aotrou Keratry a dosteas outan, gouestadik, hag o lakaat war an daol ar gwenneien a oa red evit kemeret perz er c'hoari, e stokas, evel heb e c'houzout, e zourn ouz fri goapaer ar Vretoned :

— Petra, eme henman gant kounnar, n'oc'h ket evit teurel evez?

— : Perak eo keit ha ma 'z eo ho fri, ivez, eme Geratry, ken dinec'h ha tra.

— : Va fri? va fri-me, avat, n'eo ket dizoare ha ma ne c'houlennit ket a bardon ouzin dioustu ho pezo eus va c'helon ne vezo ket pell!

— : Me! Goulenn pardon ouzoc'h? 'ya! emaoe'h en em gavet!

— Gwellet a ran emaoe'h o klask trabas ha kouezet brao oc'h; c'houi ken etrezoc'h, Bretoned, ho peus ezomm eur gentel; ne vezo ket pell e vezo roet d'eoc'h!

— : Ya! ya! pa geroc'h, eme Geratry, ho kortoz a rin, adrenv manati sant Fransez, abenn eun hanter eur aman.

Eun hanter eur goude, ouz sklerder ar goulou, ar breizad hag ar gall, a en em ganne a daolioù kleze; kals tud, dimezelled zoken, a oa diredet da zellet outo; Sabran ha Keratry a ouie diouz ar c'hleze; met ar breizad eo a voe trec'h ne voe ket pell : « Truez am oa outan, a anzavas divezatoc'h Keratry, met ar gerioù divalo en devoa lavaret diarbenn ar Vretoned

a lakeas va gwad da virvi hag e skoës gantan eur gwall daol! »

An taol, e gwirionez, a oa ker gwas, ma kouezas ar Gall, d'an douar, a-stok e gorf, hag eun eur goude, amzer a-walc'h hepken da gaout e zakramanchou diweza, e varve.

Trouz a reas an affer e Breiz hag e Paris ha Glastaubriand en e leor « *Mémoires d'Outre Tombe* » en deus kontet penaos e tifennas Keratry enor e vro ; tudchentil Breiz, dem-goude, evit diskouez da Geratry o anaoudegez vat, hen hanvas da Rener Urz an Noblans hag ar Barizianed goudeze, a zelle diou wech a-raok mont da ober goap eus ar Vretoned.

Setu va istor, Aotrou kure, petra zonjit?

—Evel beleg, e rankan kondaoni eun hevelep emgann; An A. de Sabran m'en divije bevet pelloc'h en divije bet anavezet gwelloc'h ar Vretoned; met evel breizad e kavan mat e vefe kastizet hepred, hep mont betek lazà evelato, kement hini a daol dismegans war hor Breiz.

Va c'hamarad a stardas va dourn hag a bignas d'ar Yeuc'h, e weler, eus ar gar, he iliz hag he c'hastell koz renket ker brao ha tra war grec'henn Tal-ar-Roz. Gourvez a ris war al leton da c'hortoz tren Douarnez da vont gantan da Gemper.

G. P.



Bezit kalonek, bugale

Bretoned ha Bretonezed vihan, er miz tremen, hon doa goulennet ouzoc'h rei d'eomp an dourn da skriva eun dra bennak en ho *Feiz ha Breiz* : istoriou beñ, geriou da lakat an dud da c'hoarzin, skenden-nou hag all.

Evit c'hoaz n'eus bet nemet pevar pe bemp paotr ha diou pe deir merch o skriva d'eomp : oberou darn anezo a gavoc'h en eil pajenn ha plijadur o deus graet d'eomp, rak diskouezet o deus d'eomp e karont o bro; ra deuo eleiz a re all da gemeret skouer warno ha da ober eveldo.



Arabad d'eoc'h ober evel Jobig a welen dec'h o ouela, war zigarez ma n'eo ket deuet a benn eus al labour edo o klask ober, en taol kenta; klevit kentoc'h ar pez a lavare d'ezan e dad koz : « Va mabig, ne vezi biken eun den, ma fallgalones dioc'htu. Dale'h sonj eus da dadou a labouras kement evid acza d'it eur vro ker kaer ! »

Bugale, ne reoc'h ket evel Jobig ; ne fallgalonoc'h ket en taol kenta; skriva a reoc'h d'eomp e galleg pe e brezoneg, evel ma kavoc'h esa.

En hon Doue ha Breiz, war raok, war roudou hon Tadou.

AR BREUR BRAS.

Kasit ho liziri d'an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz, Scrignac, hag ken o degasod'in.

AR CHARRETER DIZENT



Gwilherm a zo eur paotrig bihan eus a Vrest hag a zo deuet da dremen eiz dez, war ar maez; e vrasa plijadur eo mont gant ar c'harr hag Yvonig, mab yaouanka an ti m'ema ennan, a zesk d'ezan bleina ar gazeg a vez starnet outan.

Gwilherm, gand eur gentel hepken, a gav d'ezan beza ker barrek hag Yvonik.

— Arabad d'it, gand a ri, eme Yvonik, dis-keun morse eus ar c'harr, ken na jomo ar gazeg a-zaw!

Gwilherm, dore'h ennan, a hignas e-unan er c'harr; skei a eure eur gwall daol skourjez gand ar gazeg ha pa welas houman o vont, d'ar red, e krogas aoun ennan hag e lammas er maez, dre lost ar c'harr ! Siouaz ! koeza a eure, war e idr a-grenv ha n'oa nemed ar pri, ar glandour hag al lec'hid o sevel ac'hano.

Yvonig ouz e glevet o youc'hak a deuas war e zikour : hiviziken Gwilhermig a daolo evez e pelec'h diskenn.

A-raok lammat, gouez e pelec'h
En aoun da derri penn pe vrec'h.

Skrid kaset gand André Prat, eus Skolach Itron Varia 'r Wir Zikour, e Brest.

AR FURLUKIN FIN



Eur roue en devoa eur furlukin evid e lakat da c'hoarzin ; met eur poent a deuas hag ar furlukin, kaer en devoa poania, n'oa ket evit dont abenn da ziroufenna tal ar roue.


Skuiz gant ardou e furlukin ha droug ennan, ar roue a lavaras da zaou archer e gas d'ar prison hag e gondaoni d'ar maro ken'ta ma vije getlet.




Ar paourkez furlukin, en e brizon, a zonje en devoa kemeret eur vicher gwall zanjurus... E zervez diveza a oa digouezet hag eun archer a deuas d'e ger'het da vont dirak ar roue...

— Penabz, eme ar roue, eo ar gwella ganez mervel? lavar.
— Gwella ma zeo ganen mervel, eme ar furlukin, eo dre gozni.
Ar ger-ze a lakeas ar roue da c'hoarzin hag ar furlukin a voe lezet da vale.


R. PLEYBER.




I. — Pezenn aman sant Per, eur bezenn gaer, a gouezas, eun devez, eus a lost ar c'harr, en eur vont d'ar marc'had da Vontroulez ; eur bouloudenn zouar hag a oa, dre eno, ouz he gwelet o koueza, a en em lakeas da c'hoarzin d'ez, gwalc'h he c'halon.



2. — Ar bezenn amann, daoust da-ze, ne dec'has ket diouz he amezogez ha setu ma teuas eur pil dour : — Ne dalvezes ket eun holl vad, eme ar bezenn amann d'ar bouloudenn zouar ; dispennet out gahd ar glao ; me, da vihan, a jom fresk-beo dindan ar gaouadl.




3. — Ar glao ne badas ket atao ; dizrei a eure an amzer vrao hag ar bezenn amann hag a oa bet laouen betek neuze a vennas milka pa welas an heol o para.



4. — Bannou an heol tomm a lakeas ar bezenn lorc'hus da deuzi ha da bucha en drema weled ar bouloudenn zouar oc'h en em galletaat hag o c'hoarzin d'ez. Kentel : N'eus den fin, n'en deus e-goulz !

Herri Caouissin.



An Aotrou Bimbochet, eur parizian hag a gemer ar Vretoned, gwisket e Bretoned, evit genaouien en devoa fermet eun tammig ti bihan e Plougastell evit gellout tremen an hanv ennan gand e dud. Kavet en devoa, tost d'ar vourc'h, eun tiig bihan, gwennet e vogeriou gant raz, gand euj liorz adrenv. Marc'had mat en devoa bet an fi-ze.


Bimbochet en devoa lavaret d'e dud o divije sivi da zebri ar pez a garjent ha p'en em gavas, en o c'her nevez Irma, e wreg, Lulu ha Lili, an daou vogel, hag ar c'hi Azor, o brasa mall a voe mont da ober eun dro d'al liorz. Siouaz, ar sivi a oa dister : « Sur a-walc'h, eme Vimbochet, va liorzer n'eo ket bet war o zro aboe ma 'en eus fermet an ti, anez ne vijent ket bet ker bihen-ze ! »

Bimbochet, en dervez warlerc'h, a zavas abred eus e welé da entent ouz e zivi ; o douza a eure hag o zrei ouz

an heol, an eil goude eben, e-vid o lakaat da greski ha da ruzia. Goude beza labouret evelse, epad div eur, skuiz maro gand an dommer, Bimbochet a azezas ouz mozer e liorz, en disheol da ober eun ehan hag eur mored.

A-greiz m'edo eno, setu ma welas eun den eun tok kolo, war e benn, oc'h en em ziskouez war gor-





re ar voger ; Sellet a eure ouz Bimbochet gand e zaoulagad lemm ha gand eur mousc'hoarz goapaüs e lavaras :



— Eman deuet an hanv, da vat, pelloc'h, amzer vrao a ra, Aotrou!

— : Piou a gomz evelse, eme Vimbochet, hag a gred lavarret eo brao an amzer pa 'z eo ken divalo va sivi.

— : O! O! an traou, er bed-man, ne gerzout ket atao hervez hon youl !

— : Asa! eme Vimbochet, Plougastelliz o deus sivi kaer ha va re-me ne greskont tamm! An hevelep heol, koulskoude, eo a bar warno ; an ti-man a dle beza an diaoul war e dro.

— : O! O! eme baotr an jok kolo, n'eo ket da lakat war gein Paol Gorniok kement tra zistres a en em gav gand an den; me a zo deuet aman evit ho tiboania; kemerit ar



sac'had ludu-ze ha taolit hen war ho sivi; n'eus louzou ebet gwelloc'h eget hennez evid o lakat da greski.


Bimbochet laouen bras, ne ouie ket penaos 'trugarekaat a-walc'h e vadoberour; met henman a oa aet kuit.

Hor parizian raktal a fuilhas war e zivi al ludu presius; en eur goude, e oa dirazan eur zivienn gaer, unan hepken, met unan-avat evel ma n'oa bet gwelet biskoaz war douar Plougastell. Bimbochet a c'halvas Lulu, Lili, Azor hag e wreg Irma, da welout ar « mirakl ». An dour a dene e genou ar barizianed o welout eur frouezenn ker kaer.

— : Honnez, eme Vimbochet o sellout outi gand eul loupenn, a vezo gwerzet ha kenta ma c'hellin zoken, en aoun na deufed d'hen laerez diganeomp.

Ha setu Bimbochet d'he c'hutuilh ha d'he foueza. O! 100, 200, 300, 400 lur a boueze! 16 real, da nebeuta, e wer-zer al lur; 1.600 pe 2.000 lur am bezo evit va sivienn.

Diouz ar pardaez Bimbochet a gargas ar zivienn en



eur garrigell hag a yeas da Vrest da werza e frouezenn sebezus :

— Daou vil lur, emezan, em bezo anezi!

Siouaz! digouezet e kreiz Pont nevez Plougastell, he-man a blegas gant... pouez ar zivienn, rak houman a greske atao.

Hor parizian n'oa ket evit kompren petra c'hoarveze gand ar pont hag e kouezas war e benn, karrigell ha sivienn hag all e ster an Elorn :

— Va sivienn! va 2.000 lur, a youc'has Bimbochet... ha kerkent e tihunas rak n'en devoa graet nemed eun hunvre. Klevet e voe gand paotr an tok kolo a oa o labourat er park tosta...

Bimbochet n'en devoa ket gwlelet c'hoaz peger genaouk e oa ken e oa en dervez-ze; hiviziken ne vezo ket kel lorc'hus ha p'en devezo c'hoant da gaout sivi e ouezo da gaout piou mont da brena.

H. CAOUÏSSIN.



Keleier ar Miz

Goueliou eizvet kantved Abati ar Releg (Plouneour)

D'ar 14 ha d'ar 15 a viz Eost.

Da hanter Eost, an oferenn a vezo da 10 eur 1/2. An Aotrou 'N eskob Duparc a gomzo en oferenn-ze.

Da gresteiz, lein dre skodenn.

Da 2 eur, gousperou ha prosesion.

Raktal goude ar gousperou, c'hoariadeg vrezonek e liorzou an abati koz.

Eleiz eus hon lennerien a gemero tro eus ar goueliou kaër-se evit mont da zaludi Itron Varia ar Releg, en hé illz koz, perlezenn Menez Are.

Goueliou ar Bleun-Brug e Brest d'ar 4, 5, 6 ha 7 a viz Gwengolo.

1. — D'ar zuli 4, d'an abardaez, muzisianed ar vortolodet « *les musiciens de la Flotte* » a c'hoario war bla-senn Wilson soniou ha toniou kaera Breiz-Izel da zigeri ar c'hendalc'h brezonek.

2. — D'al lun 5, da 9 eur ha da 14 eur studiadeg war ar pezh a zo da ober raktal evit harpa evel m'eo dleet ar brezoneg ha mirout outan da vervel e meur a di hag a meur a barrez evel m'her gra betek hen.

Da 17 eur, ma vez an amzer a du, e vezo treuzet ar mor evit pleustri roudou sant Gwennole e Landevennec.

Da 20 eur : c'hoariadeg vrezonek.

3. — D'ar meurzh 6, da 8 eur, oferenn-bred, e Sant Loeiz, an Aotrou 'n Eskob Duparc a brezgo en oferenn-se. Da 9 eur : kenstrivadegou ar c'han, al lenn, ar brezegerezh hag an displegerezh. Da 12 eur : lein, dre skodenn, e « Salons Lombard » rue Colbert.

Da 14 eur : ma vez an amzer a du, c'hoariadeg, e Kerabecam.

Da 18 eur : Bennoz ar Zakramant evit kloza ar Gouel.

4. — D'ar merc'her 7, evid ar re a garo, tro vale e Plougastell hag e Lokrist.

Goueliou ar Zakramant e Dublin

Rener meur ar *Bleun-Brug*, an D^r Cornic hag e bried, an A. Marc ar Berr, sekretour ar *Bleun-Brug*, Kaner Leon, an A. Emil Cuffe hag e bried a gemero perz ar miz-man er goueliou dispar a ra ar bed holl en enor d'Hor Zalver, e sakramant an Aoter, e Dublin, kêr-benn Iwerzon.

Tremen a raint goudeze dre Vro-Gembre, bro *Goz hon Tadou*, el lec'h ma chomint tri dervez da welet ha da zaludi hor breudeur Tra-mor.

Ra gouezo bennoz sent koz hor gouenn keltiek warno ha war al labouriou a reomp e Breiz-Izel evit harpa hor brezoneg.

Gourc'hemennou

Hor c'henlabourer mat, Yvon ar Floc'h, a zo bet resevet e Paris, gant unan eus ar re genta, d'ar 27 eus ar miz tremen, evit beza mestr-skol war an Arzou kaer, en unan pe unan eus skolachou bras ar vro; kinnig a reomp d'ezan hor gwella gourc'hemennou.

Buhez an Tad Abgrall

Prenit, da rei e prizioù da vugale ar skolioù, « *La Vie du P. Abgrall* », brasa misioner an amzer-man. Roet e vezo d'eoc'h ouz hanter briz koulz lavaret. Skrivit, evit he c'haout, d'an *dimezell Torcol*, 11, Rue *Algérisas Brest*.

Leor an A. Gwilhou

En deus rakprenet al leor e miz mae :

An A. R. Abguillerm, Gwinevez.....	2
An I. Creismeas, 24, rue Latouche-Tréville, Brest....	1
Leoriou rakprenet betek-hen : 942 + 3 = 945.	

Ma ne deu ket muioc'h a rakprenerien d'eomp, er miz a zeu, eget n'eus deuet er miz tremen, e lakimp daou vloaz all c'hoaz a-raok tapa hor mil.

Degas an hanoioù d'an A. Perrot, Rener *Felz ha Breiz*, Scrignac (Finistère) ar re o deus c'hoant da brena al leor a-raok ma vezo moulet : degas an hano heb an arc'hant.

Kenstrivadegou Bleun-Brug Brest

I. — KENSTRIVADEG AR BREZEGEREZ

(*Concours d'éloquence*)

Pep breizad a dilefe beza eur barz anezan. Eur barz petra eo? Da genta eun den a anavez hag a gar e vro. An hini a oar sevel e zell uheloc'h eged al labour hag ar vuhez pemdeziek, pelloc'h eget garzou e barkeier, e gériadenn, e barrez, tizout mad e vro Breiz a-bez ha lakat ar mad-se da stur d'e vuhez ha d'e oberou, henez eo ar gwir varz.

Kemeret a reoc'h eur breizad en e vuhez pemdeziek koulz hag en unan bennak eus ar c'houlzioù brasa eus ar bloaz, — pardon, votadeg, goueliou, — hag eus buhez e diegez, — badiziant, eured, maro hag all, — hag e rooc'h da anaout penaos ec'h en em ziskouez enno ar barz.

Kas ar skridoù, pemp pajenn d'an hirra, abenn hanter eost da zivezata, d'an D^r Cornic, Rener ar Bleun-Brug, Douarnenez.

II. — KENSTRIVADEG AR DISPLEGEREZ

(*Concours de déclamation*)

Ar re yaouank o devezo c'hoant da gemeret perz er genstrivadeg-man o devezo eur werz a embannimp anan, er miz a zeu, da zeski dindan envor.

III. — KENSTRIVADEG AR C'HAN

Sellit ouz ar peñz a zo merket war drede pajenn embannou ar miz-man; eno e kavoc'h ar sklerijenn ho peus c'hoant da gaout diwarbenn ar genstrivadeg, ha mar d'oc'h nec'het c'hoaz, goudeze, evit beza sklerijennet gwelloc'h skrivit da : *M^{lle} Geneviève de Kermenguy, château de Kermenguy, en Cléder.*

Divinadennou miz Mezeven

I. — E lec'h ar pikou du lakit lizerennou hag a raio geriou hag e vezo gelllet o lenn kerkoulz eus a gleiz da zehou evel eus an nec'h d'an traon :

- x x x x. — Eur zantez brudet bras e Breiz.
- x x x x. — Heman a zo d'al labous.
- x x x x. — Eur ger eus kreisteiz ar Frans.
- x x x x. — Eul loen ha n'eo ket eus ar re fura.

Degaset gand M. A. Moal, Tregarvan.

II. — Korfenn c'hlas, korfenn wenn,
Tokig truilhek war he fenn.

Degaset gant Barba Lez, Bodilis.

III. — Treid heb ivinou,
Kof heb bouzellou,
diskouarn hep klevet
Ha genou a lec'hed

Degaset gant Barba Lez, Bodilis.



IV. — Yannig en deus kollet unan eus e levriou skol; e pelec'h eman?

An diou ziveza-man a zo degaset gant Renan Pleyber eus a Baris.

V. — Ar mesaer a zo kousket hag ar bleiz a zo tost; e pelec'h eman?

Feiz ha Breiz

Ar Galon-Zakr tronet en ti

« Skuilha 'rin a bep seurt bennoziou, war an tiegeziou e vezo laket enno, a-wel d'an holl, eun daolenn eus va C'halon. »

Ar c'homzou-ze lavaret gant Hor Zalver Jezuz-Krist da zantez Mac'harit-Mari, e Paray-le-Monial, a ziskouez ar c'hoant en deus da ren, dre e garantez, war hor familhou ha war ar bed a-bez; diskouez a reont ivez, en hevelep amzer, an youl en deus da zavetei, eur wech c'hoaz ar bed, dre an devosion d'e Galon-Zakr.

Unan eus an doareou gwella d'e lakat da ren war-nomp eo e lakat war e dron e pep hini eus hon tiegeziou.

Lakat ar C'hrist-Roue, war e dron, en hon tiegeziou a zo ober gun dra hag a zo bet aotreet ha kuzuliet gant hon Tadou Santel, Pi X, Beneat XV ha Pi XI.

H. n Eskibien hag hor beleien o deus hon aliet ivez d'hen ober. Grasou diniver en deus skuilhet Hor Zalver war ar re o deus sayet eun tron d'ezan en o ziez, ar pezh a ziskouez e plij kals an devosion-se d'ezan!

Rapari an droug graet gant pec'hejou ar Vro, gounit eneo da Jezuz, kreski e garantez er c'halonou, setu ar pezh a vennomp ober evit stourm ouz an diaoul en deus disklaeriet brezel d'ar C'hrist, Roue ar Bed-Holl.

Ar pezh a glaskomp eo lakat Hor Zalver da Roue, en

tiegeziou, an eil goude egile, evit ma teuio, tamm ha tamm, da veza roue ivez, er broïou!

An dud a vez kollet a vagadou
Ha saveteet a hiniennou !

Kement-se a zo gwir evid ar c'horfou ha ker gwir all evid an eneoù!

A vagadou eo e vez distroet an dud diouz Doue ha diwar hent ar baradoz; a hiniennou eo e ranker o lakat a-nevez war an hent mat.

Evit ma teuio tronedigez hor Zalver da veza hent bras ar zilvidigez evid eun tiegez e ranker hen ober evel ma 'z eo dleet.

I. — Petra eo an dronedigez ?

Ar ger-ze a zififi « lakat war eun tron ». An dronedigez a zo eta eur gouel a raer evit lakat ar Galon Zakr « *evel war eun tron* », da lavaret eo *er plas kenta ha kaera en ti*, hag en em voestla goudeze da Roue an nenv hag an douar.

Laket e vezo taolenn pe skeudenn ar Galon-Zakr, el lec'h m'en em vod holl dud an ti; en doare-ze an tiegez kristen a-bez a anzavo, dirak an holl, rouantelez dianavezet an Aotrou Doue.

An dud, a diadou, a deuo, evelse d'en em rei d'Hor Zalver, da c'hedal m'en em vouestlo an holl poblou d'ar Galon-Zakr, rak diouz an tiegeziou eo e vezo ar broïou: dre ma wellaio an tiegeziou, e wellaio ivez ar broïou!

Gouit eneoù da Zoue, er gêr, da genta, eno ema an dalc'h; ma 'z eus eno eur bugel foran, ar re all a boanio, dre o fedennou hag o sakrifisou, da gaout, digant ar Roue *trugarezus*, dizro an dianket.

Gouel tronedigez ar Galon Zakr a c'houezo en eneoù kalonek tan an abostolaj, hag o lako da boania da skigna rouantelez an Aotrou Doue, er parrezioù, er c'hêrioù hag er broïou!

II. — Penaos e tle beza graet gouel an dronedigez ?

Gand ar brasa lid: evel eur roue eo e ranker digemer t Hor Zalver Jezuz-Krist, Roue ar bed.

P'hen devez c'hoant da enori unan bennak hag a garomp e lakomp hon ti da veza kaera ma c'hellomp: gwalc'h et e vez ar pezh a zo da walc'hi; skubet ar pezh a zo da skuba; koaret ar pezh a zo da goara, spuret ar pezh a zo da spura, bleuniet ar pezh a zo da vleunia.

Daoust ha n'omp ket gouest da ober kement all evid an hini en deus hor c'haret muioc'h eget n'eus fors pïou?

A-raok al lid: Dibabit eun dervez d'hen ober; an hini a blijo ar muia d'eoc'h, gouel er zant bras bennak, gouel an tad pe gouel ar vamm pe gwener kenta eur miz.

Molt d'an ofrenn ha d'ar gommunion en deiz-ze; lakat eun ofrenn zoken, pa c'heller. Renka taolenn ar Galon Zakr e braoa plas an ti gant goulou ha bokedou en dro d'ezha tu ha tu poltrejou tud an ti, dreist-oll, ar re n'emaint ket er gêr.

Pedi ar beleg, ar gerent hag ar vignoned: eur beleg a dle beza e penn ar gouel evit benniga ar skeudenn pe an daolenn hag evit gellout gounit an induljansou. Pa ne c'hell ket ar beleg dont, an tad pe ar vamm a c'hell ren ar gouel en e lec'h, gand ma vezo eur *Galon Zakr* venniget en ti. Arabad eb lemmel ar groaz, war zigarez lakat ar Galon Zakr en he flas; ar groaz eo ar brasa testeni a jom ganeomp eus karantez vras hor Roue.

Epad al lid: e c'heller lenn pe zelaou lenn ar pedennou kaer ez eus staget induljansou outo. Kana a c'heller ivez eur c'hantik d'ar Galon Zakr.

Goude al lid: e ranker sina eur paper a vezo kaset gand an hano hag ar chomadur da zekretourez an eskopti pe da zekretourez ar Galon-Zakr, 35, Rue de Pic-

pus, Paris XII^e; eur paper all a vezo sinet c'hoaz ha dalc'het en ti, da zerc'hel sonj.

Gouel an dronedigez a deu, evelse, da veza evel eul lizer-emgleo, kinniget gand ar Galon-Zakr, ha digemeret gand anaoudegez vat gand an tiad a-bez.

Eur gouel a zigoll eo ivez; ar familh gristen a fell d'ezhi frealzi ar roue dianavezet ha dismeganset e kals a diegeziou hag a bromet renta d'ezan atao ar c'hloar hag an enor a nac'h outan an dud fallakr.

III. — Pe seurt frouez a zoug gouel an dronedigez ?

Troni ar Galon Zakr n'eo ket hepken spega eun daolenn ouz eur voger eo, met, disklaeria, evit mat, ec'h anavezer H. Z. Jezuz-Krist evit Roue.

M'ho peus c'hoant e renfe ar Galon Zakr en ho kêr, e rankit senti ouz gourc'hemennou ho Roue hag ouz re e Iiz, beza fidel da zeveriou ho stad ha poania da ober ar pezh a c'houlenn diganeoc'h: en eur ger, *renit eur vuhez kristen*.

Gwelit e Jezuz eur mignon feal hag Holl-C'halloudek; deuit davetan el laouenedigez koulz hag en dristidigez; er poaniou, en dispartiou, en trubuilhou, en daerou a skuilher war ar beziou koulz hag el levez e darz en dro d'ar c'havellou.

Ha, dreist-holl, fiziit war e garantez! Jezuz ho kar, daoust d'ho pec'hejou, muioc'h eget n'och gouest d'her c'hompren hag a fell d'ezan beza karet ganeoc'h. C'hoant en deus da jom ganeoc'h en ho ti, etouez ho tud; arabad eo d'eoc'h e zoania gant ho pec'hejou ha m'en em gavfec'h d'hen ober, distroït davetan, raktal, evid e frealzi ha rapari ho sempladurez. Hag ho ti, neuze, a vezo, e gwirionez, ti Jezuz, e gêr, eur baradoz da ziskuiza, eun ti Nazareth nevez, e lec'h ma selaouo ho padennou, e lec'h ma talc'ho d'e bromesaou, rak hen eo an Hini a zalc'h atao d'e c'her.

Evelse, en ho kalon birvidik e kresko ar garantez

hag an doujans a dleit kaout bepred evit Kalon Jezuz.

Setu perak: e nevezoc'h ho konsekrasion, bemdez, dre eur bedennig verr a stagoc'h ouz ho padennou diouz an noz, pa vezo daoulinet holl dud an ti dirak taolenn ar Galon Zakr; he nevezi a reoc'h, dreist-holl, *bep gwener kenta 'r miz*; en deiz-se e reoc'h ivez ar gommunion ha d'ar yaou da noz, ho pezo aozet ho kalon oc'h ober an eur zantel kemennet gant Hon Tad Santel ar Pab Pi XI. Nevezi a reoc'h c'hoaz ho konsekrasion d'an derveziou brasa eus ho puhez, derveziou a levez e ha derveziou a ganv.

Dreist-holl, deiz Gouel ar Galon-Zakr ha Gouel ar C'hrist-Roue ar Bed, e reoc'h gant muia ma c'helloc'h a lid, evel goueliou bras en ho familh.

Alies a ma c'helloc'h, e tostaoc'h ouz an daol zantel. Kalon Jezuz eo he deus roet d'eomp Sakramant an Aoter ha sakramant an Aoter eo a ro d'eomp Kalon Jezuz.

Ouspenn a reoc'h c'hoaz: beza e vezoc'h ebetel; rei a reoc'h da anaout en dro d'eoc'h petra eo an devosion d'ar Galon Zakr hag he skigna a reoc'h e pep doare.

Familhou kristen hag ho peus laket Jezuz da vestr en ho ti, Jezuz a fizio warnoc'h evit lakat e rouantelez d'en em astenn eus an eil penn d'egile d'ar bed.

Troet gant T. A.



Perig hag Azilis

Daoust ha taolet ho peus evez, lennerien ger, ez eo stag Azilis da verka he dispignou war he c'hayer, e brezoneg? Per en deus he skoliet war ar poent-ze: « P'eo gwir ec'h ouzout brezoneg, emezan, n'ouzoun ket perag na skrivfes ket e brezoneg? Kals e vezo aesoc'h d'id eged trei da venozion e galleg! Va mestr-skol a lavare e oa tud diwar-lerc'h ar re ne ouient ket, en hon amzer-ni, lenn ha skriva brezoneg. Den na zello ous da gayer nemedot, ha ma res eur fazi bennag en troiou kenta dont a ri d'en em ober; n'az peuz nemed beza war evez pa lennes an Aviel diouz an noz! »

Azilis sen'us, he deus heuliet ali Perig, rak c'hoant he deus da ziskouez he deus kement a spered hag eun ali. Laouen e vez p'he deus desket eun dra bennag ha buhan a-walc'h e lavarfe war-lerc'h an impalaer bras Titus. « Eun dervez kollet eo pa n'em eus desket netra » ha gwelloc'h c'hoas, evel eur gristenez e lavar bemdez: « Va Doue, roit d'in ar c'hras d'ober eur vad bennag d'am nesa hizio ».

Laouen bras oa p'he devoa gallet tenna Oliv a boan evid ar pardon; laouen oa ive o veza ma poanie Oliv d'en em c'helle, pedi rae eviti; brema, ar plac'h yaouank a zirede zizober eus he siou fall; he c'hennerzi e rae muia ma daveti bep tro m'en em gave eun enebiez bennag ganti.

Antronoz ar pardon e teuas d'ar red d'he gwelet:

— « Da drugarekaat a ran, emezi; an holl o deus kavet mat va zamm friko; hag a-raok mont kwit, Moris en deus lavaret d'in : « Te oar aoza boued gwelloc'h eged n'eus fors piou! pa zimezin, e lavar in d'am hini goz dont aman da zeski ganez! » Poan em eus bet o klevet ar c'homzouze, Azilis! Anat eo diouto n'eman ket en e spered dimezi ganen! »

« Paour kêz Oliv, eme Azilis, arabad eo d'id koll fisians! met sonj-ervad araok komz, beilh bepred war da deod, rak gwelet a rez, diwar da goust, pe gement a boan e c'heller ober gand eur ger hebken! Ar c'homzou ez eus a bep seurt anezo: lod a zo skanv hag a nij gand an avel,

lod all a zo pounner hag a gouez evel mein war ar galon; lod a zo aour, lod all houarn, lod a zo skournet, lod all entanet; darn anezo a zo flour, darn a zo rust; darn a zo karget a gasoni, hag a laz evel birou bilimus · darn a ro ar vuhez, a frealz an den. Diouallomp. Oliv da c'hlaza den ebed gand hor c'homzou, rak hon teod a zo bet roet deomp gant Doue evid ober vad ha dre-ze, servichout d'e c'hloar. A-wechou, pa vez droug ennomp e sav komzou trenk awr hor muzellou? arabad eo deomp o lezel da vont ermez eus hor genou, rak « ar ger dalc'het a zo sklavour an hini laosket, enebour! »

— « Te a oar o renka, evelato Azilis, eme Oliv! ha pa sonjan em oa c'hoant, n'eus ket keit-ze, da rei kenteliou d'id! abeg a gaven ennot abalamour ma talc'hes start d'az kwiskamant, d'az yez, d'az hano zoken!

Nebeud a-raok m'oas aet gant Per, em oa laket droug ennot, p'oan en em erbedet ouzit d'az lakat da jench hano! Pegen diboell e oan? »

Azilis a c'hoarz a galon vat o klevet Oliv! Muioch eget ne reas en dervez-se pa deuas he mignonez d'he c'haout :

— Perak ne heulies ket ar c'hiz? Dleet e vefe d'it mont e tog? komz galleg ouzin? ha chench da hano koz a Aziliz? ma karfes...

Ne c'hellas ket echui; eben a oa savet en he zav, soun he fenn ganti, he dourn astennet evel hini eur barnet hag a lavaras :

— « Kollet az peus da skiant-vat, petra? va hano ha va brezoneg a zo evel tenzoriou roet d'in da zero'hel! Va hano a zo koant, va brezoneg a zo kaer; va hano a zo eul lodenn ac'hanon, va brezoneg a zo boued va spered, harp va feiz, hag e fell d'it e tilezfen an eil hag egile? Muntrez e vijen ma sentfen ouzit! rei a rafen armou da re-all da laza va bro; ha piou a anavezfe « Azilis ar Prat » dindan he zôg nevez, gant he hano nevez?

« Cécile Dupré » son chapeau!! evit beza henvel ous ar pennou divalo a gresk bemdez an niver anezo dre aman? o va gwiskamant ker, va c'hoeff karet, c'houi hoc'h eus va diouallet alies eus an droug-spered, ne vankin morse deoc'h, n'ho tilezin biken! »

Spontet, kouls lavaret e voe Oliv ous he gwelet ker

kounnaret, hi ken habask! ous he c'hlevet o komz ken di-
chek, hi kel lent! met, abenn eur pennad ez eo deuet he
c'homzou d'ober o hent en he spered, ha brema e kred ive
ez eo ar brezoneg eur yez talvoudus ha gwiskamanchou ar
vro eur skoazell d'ar vertuz; kaout a ra ive, pa ra eur zell
ous he mellezour, ez eo koantoc'h gant he c'hoeffig gwenn.
ha skanv eged ar merc'hodennou a laka tammou tokou
a dreuz war o fennou hag a zo evel dianket en hor Breiz!
n'o deus mui na gwiskamant o bro, nag he yez; bez ez int
evel diswriennet ha digristenet e vezint ivez dizale,
ma kendalc'hont!

Lennet em euz diwarbenn ar Zaozon: « N'eus fors e pe-
lec'h e vezont, e pe lec'h ez eont e kasont ato, ous seul
o boutou, eun tamm pri eus Bro-Zaoz » da lavaret eo e
talc'hont mat ato d'o yez ha d'o zemps a Zaozon. Dleet eo
e vijemp henvel outo war ar poent-ze; n'eus fors e pe-
lec'h ez eomp bezomp lorc'hus eus hor gouenn hag eus
hor yez. Yann-Ber Galloc'h a skrive : « Vad en deus graet
ar brezel da Vreiziz, rak breman e ouezont pegen kaer eo
an hano a Vreizad, pegen uhel eo o gouenn! » Ya, met ar
re yaouank n'eus mui hano eus ar brezel ganto; bez ez eus
traou diboeñ en o zouez, hag o deus mez eus o orin! hag
a zo gwelloc'h ganto chaokat galleg saout eged komz bre-
zoneg yac'h! ha dilezel hon tokou ledan hag hor c'hoeffou
dantelezet eget kemeret dremm lakipoted ha kanfartezed
ker.

Dleet eo d'ezo mont d'ar skol gant Aziliz; p'he deus gallet,
dizrei Oliv, e teui abenn eus eun niver bras a dud dizek
evelt. Disul, p'edon o tremen e biou an ti kleven he
mouez hegaret o lavaret hano diwarbenn ar gwinn hag eur
evach all bennag: kelennet e vez Oliv war bep tra evit
doare! met, poania rin da c'houzout petra he devozo lava-
ret, evid o lakat aman evit brasa mad meur e hini.

TINTIN ANNA.



Kredennou hag istoriou diwarben ar c'hizier e Breiz



E Breiz, kouls hag e broiou all ar bed, ar c'haz a zo
bet kemeret, a-viskoaz, evid eul loenig dibaot ha
gouest da lakat ar chans pe an dichans da goueza war
an ti el lec'h m'ema o veva.

Sklerder e zaoulagad, ar c'halloud en deus da starda
pe da astenn mab e lagad, e vale didrous hag eveziant,
e redadegou-noz, ar viaouerez a vez gantan pa c'halv
e amezeien, an traou-ze holl hel laka da veza dishen-
vel a-grenn diouz loened all an Aotrou Doue.

Ar c'hizier du dreist-holl a vez muioc'h a glask
d'ezo eget d'ar c'hizier all: ar re-ze, a leverer, eo kizier
an atc'hant. Darn a grede e c'hellent, pa veze ententet
outo, evel m'oa dleet, trei o boued en arc'hant. War-
dro 1860, e voe eur prosez e lez-varn Lanhuon, etre
diou vaouez diwarbenn eur c'haz, a oa bet gwerzet ar-
c'hant bras gant unan anezo d'eben o rei da gredi d'ar
brenerez e kac'he ar c'haz eur pezh a skoued bemdez;

aes eo d'eoc'h gouzout ne gavas ar brenez skoued ebet biskoaz etouez fank he c'haz du, hag e tamallas ar werzerez dirag al lez-varn da veza he laeret.

Ar c'hizier du, eleiz her c'hrede, a oa diaoulou, kemeret stumm kizier ganto, evit gellout, gwelloc'h a-ze, trompla an dud. Degas a raent arc'hant en ti ma vezent maget. Gand an arc'hant-se, ar mestr a en em vezve, ar vestrez a en em droe war ar skanvadurez hag evelse, an arc'hant o lake o daou da gemeret penn hent an ifern!

Ar c'hizier-ze a veze barlennet ha maget evel bu-gale vihan. Eun dervez eur vaouez a oa o tivailhuri he c'haz du endra ma lavare e gredo en eur astenn e dreid ouz an tan. Eur balarennad yod a oa o yena e tal al ludu. A greiz pep kreiz ar c'haz a ehanas gand e gredo hag a lavaras d'e vestrez:

— Chit! Chit! va mestrez, va lezit da vont kuit!

— : Perag, eme ar vestrez strafuilhet o klevet he c'haz o komz.

— : O sellet ouzomp emae, ha ma vezan gwelet war ho parlenn, hoc'h holl beziou arc'hant a droio e deliou kras.

Ar mevel hag a oa er zolier en devoa klasket gwelet petra dremene en traon hag ar c'haz en devoa e welet. Gwechall e lavared e oa eun dra vat miret ouz ar c'hizier du da vont da ober ar « sabbat »; p'o lezed da dec'het evelse e kollent o amzer ha ne raent ket o arc'hant ken. Ar « Sabbat » a oa eur vodadeg a rae ar c'hizier, en noz, ouz sklerijenn al loar. Eus a ziou pe deir leo, tro-war-dro, e tirede kizier d'ar vodadeg-se. Darn a lavar ec'h en em vodent evelse evid enori o roue ha klevet e genteliou.

Eun nozvez, person Plougasnou, an A. Clec'h, a oa o tont d'ar gêr, en e garr bihan, diouz kosteriou Gwen-gamp; o pignat eur c'hrec'h edo tost da Blounerin, pa glevas eur viaouerez spontus o sevel eus eul lannog a oa tost d'an hent bras. Lakat a eure e gazeg da

jom a-zav hag e pignas war ar c'hae da welet petra dremene dre eno. Gwelet a eure, el lannog, eur bern kizier, — eur milierad a c'helle beza anezo, da nebeuta, — bodet en dro d'eur roc'h ha warni, evel war eun tron, e weled, azezet, brasa káz ar vro. Doare en devoa da ober eur brezegenn d'e genvreudeur hag ar re-man a c'harne, beb an amzer, doare d'ezo da gaout mat ar pez a lavare. Person Plougasnou ne reas netra evit o c'has ac'hano rak gouzout a rae e oa danjerus bras mont da glask trabas ouz eur bern kizier, evelse, pa vezent bodet da ober o sabbat.

Eun den diwar ar maez a oa o tizrei d'ar gêr, eun pardaez, war e varc'h, gand eur fuzuilh war e skoaz, pa zigouezas d'ezan tremen ebiou eur warenn edo enni eur bern kizier oc'h ober o sabbat.

O welet roue ar c'hizier, en e zav, war eur roc'h, e kemeras e fuzuilh hag e laoskas eun tenn warnan. Kerkent ha m'en devoa graet e daol, e redas d'ar gêr hag e lavaras d'e vaouez ar pèz en devoa graet. Kaz ar gêr, hag en devoa doare da gousket, e toull al ludu, o klevet ar pez a lavare e vestr, a lammas ouz e benn hag e skrabas, yuta ma c'hellas, e zivoc'h; klask a eure zoken e zalla hag e vouga.

Red e voe e laza raktal, ker kounnaret ha ma oa. Ar c'haz-ze a ranke beza troet e wad o klevet e oa lazet e roue.

Eur c'houer all eus a Zirinon o oa, eur pardaez, o tizrei eus a foar ar Faou pa glevas trouz kizier oc'h ober o sabbat. Chom a eure a-zav da zelaou a-bell; en eun taol, rener ar vodadeg oc'h en em drei diouz e du a roas eun urz da unan eus ar c'hizier; raktal ar c'haz-man a deuas warzu paotr Dirinon hag a lavaras d'ezan en eur vinoaual : « Kit da lavaret da Vineaou, ez eo maro Kervineaou ! »

Ar gwaz a zizroas d'ar gêr hag a lavaras d'e dud ar pez en devoa gwelet ha klevet. Raktal, kaz an ti, evel m'en divije kollet e benn, a en em lakeas da droi-

dellat en dro d'ar gegin o klask an tu da vont er maez hag o veza ma oa prennet an nor, e lammas er maez, dre ar prenestr, en eur derri eur werenn, ha goudeze ne ve ket gwelet ken. E hano, da gredi eo, oa Miniaou ha marteze e oa aet da glask kemeret plas Kerviniaou a



ranke beza roue pe unan, da vihana, eus mistri brasa ar c'hizier er vro-ze.

Ar c'hizier bet ganet e miz meurz, war a leverer, eo a ya d'ar sabbat, loened t'er d'en em ganna int ha lor'hus ; ar re a vez bet ganet e miz ebrel a vez mat

da logeta ; ar re a vez bet ganet, e miz east, ne ouezont tapa nemed aered, sourded ha tousegi a zegasont gant pres, dirak o mestr, evel dre vrabanserez. Evid o lakat da goll ar voazamant-se eo red divega o lost d'ezo. Bleo eur gazez a c'hell kaout betek tri liou, met bleo eur c'haz n'eu devez nemed eul liou pe zaou. Mat eo floura ar chas ha fall floura ar c'hizier :

Eur c'hi mandruilhet, hanter vaget,
Eur c'haz mandruilhet, hanter grevet.

Ar bleo kizier a zo gouest da ampoezoni tud a lavared gwechall ha darn a zo hag a grede e oa gouest eur vievenn gaz da lakat eur bugel da dapa an droug-skevent ; ar re goz a lavare : Teod ar c'haz a zo ampoezon ; teod ar c'hi a zo medesin : Lakit eur c'hi da lipat d'oc'h eur gouli hag e pareo ; lakit eur c'haz hag e wasaio : Teod ar c'haz a zo garo, evel eun eskenn ; digeri a raio d'oc'h ho kouli hag eva a raio ho kwad. Arabad morse lezel eur c'haz e kichen eur bugel bihan kousket ; pignat a raio warnan hag e bouez her moustro hag her mougo.

E Kap Sizun e vez lavaret ar rimadellou-man d'ar vugale vihan :

Va bichig-me, pelec'h oc'h bet ?
— E ti vamm goz ! — Petra 'peus bet ?
— Tamm bara kig, tamm bara'mann
Hag er ger n'am beveze tamm
— N'oc'h ket bet fouetet. ? — O ! nann !

E Brenellec, e parrez Eskibien, eur c'hilhog, eur c'haz hag eur c'hi a oa o tiviz o zri, o c'hortoz o mestr da zizrei, eus ar vourc'h ; bep sul, e veze mezo, ha pell an noz e veze abenn ma kemere penn hent ar gêr. An tri loenig a c'hortoze e zistro ; ar c'hilhog, pignet e beg eur wezenn a en em lakeas da gana dal m'her gwelas : « Arru ar mestr d'ar gêr ! » ar c'haz a viaouas : « Meo ? Meo ? » hag ar c'hi en eur harzal a respontas : « Ato ! ato ! ato ! »

Pa vez bet eur plac'h yaouank maeronez, evid ar wech kenta, e leverer anezi : « Aet eo er maez eus breuriez ar c'hizier ! » m'oarvat dre ma ne c'hell ket ar c'hizier beza pæroned pe maeronezed.

Arabad eo d'ar vartoloded stlepel ar c'haz a zo war o lestr, er mor, rak neunv a rayo da vont da heul al lestr keit ha ma chomo nerz gantan ha goude ma vezo beuzet e krogo an dichans el lestr ha buan a-walc'h e c'hell beza goueledet. Pa vez finv er c'hizier ha pa vezont gwelet o lammet, a-gleiz hag a-zehou, an dra-se a verk ez eus avel da gaout. Pa weler ar finv-se en eur c'haz koz, an dra-ze a verk ez eus gwall amzer da gaout. Teir veradenn wad skouarn kaz, war a gred darn, en eur werennad win rus a zo eul louzou mat treouz an droug-skevent.

Pa vez eur c'haz, o klask tapa eur voualc'h, e teu dindan ar werenn en eur viaouad, ma 'zeo eun druez eglevet : « Me ne welan lomm ! Me ne welan lomm ! Met ar voualc'h ha n'eo ket genaouok a respont d'ezan en eur zutadenn : « O ! gwelet ! gwelet ! ken eun ha ma teuet ! »

Da eur verc'h vihan klanv e leverer :

— Mignaon,
Marüg a zo klaonv !

— Dichat bichig
N'az po ket Marüg !

Diwarbenn ar c'hizier hag a ra alies an neuz da gousket evit tapa aesoc'h a-ze al logod e leverer :

Arabad fiziout e chouchet
O sonjal ez eo kousket !

Gwechall, mesaerien Kerne o vesa o loened a gane :

Me am eus eur c'hazig rous
A zo tagnous ha pikous.

— Me a raio deuz e benn
Eur podig d'ober soubenn.

Me a raio deus e skouarn.
Diou votezig d'al louarn.

— Me 'raio deus e zaoulagad,
Eul lunedou da ma zad.

— Me a raio deus e fri
Diou votezig da va c'hi.

— Me a raio deus e deod
Eur falc'hig da droc'ha geot.

— Me 'raio deus e zentaou.
Eur rastell da zirosta 'l laou.

— Me 'raio deus e groc'hen
Diou linsel hag eur pallenn.

Me 'raio deus e vouzellou,
Peder zugell ha diou raou.

— Me a raio deus e gov
Eur-hailhig da voueta 'r moc'h

— Me 'raio deus e bao kleiz
Eur mailhig da frika 'n heiz.

— Me 'raio deus e bao diou
Eur mailhig da fritta viou.

— Me 'raio deus e doull flêr,
Eur veskenn d'ar c'hemener.

— Me a raio deus e lost
Eur vazig da drei ar rost.

Ar rimadellou-ze a dle beza koz koz ; savet int-bet en amzer ma ranke pep hini, gant ar pezh a gave, en e ger, kempenn e veniachou-labour ; basou ar c'hezeg a veze kempennet gant groc'hen ar c'hi koz ;

kroc'hen ar c'hizier a veze laket war baz-yeo an ejenned ; kroc'hen an aered a veze laket da staga ar wallenn ouz troad ar freilh.

Gwechall pa veze savet eun ti nevez edo ar c'hiz da lakat-eul boen hec bennak er mogerioù : tud kriz a-wac'h a veze kavet zoken da lakat bugale veo dindan rien diazez o ziez. War a leverer, dindan mogerioù kastell Pont Callec, e kichenik ar Faouet, ez eus bet senelet, ez-veo, eur c'hrouadur evelse ; an aotrou en devoa e brenet digand e vamm, hag an hini bihan a rack m'oa stanket toull ar voger warnan en devoa lavaret : « Ar vein-man a zo kalet, met kalon va mamm a zo kaletoc'h c'hoaz ! »

Gizioù garo e oa ar gizioù-ze, e gwirionez, ha gwella ma oant oa da jacha malloz Doue war ar re o heulie. Peurliesha, kilheien eo a veze laket e mogerioù an ti nevez hag o gwad a veze laket da redek war ar maenkorn, gwech ha gwech ivez e veze laket tousegi ha dreist-holl kizier. O freuza eur voger goz, e skolach Kastell-Paol, e voe kavet, breman ez eus eun nebeud bloaveziou eur c'haz bet klozet eno ha lezet da vervei gand an naon. Ar stumm kemeret gand gorf a ziskoueze pebez maro spontus en devoa bet.

E kastell Combours, e kichenik Dol, el lec'h ma tremenas Chateaubriand, e vugaleac'h, e virer korf eur c'haz bet kavet en eur voger hag e kastell Fontainebleau e kichenik Paris, e virer ivez korf eur c'haz bet klozet en eur voger, er bloaz 1547, p'edod o sevel ar maner-ze.

Baradoz ar c'hizier e Breiz-Izel, eo Enez Sizun. E kement ti a zo eno ez eus eur bern kizier. An A. Carguet, — an darn vrasa eus istorioù ar pennad-skridman, a zo bet dastumet gantan, — a gavas en eun ti eno, er bloaz 1901, seiz torr-ad-kizier bihan o vev, en eur gichen, en eun arc'h koz. Ar pesketaer en devoa

lakat pevar gaz gouez etouez e gizier donv hag an holl loened-ze a en em gleve mat tre. Ar c'hizier goueze a oa ganet diwar gizier a oa bet laket a-raok an Dispac'h, e enezenn Kilaourou, da ober brezel d'ar razed a oa degouezet a gantchou eno, eus goueled eul lestr eus ar Holland en devoa graet pense e Penn-ar-C'haz.

Ar razed-ze a zebre an ed, al legumach, kement tra a gavent hag a lazaz an darn vrasa eus ar c'hizier. En enezenn ar c'hizier a gav o bevans er mor; mont a reont da besketa, pa vez diskennet ar mor, en toullou dour a gavent etre ar c'henrez; gand eun taol pao o zaolont war an traez. An aod ma vez beuzet enni ar c'hizier bihan a zo hanvet Porz-Kaig.

Gwechall, epad ar C'horaiz, tud ar C'hap, a veze el Loc'h e Plogoff, o vrennika pa veze izel ar mor. Eur pardaez, eur c'haz, a yeas da heul e vestr hag o veza kavet eur vrennigenn hanter zistag diouz ar roc'h ec'h en eun lakeas d'he lipat. Ar vrennigenn a en em stagas ouz ar roc'h hag a bakas teod ar c'haz etre he c'hrogenn hag ar roc'h. Ar c'haz a viaouas da c'hervei e vestr : « Me eo emezan, me eo ! » — « Piou ? » eme ar mestr. — « Me eo ! eme ar c'haz krenfoc'h krenfa. Ar mestr kaer en devoa sellet ne wele den hag a dec'has ac'hano hanter spountet. Ar c'haz a en em lakeas neuze d'en em erbedi ouz ar vrennigenn :

Lez ha me da lezo !

Met ar vrennigenn, didruez, a respontas :

Erru al lano hag hor beuzo.

Autronoz e voe kavet ar c'haz beuzet, a-stok-korf, e traon ar garreg.

G. P.

Buhez tud ou farrez

Va farrez, eur vourc'h vras, a zo enni tri rumm dud :

1^a Bourc'hizien ha bourc'hizezed, eur guchenn hepken.

2^a Micherourien, kenwerzerien, eur bernig brao anezo.

3^a Ticien, darn anezo en o leve, darn all merourien hepken, hag ar rumm-ze eo a galz an niverusa.

War an dastum madou evid ar c'horf, an tri rumm dud-ze a zo kevatal. Holl e poanont, lod da c'hounit bara hepken ha darn all da c'hounit bara hag aour gantan. Holl e kemeront muioc'h a breder gant o c'horf eget gant o ene.

Em parrez, an dud a zo sioul, sentus ouz al lezennou a c'houarn ar vro. Trouz na dizunvaniez n'eus ket nemeur er familhoù ha pa zigouez eun tamm tabut bennak, peurllesa an evachou krenv eo a zo da damall. An dud aman a oar brao gwalc'hi ha-skaota o dilhad lous er gêr, koulz war ar maez evel e kêr, ha nemed dioc'h eur red, e vez lezet an archerien er c'hazarn.

Eun tamm feiz toc'hor o deus ar vourc'hizien aman, ha pa vezont bet da zul en oferenn eiz eur, e kav d'ezo n'o deus mui netra da ober evit Doue. Ar bourc'hizezed avat a zo krenv en o feiz, ha dre-ze ivez leal en o c'henwerz, mat d'ar paour.

Ar vourc'hizien a vez o sakramanti diou, teir gwech er bloaz, hag ar bourc'hizezed, e-leiz anezo bep miz.

Ar vicherourien a glask an oferenn vintin dre ma 'z eo ar verra, ha pôted ar c'houarnamant ne vezont ket war-dro. Ar vicherourien a vez eur wech er bloaz pe diou o kovez, dre ma vezont poulzet peurllesa gant o gwagez. Ar feiz, siouaz, a zo ivez toc'hor e kalonou ar vicherourien.

Petra zo kiriek da ze, nemet ar skoueriou fall a welont bemdez dirazo, skoueriou fall skignet aman hag a-hont gant mevelien Paolig Lusifer! Ar gerent ivez, klouar o unan en o feiz, ne daolont ket a evez a-walc'h war o bugale.

Ar goueriaded a vez bep sul ha bep gouel en ofisou, alies o sakramanti ; ar re-man o deus eur feiz krenv ; doujans Doue a zo en o c'halonou, tud onest, tud vat e pep doare evit ar pezh a zell ouz ar relijion hag an dud a iliz.

Ar vourc'hizien em parrez a lenn bemdez eur gazetenn pe gazetenn, met n'eus ket eun hanter-douenn hag a lenne kazetennou fall da lavaret fall, hag an tri pe bevar a lenn ar re-ze a zo pennou skanv, traou dibocell ha n'o deus ket a-walc'h a zeskadurez evit dispartia ar gwir diouz ar gaou. Ar vicherourien n'eus ket nemeur anezo o lenn ar politikerezh fall; n'eus nemet tri pe bevar darzot o lenn ar « C'hri du peuple » abalamour ma c'hortozont e tivero eun deiz ar mell diouz ar mogeriou, ma lennont ar gazetenn-ze. Petra zervich! war eun niver bras a dud, e kaver ato eun droch bennak!

Ar vicherourien em parrez a zo pôted sioul, daoust ma vagont gwarizi a eneb o mistri; met gouzout a reont ez eo red d'ar vioc'h peuri el lec'h m'eo staget, ha kentoc'h eget kaout trabas ouz o gwagez hag ouz o mistri, e chomont da beurri eur peuri tougn. Ober a reont eur beva-bevaik, met beva a reont.

An ticien aman a zo bet hag a vezo evit doare ato taget gant klenved an dastum!... Seul vui, seul c'hoaz! ha re alies e welan ar pinvidig o sailha war ar paour; gwelet a ran diloja eur paour evit lakat koat, raz ha ludu-du en e lec'h. Gwelet a ran ar pinvidig o tiloja tri rumm tud evit en em loja e-unan.

Gwelet a ran tenna eur park, eur foenneg digant eur paour, evit ma c'hallo ar pinvidig kreski e leveou pa lakat enno e vugale e-unan. Gwelet a ran ar pinvidig oc'h ober kraou gant ii hag o teurel er maez eun intanvez gant bugale yaouank!... « Te da genta, met me a-raok » a lavar ar pinvidig d'ar paour!...

Setu ar vuhez em parrez! Ar gwasker bras a wash mui ma c'hall, hag ar paour kaez gwasket ne c'hall ket gwikal! Brezel evid ar Vuhez eo a hanver an dra-ze! Eun druez eo ha netra ken!

« Na rit ket d'ho nesa ar pezh ne garfec'h ket a ve graet d'eoc'h! »

Siouaz! ar c'homzou-ze a zo koz ha pelj zo ankounac'haef gand an dud, gand ar Gristenien zoken! « Pep hini evitan e-unan, setu ar pezh a zo gwir hizio, dre-holl! « En em denn alese, ma 'z in aze ez lec'h, ma vezo d'in an dachenn zo ganez! »

Setu eur wirionez all, eul lezenn all ha hi koz ha bepred nevez, dreist-holl evid ar goueriaded, hag a deu da veza muioc'h-mui digalon e kenver ar paour.

Gwelout a ran e teu an tielen, hirio muioc'h eget bis-koaz, da veza lorc'hus, otus, bras an tamm anezo! Ar brezel, hervez a welan, en deus graet vad d'ezo dreist-holl! Mar deo mat kaout ar pezh a zo red wardro eun tiegez evit gwellaat an tiegez-ze, ez eo iskis forani an danvez e traou didalvez.

Lavarit d'in ha n'eo ket forani an danvez prena tri marc'h-houarn da dri mab eun tiegez! lavarit d'in ha n'eo ket forani an danvez prena peder gwakol blevek da beder merc'h an tiegez evit mont d'ar pardon gant ar gwakoliou-ze pa vez an heol o vennout terri e c'houzoug! Lavarit d'in ne foranit ket ho tanvez pa brenit chadennou aour d'ho merc'hed ha loereier gwiad-kernid hag a vezo brein pa vezint bet gwisket eur wech pe diou! Foei! ar-c'hant en arrelach a rankit da gaout, evit heulia modou kêr, ha netra ken! » Tud diskiant, tud diboell! Hag a rendaelon, hag a dabut n'eus ket hirio en tiegeziou, netranemet diwarbenn ar marc'h-houarn, ar manegeier, ar gwakoliou blevek ar chadennou aour al loereier seiz hag all!

Peurlies a n'eo ket ar re goz eo a zo da damall, met ar yaouankizou, ar baotred, ar grennarded, a vec'h ma c'houzont c'houeza arvat o fri, eo a zo o tigeri trouz evit kaout eur marc'h-houarn da vont d'ar park da ved ar zaoud, da vont d'ar pardon, d'ar redadegou kezeg ha me oar me da vont da bet lec'h e rank ar moumoun kaout eur marc'h-houarn! Ar vev'hig vrao, kerkent ha ma vez diskoliet, dioustu ma 'z eo kroget da c'hounit eun draik bennak, ne gav ket dereat mont er maez eus he zi ma ne vez ket gwisket evel liboudennou kêr, ma n'he devez ket eun tamm gwakol war he dioukoaz, eur manegou war he daouarn!

Ar c'hiz a zo, hag ar c'hiz a ranker da heulia! a leverot. Ha me a lavaro d'eoc'h heulia ar c'hiz, libr oc'h, mar hoc'h eus aour ha mar kav d'eoc'h e c'hallot kenderc'het gand an trein-ze! Koulskoude, evidon-me, ma vijen da zibab eur pried, n'eo ket ouz ar wako! nag ouz ar manegou eo e sellfen, met ouz an hini a zo dindanno. N'eo ket ar stern eo a ra ar marc'h nag al liou ar wetur, ha moarvat e kavin meur a zen fur da drei a du ganen. Anavezet em eus eur plac'h yaouank peultriner hag a lavare e oa gwelloc'h ganti beva bemdez diwar kafe ha kaout dilhad kaer da wiska! marvet eo peultriner diwar he c'hafe, hag he dilhad kaer n'int ket aet ganti en douar. Kalz c'hoarezed he deus ar plac'h yaouank-ze, c'hoarezed hag a zo goulo o c'hof, met a zo fanfarluchou en-dro d'o c'horf, taget marteze gand eur c'hlenved. Piou a oar! Beza gwisket dereat a zo mat, beza gwisket hervez ar renk a zo kaer met iskis eo diskouez dilhad brao pa vezer plac'h yaouank, ha gwiska truilhou eur wech dimezet!

Morse ne vezo pouezet a-walc'h war an tech fall, re stank siouaz en hor Breiz, me lavar ar vezventi. Koulskoude, ar roulerien er barrez-man n'int ket stank. En tiegeziou ez eus gwin, a brener a veltadou, hag a vez evet pa deu unan bennak a ziavaez pe pa vez labourou fenn, ar foenn, pe an eost. Gwasa zo, ma ne ev ket en e di, an tieg, kerkent ha ma 'z a d'eur marc'had pe d'an oferenn, a gav war e hent eur Per pe eur Paol bennak, ha kerkent d'an osteleri! Eur medisin bras hag a zo c'hoaz beo, en deus lavaret n'eo ket graet korf an den na gant gwin na gant evach all ebet, nemet gand dour; ha pa vez sec'hed, sec'hed dour eo a vez ha nann sec'hed gwin! Ar gwin emezan, n'eo ket magadur, met eun ampoezon bihan n'eo ken! Farsus eo gwelout e kemerfe an dud ar c'hiz da lavarout ha da c'houlenn yec'hed an eil d'egile, d'an ampoent m'emaint oc'h en em ampoezoni an eil egile! N'eus ket, ha ne vezo biken kavet eur c'hiz sotoc'h eget ar c'hiz da vont en eur osteleri gand eur mignon da zispign gantan pevar real evit hen ampoezoni. Bah!... eur banne na daou n'hellont ket ober droug da eun den, n'eus forz piou eo, evel ma ra daou daol bouc'hal e traon eur wezenn deo!

Da genderc'het.

AN TRI ANGELUS

gant TALDIR

Air gallois : *Llwyn Onn.*

Sa - vet, sa - vet, Bre - to - ned, Se - tu, ar min - tin, o
 to - ned, An An - ge - lus a zo so - net barz en lein an
 tour! Ar par - kou, an tre - va - jou, Al li - or - zou hag ar
 pra - jou, Ar gwa - rem - mou hag ar c'hoajou, A c'halv d'al la - bour.
 Kro - gomp holl gant hon de - vez, Ka - somp al loe - ned
 er mæz, Har - di, me - vel ha ma - tez, Holl d'en em zi -
 kour! Sa - vet, sa - vet, Bre - to - ned, Se - tu, ar min - tin o
 to - ned, An An - ge - lus a zo so - net, barz en lein an tour!

1

2

Savet, savet, Bretoned,
 Setu ar Mintin o toned,
 An Angelus a zo sonet
 Barz en lein an tour.
 Ar parkou, an treva-jou.
 Ar goaremmou hag ar prajou
 Al lanneier hag ar c'hoajou
 A c'halv d'al labour.
 Krogomp holl gant hon devez,
 Kasomp al loened er mæz,
 Hardi! mevel ha matez,
 Holl d'en em sikour.
 Savet, savet, Bretoned,
 Setu ar Mintin o toned,
 An Angelus a zo sonet,
 Barz en lein an tour.

Poaniet, poaniet, Bretoned,
 Setu ar c'hreizde o toned,
 An Angelus a zo sonet,
 Barz en lein an tour.
 Pephini a gemero
 Kalon da doulla e ero,
 Hag ar c'hrovou a vo dero.
 Pa voint el labour.
 Pa ziwano an hadenn
 Ar bed en do bara melen,
 Pa zarêvo an avalenn,
 Vo evet jistr flour.
 Poaniet, poaniet, Bretoned,
 Setu ar c'hreizde o toned,
 An Angelus a zo sonet,
 Barz en lein an tour.

3

Kousket, kousket, Bretoned,
 Setu an noz du o toned
 An Angelus a zo sonet,
 Barz en lein an tour.
 Hadet eo an treva-jou
 Falc'het eo bet ar prajou,
 Diskouret eo ar c'hoajou.
 N'eus bet den leizour.
 Echuet eo an devez,
 Prennet eo an tiegez
 Skuiz eo mevel ha matez,
 Fin zo d'al labour.
 Kousket, kousket, Bretoned,
 Setu an noz du o toned,
 An Angelus a zo sonet,
 Barz en lein an tour.

— Goulenn a c'helher ar zon-man da brena, a gantchou,
 gant diou ganaouenn all, digant an A. F. Taldir Jaffrennou,
 Keræz.

○ dousder !

- dousder noziou Breiz, pa gouez diouz an touriou
 Trede Angelüs ar c'hloc'h bras,
 Pa ehan ar c'houer, er park, e labouriou,
 Evit pedi al « Leun a c'bras » !
- dousder moriou Breiz, pa ziskenn, gant e c'hoar,
 An heol rez an dremwel, d'ar red;
 Ha pa zihun, en nenv, e kelc'h, en dro d'al loar,
 Ar stered aour, plijus ñpred.
- dousder krec'hioù Breiz, duoc'h da o zal rouz,
 Dre ma ya sked an noz war gresk:
 A boan ma klevan c'hoaz o vont war-raok, nep trouz,
 Ar gwaziou, leun a zeliou fresk.
- dousder parkou Breiz, gant c'houez mezvus o bleun
 Ken brao troet o fenn d'an traon;
 Skoret war gein ar c'hae, diwallet gant ar c'hleun,
 Holl aze e kouskint hep aon.
- dousder koajou Breiz, pa dav an aveliou :
 Al laboused a zo aet mud,
 Darn war ar skourrou moan, darn all doun en deliou,
 E voredont holl en o c'hlud.
- dousder tiad Breiz, dirag krouer ar bed
 Daoulinet war an douar-noaz;
 Grasou a rô Doue da biou bennag a bed,
 E zañtarn evelse e kroaz.
- dousder kousk hor Breiz, pa sell piz ha pa wel
 He c'houstians dinamm, d'an noz;
 Dont a ray, diouz an nenv, tiz warno, meur a El,
 D'hel laouennat gant hunvreoù roz.
- Sant-Brieg, 3-6-32.

J. L'HELGOUAC'H, O. M. I.

Ar goukou

E miz ebrel, awêchou en derveziou kenta, pa vez
 tomm an amzer, awechou diwezatac'h, wardro ar
 bemzek, e vez klevet ar goukou o kana. « Koukou!
 koukou! koukou! » An dud, oc'h he c'hlevet, a vez
 laouen hag a lavar: « Em 'an erru an hanv, rak en em
 gavet eo adarre ar goukou er vro. »

Hiniennou, kerkent ha ma klevont ar goukou, a vez
 gwelet o skrabat o godell, da c'houzout hag o deus
 pemp gwenneg, rak m'o deus pemp gwenneg neuze, ne
 vo morse goullo o godell epad ar bloaz. Pemp gwenneg
 o devezo atao.

Ar goukou a zo eul labous hag a vev dishenvel diouz
 al laboused all. Ken bras hag eur goulm, eun troatad
 hirder eus he beg d'he lost, plun louet ha gwenn war
 he c'hein, ar goukou a zo bras awalc'h. Da nijal n'eo
 ket gwall vat; mont a ra eus eur wezenn d'eun all, hag
 alies e kar diskuiza. Lavaret e vije n'he c'hell ket en
 em glevet gand al laboused all eus he gouenn; pep kou-
 kou a gemer he c'horn-bro, hag eno e fell d'ezi beza
 rouanez ha mestrez. Ma teu eur goukou all da gana
 tost d'ezi, ez aio e kounnar hag e raio brezel d'he
 c'hoar; a daoliou beg ez aio d'ezi beteg he lakat d'ar
 maro ma vez ret.

Al laboused all, en nevez amzer, a ra o neiziou, a
 labour hep damanti da glask ar pezh a zo ret: plouz,
 plun, reun, kinvi ha pep seurt tracu. Ar goukou, hi, a
 zo eun itroun vras. Lezirek eo ha diegus. Ne ra netra
 nemet kana! « Koukou! koukou! » — « Me, emezi,
 kemeret poan d'ober va neiz? Oh! ne ran ket. Me am
 eus servicherien endro d'in. Ar re-ze a labouro evidon. »
 Hag ar goukou a glask er c'haeou neiziou al laboused
 bihan, alc'houeder, meteneg ha re all. P'he deus kavet
 eun neiz ennan viou, ar goukou a vunt ar viou-ze er

maez eus an neiz hag a zof hec'h-unan he-viou en o lec'h. Penaos e vezint goret? N'e ket gant ar goukou. eo, met gant al laboused bihan a zo bet laeret o neiz diganto. E lec'h stlepel d'o zro viou ar goukou er maez eus o neiz, ar re-man a daolo evez outo o zommo gant teneridigez dindan o flun, betek ma tigorint ha ma tenuio koukoued bihan anezo. Piou a voueto ar reman? N'e ket ar goukou koz eo adarre, met al laboused bihan o deus goret ar viou. Ar reman a labouro adarre a-zevri da glask boued da vugale ar goukou a zo bras o c'hof hag o devez naon atao.

Alies, e miz mezeven, e weler eur goukou o nijal hag endro d'ezi eul labous bihan pe zaou. Al laboused bihan eo ar re a zo bet laeret o neiz d'ezo, hag ar goukou a heuillont eo an hini a zo bet savet ganto. Kredi a reont, sur awalc'h, eo merc'h d'ezo, hag o deus karantez eviti, evel m'o deus an holl loened evit o re vihan. Met dizale e vezint dilezet gant an hini a gemeront evit o merc'h. Houman a en em ziskouezo diannaoudek e kenver ar re o deus he zavet, he maget, ha deuet fin mezeven, a guitaio hor bro evit mont da vroioù all, rak, evel ma vez lavaret,

Deuet Gouel Yann,
Aet ar goukou d'al lann
Deuet Gouel Per,
Aet ar goukou d'ar ger.

Tri miz hepken e chom en hor bro. Met epad an amzer-ze pet gwech he deus kanet « Koukou », den ne c'hellfe hel lavaret. Kerkent ha goulou deiz e vez klevet, edoug an deiz ive ha diouz an noz adarre.

Ouspenn kana a ra evelato. Ret eo debri evit chom beo. N'he deus kavet labous all ebet da glask boued d'ezi hag hec'h unan eo e klask prenved a bep seurt da zebri evit terri he naon. Plijadur a ra d'an dud klevet ar goukou, rak an tri miz a drempen ganeomp a vez purliesha an tri miz kaera eus ar bloaz. Y. U.



Marvailhou

1. — *Rabati reer atao.* — Eur person en deus skrivet kement-man.

Digouezout a ris eun derves e ti unan eus va farresioniz, Jerom, tonton Jerom, a rea ar vignoned anezan. N'edot ket ouz va gedal.

Jerom a oa eur c'hristen mat hag eun tad skouerius, ouspenn ma 'z oa eur micherour ampart en e labour. Eur peziad den a oa anezan, ha me lavar ne vije ket bet brao mont dirazan da wapât ar relijion hag an traou santel.

Edo azezet e kichen ar prenestr, e vab gantan war benn e c'hlin (an navet eus e vugale).

— Doue r'ho pennigo, Jerom, eme-ve d'ezan, yac'h oc'h?

— Bennoz Doue, d'eoc'h ive, Aotrou Person; ne dan ket fall, evel a welit... Ha c'houi?

— Kavet ho peus da ober gant ho mab, evit doare?

— Dres. Aotrou Person, edon o teski d'ezan ober sin ar groaz. Gwelomp, Fanchig, diskouez d'an Aotrou Person penos e reer sin ar groaz. Ha gra mat, klev, evel em eus desket d'it.

Fanchig a oa diskennet d'an douar hag a zelle lentik ouz e dad endra ma lamme direiz e galon en e greiz. Hag hen da ober eur mell sin ar groaz, o kas krenn e vizied eus penn pella ar skoaz kleiz da benn pella an hini zehou.

— Mat! Mat sur! a lavaras an Aotrou Person. Eun tam-mig e kavan gwall vras koulskoude ar sin ar groaz-se, Jerom, ne gavit-hu ket?

— Mont a ran da lavaret d'eo'h, Aotrou Person. Re vras eo marteze eun draig hennak breman. Hogen, gant an amzer e teuer ato da rabati...

Kentel. — Greomp mat ato hor sin ar groaz, na re vras na re vihan, ha diouallomp da rabati warnan morse.

2. — *Pa ne vez kountell ebet.* — Eur paour kaez dall a yea' dre ar vro bleinet gant e gi blevek, a zor da zor, o klask an aluzen. Eun dervez ec'h en em gavas gant aotrou person Pouhervé dal ma teue er maez eus ar prespital, el lec'h m'en doa graet tro wenn.

— Ac'hanta, Jakou, penos eman ar bed ganez? a c'houlennas an Ao. Person.

— Asa, c'houi eo, Aotrou Person? Bed oun du-ze, ha n'edoc'h ket er gêr, ha setu em eus graet tro wenn...

— Penos? N'ec'h eus ket bet da damm bara?

— Nann, Aotrou Person; an itron, ho mamm he deus lavaret d'in dont eur wech-all, abalamour, emezi, n'he doa kountell ebet da drec'hi eun tamm d'in.

— Dizro du-man ganen! a lavaras an Aotrou Person.

O tigouezout er prespital, an Aotrou Person a yeas war-eün da arbenn ar bevans. Krêgi a reas en eun dorz vara, hag eus e zaouarn ez eas war-eün e sac'h ar paour kaez dall.

— Oc'h ober petra emaoch 'ta, Aotrou Person? a lavaras an Itron, e vamm, o tigouezout.

— Va mamm, eme heman o c'hoarzin, pa ne vez kountell ebet e roer an dorz en he fezl...



Sant Yann hag Herodez

HERODEZ

Deuet oun, Yann, d'az kwelout... ne rez nemeur a van;
Chom a rez dilavar, azezet war da vean...
Na yenat d'eur roue, da vignon!

SANT YANN

Va mignon, c'houi!...

HERODEZ

When tou, va dourn war va c'halon...
Az karout a ran kals; te' blij d'in dreist an holl,
N'eus ket eun all par d'it e bro ar sao-heol.

SANT YANN

Petra rafec'h eta d'ar re na garit ket
Pa zouarit ez veo ho kwella mignoned?
Eun toull, noz-du ennañ pa vez deiz e pep lec'h,
Peder chadenn houarn stardet war va divrec'h,
Mogeriou glazennek, dour ha bara divlaz,
En-dro d'in soudarded gant o c'hlezeier noaz...
Setu eno, nep aon, merkou a vadelez...
Hag am c'harit!... Nann, nann, goap a rit, Herodez.

HERODEZ

Perak ivez, Profed, perak emaoat atao
O klask va fistiga gant da gomzou c'houero!

SANT YANN

Selaouit mat! An neb a gomz a-berz Doue
A zo dir war e dal ha nerz en e ene.
Eus an Nec'h em eus urz da grial hep paouez:
« Pinijen, pinijen, grit an heñchou kompes;
Goulaouet eo an deiz an heol a zo savet,
List oberou an noz, tec'hit diouz ar pec'hed.
Na larit ket: « Ni 'zo bugale Abraham! »
Diwar an naered oc'h, flemm hoc'h eus ha koutamm...

Ha petra dalvfe d'eoc'h beza eus eur ouenn vat
M'en em daolit d'an droug ha ma rit mez d'ho tad ?
Doue m'en defe c'hoant, er vein a zo aze.
A c'houezfe ar vuhez 'vit ober bugale.
Pinienn, pinienn... lemmet eo ar vouc'hal,
Hep truez e skoio, gwaz a se d'ar gwez fall.
Dizale an tieg a skubo naet e leur,
Ar skao-du ' vo stlapet da zevi en tan-meur;
Gouelit, huanadit, grit pinienn ervat,
Rogit ho kalonou, ha n'eo ket ho tilhad. »
Setu eno, roue, petra 'm eus lavaret
Da galz tud er gouelec'h, holl e vezent mantret;
Evidoc'h-hu, siouaz ! ne rit muioc'h a van
Eget an dud varo kousket dindan o mean.

HERODEZ

Tra ! n'oun ket eur sant bras; mar dan d'ar baradoz
E vezo krip-ha-krap, n'ouzoun ket re penaos.
Met piou eo ar Profed savet en hon touez
A c'houlenn e ve graet an heñchou ker kompes ?

SANT YANN

Emañ war an uhel, emañ 'barz an draonienn,
Vad a ra, e pep-lec'h, d'an dud klañv, d'ar beorien;
Dre ma 'z a, ar re zall kouls ha ni a wel sklear,
An neb n'hell ket bale a vez nerzet e c'har,
Ar re lor o-unan, skantet warno ar c'hig
'Vez dre eur gomz, laket naet 'vel eur bugelig.
Ar mor hag an avel, ar vuhez ar maro
A oar e anaout hag a veul e hano.

HERODEZ

Diouz da lavar, hennez a ra kalz burzudou.

SANT YANN

N'oun ket din da blega 'vit diskoulm e voutou.
Trida ' ris dirazañ a-raok m'oañ deuet er bed
Trida ' ran hizio c'hoaz ker mat eo emandred.
Ya, me, geotenn dister, gwiziennet er gouelec'h.
Me poultrenn ha ludu, me preñv buhezec'h,

Me 'm eus bet an eurvad, war ribl stier ar Jourdin,
Da welout mab an Neñv. Jezuz, an Oan divin.
Deuet eo betek ennoun, stouet en deus e benn,
O burzud !... badezet eo bet gant dour an den.
Pa savas eus an dour, an Neñv a zigoras,
En eul lez aour ha tan ' voe trôet an oabl glas,
Eur goulm a denn-askell a nijas da Jezuz,
Hag eus barr an Neñvou, eur vouez c'halloudus :
< Sed aze, emezi, va Mab mui karet,
Setu va Mab unik, melezour va c'hened
Selacuit-heñ... » Jourdin, o ster dous ha santel,
N'hellin muioc'h ho kwelout, nann mui a-raok mervel !

HERODEZ

Me ' garfe da denna eus ar prizon dioustu
Met goude Du siouaz, emañ d'ar red Kerzu;
Te ' gomzo em enep hag emberr marteze
E rankfen er bac'h-mañ da zastum adarre.

SANT YANN

E-pad ma vez arne e vez kurun ha tan,
E-pad ma viot fall e klevot mouez Yann;
Grit pinienn pe deoc'h me ' c'hourdrouzo gwalleur;
Perak en ho palez e falc'hit gwreg ho preur ?

HERODEZ

Me, ober pinienn, a-grenn trei kein d'ar c'hig,
N'her grin, kleo mat, nemet pa vezin maro-mik,
Gwelloc'h e ve ganin mont e kriz gant Satan
Eget kas en he hent eur vaouez a garan.

SANT YANN

O roue dall !

HERODEZ

Ken dall, ker fall ha ma kiri;
Rak-se, profed, na zeu ket d'am heskinat mui;
Daic'h kloz da zaoulagad, klosoc'h c'hoaz da c'henou,
Evel m' emañ emañ, na trouz na rebechou.
Me, Yann, ' zo galloudus, en tu dehou en tu kleiz

Ez eus tud war evez 'vit va diwall noz-deiz;
 Me 'm eus kezeg, kirri... pa evan' gwin pe zour
 N'eo ket e kleuz va dourn, met en eur c'halir aour;
 Na da ket da gredi em be aon rak Doue,
 An ifern n'eo ket graet d'an dud eus va doare,
 Ne ran 'ta forz ebei eus tan-meur na bouc'hal.

SANT YANN

Er gouelec'h e klevis leoned o yudal,
 O mouez a oa flour en keñver ho hini;
 Skrija 'ran holl ouz o selaou vlasfemi.
 Ar pec'hed, Herodez, a iemm bouc'hal Doue
 Neuze e sko, e trouc'h, evel luc'hed an neñv;
 Kant ha kant mil soudard d'ho tiwall ' ve dister
 Ho marc'h glas e-unan, ker skañv e ziwesker,
 Ma klever trouz e hern o skei taer taer an hent
 'Vel eur barrad kazarc'h war eun dôenn vein-sklent,
 Ho marc'h glas dindanoc'h a gouezo, sounnet-reut
 Pa falvezo d'am mestr lakat varnoc'h e vend.
 Taolit evez, m' ho ped, war maro eur rone all;
 Ho tad ' oa Herodez, pa rankan komz leañ,
 Ha niveret hoc'h eus ar preñved dizoarc
 A verve war e gorf, her sune, hen debre
 Mat, ken niverus ' oant hag ar vugaigou
 A veuzas en o gwad war galon o mammou;
 Dourn Doue 'zo pounner, pounner evit an holl,
 Pounneroc'h c'hoaz evit ar rouaned dirol,
 Eur gurunenn 'zo kaer e-pad ma vez buhez
 Met nag hi wask ar penn pa ziskenner er bêz!

HERODEZ

N'am sponti ket.

SANT YANN

Klevit, c'houi ' lavar oun profed,
 Mat, ho setañs bremañ a welan displeget;
 Eur vantell a daolot eun deiz dre c'hoaperez
 War ziskoaz Mab Doue disgaset d'ho palez;
 Rak-se, en eur vro all c'houi ' varvo karluet.
 Ker paour ha ken noaz ma vo mez ho kwelet;

Goude ho tremenvan n'ho po ken lienenn
 Nemet an tammou teil staget ouz ho kroc'hen,

HERODEZ

Ba! Ba! Kaoziou! — Eur gcr... gra d'in hizio al le
 E laoski disafar Herodez da roue,
 Hag out libr, ha te, Yann, maget gant mel goñez,
 Te dañvaio ganin dudiou eur palez.

SANT YANN

Biken !

HERODEZ

E-lec'h kroc'hen eur c'hanval disvlevet...

SANT YANN

Dalc'hit ho tilhad flour d'eur vaouez divezet:
 Va frizon a blij d'in, karout ' ran va chadenn
 Ha pa viot aet kuit, an toull-mañ ' vo laouen.

HERODEZ

Diwall !

SANT YANN

N'em eus ket aon, met d'it-fe eo krena,
 An douar skuiz ganez a garfe da lounka.

HERODEZ

Diwall a lavaran...

SANT YANN

O mez ! o falloni !

Pried da vreur, da vreur, a zalc'hez en da di !
 Kerz, kerz,... c'houez ar pec'hed a zo gant da vantell,
 Ruzder ar pokou fall ' zo c'hoaz war da vuzell.
 Kerz diouzin...

HERODEZ

Ké ' toa!

SANT YANN

Da belec'h ez ez 'ta ?
 N'eo ket dre 'n hent-se eo, an nor a zo ama.

Yann WILHOU



Trugarez d'eoche ! Kendalc'hit !



Miz Gouere! miz ar foenn! Tostaat a ra' ar vakansou, bugale; n'it ket da ankounac'haat ema er miz-man, d'ar meurzh 26, gouel santez Anna, Mamm hor Bro.

Karit santez Anna koulz hag he merc'h an Itron Varia hag he mab-bihan Hor Zalver Jezuz-Krist. Karit ivez ar brezoneg, yez kaer Breiz; e brezoneg eo e komize santez Anna ouz Yvon Nikolazig, p'en em ziskouezas d'ezan, du-hont e Keranna, breman ez eus tri c'hant vloaz hag eun dra bennak !

Fizians am eus ennoe'h, bugale geiz ha gwelet a ran e fell d'eoche labourad a-zevri an dachenn lezet ganeoc'h e *Feiz ha Breiz*.

Sevel a rit istarioù berr; dastum a rit gerioù fentus; darn ac'hanoc'h zoken a zav skeudennou: *Feiz ha Breiz ar vugale*; eo ho tra ha gwelet a ran e klaskit gwella ma c'hellit e lakaat dit zont da veza bravoc'h brava.

Pactred ha merc'hed bihan Breiz-Izell etre ha taouarn ema amzer da zont *Feiz ha Breiz ar Vugale*; skrivit ennan; klaskit lennerien nevez d'ezan ha ra gouezo warnoc'h bennoz ar Vamm Goz Santez Anna.


AR BREUR BRAS.

P. S. — Kasit ho liziri d'an A. Perrot, Rener *Feiz ha Breiz*, Scrignac (Finstère), a en em gargo d'o degas d'in da Paris.

SPERED HON LENNERIEN



— Pegeit a zo aboe m'eo keract ar bara?
 — Aboc an de-man.
 — O! mat! roit d'in diou dorz neuze aboe dec'h !



— Va zad, hunvreet em eus, en noz-man ho poa roet pevar real d'in.
 — A! mat! p'eo gwir out bet fur, dalc'h ar pevar real-ze ganez neuze !



Soazig. — Va zad, c'houi po peus anavezet Adam hag Eva?

An Tad. — Nann! va merc'h n'aoun ket koz a-walc'h evid an dra-ze.

Soazig. — Neuze e rankin goulenñ ouz tad koz.



Ar mistr. Pegoulz a vez dastumet an avalou?

Laouik. — Pa ne vez ket ar « gard-champêtr » a-well!

Yannig ar Marlouk



Mamm! Yannig he deus graet fars-fourn; ar paotrig a zell outan, an dour en e c'henou; e vamm a lavar d'ezan mont da glask boued d'al lapined.

— N'in ket hizio, eme Yannig, feuket!

— N'es ket da lezel da ober, ac'han da war-choaz, ar pezh a c'helles da ober hizio!

— Mat! Neuze, eme Yannig, e c'hellan debri, hirio, ivez, ar fars-fourn ho peus graet bremaik

(Skrid kaset gant Andre Prat ens Skolach Itron Varia ar Wir Zikour, Brest).

FAZI

An Aotrou Leon ar Bourc'hiz a ra bemdez a-riek e lein eun dro war ar « C'houez d'Arjet », e Brest, en eur lein e gazetenn.

Eun dervez e oa ken treet e speret war geier ar politik ma valeas heb e zonzal war eur c'hi bihan: heman, glazet, a youc'has gand ar boan!

— Pardonnit va dieveded, eme ar Aotrou Bourc'hiz, e fri, ata, en e gazetenn a-raok beza gwelet an hini en devoa glazet.

Antronoz, e tigouezas gantan ober kement all, met e lec'h eur c'hi, eun Itron goz eo a c'hlasas:

— Loen fall 'zo ' c'hanout, hep sellet adarre da welet piou en devoa glazet, perak e rankes en em gaout evelse, etre va zreik, bepred!

Skrid kaset gant Mauris ar C'lec'h Skolach I. V. wir Yikour, Brest.



Liziri hol Iennerien

Etouez liziri hol Iennerien setu aman unan, skrivet e brezonek ya'c'h, gand eur verc'hig hag a gar kals he bro hag en deus graet kals plijadur d'ar Breur Bras.

Bugale, dleet eo d'ec'h kemeret skouer war ar verc'h-se :

Poullan, 19 a vis mae 1932.

Aotrou Rener,

Hor mestrez-skol he deus lennet d'eomp Feiz ha Breiz ar Vugale. Plijout en deus graet kals d'eomp; goude ar « certificat » e c'houlennimp aotre digant hor c'herent


d'en em gomananti d'ezan. Kas a reomp d'ec'h eur ger brao lennek dastumet en hon touez.

An Aotrou'n Eskob a zo bet ouz hor gweled evid ar Gonfirmaston; kanet hon eus d'ezan en hor yez karet hag en deus lavaret d'eomp ne oamp ket eus a Vreiz Kousket.

Resevit, Aotrou Rener, hor gwella doujans.

Evit bugale Poullan,

Mari CANEVET.





STOURM AD GREGONT.

E hanter ar pevarzekvet kantved, ar Zaozon a oa diskennet en hor bro ha ne raent nemet gwasa ma c'hellent d'ar Vretoned.

Pennbroc'h oa hano mestr ar Zaozon ; e Ploermel edo o chom ; e dud a en em skigne ac'hano war ar maez.

Beaumanoir a velas eun dervez eun daolenn druezis hag a reas kals poan dezan : kouerien geiz, staget gant chedeun houarn, qaou ha daou pe dri ha tri, o vont d'ar prizon gand ar Zaozon evel loened o vont d'ar marc'had.

— Aotrou Pennbroc'h, eme Veumanoir, n'ho peus ket a vez oc'h ober kemend all a boan d'ar re a ro d'eoc'h bara, kig ha gwinn ; ma ne vije ket bet an dud-ze, dre arze, ho piñe ranket hada an ed, her meñi hag hen dourna. Lezi, i eta, da zistrei d'ar ger.


Pennbroc'h ne reas ket eur van ; fizians en devoa da veza mestr, war Vreiz a-bez.

— Mat, eme Veumanoir, an traon ne c'hellont ket padout ken evelhen ; war c'hoaz, 26 a viz meur 1351, kerkent ha savheol, e dervenn an hanter n'hent e're



Joslin ha Ploermel, e vezo an emgann ganecomp ; an tregont gwella eus eur gostezenn ouz an tregont gwella eus ar gostezenn all.

Antronoz, a-raok loc'hât eus a Bloermel, an tregont Saoz a glevas an oferenn ; an tregont breizad a falvezas ganto ivez kovez, Kommunia ha klevet an oferenn e Joslin a-raok mont d'ar stourmad.



— Ma peus sec'hed paotr, ev da wad.

Kerkent hag an deiz e tigoras an emgann :

Ker prim e koueze an taoliou,
Ha morzolioù war anneoioù,
Ker koenvet e rede ar gwad
Hag ar waz goude ar barrad.




Ken didammet oa an harnez
 Ha m'eo pithennou ar paour kez
 Ha klemm ar varc'hein er c'hloaz
 Ker rust ha mcuez ar mor bras.

Yann Veumanoir a voe glazet ; yunet en devoa en deiz-ze, rak er c'horaiz edod ; du oa gand an naon, ar skuizder hag ar c'holl gwad ; c'hoant en devoa da gaout eun dra bennak da eva ; Jaffrez ar C'hoad a lavaras d'ezan : « Ev da wad, Beaumanoir, hag e torri da zec'hed ! »

O klevet eun hevelep ger Beaumanoir, a zailhas war ar Zaon gant muioc'h a gounnar eget biskoaz . e dud a reas evel dan hag a-beun an noz edo an tregont Saoz ledet ouz torgeun !

Bugale Breiz, n'ankounac'hañt morse pebez tud kalonek eo bet ho-tud koz.



Keleier ar Miz

Goueliou Dublin

Keleier ar goueliou kaer graet en enor d'ar Zakramant meulet ra vezo, e Iwerzon, eus an 22 d'ar 26 a vezeven, a vezo kavet aman er miz a zeu.

Hor mignoned a zo bet degemeret e Enezenn ar Zent, hag e Bro Gembre, e Carmarthen, Lampeter ha Llaneli, nann, evel amezeien met evel breudeur : e gwirionez, breudeur omp, dre ar gwad, dre ar yezou keltiek a gomzomp ha dre hor feiz kristen.

Goueliou Keranna

D'ar 24, 25 ha 26 a viz gouere ema pardon bras santez Anna Wened.

Bez meur ar zoudarded hag ar vartoloded maro er brezel bras a vezo benniget d'ar 24 da 10 eur, gant an A. Maglione, kannad ar Pab e Paris; an A. Mignen, arc'heskob Roazon, a gano an oferenn-bred hag an A. Duparc, Eskob Kemper, a raio ar brezegenn.

Da eur 1/2. Soudarded koz ar brezel bras, milieroù ha milieroù anezo, a 'z ay, e prosesion, gand o drapoioù, eus ar *Scala Sancta* d'ar Bez-meur: eno e vezo kanet kanaouenn ar re varo er brezel.

An A. Serrand, eskob Sant Brieg, a brezègo.

D'ar 25 ha d'ar 26, ema pardon bras santez Anna evel er bloavezioù all.

Biskoaz, m'oarvat, abaoe ma vez pardonerien e Keranna ne 'n eus bet gwelet kement a dud e harz treid ar Vamm Goz, evel ma vezo gwelet er bloaz-man, ha kement-se a riskouezo d'an holl, anat ha splann, ema kalon Breiz o tridal e Keranna.

Goueliou Pontivy

Ar Varzed a raio o goueliou breizek e Pontivy, d'an 28, 29, 30 hag 31 a viz gouere.

Yez Breiz ha dilhad Breiz a vezo graet enor d'ezo edoug ar pevar dervez-se

Bleun-Brug Brest

4, 5 ha 6 a viz gwengolo

Brest d'ar 6 a viz gwengolo a zeu a vezo eur mor e gan hag a c'hened kement all a skoazell a gaver eus perz an holl.

Sant Yann hag Herodez moulet er Feiz ha Breiz-man eo o devezo da zeski ar re a venno kemeret perz e kens-trivadeg an displegerez (*déclamation*).

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz mezeven :

- An A. Marc ar Berr, 6, ru ar C'hastell, Pont'n Abad 10
- An A. J. Kerandel, Plougerne 1
- An A. F.-M. Loaec, Gorre-kear, Plougerne 1

Leoriou rakprenet betek hen : $945 + 12 = 957$.

Degas an hanoiou d'an A. Perrot, *Rener Feiz ha Breiz*, Scrignac (Finistère) ar re o deus c'hoant da brena al leor a-raok ma vezo moulet : degas an hano heb an c'hant.



DIVINADENNOU

RESPONCHOU divinadennou Ebrel, mae ha mezeven a vezo moulet aman er miz a zeu hepken evit rei amzer d'hol lennerien, betek ar 15 a viz gouere, da zegas d'eomp responchou divinadennou ar miziou-ze.

Degas ar responchou da *Rener Feiz ha Breiz*, *Scrignac*, *Finistère*. — Arabad degas d'eomp responchou divinadennou gouere, eost ha gwengolo ken e vezo gellet rei ivez responchou divinadennou an tri miz-ze, war eun dro.

Divinadennou miz Gouere



I. — Piou eo ar barz gouiziek, hag ar prezeger hela-
var a welit skeudennaouet uheloc'h?

Degaset gant Herrik, Paris.

II. — Piou eo an den krouet
Ha n'en deus bet mamm ebet?

*Degaset gant C. Lescop, Lann-ar-
Poullou, Breles.*

III. — Kiger sant Thonan hag e vaouez a oa o daou o
c'hoari 'r c'hartou. Eur gwenneg eo an taol.
Goude pemzek taol ar c'higer a c'hounit seiz
gwenneg.

Pei taol en deus gounezet pep hini?

*Degaset gant Victor Gouriou, Sant
Thonan.*



IV. — Evnig Are a zis-
kenn, da draon ar
menez, warlerc'h
Alanig, e vignon. E
petec'h eman Lanig?

V. — Gwall amzer a zo
war ar mor: eur vag
a zo e riskl da ober
pense. E pelec'h
ema ar pesketaer?

*An diou zivivadenn ziveza-man a zo bet degaset
d'eomp gant Renan Pleyber, eus a Paris.*

Feiz ha Breiz



**Bleun-
Brug
Brest**

**D'ar 4, 5 ha 6
a viz Gwengolo**

D'AR ZUL 4 A VIZ GWENGOLO

*Da 12 eur, Embannerien, war varc'h, a redo ker Vrest
hag he ardremez, da gas, dre holl, ar c'helou mat ema
digor evit an eilvet gwech var nugenet goueliou bras ar
Bleun-Brug.*

Da 15 eur, e loc'ho eun toullad aotoned war varc'h, eus Kastell-Brest, evit mont da Gerarbecam da stourm an eil ouz egile gand o c'hlezeier diveget, en enor da Yann III, Duk Breiz, ha d'e bried Janned ar Savoia deuet da Vrest, e kreiz hanvez ar bloaz 1332 evit mont da ober eun dro da Lok-Maze Penn-ar-Bed.

Ar c'hoariadeg-se, hanvet « *tournoi* », e galleg, oa c'hoariadeg vras hon tud koz, breman ez eus 600 vloaz, ne vez ket a dro d'hen gwelet alies ken ha setu perak e Kerarbecam, daoust pegement a frankiz a zo eno, ne vezo ket a hanter-blas en deiz-se.

D'AL LUN 5 A VIZ GWENGOLO

Da 9 eur, studiadenñ gand an A. Uguen, person Plougastel, war an doareou gwella da harpa hor brezoneg war ar maezhou.

Da 10 eur hanter. — Eur skouer evit Breiz :

L'action régionaliste en Flandre française pour la défense et l'illustration de la culture et du folklore flamands, par M. Pierre Favereau, secrétaire général du *Wlaamsch Verbond van Frankrijk*.

Da 2 eur, studiadenñ gand an A. Treguier, eus a Vrest war an doareou gwella da harpa hor brezoneg en hor c'hêriou.

Da 3 eur hanter. — Eur skouer evit Breiz.

Resurrection de la langue d'oc et sauvegarde de l'âme occitane par M. Josèp Salval, majoral du Félibrige. niri.

Da 8 eur hanter, e c'hoarilec'h kêr. C'hoariadeg ha kaniri.

D'AR MEURZ 6 A VIZ GWENGOLO

Da 8 eur, oferenñ-bred e iliz sant Loeiz ha prezegenñ gand an A. Duparc, eskop Kemper ha Leon.

Da 9 eur kenstrivadegou ar c'han, al lenn, ar brezegerezh hag an displegerezh.

Da gresteiz, pred, dre skodenn, 20 lur dre benn, e saliou Lombard, ru Colbert.

Da 2 eur e loc'ho eus Kastell-Brest, an Duk Yann III ha Janned Savoia, e bried, tudchentij ha pobl Breiz ouz e heul, evit mont da zellet ouz ar c'hoariadeg vras graet en e enor e Kerarbecam.

Strolladou kanerien ha sonerien a heulio tud al lez Breiz ar pevarzekvet kantved ha Breiz an ugentvet kantved a vezo eun dudi o gwelet o kerzet an eil war roudou eber.

D'AR MERC'HER 7 A VIZ GWENGOLO

Baleadenn evit mont war beziou ar Gonidec da Lokrist, ha Mikael an Nobletz da Gonk.

Diouz an abardaez e tizroer da Vrest dre Gergroadez ha Lanriouare.

Kenstrivadegou Bleun-Brug Brest

I. — KENSTRIVADEG AR BREZEGEREZ

(*Concours d'éloquence*)

Pep breizad a dlefe beza eur barz anezan. Eur barz petra eo? Da genta eun den a anavez hag a gar e vro. An hini a oar sevel e zell uheloc'h eged al labour hag ar vuhez pemdeziek, pelloc'h eget garzou e barkeier, e gerriadenn, e barrez, tizout mad e vro Breiz a-bez ha lakat ar mad-se da stur d'e vuhez ha d'e oberou, hennez eo ar gwir varz.

Kemeret a reoc'h eur breizad en e vuhez pemdeziek koulz hag en unan bennak eus ar c'houliou brasa eus ar bloaz, — pardon, votadeg, goueliou, — hag eus buhez e diegez, — badiziant, eured, maro hag all, — hag e rooc'h da anaout penaos ec'h en em ziskouez enno ar barz.

Kas ar skridou, pemp pajenn d'an hirra, abenn hanter eost da zivezata, d'an D^r Cornic, Rener ar Bleun-Brug, Douarnenez.

II. — KENSTRIVADEG AR DISPLEGÈREZ

Concours de déclamation

Ar re yaouank o devezo c'hoant da gemeret perz er genstrivadeg-man a ranko deski dindan envor an diviz *Sant Yann hag Herodez moulet e Feiz ha Breiz* miz Gouere p. 293. Pedet int ivez da gas o hanoioù hag o adres d'an A. D' Cornic, *Renner meur ar Bleun-Brug, Douarnenez*, a-raok an deiz kenta a viz Gwengolo.

III. — KENSTRIVADEG AR C'HAN

Sellit ouz ar pezh a zo merket war drede pajenn embannou ar miz-man ; eno e kavoc'h ar sklerijenn ho peus c'hoant da gaout diwarbenn ar genstrivadeg, ha mard'oc'h nec'hed c'hoaz, goudeze, evit beza sklerijennet gwelloc'h skrivit da : *Mlle Geneviève de Kermenguy, château de Kermenguy, en Cléder*.

Daou wenneg dre benn ha dre gilometr a vezo roet d'ar ganerien a deui a-strolladoù da gemeret perz e kenstrivadegoù ar C'han.

IV. — KENSTRIVADEG AL LENN

Ar genstrivadeg-man a zo digor da vugale holl skolioù Breiz.

— Laket e vezint da lenn eur pennad pe bennad eus *Feiz ha Breiz* ar Vugale ha da gana unan pe unan eus an dek son a zo moulet e *Soniou ar Vugale*.

Goulenn al leorig-se digant an Dimezel Torcol, 11, rue Algésiras, Brest.

Pevar real eo priz *Soniou ar Vugale*.

Mistri pe vestrezed pe gerent ar vugale a dle kemeret perz er genstrivadeg-man a dle her rei da anaout d'an Doktor Cornic, a-raok an deiz kenta a viz gwengolo.

Eur bern levriou a roimp e prizioù d'ar vugale a gae desketa war ar brezoneg.



Eun tamm diviz etre Clemenceau hag ar c'hardinal Mercier

D'ar 15 a viz genver 1920, ar c'hardinal Mercier, arc'heskob Malines er Beljik, deuet d'ober eun dro da Paris, a voe digemeret gant Clemenceau e palez ministr ar brezel, hag a jomas eur pennadig mat a amzer da gomz gantan.

Ar c'hardinal Mercier, brudet e pep lec'h dre e zekadurezh hag e zantelez, a oa doujet gant an holl, ha Clemenceau, daoust ma n'oa ket kristen, en doa eun tamm lealded hag a selaoue gant evez awechou ar re a gomze eus relijion.

Ar c'hardinal a lakeas dre skrid ar pezh a oa bet etre Clemenceau hag hen, hag ar pennad-skrid-ze, kavet e paperioù ar c'hardinal, a zo bet moulet er c'hazetennoù abaoe m'aro Clemenceau.

Clemenceau. — Kalz gwelloc'h eo stad ar gatoliked e Frans, abaoe ar brezel. Istimet int gant an holl, rak graet o deus mat o dever; me o istim ive hag a ra evito ar pezh a c'hellan. N'oun ket bet atao evelse. Evito emañ breman, rak mat mat int bet epad ar brezel... Ha gellout a c'helfen lavaret d'eoc'h penaos e komprenan stad an iliz er vro ?

Ar c'hardinal. — Ya, lavarit. Plijadur a raio d'in klevet petra a zonjit.

Clemenceau. — An Iliz a zo deuet gwechall d'ar mare m'edo galloud impalaered Roum o koueza. An Iliz he deus kemeret plas an impalaered. O veza n'oa mui a impalaer, an Iliz a zo deuet da veza impalaerez. Gouarn a rae an eneou, met n'e ket hepken traou ar relijion a oa reizet ganti, en em emmiel a rae eus pep tra. Breman n'eo mui henvel. Ar broioù en em c'houarn o-unan, hag an Iliz a rafe mat evesaat hepken ouz traou a relijion. Ma rafe evelse, den ebet mui n'en dije lec'h d'en em gemeret outi, hag e vije neuze peoc'h hag unaniez er broioù.

Ar c'hardinal. — En eur ger, Aotrou, c'hoant hoc'h eus da lavaret e plijfe d'eoc'h rei d'an Iliz al liberte.

Clemenceau. — Ya, evelse eo e sonjan.

Ar c'h. — O tistrei em'aoun eus Stadou Unanet an Amerik. Digouezet oun gant ar c'hardinal Gibbons. Koz koz eo breman. Lavaret en deus d'in evelken: « Er Stadou Unanet 17 dre 100 eus an dud a zo katoliked. Met, ha goude ma vijemp 90 dre 100, e rafen evel ma ran breman. »

Cl. — Mat. Setu aze al liberte.

Ar c'h. — Ya, met ar wir liberte neuze. Rei a rafemp an dourn an eil d'egile, ma c'helfemp en em glevet war ar ger liberte. Al liberte a dle beza gwirion. N'eo ket awalc'h krial : « liberte, liberte », ha da c'houde lemel digant an dud pep frankiz. Setu aman eun dra : er Beljik, abaoe 50 vloaz, e stourmomp evit kaout liberte d'ar skoliou. An darn vrasa eus ar vugale a zo katoliked, hag e c'houlennomp ar gwir d'o zevel e skoliou katolik.

Cl. — Ar gwir-se hoc'h eus.

Ar c'h. — Ya, met, amzer ! Evit-se e ranker kaout skoliou ha kement a zo ezomm e skoliou, e ranker kaout mistri, mestrezed, skoliou-meur da brepari mistri. An holl draou-ze a goust arc'hanf. Ni, katoliked, a c'houlenn digant ar c'houarnamant, a zo gouarnamant an holl, hor zikour da zevel hor bugale katolik er relijion gatolik, evel ma c'hell an dud dizoue sevel o bugale e skoliou n'eus hanv ebet enno eus a Zoue. An dud hep kredenn o deus ar skol neutr. Met ober da vugale ar gatoliked mont e skoliou neutr, dizoue, a zo o lakaat e riskl da goll a nebeudou o feiz. Ar feiz a dle beza maget heb ehan e sperejou ar vugale. Da vugale gatolik skoliou katolik. Hag an holl skoliou a dlefe beza sikouret gant ar c'houarnamant.

Cl. — Ah! met implija arc'hant ar c'houarnamant evit an holl skoliou, setu aze eun afer all!

Ar c'h. — Aotrou, an tailhou a zo paet gant an holl hag a dle talvezout d'an holl. Ne welan ket penaos e c'helfec'h kaout eo eun dra leal rei lod eus an tailhou da zikour an tadou a familh hep relijion ha chom hep rei netra d'an tadou a familh katolik.

Cl. — (Nec'het e chomas eur pennadig). Dies eo an dra-ze. Ret e vije anaout an holl relijionou. Ar gatoliked, ar brotestanted a zo anavezet. Met ar c'houarnamant ne c'hell ket ober enklask war gement relijion a zo, evit o zikour holl.

Ar c'h. — N'eus aze diezamant ebet. Gouzout a rit ez eus en hor broiou katoliked, protestanted hag eun nebeut Juzevien; nag er Beljik nag er Frans ne gavoc'h e nep lec'h tud o lavaret emaint eus relijion Boudha, relijion an Indez.

Cl. — Ah! e relijion Boudha ez eus traou kaer. Lennet am eus meur a leor a gomze diwarbenn Boudha, hag a gaven brao.

Ar c'h. — Ya, meur a gentel, meur a ali fur a vez kavet el leoriou-ze. Met n'eus ket e Frans a dud oc'h heulia relijion Boudha. Tud a zo oc'h heulia ar relijion gatolik; eun nebeut oc'h heulia ar relijion protestant, ha nebeutoc'h c'hoaz oc'h heulia relijion ar Juzevien. Ar re-ze eo a dle beza sikouret evit ma c'hellint sevel o bugale er relijion a blij d'ezo. Ha n'eo ket dies. Ma c'hellomp en em glevet war al liberte, e c'hellimp en em glevet ive war an doare da rei liberte d'an holl.

*
**

Evel a weler, Clemenceau a voe laket nec'het gant ar c'hardinal Mercier. Ha kement hini a nac'h ouz ar gent gristen ar gwir d'ober kristenien eus o bugale n'o deus en o genou nemet digareziou fall.

Sklêr eo evel an deiz an dra-man: an arc'hant savet diwar goust an holl a dle talvezout d'an holl.

Ker sklêr all eo ar wirionez-man: da vugale gristen skoliou kristen.

An traou, e Frans, a zo eta da euna; ar pezh a welomp hirio n'eo ket leal, n'eo ket just, ne dle ket padout. Eun tad a familh eus Paris pe eur gêr all, o tont da jom en eur barrez bennak eus hor bro, m'en deus bugale, a c'hello o skolia evit netra, mar deo eun den hep relijion. M'en deus c'hoant rei deskadurez kristen d'e vugale, o veza m'eo kristen e-unan, ne c'hello ket. Ret e vo d'ezan klask skoliou kristen, hag alies n'o c'havo nemet pell

diouz e barrez hag e di, hag e ranko ober dispignou bras evit skolia e vugale.

Lezenn ar skoliou neutr n'eo bet graet nemet evit talvezout da laza a-nebeudou ar feiz e kalonou bugale Frans. Graet eo bet gant ar framasoned hag ar re a oa a-du ganto.

Petra a zo c'hoarvezet? Ar vugale, desket d'ezo pep tra nemet ar c'hatekiz hag ar relijion, a zeu d'en em voaza da veva hep relijion. Na gomzit ket d'ezo eus pedi, servicha Doue. Ne gromprenont ket. Ha diwezatoe'h e lennint leoriou eneb ar relijion, hag e vezint taolet e kreiz mor ar bed hep stur ebet. Petra a zo mat, petra a zo fall? N'ouzont ket. Petra a dle ober an den, petra ne dle ket ober? N'ouzont ket ha na glaskint ket gouzout. N'o deus ken reolenn nemet o ioulu. Rei d'an ioulu-ze ar pezh a c'houlennont, setu aze reolenn o buhez. Kaout plijadur, ha dastum arc'hant evit kaout plijadur, ne glaskont nemet an dra-ze.

Met gant hevelep tud eur vro n'hell ket chom en he sav.

Eur vag ne zent ket ouz ar stur
Ouz ar garreg a skoio sur.

Y. U.

LENNIT

KANOU EN NOZ

SAVET HA SKEUDENNET

GANT

XAVIER DE LANGLAIS

EMBANNET GANT GWALARN B. P. 75 BREST

Lizerennou koz ar Vretoned ha merkou mein kastell Lezarscoët

An Tad Gregor Rostrenen. — eur manac'h eus a urz sant Fransez hanvet evelse dre ma oa ginidik eus a Rostrenen ; hano e dad oa Tanguy. — a varvas e Roscoff, wardre ar bloaz 1750, goude beza laket moula, er bloaz 1732, eul leor hanvet : *Dictionnaire françois-*



1. — Alphabet ar Vretoned koz, hervez an Tad Gregor Rostrenen.

2. — Alphabet ar Vretoned koz, hervez an Tad Pelleter.

celtique ou françois-breton, nécessaire à tous ceux qui veulent apprendre à traduire le françois en celtique ou en langage breton pour prêcher, catéchiser et confesser, selon les différens dialectes de chaque diocèse. Rennes, Julien Vatar, 1732, in-4°.


Al leor-ze a zo bet savet gantan e manati Montroulez pe e hini Roscoff ha kaout a raer ennan eleiz a c'heriou mat bet pennaouet gantan wardro an diou gêr-ze.

An Tad Gregor en deus renket, el leor-ze, eun daolennad lizerennou a oa, emezan, lizirennou koz ar Vretoned, hag a skeudennaouan aman. Al lizerennou-ze a zo bet kavet gantan, war a lavar, war eur c'halur koz a vired e Landevennec, war eur groaz vaen, a oa e Plouzane ha dreist-holl war vein goz kastell Lezarscoët, e Plonevez-Porzay, e kichenik Douarnenez, a welas er bloaz 1702.

Gwasa peza a zo an Tad Gregor n'en deus ket lavaret d'eomp penaos e oa deuet a-benn da zispartia e lizerennou an eil diouz eben evit rei d'ezo urz ha talvoudegez lizerennou alphabet Rom. An aotrou Kerdanet, hag a skrive kant vloaz warlerc'h an Tad Gregor, a gav d'ezan eo bet-tennet alphabet-Breiz eus hini ar Phenikianed a oa eur bobl hag he devoa eun toulad eur he zud e Cadix, er Spagn, hag a bigne gand o bagou skanv hag o marc'hadourez presius betek Breiz-Veur.

Eun tamm henvedigez a zo, sur a-walc'h, etre lizerennou ar Phenikianed hag ar re a gemer an Tad Gregor evit beza lizerennou brezonek. Den ebet, avat n'eo gouest da lavaret diwar be skrid eo bet tennet an alphabet brezonek. An A. Kerdanet, warlerc'h Albert Le Grand a gomz eus skeudenn eun doue Bolianus, kavet en Naoned, hag a oa skrivet e hano e brezonek, ha gant lizerennou brezonek, met ar skeudenn-ze a zo kollet pell a zo kouls hag eur skrid e brezonek koz, bet kavet en X^{vet} kantved etouez dismantrou kêr Verulam e kichen Londrez, Tud desket eus a Vreiz-Veur. Cambden hag Owen o deus komzet eus merkou bet kavet aman hag a-hont en o bro. Daoust da gement-se

holl, n'eo ket anat a-walc'h o defe bet ar Vretoned eun alphabet d'ezo o-unan.



Merkou e mein Kastel Lezarscoet

Kastell Lezarscoet, e Plonevez-Porzay, a zo kouezet,

en e-boull, pell a zo. Devet ha diskaret e rank beza bet en amzer hen duk hag hon dukez diveza. Fransez II hag Anna Vreiz, dre ma 'z edo e berc'hen Gauvan Langeouez a-du dre zindan ha paeet gant ar roue Charles VIII. E vein a zo bet aet abaoe a-gleiz hag a-zehou da zavel kastell Moellien ha Nevet hag iliz Plonevez-Portzay. Wardro ar bloaz 1895 an A. Halna du Fretay hag a oa o chom harp ennan e maner ar C'hoz-Kastell e kichen Kerlaz, a lakeas dizelei ar pezh a jome c'hoaz eus ar c'hastell koz ; kavet e voe ar c'haviou gand o bolziou e mein-ben hag ar pemp derez da ziskenn enno ha n'o devoa bet droug ebet c'hoaz, kouls lavaret. Hervez an A. Abgrall, hag a oa bet o welet ar gavadenn, al labouriou-ze a ranke beza eus ar XIV^{ve} kantved.

An A. du Fretay, lorc'h ennan gand e gavadenn, a lavaras e oa bet savet ar c'hastell-koz-ze en amzer ar Romaned, e oa bet goudeze perc'hennet gand ar roue Marc'h hag e oa al lizerennou a gaved war wein e vogeriou lizerennou tennet eus alphabet ar Vretoned... Diaes bras e oa koulskoude rei an dra-ze da gredi, rak eur skrid a vez tostaet e lizerennou an eil ouz eben e lec'h e Lezarscoet, ne gaver nemed eul lizerenn war bep maen ha setu perak e kredomp ez eo ar merkou-ze a gaver e Lezarskoët, nann lizerennou, met merkou graet gand ar bikerien vein evid anaout ar vein bet piket ganto ha gellout evelse kaout eün, ar pezh o devoa gounezet dre o labour. An A. du Fretay a lavare e oa re a verkou dishenvel — eur 80 bennak, — evit ma vijent kemeret evit merkou micherourien. An A. Abgrall a ziskouezas e oa darn anezo hag a oa henvel a-walc'h ha ne jome eta ken nemed eun daou ugent merk bennak dishenvel a-grenn. Marteze ivez pep piker mein en devoa 3 pe 4 merk dishenvel evit miret ne zavje c'hoant gantan da veza paeet diou wech evid an hevelep tamm labour.

Skeudennaouet em eus aman ar merkou souezusa dastumet gand an A. du Fretay diwar vein Lezarscoët hag ar re a zo bet aet ac'hano da zavel kastell Moellien.

Er bloavezh 1927 em eus klasket gwelet ar pezh a jome eus kavaden an A. du Fretay: Ar vein-ben a oa aet a-

c'hano ha ne jome mui netra eus ar c'hastell koz nemed eun toull bras, evel eun toull mengleuz, e kreiz eur



Merkou e mein Kastell Moellien

park. E kichen ez eus eur verouri a hanver ar C'hoz-Vaner hag e kaver eur maen merket bennak en he mogerioù.

E Kastell Moellien e kaver meur a hini all e mogerioù eul lab a zo en tu dehou d'ar porz. Merkou ar vicherourien a zo stankoc'h eget ne zonzjer; o c'haout a raer e iliz-veur Kemper, e iliz Plougasnou hag e iliz Lok-Mikael-an-Traez. E kastell koz Prat-ar-Rouz, e Penhars, diskaret breman, e kaved ivez merkou evel-se; kroaz koz Plouzane hag en devoa an Tad Albert-Le Grand lennet warni, er bloaz 1624 « *Certains anciens caractères incogneus*, » n'heller ket he gwelet ken, rak unan bennak a zo bet diskiant a-walc'h, p'eo bet savet an iliz a-nevez eun tammig bihan a-raok an Dispac'h, evit he c'huzat dindan ar mogerioù. An A. Fréminville en devoa gwelet lizerennou diaes da lenn ivez war chichenn eur groaz a oa e Brelevenez, e Cleder, ha war eur maen teo a oa e kichen kroaz an Tri Ferson etre Milizac ha Plabennec. Al lizerennou-ze a dle beza lizerennou e giz lizerennou Rom nemet int graet fall evel al lizerennou a gaver graet war baperou koz an ilizou gant tud ha ne skrivent ket o hano teir gwech er bloaz.

N'eo ket an Tad Gregor eo kenta hini en deus komzet eus an alphabet brezonek ; an Tad Maner, en e leor « *Sacré Collège de Jésus* » moulet er bloaz 1659, en deva komzet anezan c'hoaz. A-raok an Tad Maner, Brydonius, eun den desket bras, en devoa komzet anezan ivez er bloaz 1643.

Den ne oar eus a belec'h en devoa hen tennet. Ar pezh a zo sur, an neb en deus c'hoant da goueza war ar wirionez, arabad eo d'ezan touezia merkou micherourien ha n'o deus ket ouspenn pemp pe c'houec'h kant vloaz gant lizerennou alphabet hon tud koz, rak e lec'h gwelet sklér, en em zalla muioc'h mui eo a rafe ha netra ken.

G. P.



Eur marvailher bosniat

Amañ e vo kavet troïdigez eur gontadenn a zo bet savet gant unan eus gwella skrivagnerien iougoslavat: Pêtar Kotchitch e ano. Ganet e voe e Bania-Louka, e Bosnia, en eur vro ma 'z eo bet lakaet pep eil penn ar gevredigez, ar relijion hag ar sevenadurez gant argadadeg an Durked er Grennamzer ha gwaskerez an Aostria-Hungaria en Amzer-vremañ.

Mervel a reas d'e zaou-ugent vloaz, en eur c'hlañvdi, e Belgrad, goude beza gwelet trec'h « ar re Unanet » ha goude beza bet gwall-gaset gant an enebour abalamour d'e garantez-vro.

Skrivet en deus meur a levr: « *War ar menez ha dindan ar menez* », « *Simeon an avieler* », « *Ar broc'h dirak al lez-var'n* ». Hemañ eo ar brava. Troet eo bet e meur a yez ha moulet meur a wech. Iouglaved an Amerik, a c'hortoze en harlu dieubidigez o bro, o doa graet eus ar barabolenn-mañ o levr-gwele.

« *Yablan* », ar gontadenn a roomp hizio an droïdigez anezi, a zo ivez eur barabolenn. Ret e oa kavout an tu da brezeg ar garantez-vro dirak an holl daoust da vistri ar vro: an Hungariz. Evit-se, Kotchitch a rae gant ar parabolennou, Stourm an daou daro a zo skeudenn an emgann a oa etre an Aostria-Hungaria hag ar bobl iougoslavat. Gwaskerez diouz eun tu, sec'hed ar frankiz dicuz an tu all. Eun deiz pe zeiz, abred pe ziwezat, e chomo an trec'h gant ar Iouglaved evel ma 'z eo chomet gant « *Yablan* » en e stourm kalet ouz taro an Impalaer.

YABLAN

Serrnozi a ra abaoe pell.

Er seuleg, e traoñ ar gêriadenn; war dor ar gre-c'hienn, e taskren. « *Louio* » en e zilhad paour. A-boan ma weler e zremm kramennek, e zaoulagad bras liou

al lin hag e vleo a-fuilh war e dal. Ne pell dioutañ e-
peur « Yablan »¹ e daro.

Bemnoz, abace an tommderiou bras, e kas Louïo e-
Yablan da beuri betek diwezat en noz. Her mesa a ra.
evel e lagad. Diou wech ar sizun e ro holen d'ezan. Ha
ranna a ra e goan gantañ.

Karout a ra Yablan abalamour ma 'z eo kreñva taro-
an holl gornad.

Lorc'h a zo e Louïo en abeg d'ezañ; hag e ra fae war
ar baotred-saout all ha war o zirvi. P'emañ Yablan.
gantañ e kredfe tremen an noz e kreizig-kreiz ar vered.

— Warc'hoaz! eme Louïo evel o tihunvreal.

Pellaat a ra bevennou e vantell hag e sked e zaou-
lagad. Hag heñ ha sevel ha tostaat ouz an taro d'e
floura ha d'e lidourat.

— Debr mat, Yablan, debr, mignon, kement ha ma-
kares. Warc'hoaz! va Yablan ker, va Yablan karet!
Warc'hoaz eo!

E mouezig raoulet Louïo e santer evel eur bedenn.
dous ha dister. An taro en eur fistoulat e lost a sko-
skañv ouz e voc'h.

— O! D'in-me, Yablan? emezañ gant eun ton-tamall.
En em rei a ran da ouela neuze.

Pellaat a ra en eur ober an neuz da ouela. Yablan
a sav e benn.

— Nann, nann, Yablan ! Evit c'hoarzin eo ! N'ac'h
eus ket graet droug d'in. Ha! arabat d'it beza droug.
ennout evit netra. Pokomp an eil d'egile!

Hag e reont. Louïo a laka a-nevez e vantell hag en
em lez da goueza er geot gleb da huñvreal er pez a.
c'hoarvezo warc'hoaz.

Warc'hoaz e ranke Yablan stourm ouz taro an Im-
palaer. Pell 'zo en deus ar c'hoant bras da welout e
daro oc'h enebi ouz Roudonya.

Goulennet eo bet digant ar maer ober diouz e c'hoant.
Ha tud koz ar c'horn-bro a oa a-du gantañ.

— Va mignoned, sed eun dra ha n'eo ket aes. Taro
an Impalaer eo. Kas a rin ar goulenn, avat. Ma roer d'in
an aotre, ne welan harz ebet evidoun-me. Ma nac'her,
gwaz a se evidoc'h! Ha mat eo evel-se?

— Mat-tre, aotrou maer. Grit diouz al lezenn ha n'ho
pezit ket aon !

Ar goulenn a zo bet kaset; hag ar respont a zo de-
gouezet gant ar maer : aotre a zo. Warc'hoaz em
Gouel Hor Zalver oc'h en em ziskoez, en e sked. war
Menez-Thabor ha, war eun dro, deiz ha blóaz an Im-
palaer. Dirak an Ti-kêr e stourmo Yablan ha Rou-
donya.

Emañ an heol o tifoupa a-us d'ar menezioù evel mor-
zet en amheol splann ar mintin. Eur pennad, hag an
holl draou a deuz en eur sklerijenn damwenn, a sked-
disked hag a lugern. A-hont hepken, en draonienn bell,
e sked glas-lusenn ar roc'h. Pep tra a zihun, a sav, a
voged evel gwad tomm. Nerz ha freskter dre-holl.

— O! an deiz, dija!

Louïo a astenn e zivrec'h, a rim e zaoulagad hag a
sell tro-dro d'ezañ.

— Va Yablan, perak n'ac'h eus ket va dihunet?

Yablan a zo savet abred, gwall abred hag en deus
debret e walc'h dija. Laouen eo Louïo o welout e gro-
c'hen ken reut.

— Ma! peogwir ac'h eus debret mat, setu da zibenn-
bred.

Hag e taol e-kichen an taro eun nebeut feskennoù
kerc'h.

Yablan o debr hag i en hent war-du an Ti-kêr.

Ar c'havaned a nij diouz ar brousgwez hag a blav
war ar maiz a-vec'h e greun. Ar spontailhou a finv war
ar c'hleuzioù e tro d'ar parkadou maiz. Kas a raer al
loened d'ar pradou; youc'hadennou ha galvadennou
dre-holl.

En eur soñjal e kerz Louïo war-lerc'h e daro. Beuzet
en e huñvre ne glev nag an trouz nag ar vuhez tro-dro
d'ezañ. Soñjal a ra e Yablan hag en emgana.

A-greiz-holl e lamm, eur soñj o tiwana en e spered.
Astenn a ra e zourn war e vaz hag e c'houlenn en eur
vuzulia.

— Yablan a drec'ho, na drec'ho ket; trec'ho, na dre-
c'ho ket; trec'ho, na drec'ho ket; Trec'ho! a youc'h, e
zaoulagad o virvi gant eul levenez divent.

En e joa ez en em ro da floura ha da vriata e daro.
Hag e komz:

— Lavar 'ta, Yablan, te hen trec'ho? Ha daoust ma
'z eo-heñ taro an Impalaer! An dra-se ne ra forz, ket
'ta? va Yablanig, va Yablan karet. Ket gwir?

En eur zivizout e tegouez Louïo dirak ti ar maer.
Bras eo an engroez, dija. Deiz gouel eo; ne labourer
ket, hag an dud a zo deut da gomz eun tammig. Tud ar
meneziou int hag e plij d'ezo gwelout tirvi o stourm.
O welout Roudonya, bihan ez a kalon Louïo.

Egile en deus doare da veza spontus, divent, bra-
soc'h ha tevoc'h eget Yablan.

— Yablan, breur, ma tro da fall ar c'hoari evidout,
arabat d'it kaout droukrañs em c'heñver, a huanad
Louïo oc'h en em harpa ouz e daro.

Dre guz ez en em laka da glask anaout e Blanedenn
war e vaz. Skedi a ra e zremm: an trec'h a yelo gant
Yablan.

— Hag aon ac'h eus, paotr? a c'houlenn eun denig
koz. Arabat d'it kaout aon, va mab. Da daro a zo ane-
zañ eur stourmer koz.

Fiziañs ennañ Louïo a respont:

— N'em eus ket aon!

— Aon az po, kanfard, eme eur gward, ha te ' leñvo
pa weli Roudonya o toulla e gof d'az Yablan. A! tra-
walc'h a enoë 'm eus bet gantañ!

— Ni ' welo! a c'hoarz Louïo.

— Chomit peoc'h! Eun tammig pelloc'h, ar mer-
c'hed hag ar vugale! a youc'h ar maer ken dic'hoarz ha
tra. Ra vezo degaset an tirvi er c'hloz-mañ, a-dreñv ar
gloued.

Hag ez int degaset. An dud en em vod tro-war-dro.
An tirvi a stag d'en em santout evel m'o dije c'hoant
d'ober anaoudegez.

— Dao d'ezañ, Yablan!

— Dao d'ezañ, Roudonya!

Hag i ha blejal ha toulla an douar gant o faoiou ha
pellaat en eur c'houeza o c'hof. A-greiz-holl ez en em
greaz ar c'horniou gant nerz. Stokadennou ha tous-
mac'h. An douar a ya e poultr hag e gren dindano.

Louïo a gren hag a skrij. Difinv eo e zaoulagad di-
gor-bras.

Heulia a ra pep finvadenn hag en e galon o lammat e
tregern pep taol.

Luziet eo e sell. Damwelout a ra hepken eun dra
bennak dirazañ a dro, a droidell hag a steur.

Emañ Roudonya oc'h argadi gant e holl nerz!

— Krog ennañ, Yablan! a youc'h Louïo o vont er-
maez anezañ.

Yablan, stourmer koz hag akuit, a ra an neuz da
goueza ha dao! dindan gouzoug Roudonya.

— Trawalc'h, emañ o vont d'hel laza! a youc'h ar
maer pennfollet.

Redek a ra ar gwad diouz gouzoug Roudonya.

Louïo a zo levezet en e galon. Lorc'h ennañ Yablan
a chom war-sav war dachenn an emgann. Blejal a ra
ha kribennou ar meneziou a dregern tro-war-dro.

PÉTAR KOTCHITCH,

Lakaet e brezoneg gant

Paotr e vragou bras.



Chapel Sant Kaourintin Trinivel

Scrignag, diveza parrez Eskopti Kerne, diouz kostez Treger, he deus diou chapel, peder leo etrezo, en enor da zant Kaourintin, unan e Toull-ar-Groaz hag eben e Trinivel.

Chapel Trinivel a zo eul leo hanter diouz ar vourc'h ha peder leo diouz abati ar Releg; Savet eo bet, en takad douar a hanver atao *douar an Abad*, e kreiz ar prajeier glas ha didrous, etre koad Lestrezek Berrien ha reier louet ar C'hragou a zisparti Scrignag diouz Plougonven; adsavet eo bet er XV^{vet} kantved; a-us an nor a zo da vont ebarz, e tu ar c'hreisteiz, e kaver skoued Gwilhou ar Gwales a Vezaubran, bet hanvet abad er Releg d'ar 25 a viz gwengolo 1462. Ar skoued-ze, hag e weler warnan c'houec'h krogenn gand eur greskennloar arc'hantet d'o dispartia, a gaver c'hoaz war gwerenn a liou ar prenestr a zo a-dre kein an aoter vras.

Skeudenn Sant Kaourintin ar chapel-ze a zo e koad ha kizellet eo kaer.

E kichen ar chapel ez eus eur feunteun graet gant mein-ben hag o deus ezomm beza renket a-nevez.

Tammeu a vank er c'halvar a zo er vered; war droad ar groaz ez eus skouejou daou eus ebed ar Releg; war unan e weler eur c'haro o tremen hag eo skoued Visant Gerleo bet abad er Releg hag e Begar hag a varvas er bloaz 1476, pe hini eur C'herleo all, kar tost da Visant hag a varvas e Begar, er bloaz 1526.

Ar Gerleoizien-ze a oa ginidik eus a barrez Pleubihan en eskopti Treger.

Ar skoued all a zo rannet e peder gevrenn gant eur rozenn er gevrenn genta hag eun all er pedervet kevrenn. Ar skoued-se eo skoued eur Poulard bennak, marteze hini Gwilhou ar Poulard, eur chaloni eus a Zant Brieg, a voe eskob e Roazon (1357) hag e Sant Malo (1359) hag a varvas a-raok ar bloaz 1376; ma n'eo ket skoued hennez eo e rank beza hini unan pe unan eus e nied a voe abad er Releg er XV^{vet} kantved.

Ar Boularded-ze a oa ginidik eus a Blehedel, e eskopti Sant Brieg.

Gwilhou ar Gwales a Vezaubran a reas kals vad er vro e keit ha m'eo bet abad er Releg; lakat a eure ober kals labouriou nevez, en e abati; en e amzer eo e voe adsavet penn-da-benn chapel sant Kaourintin Trinivel hag hini ar C'hloastr a oa gwechall eun dreo eus parrez Plourin; war dour ar chapel-ze deuet da veza iliz parrez e kaver skoued Gwilhou ar Gwales.

Er bloavez 1670, e tiskouezed, en abati, eur gampr hag a oa lezhanvet *ar gampr alaouret* hag e weled war he lambrusk skouejou holl abaded an abati; en amzer an A. Gwales, eme ar venec'h, ha gand e beadra eo e oa bet graet ar gampr-ze.

Goude Gwilhou ar Gwales, evel madoberourez vrasa chapel Trinivel, e c'heller henvel Soaz an Doussen, intanvez Gwilhou Faven, a varvas, e Trinivel, d'ar 5 a viz gouere 1916, d'an oad a 67 vloaz; dek vloaz bennak a-raok he maro e lakeas renka ha tei a-nevez chapel sant Kaourintin.

G. P.



AR BARA

Epad eun deiz pe zaou, an had, en irvi ruz,
Euz an tavancher ler a gouezas stank ha druz ;
Ha gantan, en e bark graet e dro, ar c'houer
En deus fiziet ar greun e daouarn ar C'hrouer.

Er goanv rust, war an had, kousket en e gavell,
A dremenas grizilh, erc'h, glao, barrou avel ;
Met, pa c'hoarzas an heol ha pa vleunias miz Mae,
Laouen e zihunas; glas an oabl war e zae.

Tommet gant pokou flour aezennou miz Gouere,
Hardiz e hej e benn, dinet'h ha diere ;
Ha kan war o muzell ha filzier war o skoaz,
Mederien d'hen eosti a ziredo warc'hoaz.

Ha, goude an dourna, en dro d'an dorziou aour,
An ozac'h pinvidig a ray e blas d'ar paour ;
Ha, dindan an heol splann ne baouez da bara,
Evel daou vignoun mat, e zebrint o bara.

Eur bara all ez eus, kaer, santel, benniget :
Korf Doue gant Doue d'e vogel kinniget ;
Nep e zebro bemdez a vezo krenv
Hag, eun deiz, war e hent, e welo lein an nenv.

Sant-Brieg, 2-7-32.

J. L'HELGOUAC'H, O. M. I.



Goueliou an eizvet kanved bloaz abaoe m'eo bet savet abati ar Releg (Plouneour-Menez)

Abati ar Releg a zo bet savet, gant menec'h Begar, e
eskopti Treger, er bloaz 1132, da lavaret eo breman ez
eus 800 vloaz.

Goueliou bras an eizvet hantved bloaz-se a vezo graet
er Releg d'ar 14 ha d'ar 15 a viz Eost.

D'ar 14 e vezo koveseat ar bardonerien adalek 17 eur.
Gousperou kenta ar pardon a vezo kanet da 8 eur hanter
hag an tantad a vezo enaouet raktal goudeze.

Da Hanter-Eost e vezo koveseat adalek teir eur; an
oferenn genta a vezo da 4 eur hag an eil oferenn da 7 eur.

Da 10 eur e vezo digemeret an Abaded a deu da ren
goueliou an eizvet kantved bloaz.

Da 10 eur hanter an Tad Guyader, eus Plomelen, abad
Meilleraie e eskopti an Naoned a gano an oferenn-bred;
an Tad Dominik Nogues, eus Radenac, e eskopti Gwened
a raio ar brezegenn.

Da 12 eur. Lein dre skodenn ; 15 lur dre zen ; ar re
o deus c'hoant da gemeret perz el lein-ze a zo pedet da
gas o hanoiou a-benn an 10 a viz eost, da zivezata, da
Aotrou Person Plouneour-Menez.

Da 14 eur. Gousperou ha prosesion.

Da 15 eur. C'hoariadeg gant strollad c'hoarierien Plou-
neour ha re Scrignac.

Ra deuit Bretoned, a-vernou, d'ar Releg, da zaludi
Rouanez Menez Are.

Perig hag Azilis

Abenn ar foenn he devoa c'hoant Oliy da gaout eun evach bennak d'ar falc'herien da zistana o c'hornailhen, ha setu perag oa deuet eur zulvez da c'houlenn digant he mignounez an doare d'hen ober.

Eun amzer sec'hédus a zo bet ar bloaz-ma ha ne c'heller ket beza atao oc'h eva gwin!

Merket am oa, em c'henteliou, seiz pe eiz vloaz a zo, penaoz ober ar piketez gant deliou onn ha sukr; diskouez am oa graet d'am filhorez penaos en em gemeret, hag hi eo maerounez Azilis, petra bennag n'ema ket en he hano. A man warlerc'h e lakin an doare d'ober hier marc'hat-mat desket da Oliy gand Azilis, hag e tigasinn da zonz eus an doare da aoza ar piketez.

Er Geruhela ez eus neubeud a foenn, tri mil faz douar bennag, ha c'hoaz eman ar foenneg en eun draonienn, ha gouzout a rit e vez ket kerkouls ar foenn eged pa vez war eun uhelen; tremen a reer gand ar pezh a zo, ha Perig a zo laouen gand e damm foenneg; hardisoc'h e vez o welet ar goanv o tont, rak bez en devezo eur seurt beñnag da rei d'e anevaled ma vez berr ar boued goanv, hag er bloaz-ma, kouls ha warlene, n'eus ket staget kals a dra.

Gant preder en deus graet e foenn: antronoz gouel Yann oa trouc'het gantan, hag en deiz araog pardon Per en deus e gerc'het d'ar gêr.

Gand ar falc'h en deus e drouc'het; d'al lun en deus e zistrévet; d'ar meurz int bet o daou o ficha goude lein; da c'houde o deus e galzennet, ha d'ar merc'her da noz o deus graet brasoc'h kelsenn. D'ar yaou oa bet glao bras, met ar foenn a oa difennet mat, hag abenn ar gwener da noz e oa sec'h brao adarre. Glaz e oa da vernia ha kraz, c'houez-mat a oa gantan, ha brema emaint di-drabas dioutan rak ar zac'hd holenn a oa taolet ennan e zlc'ho gwelloc'h epad ar bloaz.

Da bardon Per edo pardon ar barrez hag Azilis he deus kavet deread ober eun tamm pred d'ar gerent, rak ar blavez kenta eo dezo da veza en o c'hêr; ha neuze, Sant Per eo paeron he hini koz; pedi evitan he deus graet en iliz, ha da c'houde ez eo deuet buan d'ar gêr, goude beza bet er vagajenn win o kerc'het eul litrad bennak, hag eur voutailhad traou-douz; hini krenv, avat, n'he deus ket affer, laouen a-walc'h e vez ar gwazed diwar ar gwin! He mamm a zo bet en oferenn vintin asambles ganñ, evit he sikour goudeze. Dare oa lein abenn m'oa deuet an dud eus an oferenn-bred: ar viou a oa torret d'ober an alumen; ar yar, er fourn, a oa poas brao, ar patatez a oa c'houez-vat ganto, ha da echui he devoa aozet Azilis eur pladad traou lipous hag a oa dreist! Tonton Hamonig a oa deuet ive, hag en deus laketa an dud da c'hoarzin gand e varvailhou!

Peur-liesha a teu badinerez gantan, met an dervez-ze en devoa debret hag evet, hag e deod ne ehane pennad ebéd!

War ar studi eo bet, martolod eo bet ive, o klask mont da arched da c'houde, met d'an ampoent e kouezas klanv, hag ar medisin e alias da jom en êr vat; deskadurez en deus, labourer brao eo pa gar, ha p'en deus bet eur banne eo dreist da gounta traou!

En deiz-ze, eta, oa staget da veuli ar gwinn; « Gwella tra a zo war an douar eo ar gwin, bugale, dibrada ra ar spered, pa ne ever ket re anezan! pellaat a ra an anken hag ar boan eus kalon an den gand e-nerz! Salaquit, emezan, petra lavare Salomon, ar roue Salomon: « Ar gwin a zo graet gand an den da laouenaat e galon! » Hag ar vedisined a-wechall a lavare d'an dud: « M'en deus graet ar gwin gaou ouzoc'h diouz an noz, evit anezan teir gwech muioc'h antronoz vintin hag e viot pare! »

Yec'hed deoc'h tudou! eme Hamonig, en eul lipat e werennad!

— « Plijout? da biou ne rafe ket? e liou, e vlaz, e c'houez, e dommder... oll int mat ha kaër! Ha c'houi, eur vaouez devod, ne nac'hoc'h ket kement-ma: (Hamo-

ning a lammas e dog diwar e benn) Hor Zalver e-unam en eus cdhenchet an dour gwin, komzet en deus diwar e benn ! »

An holl a oa deuet dic'hoarz breman o sellet ous ar den koz, dizolo e benn gantan, o lavaret hano diwarbenn hor Zalver Jezuz, a-greiz displega sore'hennou ! Gant he mousc'hoarz dudius Azilis a Iavaras dezan :

— « N'eus ket gwelloc'h egedoc'h da ziroufenna tal an dud, tonton Hamon ! ha da zigas da zonz dezo eus traour santel ar relijion, hag eus an enor a zo bet graet d'ar gwin gant Mab Doue, p'e gwir frouez ar winien a deu, dre gomzou ar beleg, da veza chenchet en e Wad ! Livirit an Anjelus deomp, marplij ? »

Da c'hedal ar poent da vont d'ar gousperou ar wazed a lakeas eur c'horniad hag ez ejont d'ober eun dro er c'hreier, tra m'edo ar merc'hed o sikour distalia ha skaota.

*

Estreget gwin oa evet en dervez-ze; ar merc'hed a zo gwelloc'h ganto piketez ha bier; an daou seurt oa graet er gêr hag ez an da lakat aman ar c'hiz d'o aoza, araok diskléria unan eus an danevellou hon devoa levet gant Hamonig : istor Bran, pe hini Janed ar c'hinacouégez, pe c'hoaz Matilda, hag eur mareat all, rak gouzout a oa dindan envor kement mojenn skrivet diwarbenn e vro, hag ouspenn kals a draou eus buhez ar Zent. Hogen, hirio eo re zivezat, mal hon eus da vont d'hor gwele ! nerin eia nemet merka buan ha buan ar bier hag ar piketez :

Bier marc'hat-mat

Lakit 15 litrad segal en eur varikenn a gant litrad; lakit ive eul lur goell-bier ha daou-ugent litrad dour tomm; arabad lakat dour bero ha kemmeskit mat. Antronoz e lakeoc'h daou-ugent litred all, ha kemmeskit adarre.

D'an trede dervez e lakeoc'h ugent litrad dour tomm da beur-leuna ar varriken; lezit epad c'houec'h dervez hag evit ho pier; abenn pemzek dervez goude eo mat e eit-denna.

Bier all

Dour	100 litrad
Sukr melass	5 lur
Bleun houpez (houblon)	100 gramm
Gwriziou louzaounn an dersienn (gentiane) ..	50 gramm
Goell-bier	50 gramm

Lakat an houpez ha gwriziou louzaouenn an dersienn (gentiane) da drempla en dour bero, e tregont litrad; o sila en eun tamm lien antronoz; kemmesk en eur bodez ar sukr-melas hag ar goell-bier, o lakat er varikenn hag o lezel e go epad pemp pe c'houec'h dervez. Neutze e c'heller tenna e boutailhou hag eva ar bier.

Piketez

Evit 100 litrad dour lakat :

Deliou önn	100 gramm
Sukr	9 lur
Chicorée	eun hanter pakad
« Acide tartrique »	30 gramm
Goell-bier	12 gramm

Lakit ar chikorée en eun tamm lienn, eur zac'h, taolit ar zac'hadik chikore-ze en eur pod da virvi war an tian epad diou eur gand an deliou önn. Kemmeskit disparti, en eur bodez an « acide tartrique » hag ar sukr, en eur lakat dour bero varno d'o zibouloudenna ha d'o zeuzi.

Lakit hanter leun ho parrikenn a zour yen; taolit ar re-all pa vezint poaz, ha teuzit en dour ar goell-bier; henez a vez lakat da ziveza. Leunit ho parrikenn ha kemmeskit mat-mat gand eur vaz. Mat eo gwalc'hi ar varrikenn araok lakat ar piketez ebarz gant deliou ment hag eun tamm « bi-carbonate de soude » en dour bero; rinsa mat goudeze. Ar piketez a vez mat da eva abenn pemzek dervez.

TINTIN ANNA.

Buhez tud va farrez

(Kendalc'h)

Ar merc'hed avat a zo kalz furoc'h em parrez, rak dont a reont da verc'her da werza viou, amann ha traou all, ha morse n'e meus gwelet unan hag a vie anat eur bannewarni. Ha perak ne rafe ket ar gwazed evel a ra ar merc'hed? perak ne gasfent ket da foar an diaoul ar c'hiz sotze da lipat ar werenn evid an distera digarez!

Em parrez, pa vez eun tamm friko da gaout, eman ar c'hiz gant ar yaouankizou da vont da ober eun dro vale ha da ganaha da ziskana!

Kaer eo ar c'han, met ar youc'hadenou hag ar blijadennou a losk yaouankizou va farrez, n'int tamm ebet dereat, ha gwelloc'h e rafent tevel eget blijal! met piou eo an hini a gav d'ezan eman o vlejal pa vez o kana?

Petra a gan ar yaouankizou da zeiz eur friko em parrez?

Netra nemet luc'hach deuet eus ifern Pariz, netra nemet soniou gouest da lakat eur marc'h maro da zevel war e batonou!

Iskis eo sonjal e vefe kavet tud. Kristenien vat war o meno, da gana hevelep soniou difoupet eus an toullou breina zo e Pariz!

Iskis eo e ve Bretoned o youc'hal hevelep breinadurez, pa 'z eus en o farrezioù soniou brezonek yac'h, soniou graet evid an eureujoù ha mat da lakat an dud da c'hoarzin hag ar c'halonou da dridal!

— Ha perak e kan ar yaouankizou ar zoniou hudur-ze?

— Evid ober giz Brest ha netra ken! evit diskouez da gêrig e c'houzont kana eveldo luc'hach! Em parrez, eur pennad zo, e vez diskouezet taolennou cinema. Hogen an diskouezadeg-ze a c'hell beza mat ha beza fall, hervez an taolennou a vez dispaket.

An ebatou-noz, a zo bet ato fall hag a vezo da viken, rak an denvalijenn eo deiz an diaoul, eno eo eman o c'hoari e baotr-mat, eno eo eman en e voued!

An dud diwar ar maez ne vezont ket o sellet ouz an

ormidou-ze, ha me a gav d'in emaint gwelloc'h en o gweled an hanter-noz, eget o sellout ouz traou hag a goust reger mont d'o gwelout, traou savet evit tenna gwenneien diouz godelloù an dud diabour evel ma 'z eo bourc'hizien ha bourc'hizezed va farrez.

Em parrez ar yaouankizou n'ouzont ket dansal, war ar maez da vihana, ha n'int tamm ebet falloc'h abalamour da ze, Dansal. N'eo ket yac'hus evid ar c'horf, dreist-holl en eur gambr kloz, dre ma lonker poultrenn hag a c'hell beza nozus d'ar c'horf. Tapout a c'heller eun taol tomm ha yen, ha meur a vil den o deus tapet o fall en danson. Ha ne gavit-hu ket iskis gwelout tud o trei war begou o zreid gwasoc'h eget kornigelloù, d'ar mare ma tlefant beza o roc'hat en o gweleou! Ma n'eo ket an dans eun dra yac'hus evid ar c'horf, n'eo ket yac'husoc'h evit an ene, rak n'eo ket rouez gwelout gwarizi o sevel etre an dud yaouank goude an ebatou-ze.

An hini a ya d'e welé pa deu an noz,
A vez direbech antronaz.

A lavare gwechall hon tud-koz, ha re wir eo:

Evelato, pa furchan mat, e kavan eun hanter dousenn-vec'hed ha kement all a bôtred, hag a oar brao dibarrezia, evit mont da zansal en eun osteleri renet gant tud difeiz hag a nebeut a boëll.

E-Kreiz an dansou
Ec'h azez an diaoulou

a lavare d'in va mamm gwechall, ha gwir eo.

Ar yaouankiz a rank kemer plijadur!... Red eo e tremenfe ar yaouankiz! — Ha me a lavar e tlefe ar yaouankizou tremen er plijadurioù ne zougont ket d'ar pec'hed hudur ha mezus. Hag a zaerou a geuz a oz bet skuillhet gant tud yaouank diwar goust an dansou!

Em parrez, an dud deuet war an oad, dreist holl war ar maez, a zo piz war o gwenneien, nemet pa vez diank d'ezo traou da rei brud d'ar familh. Evit kaout sterna-chon kaer ha weturioù soublik e c'houzont tienna o fa pericu arc'hant diouz o godelloù. Met aman, ar re goz a zo.

poulzet gand ar re yaouank, c'hoant d'ezo d'en em ziskouez pinvidik goude ma rae vent ket. Ar warizi an eil ouz egile eo a zo o poulza ar re yaouank diwar ar maez da ober an eil ar pez a wel egile oc'h ober. Per ar Ger-vihan a lavaro outan e unan : Olier ar Gerveur en deus bet eur wetur zistrons, ha me am bezo ivez, rak sonjal a ran em eus kement a aes hag *henez!*... Hag em eus sonj oz ken da gaout unan kalz bravoc'h eget hini *henez!* Setu ar pennou avelet ! setu ar moged, al lorc'h, an enor!

Pa vez meneg avat da gaout tud da labourat ervat an douarou, â neuze kouer a oar skei diouz an traon, sacha en tu dioutan beteg an diner diweza ! Pe vez tud di-naez ganto o labourat, an ti eien ne c'houzont dare ped eur e vez diouz an noz, ha chom a reont er park keit ha ma welont sklaer da labourat. Evel-se ne gavont ket a dud da vont daveto nemet diouz ar skrign ! Evel-se c'hoaz, ar mevelien war ar maez, skuiz oc'h ober trivec'h eur labour bemdez, a glask hent ar c'hêriou, el lec'h ma vezint paet hiroc'h heb ezomm da labourat kement.

Em parrez e welan e-leiz a goueriaded hag a dlefe kaout tri mevel evit kas ervat an tiegeziou en-dro, hag a ra o z reuz gand unan hepken. Evel-se, kentoc'h eget kemer tud ha paea enno keraouez, ne reont nemed eur skraba d'o douarou, hag an douar ne ro nemed eun hanter eus ar pez en dije roet me vije bet labourete ervat.

Eun dra al hag a zo grevus meurbet a welan c'hoaz war ar maez. War zigarez ma 'z eo ker an dud, an tieien, eur c'halz anezo, a laka o bugale, pôtréd pe vec'hed, da ober labourou redenn evid o oad. Red eo labourat, gwir eo, met n'eo ket mat ober re, ober dreist an nerz. Al labour a zo eur yec'hed, ma ne c'houzor get ober diouz an nerz. An traou yaouank, dre fouge alies, evit diskouez ez int pôtréd gouest, pôtréd, vat, a gemer penn ar c'hravaz gand pôtréd krenvoc'h egeto, hag a dap diwar goust ar re vec'hiou a reont pe eun diskenn-bouzellou, pe a ra eun distresa bennak da unan pe unan eus oizili.

Ma ne deu netra d'ar gêr diwar c'hoari, diwar labourat re, dwiar ar re vec'hiou, ne deu ket unoc'h.

Gwechall goz em parrez edo ar c'hiz da lenn goude koan levr Buhez ar Zent, ha da zul goude lein da lenn

Aviel ar zul Breman, zoken war ar maez, ar c'hiz vat-ze a zo a-nebeudou o vont da fall, ha seblantout a ra d'in e tec'h hirio a-sil-a-sil ar goueriaded diwar al linenn heuliet gand o zadkoz gant kement a aket gwechall. N'eo ket war greski eo eza ar feiz e kalonou an dud yaouank a hirio, siouaz. N'eo ket war greski kennebeut eo ez a aket an dud yaouank da vaga o sperejou gant traou a bouez, gant gwirioneziou ar Relijion, rak, siouaz, re droet int gant plijaduriou ar bed.

Ma teu ar feiz da glouaraat e kalonou an dud yaouank, an traou pouezus, poellus a zell ouz mad o bro Breiz, ne ra d'ezo na tomm na yen, dizeblant e chomont ivez war ar poent-ze, ha moarvat ne gavfen ket em parrez eun hanter-dousenn dud hag o defe biskoaz klevet hano eus Nevenoe !

Dizeblant war gement zo nemet war an dastum mado, tud va farrez a ro c'houec'h dervez hanter bep sizun d'o c'horf hag eun hanter dervez a vec'h d'o ene ha d'o spered.

Loeiz AR FLOCH.





TANVOUEZIT !

Bugale geiz ! echu eo ar skol; e vakans emaoch; laouenedigez a zo en ho kalon ha petra reoc'h bremañ epad daou viz?

Meur a hini ac'hanoc'h e zikouro o c'herent da z'astum an eost hag ar re all petra raint?

Diskuiza diouz o labour-skol. Ha netra ken?

Selaouit ! Pa 'm oa hoc'h oad, va c'herent, a lavare d'in: « Kerz da dañvoueza ! »

Gouzout a rit petra eo an dra-ze; dañvoueza ? Tañvoueza pe bennaoui a zo dastum an dañvouezennou pe ar pennoued a jom a-slabez war ar park, goude ma vez bet endrammet ha berniet an ed. Eul labour skanv eo al labour-ze ha diouz doare ar vugale.



Selaouit ! ta !



Kenstrivadeg an danvouezerien

Tanvouezit, met.....

Met n'it ket da gemeret skouer war Laouik an Teo a jom da hunvreal e kichen ar bern ed epad ma labour ar re all. Komprenit mat, n'eo ket mont da dañvoueza zoken eo a c'houlennan ouzoc'h; lenn a rit gant plijadur *Feiz ha Breiz ar Vugale* ha da fin an istor e teu eur mouse'hoaz war ho muzellou. Ha goude? Laouik an Teo a vouse'hoarz ivez! Grit kaeroc'h eget an, avat, goudeze! Dastumit en dro deoc'h ar geriou fentus a glevoc'h; geriou bugale pe geriou re vras, mat da lakat an dud da c'hoarzin; livirit d'ho tad koz pe d'ho mamm goz konta d'eoc'h eun istor bennak; skrivit an istoriou pe ar geriou fentus-ze, gwella ma c'helloc'h, e brezoneg, na petra 'ta, ha p' ho pezo pennaouet pe dañvouezet eun dournadig skridoù, traou plijadurus klevet ganeoc'h warno, c'houi o degaso d'comp ha ni a roio evito prizioù kaer d'ar re ac'hanoc'h a vezo a genta.

Kenavo! fizians am eus e c'hellan konta warnoc'h.

AR BREUR BRAS.


Ho labourou a ranko beza kaset d'an « A. Perrot, Rener *Feiz ha Breiz, Scignac (Finistère)* », abenn *Hanter-Eost da zivezata*. Eno o c'habin pa 'z in da ober eun dro d'ar gêr.



‘E Bro-Alzas, gwechall, e oa kals a ronfled. Ar ronfled-ze, gouzout a rit, a zo tud vras, ha gwella ma’z int peurliesia, eo da ober droug. Ronfled an Alzas, avat, a oa paotred chentil ha ne lavarent ger da zen-karet e oant zoken gant an holl, rak int-i eo o devoa graet eus an Alzas eur vro dispar ha pinvidik: kompezet o devoa ar menezioù, diveinet an douarou, dizec’het al lagennou ha laket ar Rhin da dremen dre o bro. (1)

‘E ker Nideck e oa eur c’hastell hag a oa perc’hennet gant ronfled bras ha pinvidik kenañ. Karet oant gant tud ar vro. Eur verc’h o devoa hag a oa koant meurbet, met morse ne devoa laket he zreid er maez eus ar c’hastell. Eun dervez, skuiz o chom atao ouz ar prenestr o sellout ouz ar gwez pin a c’houdore ar c’hastell hag a vire outi da welet pelloc’h, ez eas kuit, dre guz, ha setu-hi o redek ar vro. Souezet e voe ar paour kaez plac’h; biskoaz n’he devoa gwelet kement all.

(1) Ar Rhin a zo eur ster vras a zo he eienenn en Alamagn hag a ven em daol er mor er Holland.




Ne ouic ket e oa tud bihanoc’h egeti hag e kemeras an dud-se evit c’hoarielloù; tapout a eure tud a oa o labourat eu eur park hag o lakas gand o alar hag o c’hezeg en he zavancher hag e tizroas, Jorc’h enni, da’ ziskouez he c’havadenn c’he zad. Diskarga a eure he barlennad, war an ‘daol, hag e poulze an dud hag al loened gand he biz, kement a blijadur he devoa ouz o gwelout o vale:

— Setu aze eun taol kaer, avat, va merc’h, eme an tad; an dra-ze n’eo ket eur c’hoariell eo; kers buan da gas an dud-ze, endro, d’o fark! an dud-se eo a had ar gwiniz, a deu da veza danvez bara. Heb’ an dud vihan-se, ni, ronfled bras ha galloudus a varvfe gand an naoun e c’ounder hor c’hoajou!

Pep hini, bras pe vihan, paour pe binvidik a labour evid e nesa.

Skriz kaset gant:
ERWAN BERTHOU.

Ha skeudennaouet gant:
H. AN ALARC’H.



MARO AL LABOUSIG

Va-c'ha-lon a zo gla-c'ha-vez-Er
 beu-re-ma em eus ka-vez-Va la-bou-sig muc
 ne grou-ed Va. la-bou-sig'zo-ma-ro'zo-ma-ro-Va
 la-bou-sig-a zo maro-mik.


*Bugale, eur barz, hag ho
 kar kenan, en deus savet
 ar werz-man, evidoc'h, a ra-
 toz kaer!*

2

Ouz a glevout, e tihunen,
 Siouaz! Breman ne' gano ken:
 E gein, e gof, e benn 'zo yen!

3

War baly va dourn, kichen an-tan,
 'Meus astennet al loen bihan:
 Met n'en deus graet na finv, na van!



4

Roet em eus d'ezan louzou
 Eneb ar gwasan klenvejou:
 Chomet eo kloz e valvennou.

5

Va zad d'in me a lavaras:
 « Hen mir breman evit ar c'haz
 A ray eur fest gant'n arc'hoaz! »

6

Daerou eleiz, em caoulagad,
 Ha d'am labousig o pokat
 Me a sonje: « Biken, avat! »

7

Va mamm he deus d'in lavaret:
 « N'eo ket bet krouet an evned
 Evid beva en eur gaoued! »





8

E korn al liorz, en disch'hlao
 Hag e disheol eun torkad skao
 Em eus kempennet eur bez brab!

9

Hag eno em eus douaret
 Ya labousig paour ker karet...
 War eur maen-glas em eus krivet.

10

Em eus skrivet : « Paotredigou,
 Lezit gan' evned ar maeziou.
 O nezig hdg' o frankizou.

Evntig Penn-ar-C'hoad.



KELEIER AR MIZ

Goueliou meur ar Zakramant e miz mezeven diveza
 o deus bodet kristenien eus pevar c'horn ar bed kristen.

Ar Vretoned daoust pegen dister e oa o niver n'o deus
 ket getlet tremen e enezenn ar zent hep beza gwelet hag
 hep ma vije graet d'ezo eun digemer kalonek.

An A. Cornic, Rener meur ar Bleun-Brug hag e bried
 eus Douarnenez, an A. Marc ar Berr ha daou gamarad
 d'ezan eus Pont-n-Abad, an A. Cuff, kaner Leon hag e
 bried eus Pont-Aven a zo bet digemeret, epad ar Goueliou,
 gant an A. Byran, maer Dublin, an A. Myles Dillon, ke-
 lenner e skol-veur Dublin a en em gargas da ziskouez
 d'ezo ar pez a gaera a oa e Iwerzon.



An A. Cornic hag e dud
 endro da Lord Byran, maer Dublin..



*Bretoned ar Bleun-Brug gand an A. Dillon
dirak Kambr ar Gannaded e Dublin*

E Bro Gembre Bretoned ar Bleun-Brug a zo bet digemeret, evel breudeur, e Carmarthen, e Lampeter hag e Lanelli. An A. Owen hag e yugale hag an A. Harris a lakeas da welet e tri dervez ar pep kaera a oa da welet e bro goz hon Tadou.

Kana ha c'hoari a rejont, tri dervez dioc'htu, e Car-



An A. Cornic hag e dud e ti-kêr Dublin

marthen, e Lampeter hag e Lanelli dirak eur bern tud diredet d'o selaou ha laouen o welet pegement a henvedigez a oa c'hoaz etre Breiz-Veur ha Breiz-Izel.

KERANNA

Gouel soudardet ha martoloded Breiz ar brezel bras e Keranna d'ar 24 a viz gouere diveza a zo bet hep par.

Konta a raer e oa, da nebeuta, 150.000 den bodet eno en deiz-ze, ma voe benniget chapel bez meur ar vrezelourien varo.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz gouere :

An Tad Trebaol, Rom	1
An A. Pichen, Leur-ar-C'halvez, Treflez	1
An A. Caeric, person Sant-Cadou	1
An A. J. M. Coadou, Kelenner Pont-Kroaz	1
An Dimezell Ricou, Plougonven	1
An A. Riou, Plougonven	2
An Tad Quinquis, Verulam (Afrik)	2
An Dimezell Jann Mari Goareguer, Crec'h an Neven, Louargat	1
An A. J. M. Martin, ru Névez, Plistin	1
An A. Francis Martin, Ru Nevez, Plistin	1
An Dimezell Suzanna Baro, Prat Ledan, Plistin ..	1
An Dimezell A. M. Guillou, Hospice St Henri, Plistin	1
An Dimezell Janig ar Meur, Ru nevez, Plistin	1

Etre holl, er miz-man

Leoriou rakprenet betek hen 957 + 15 = 972.

Da heul ar pemp hano diveza-ze edo al lizerig hegarat-man :

Plistin, 20 a viz Gouere.

Me garfe kavout muioc'h a hanoioù da gas d'eoc'h, Aotrou Person, ha bet em bije, a gredan, paneved ec'h ont war ma gwele, eiz miz a zo, ha n'ouzon ket evit pegeñt c'hoaz!

Kas a ran d'eoc'h eun tammig rimadell ma kav d'eoc'h e talv ar boan he lakat war ho kelaouenn :

E amzer an avalou

Eur paotr bihan o sellet ouz koanta aval a zo e beg ar wezenn.

Ma vijen bet eun aval melen
Uhel ha koant e beg eur wezenn
E koesfen dioc'htu 'tal kichen troad
Eur paotrig evel don fur ha mat.

E lec'h ohom aze pignet ken uhel
Da ober avi d'eur paour kaez bugel
E larfen: « Ma faotr bihan tec'h da bennig
'Z an da goueza 'n ez kichennik.

*Kenavo, Aotrou Person, goulenñ a ran diganeoc'h duzen
eur bedennig mar plij.
Deoc'h gant doujans.*

JANIG AR MEUR.

Setu aze eur plac'hig hag a labour gwelloc'h evit he
Breiz diwar he gwele eget mil ha mil all diwar o zreid!
Na pebez skouer vat!

Trugarez ha meuleudi d'ar plac'h yaouank-se hag eur
bedenn ma roio Doue d'ezhi yec'hed da labourat startoc'h
c'hoaz evit Breiz, rak ezomm a zo.

Beb an tammig

Er a ar marc'h gand ar big:


Bep an-tammig ivez e tostaomp ouz ar mil hag a-raok
fin an hanv-man e rankomp koueza warnañ ma vezo gel-
let moula al leor da vihana a-benn Nedeleg.

Degas an hanoioù d'an A. Perrot, Rener Feiz ha Breiz,
Scrignac, (Finistère) ar re o deus c'hoant da brena al
leor a-raok ma vezo moulet : degas an hano heb an ar-
c'hant.



Divinadennou Miz Eost

- I. — Eur gamprig, vut
leun a eskern-tud.
- II. — Savet er c'hoat, a beur er prad
Hag a ya da di ar roue d'e drugarekaat.
- III. — Petra eo kenta tro a ra an deliou melen o koueza
diouz ar gwez?
- Degaset gant Barba Lez, Bodilis.*



Aze ez eus eur vag war al
lenn. E pelec'h eman an trei-
zer?



Gwelet a riñ eur yar
klask he boued, met pelec'h
eman he c'hoar?

Degaset gant Rosan Pleiber ha L. Caër deus Plouenan.

Er miz a zeu e lakimp aman hanoiou gounideien divi-
nadennou ebrel, mae ha mezeven.

Feiz ha Breiz

Discours prononcé par Son Exc. Mgr Duparc
à Vannes pour le 4^e Centenaire
de l'Union de la Bretagne à la France

« *Nos autem populus ejus et oves
pascuae ejus.*

Nous sommes son peuple et le trou-
peau nourri dans ses pâturages. »

MONSEIGNEUR (1),

MES FRÈRES,

Dans ce texte des psaumes, je traduis notre sen-
timent filial à l'égard de Dieu, à l'égard à l'égard de
la Bretagne et à l'égard de la France.

Je n'en n'ai pas trouvé qui fût plus opportun et
plus juste, à l'heure où nous venons chanter un *Te
Deum* pour remercier Notre Seigneur Jésus-Christ
des grâces qu'Il nous a données, au temps de notre
indépendance bretonne comme pendant les quatre
cents ans qui se sont écoulés depuis l'union de la
Bretagne et de la France.

C'est assez vous dire que le Breton qui a l'hon-
neur de vous parler ce matin est en même temps un
Français loyal. L'admiration aimante qu'il a vouée
à sa petite patrie ne saurait amoindrir son affection
pour la grande. Il les place au même rang dans son
cœur, et les jugements mêmes qu'il devra formuler
avec l'histoire sur les relations entre les deux pays,

(1) Mgr Trehiou, évêque de Vannes.

depuis l'acte d'union qui a joint leurs destinées pour les bons et les mauvais jours, témoignent de ce double amour.

Les organisateurs de nos fêtes savent que les affections réfléchies ne sont pas aveugles et que les dévouements qui comptent sont ceux où la conscience garde ses droits.

Ainsi l'ont toujours compris les Evêques de Bretagne, et ce n'est pas mon vaillant Frère, l'Evêque de Vannes, qui interrompra la tradition. Je vous apporte sa pensée avec la mienne.

Mes Frères nous avons beaucoup reçu de la Providence divine.

Dieu nous a établis dans la reine des presqu'îles de France, merveilleuse à voir en été, d'une beauté grave en hiver, presque partout fécond sous la main du travailleur, bien arrosée, bien plantée, baignée par un océan séduisant mais dangereux, et d'ailleurs vivant et nourricier, qui encadre une terre encore plus riche en hommes qu'en produits du sol, et dont on pourrait dire : *Alma parens virum*.

Il nous a fait naître d'une race de paysans, qui a fourni, le long des siècles, d'admirables ouvriers, des penseurs, des littérateurs, des artistes, d'héroïques soldats et marins, mais qui est demeurée dans son ensemble attachée à la terre et a créé ce fonds solide de société où pouvait régner d'une façon à peu près continue l'union cordiale entre les classes sociales, parce que l'esprit chrétien y rendait le travail noble et rapprochait les conditions dans l'intimité du partage des joies et des peines.

Il nous a appris une langue, plus ancienne que les temps de son fils Jésus, mais qui ne fut, depuis que nous connaissons Jésus, au témoignage du P. Maunoir, souillé par aucune hérésie, et qui attend de nous au vingtième siècle une fidélité égale à celle

de nos aînés parce que c'est cette langue qui, en se pénétrant de nos convictions religieuses et de nos affections de famille, a uni fraternellement nos âmes, a gardé vivante notre personnalité, a entretenu notre patriotisme breton, a protégé notre liberté, a enrichi notre patrimoine intellectuel de trésors où s'est alimentée jadis la littérature du monde entier, et où les écrivains et les orateurs de nos quatre cantons puisent encore aujourd'hui des inspirations dignes du passé avec des œuvres qui devraient suffire à lui donner droit d'entrer dans tous les programmes d'enseignement classique.

Il nous a donné sa religion, celle de la vraie Eglise. Je n'ose pas dire qu'il nous a choisis comme son peuple. Il n'y a plus de peuple de Dieu, choisi par révélation, comme le fut Israël avant son déicide. Mais tout peuple a le devoir de devenir le fils de Dieu en s'attachant à sa foi et à sa loi, et reçoit dans ce but des grâces providentielles qu'il dépend de lui d'accepter ou de rejeter. Y avons-nous toujours été fidèles ? Dans tous les siècles sans doute nous avons à faire des *mea culpa*, et nous n'y avons pas manqué. Mais dans l'ensemble, grâce à Dieu, nous n'avons pas commis l'apostasie en masse qui déshonore l'histoire d'autres nations moins heureuses. Les Evêques et les prêtres d'aujourd'hui peuvent donner la main, avec humilité, mais sans rougir, aux vieux Saints fondateurs de nos diocèses, Saint Pol de Léon, Saint Corentin, Saint Tugdual, Saint Briec, Saint Malo, Saint Samson, Saint Patern, Saint Melaine et Saint Clair, avec les moines et les apôtres innombrables, bardes errants comme saint Hervé, ou chefs d'Etat comme Saint Judicaël, ou recteurs bretons comme Saint Yves, qui de siècle en siècle, ont transmis en le ravivant le flambeau de l'Evangile à nos générations successives, à travers plus d'épreuves que de

joies, avec une fidélité entière au Christ et au Pape, en bâtissant, à Jésus sur sa croix, des calvaires et des églises qui ne sont pas trop indignes de Lui, et en construisant dans nos âmes et avec nos âmes des édifices spirituels infiniment plus précieux que nos églises de granit. Mais bien au-dessus d'eux encore, je rends hommage en leur nom à Marie et à Sainte Anne, qui les ont dès l'origine suscités pour nous évangéliser et nous conduire, qui leur ont donné incessamment des successeurs animés de leur esprit, qui leur ont envoyé dans une heure de crise, un auxiliaire magnifique en Saint Vincent Ferrier, aussi capable de se faire comprendre aux Bretons qu'aux Espagnols ses frères, — et je dis que, par la vertu de leur apostolat, sans être un peuple de saints, nous avons été dans une large mesure un peuple de Dieu : *Populus ejus et oves pascuae ejus*. Comment ne remercierons-nous pas le Christ-Jésus de cette grâce supérieure à toutes les autres ?

Te Deum laudamus.

Dieu y a ajouté la grâce d'une indépendance nationale prolongée pendant près de dix siècles.

C'est le temps épique de notre Bretagne. Je ne dis pas que nous y avons été toujours heureux. C'est souvent une douloureuse histoire que celle du petit peuple que nous sommes, qui ne souhaite que la paix et qui est toujours en armes, toujours convoité par ses voisins du continent ou d'outremer, toujours debout pour assurer ses frontières, et trop souvent déchiré au dedans par les rivalités de ses chefs, mais toujours gardé dans son unité par la résolution inébranlable de sauver son indépendance.

Ce sont nos vieux Saints qui nous soutiennent, pour nous conserver le plus longtemps possible, grâce à l'autonomie, notre caractère propre, et fortifier ainsi en nous l'esprit chrétien en vue des devoirs et

des dangers de l'avenir inévitable. Ils voyaient du haut du ciel s'approcher trop vite l'heure où le cher pays serait absorbé par ses puissants voisins. Ils nous tenaient en éveil : « Garde-toi de l'Angleterre. Garde-toi de la France. Appuie-toi sur l'une pour te défendre contre l'autre. Et fais-toi une âme ferme comme le roc, pour demeurer toi-même, avec ta foi, ta langue, tes traditions, quand il faudra entrer loyalement au foyer de tes préférences. Si tu y entres trop tôt, tu ne seras pas de force à te préserver des influences démoralisantes qui ont déjà pénétré les provinces entrées trop vite dans le domaine de la couronne ». Voilà la philosophie de notre histoire. Et qui donc n'admirerait ce petit peuple que rien n'a découragé dans son effort patriotique pendant dix siècles.

Aucun breton d'aujourd'hui ne reniera ces émouvants souvenirs. Nous associons dans nos cœurs tous nos lointains héros, depuis Waroch, Morvan et Wiomar, jusqu'au Père de la Patrie, Nominoé, depuis Salomon et Alain Le Grand jusqu'à Alain Fergent le bon Croisé, jusqu'à Eudon de Porhoët aussi habile qu'héroïque dans sa lutte contre Henri II Plantagenet. Nous admirons Blois comme Montfort, Jeanne la Boiteuse comme Jeanne La Flamme, les 200 de Nantes comme les trente de Josselin, et nous jugeons que Duguesclin et Clisson étaient bien à leur place quand ils bataillaient l'un contre l'autre à Auray, mais qu'ils ne l'étaient plus quand l'un ou l'autre marchait pour la France contre le duc Jean IV. Nous saluons Jean V comme le plus sage de nos ducs, et nous applaudissons son frère Richemond qui fit si noble figure auprès de Jeanne d'Arc et qui eut plus belle attitude encore devant Charles VII auquel il refusait l'hommage lige qu'il ne lui devait pas. Nous ne nions pas leurs fautes à certaines heu-

res. Leurs malheurs les ont expiées. Et mettez en face d'elles tant de vertus et de prouesses dans une élite sans cesse renouvelée, la sagesse et la charité d'une duchesse Ermengarde, les oraisons d'une Françoise d'Amboise, les vertus de famille d'une Anne de Bretagne. Leurs mérites ont compté devant Dieu, par le divin amour qui les inspirait, autant tout au moins que les erreurs et les chutes des pécheurs. Et faites entendre au milieu de tant de prières la protestation d'Arthur tombant sous le poignard de Jean Sans Terre et la plainte de Gille de Bretagne victime de ses imprudences autant que de la haine de Montauban. Groupez-les tous sans crainte Unissez toutes ces voix, tous ces gestes, et traduisez le cri de tout le peuple dans l'éclat de l'épée bretonne s'abaissant devant la Bretagne indépendante. comme pour lui dire : nous sommes ton peuple : *nos autem populus ejus*.

Tous ces souverains nous les aimons, non pas seulement pour les exploits par lesquels ils ont défendu le pays, mais surtout pour la paix qu'ils ont voulu donner à leur peuple dans l'honneur et la justice, pour la culture intellectuelle qu'ils ont favorisée, pour la prospérité matérielle qu'ils ont en général développée, pour la réforme du clergé par le Pape à laquelle ils ont collaboré, pour les monastères qu'ils ont fondés, pour les cathédrales et les sanctuaires pieux qu'ils ont élevés, pour les œuvres d'art qui ont illustré leurs règnes.

Nous rendons grâce à Dieu du bien qu'ils ont pu faire, de la gloire qu'ils ont pu acquérir et qui a rejailli sur notre race et notre pays.

Te Deum laudamus.

Nous n'avons pas cessé d'être les fils de la Bretagne, quand la Bretagne est devenue française.

Ce n'est pas sans tristesse que nos aïeux ont vu se

conclure le pacte qui nous rattachait à une patrie plus grande et plus forte que la nôtre. Quel Breton, même après quatre siècles écoulés, ne partagerait pas leurs regrets ? Le pays avait encore en lui tant de sève ! Il était riche, calme, laborieux, et le plus souvent bien gouverné. Il se sentait de taille à se défendre contre les convoitises de droite et de gauche. Qu'allait-il devenir sous la domination d'une France déjà moins pieuse que lui ? Comment ne pas s'incliner, mes Frères, devant ce patriotisme tenace, preuve de la dignité d'une race faite pour l'indépendance et de la puissance d'une tradition dix fois séculaire ?

Mais la raison et l'expérience disaient : tôt ou tard la France ou l'Angleterre aura le dernier mot. Et si vous voulez comprendre le tragique de la situation demandez-vous quel n'est pas le malheur des provinces ou des petites nations établies sur les frontières maritimes ou terrestres de deux pays rivaux. Regardez du côté de l'Est. Ne voyez-vous pas des provinces, qui sont de cœur avec la France, et que les peuples d'au-delà du Rhin ne désespèrent pas d'attirer ou de ramener dans leur sphère d'attraction ? Il n'y a qu'un moyen de salut pour elles, c'est de se lier indissolublement au voisin le plus sympathique, le plus honorable, le plus sage, le plus fort, et surtout le plus solidement catholique. Ce voisin, pour la Bretagne, c'était la France. L'Anglais, eût été l'ennemi traditionnel installé dans le pays pour l'exploiter. Et quoiqu'on n'en parlât guère en ce moment, l'Anglais, eût été le protestantisme. Deux ans après l'union, en 1534, Henri VII entraînait son peuple dans le schisme et dans l'hérésie. Sans doute l'union avec la France était sous bien des rapports pénible à consentir, puisque, sans nous décapiter, elle abaissait notre couronne. Mais le bienfait pro-

videntiel de cette union, c'est le protestantisme anglais évité. C'est, un siècle plus tard, la main de Cromwell écartée. C'est le sort religieux du pays de Galles épargné au pays d'Arvor. Et, comme la France ne se serait jamais résignée à garder dans son flanc une Bretagne anglaise, c'est la guerre perpétuelle rejetée loin de notre horizon.

Te Deum laudamus.

On ne me fera jamais croire que la Duchesse Anne, si jeune qu'elle fût, n'avait pas entrevu au moins la dernière de ces éventualités, quand elle se décida à donner sa main, puis son cœur, à deux rois de France, sans s'agenouiller devant eux, mais en leur jurant une foi conjugale fidèlement observée. Les Bretons de 1532, prenant à leur tour leur cœur à deux mains, et agissant par raison plus que par amour, consentirent de leur côté à l'union du duché avec la France, en exigeant d'ailleurs les garanties qui mettaient à l'abri de l'arbitraire leurs libertés nationales.

Ce jour-là, nous disions à la France : Fidèles à Dieu et fidèles à la Bretagne, nous voulons bien ne plus fermer avec toi qu'un seul peuple : *populus ejus et oves pascuae ejus.*

Et nous nous tournions vers l'avenir.

Comprenez bien. Nous n'avons pas enterré le passé. Aucun linceul, même de pourpre, n'aurait suffi à l'ensevelir. Il vit encore en nous. Pour des siècles nouveaux, nous l'avons transposé, adapté, ajusté aux circonstances, de manière à garder la personnalité de la race obstinément vivante en nous.

Le mariage avec la France ne fut pas toujours heureux pour la Bretagne. Il y a des unions, même bien assorties, qui sont parfois gravement troublées. L'épouse qui croyait ses droits nettement établis, et qui voulait vivre en règle avec son contrat sur la

foi des traités, peut avoir à se plaindre qu'on les ait violés. C'est toute l'histoire des sursauts d'indépendance de la Bretagne durant les quatre siècles écoulés.

Qu'est-ce qui entraîna périodiquement la Province à une opposition qui ne fut pas sans grandeur ? Deux sentiments devant lesquels doit s'émouvoir et s'incliner tout historien digne de ce nom : la Religion et le Patriotisme.

La Religion d'abord. Nos aïeux prirent parti pour la Ligue contre le Protestantisme. Ils sauvèrent la foi catholique en Bretagne. Mais la vie catholique souffrit grandement des désordres prolongés qui résultèrent de cet état de guerre, et il fallut tout l'apostolat de Dom Michel Le Nobletz et du Père Maunoir uni aux apparitions de Sainte-Anne d'Auray, pour rendre sa vigueur à la foi bretonne et la sainteté aux mœurs populaires.

Deux siècles plus tard, la Révolution, par son caractère antireligieux, provoqua la Chouannerie. La Chouannerie fut grande par ses aspirations vers la liberté religieuse. Il faut condamner les meurtres qu'elle commit, mais admirer son héroïsme dans les combats. Elle dura trop longtemps. L'ordre rétabli, elle aurait dû cesser. Mais peut-on oublier en douze ou quinze ans un état politique qui datait de quatorze siècles et dont le terrorisme jacobin avait ravivé le prestige et accentué le regret ?

Chaque fois qu'au XIX^e et au XX^e siècle la liberté religieuse a été atteinte ou menacée, dans le mouvement d'action catholique qui s'est organisé pour la défendre, les Bretons ont été les derniers à désarmer, et ils ne l'ont fait qu'une fois la liberté assurée.

Les autres réactions de l'âme Bretonne s'expliquent par le Patriotisme. Le patriotisme est double chez les Bretons. L'amour de la petite Patrie mar-

che de pair avec l'amour pour la France. Les deux patries vivent enlacées dans nos cœurs.

C'est la grande Patrie qui a entraîné les Bretons aux batailles interminables sur terre et sur mer, sous la Monarchie, sous l'Empire, sous la République. C'est elle qui leur a demandé de s'attacher au sol dans un labeur constant pour nourrir et enrichir le pays tout entier. C'est elle qui leur a fait découvrir, conquérir et défendre des colonies nouvelles, depuis le Canada jusqu'aux Indes et au-delà. C'est elle qui a bénéficié de la gloire des Brizeux, des Hello, des La Villemarqué, et de leur maître à tous, Chateaubriand.

Mais la petite Patrie, en travaillant pour la grande, a réclamé ses propres libertés, aussi longtemps qu'elle a pu le faire. Elle s'est soulevée quand on l'opprimait au lieu de la gouverner. En face de l'impôt illégal de 1675, les paysans sont allés, hélas ! jusqu'aux limites de la Révolution sociale. Quarante-cinq ans après, à l'heure de la conspiration regrettable de Pontcallec, la Bretagne a été unanime à pleurer l'exécution des conspirateurs et à trouver la répression trop sévère.

Les hommes d'état, au lieu de se scandaliser d'un pareil état d'âme, doivent y apprendre que le plus sûr moyen de faire observer la loi, c'est de respecter soi-même les droits du citoyen.

Ce ne sont pas ces orages passagers qui empêcheront l'union de cœur entre la France et la Bretagne. Nous n'en voulons pour preuve que l'énorme sacrifice consenti sans hésitation pour la France entre 1914 et 1918, sans parler des guerres précédentes qui trouvèrent toujours la Bretagne prête et courageuse.

Voilà la grande preuve d'amour. *Qui animam suam dat pro amicis suis.* C'est l'offrande de la vie. Nous l'avons faite une fois de plus, il y a peu de jours,

devant le monument de Sainte-Anne, qui est un monument pour la France autant qu'un hommage à nos morts.

C'est là, devant Sainte Anne, qu'il faudrait grouper pour l'action de grâces, avec nos saints faisant cortège à la Mère de Marie, les soldats, les marins, les gentilhommes, les bourgeois, les cultivateurs, les commerçants, les industriels et les ouvriers, les hommes de lettres, les hommes d'état, les hommes d'église, les héritiers tous ensemble des Bretons du XVI^e siècle qui firent don d'eux-mêmes et de leurs familles à la France, et qui remerciaient Dieu, parce qu'Il nous a permis d'honorer pendant quatre siècles par un dévouement total, par un travail sans répit, par une bravoure aimante, le pays que nous avons adopté comme notre Patrie.

Et nous dirions au cher et grand pays : Nous renouvelons avec toi l'union conclue par nos aïeux. Nous savons bien ce que nous te devons, les progrès que nous avons réalisés, grâce à toi, dans l'ordre intellectuel et économique. Nous rendons hommage à ton prestige dans le monde, à ton génie littéraire, à ta gloire militaire, et plus encore à ton élan religieux ; car nous sommes fiers de le constater, malgré tes mauvaises lois, tu as l'âme plus catholique qu'une foule de peuples en apparence plus chrétiens que toi. Au témoignage de l'Allemagne elle-même, c'est à toi que revient aujourd'hui « la place dirigeante dans le catholicisme universel » (1). C'est toi qui donne partout l'exemple et l'impulsion aux œuvres, et tous les peuples catholiques des deux mondes viennent te demander les leçons de zèle que réclame le temps présent. L'Évangile qui n'a jamais complètement disparu de ton âme a reconquis en trente ans, sur

(1) Ernest-Robert Curtius, *Essai sur la France.*

les sommets de la société française, à travers des épreuves qui ne sont pas finies, l'élite des esprits et des cœurs. Il reste à reconquérir le peuple. Ce sera long. Mais voilà que ta jeunesse ouvrière s'y dévoue, et tu as des prêtres capables de transmettre le feu sacré aux âmes les plus endormies. Tous ensemble feront rentrer Dieu dans l'opinion nationale et dans les lois.

Mais, mon pays, n'oublie pas que tes fils de Bretagne ont eu leur grande part dans ce magnifique effort et qu'ils ne t'ont rien refusé de ce que l'amour filial peut donner à la Mère-Patrie. Nous t'avons offert le sang de nos veines, sur l'échafaud par nos martyrs, dans les combats par nos héros. Nous t'avons donné le travail de nos bras, les recherches de notre esprit, les prières de nos cœurs, l'apostolat de nos missionnaires et de nos religieuses, le dévouement de nos prêtres, le labeur obscur et désintéressé de nos écoles catholiques, et nous t'avons aidé à grandir ainsi devant Dieu et devant les hommes.

Alors, mon pays de France, si tu veux une Bretagne digne de toi, pourquoi ne nous aides-tu pas à lui garder sa foi, sa langue, son esprit? Pourquoi lui refuses-tu les moyens de grandir encore elle-même par l'âme? Car tu les lui refuses en enlevant aux religieux et aux religieuses qui ont formé cette âme le droit de former aussi celle des générations nouvelles. Le livre de notre passé, c'est l'Évangile. Il nous apprendra à te servir et à t'aimer mieux encore dans l'avenir. Tu veux dans la société plus de justice et de fraternité. Tu veux la paix au dedans et au dehors. Où as-tu trouvé ce programme si ce n'est dans l'Évangile?

Prenons en main le livre qui est la lumière du monde. Et comme je suis ton peuple, soyons tous en même temps le peuple de Dieu : *Populus ejus et oves pascuae ejus.*

Yez hon Tadou koz

Goude komz hon Eskop, piou c'hoaz a lavaro
Eo evit hor yez koz sonet eur ar maro

Hag e kousko emberr er bez?

Nann, nann, war hor muzell hor yez n'eo ket rivet,

Gant kaera plûny a zo bemdez e vez skrivet,

He hent a ra dre Vreiz a-bez.

Ar skoliou, d'he reseo, a zigor o doriou,

Ar barzed, war he fenn, a zastum enoriou,

Holl vugale Vreiz heñ lenno;

Dre o c'halon e red eun hmvre a zudi:

« E vo e brezoneg graet lod eus o studi »

Hag ez eus foug ha lorc'h enno.

Petra vir na vefe ar c'hlasou digoret

Da Vrizeux, da Dajdir, d'ar goulmig « Cadoret »

Da Vlei-Mor, d'ar varzez Abgrall?

Eno, eno emae ene Breiz o veva,

Kemont a gav eno ar galon da eva

Eget e skridou kaer Bro-C'hall.

Sur oun, yez hon Tadou biken mui ne davo,

En e gavell abred ar bugel he c'havo

Ha c'houek e vezo skouarn;

Ha klevet e vezo, hi betek-hen hep brud,

O nijal, fresk ha skanv, eus genou aour an dud

Laket gant Doue d'hon gouarn.

Mez eta, mil gwech mez ha mez dirag an holl

Da neb a lez, er Vro, e yez da vont da goll

Hag a nac'h krenn an tadou koz;

Ne ket gant enoriou, na gant glac'har na keuz,

Met kentoc'h gant dispriz, gant dismegans hag euz

E vo douget e serch (1) d'ar foz.

St-Brieg, 14-8-32.

J. L'HELGOUAC'H, O. M. I.

(1) Serch, jerch = arched, e galleg *cercueil*.

Penaos sevel bugale

Ne glever ken hirio nemet tud o klemm, o lavaret n'heller mui lakat ar vugale da zenti. Ober a reont o fenn fall, mont a reont da redet du-man du-hont, ha pa zistroont d'ar gear da zul, e vez alies sonet hanter-noz. Ma vez graet d'ezo eur rebech bennak, ez eont e kounnar hag e lavaront pep seurt traou diskiant ha divalo.

Trist eo gwelet hevelep tud yaouank, hag o c'herent n'o deus da c'hedal eus o ferz nemet poan-spered ha rann-galon. An dud yaouank-ze a zo troet fall, hag a zo e riskl da jom war an hent fall betek fin o buhez.

N'e ket da ugent, da bemzek vloaz eo klask euna bugale, na zoken da zaouzek vloaz. Abretoc'h e tleer en em lakat ganto. En o bloaveziou kenta eo ret evesaat outo ma keme-rint plegou mat.

Bez ez eus tadou ha mammou hag a dlefe mont d'ar skol evit deski sevel bugale.

Setu aman eur bugel hag en deus stoket e benn ouz an daol hag a en em laka da lenva, da youc'hal.

Petra raio ar mammou? — Lod a en em lakao da grena hag a lavaro: « Ah! peger spontet oun bet ganez! Me a gave d'in oaz hanter-lazet! » Re all a redo etrezeg ar bugel en eur grial. « Ah! Ar paourkez paotrig! Nag a boan en deus! » Re all a grogo buan er bugel, her stardo ouz o c'halon, a boko d'ezan gant teneridez: « Ah! mignonig, va c'harantez, chom etre divrec'h da vammig », hag e prometint d'ezan pep seurt traou. Re all a raio evelhen: « Ah! faol an diaoul, bremaik e paki da stal! » Hag e lakint ar bugel da skei gant eur vaz war an daol pe e skoint o-unan warni.

Hiniennou a gomzo evelhen d'ar bugel: « Allo! Te a zo bras breman, n'eo netra ar pez a zo c'hoarvezet ganez; ehan da lenva. Eur paotrig bras eveldot ne dle ket lenva. Gwelet a rez, echu ar boan. »

Ar re-man hepken, ar re ziweza, o deus komzet mat, evel ma tleer ober da vugale. Arabat eo diskouez truez ouz eur bugel en deus roet eun taolig penn d'an daol, rak kenderc'hel a rafe neuze muioc'h c'hoaz da lenva. Ret eo dis-

trei e spered diouz ar boan, ober d'ezan sonjal e traou all, lavaret d'ezan e tle ober evel an dud vras, beza krenv ouz ar boan.

Pa vez roet eun urz bennak d'ar vugale, arabat eo ober prezegennou hir, rak ankounac'haat a rafent, met lavaret e komzou berr ar pez a zo da lavaret. Arabat goulenn re digant ar vugale, met hepken ar pez int gouest d'ober.

Roit d'ezo da entent perak e c'hourc'hemennit, e tifen-nit an dra-man pe an dra-hont. Ho pugale a zo o c'hoari hag a ra trouz bras. C'houi a lavar d'ezo, droug ennoc'h: « Roit peoc'h, bugale, pe ho pezo fest ar vaz. » — Ha perak? — Ho pugale a zell ouzoc'h, souezet. Ne gav ket d'ezo e rafent fall o c'hoari evel ma reont. — Lavarit eta d'eza: « Roit peoc'h, rak tad koz a zo en e wele klanv, ha ne gar ket an trouz. » Neuze e komprenint hag e roint peoc'h.

Arabat eo rei diou wech ar memes urz. Ma roit diou wech, ar vugale a zonjo ne dalveze netra ar c'henta urz. Ha ma ne dalveze netra an urz kenta, perak an eil a dalvesfe muioc'h? Ar vugale a en em voazo evelse da zenti pa blijo ganto, d'ober o fenn o-unan.

Arabat eo lavaret traou diskiant evel ar re-man: « Ma ne zentez ket, e teuo an archerien pe ar bleiz d'az ker-c'hat. » En troiou kenta marteze ar bugel en devezo aon, met dont a raio buan da gompren ne vezo ket kaset na d'an archerien na d'ar bleiz.

Gourc'hemennit, met en han' Doue, na dit ket d'o fedi d'ober eun dra bennak: « Da vamm a vezo eurus ma tebrez ar boued-ze. Te a veze eur paotrig mat, ma teskez da gentel. » — Ha mar deo gwelloc'h gantan beza eur paotrig fall? Ouz ho klevet o komz evelse, e kredo e c'hell senti pe chom hep senti.

Mat eo lakat ar bugel da veza war evez araok rei d'ezan eun urz bennak. Ma lavarit evelhen, goustadik: « Digor ar prenestr, Annaik. » Annaik a zo o c'hoari, n'eman ket war evez, n'he deus ket klevet ar pez a zo bet lavaret d'ezi. Ret eo da genta he gervel, lavaret krenv: « Annaik », ha goude m'he deus troet he fenn da zellef ouzoc'h, lavarit neuze: « Digor ar prenestr. »

Na vezit ket atao oc'h ober rebechou. Talvoudus eo, bep an amzer, rei eun tamm meuleudi. « Va merc'h, gra

al labour-ze, hag her gra mat evel an dro ziweza; gouzout a rez en em gemeret gant da labour. » Ar verc'h a vezo lorc'h enni hag a grogo a galon vat el labour goulennet diganti.

An dra-man, avai, a zo fall. « Skub an ti, hag e roin d'it daou wenneg. Kerz da ziwall ar zaout, hag e pezo madigou. Ma karez luskat da c'hoar vihan, me a breno d'it, da fin ar miz, eun tavancher nevez. » Ma vez paet bep tro ma sent ouz e vamm, ar bugel a ankounac'haio eo eun dever senti. Deski a rit d'ezan en em werza.

Ret eo en devije ar bugel fizians ennoc'h. M'en deus fizians, m'en deus evidoc'h doujans ha gwir garantez, en devezo plijadur o senti ouzoc'h.

Ha lakit da ziskenn doun en e galon ar wirionez-man! senti ouz ar gerent a zo senti ouz lezenn Doue, rak Doue en deus renket an traou evelse, karget an tad hag ar vamm da deurel evez war o bugale ha gourc'hemennet d'ar re-man senti ouz ar re a zalc'h en o c'hichen plas an Aotrou Doue.

Pa gresk ar vugale en oad, e tleer kenderc'hel da veilha warno, o distrei diouz kement a zo fall, divalo, rei d'ezo da gompren peger mezus eo ar vesventi, ar pec'hed hudur, pegement a zroug a ra an techou-ze d'ar c'horf ha d'an ene.

Gwelit gant piou ez a ho pugale. N'o lezit da vont nemet gant tud fur hag onest. « Lavarit d'in piou a zarempredit, ha me a lavaro d'eoc'h petra rit. »

Gwelit petra a lennont. Na lezit etre o daouarn nemet skridou dereat.

Ha roit d'ezo skoueriou mat atao. Gant o daoulagad muzioc'h c'hoaz eget gant o diskouarn e teskont an doare da reiza o buhez.

Setu aze traou hag a vije talvoudus d'ar plac'hed yaouank, Deski a dlefant penaos sevel bugale. Met siouaz! N'eus ket unan war dek hag a vije kelennet war gement-se. Deski a reont dansal; muzikat. Mat eo gouzout muzikat. Met gwelloc'h eo c'hoaz gouzout hentcha ar vugale war hent ar furnez hag ar zantelez. Ar familhou eo a ra ar vro; ar vro a dalv ar pezh a dalv ar familhou. Mammou a familh hag a zav o bugale evel m'eo dleet a virit a-berz ar vro peb enor ha peb anaoudegez vat. Y. U.

Perig hag Azilis

Ti Oliv a zo war an hent da vont d'ar redadeg kezeg; ar plac'h yaouank a vije bet laouen o vont ive, met he zro oferenn-vintin a zo hag e rank chom er gêr; he mamm ne vadin ket war ar poent-ze; hag hi eo ar vestrez en he c'hêr.

Ha neuze, ne vez ket amzer da veza inouet! etre skaota al listri, aoza merenn, goro ar zaout ha mont ganto eur pennadig war ar peuri en eul lenn ar « C'hourrier » ha « Feiz ha Breiz » ez a an amzer endro ha ne ouezer hano ken a vez deuet ar mare da aoza koan.

Brao eo bet an amzer epad an deiz, met d'an abardaez e stagas ar glao da goueza, an avel da c'houeza, ha ne spaneas ket araok an noz. Daoust ma veze aketus d'he labour, Oliv a zelle bep an amzer ous an hent bras, lec'h ma tremene kals a dud war o zroad, war o marc'hou houarn, e gweturiou, er c'hirri-dre-dan; eur pennad oa bet, end-eün war-dreujou an ti o sellet ous an dud o tont d'ar gêr dious an noz: « Pegeit e chomi aze da vantri? eme he mamm, o tont eus a zu-man, bet oc'h ober eur varvailhadenn.

— « Dare eo koan, va mamm, emezi, hag edon o kemeret an êr-vat! »

— « An êr-vat? an êr-vat? eme ar vamm, rust outi; kas an hunvreou didalvoud eus da benn, a lavaran d'id, ha kea da derchi friou ar re vihan en ti! ne vezi ket gwelloc'h evit paka glao evel ma res! »

— « Disglavet oun, mamm, gand an apoueilh a zo azioc'h an nor », eme Oliv en eun huanadenn. Met he mam he chachas en ti en eul lavaret:

— « Ne garan ket e ve rendaelet ouzin! deus raktal pe e kousto d'id! morse n'em eus pleget d'am bugale ha ne rin biken! goude ma vijen hanter kant vloaz! »

Ar verc'h a rankas senti; doujus oa ous he zud ha boazet da gerzet eün, met he spered a rede hag he c'halon a Iamme; ne ouie ket perak he devoa c'hoant gouela! ha

brema, ne grede ket zoken trei he fenn ous ar prenestr, gand aoun da veza gourdrouzet. He mamm, evit doare, a oa divinerez; lennet he devoa e kalon he merc'h; gouzout a rae edo Oliv o klask gwelet Morris ar Stang o tont eus ar redadeg, rak klevet he devoa oa aet war e varc'h-houarn asamblez gand e gamalad Job, ha ne felle ket d'ez i e vije c'hoarzet d'he merc'h diwarbenn eur paotr yaouank.

Oliv, en he gwele, n'oa ket goest da gousket; skuilha rae daérou, rak kalet oa bet he mamm outi, ha diaes e kave abalamour ma n'he devoa ket klevet hano eus a Vorris; outi he-unan e lavare : « Petra sonje Azilis ma welfe va fenn tenval? va alia he deus graet, pell a zo, da gas ar menoz-ze eus va spered, ha ne c'hellan ket dizonjal! O Gwerc'hez Vari, va sikourit! » Ar ger diwezama he devoa laosket evit dizamma he c'halon, hag ive abalamour m'oa spountet o klevet trouz ermêz; kaout a rae dezi e oa unan bennag o klask dont en ti. Ar wech kenta ma klevas, ne finvas ket, met pa gavas dezi e tostae an dud, e c'halvas he zad :

— « Aman ez eus tud o c'houlou digor », emezi.

— « Ma'z eo an drouk-spered eo, n'en deus nemed mont larkoc'h, eme Yann; m'az eo eur c'hristen mat er boan, e lakin eun oferenn evitan ». Hag en eur zével eus e wele, e soubas e zourn dounna ma c'hellas er pinsin, da strinka dour benniget ous an diaoul. D'an ampoent, eur vouez he devoa youc'het :

— « Digorit d'in 'ta mar plij, Yann! estreget speredou a zo aman, korfou a zo ive, hag unan anezo a zo glazet! » — An nor a voe divorailhet hag e voe gwelet daou zen yaouank, an eil o harpa egile.

— « Sell! Job ar C'hloastr! eme Yann; petra zo nevez ganez! O, emezan c'hoaz, petra zo en em gavet gant hennan? » En hevelep amzer ec'h anavezaz Morris leun a c'hoad, drouklivet ha c'hoari d'ezan, o chom en e zav.

— « Eul lamm en deus bet diwar e varc'h-houarn, eme Job; lost eur c'harr-dre-dan a zo stoket ennan hag eo chomet eur pennad brao dilavar e tal ar foz. Poan em eus bet ouz e zigas betek aman, rak n'oa ti al ebed war an hent! »

Oliv, a c'hellit kredi, a yeas bihan he c'halon pa glevas an diviz, met ne gredas ket dont ermêz eus he riboul. Klevet a reas he zad o kinnig eur banne krenv d'ar poir yaouank, hag he mamm o prederia outan. Gwa:c'hi a reas e vizaj hag e zaouarn gant dour fresk; netaat a reas e c'houlou gant dour « oxygéné ». Goude, e voe fichet eur gwele reas d'ezan, ha Job, pa welas e vignoun kloz e zaoulagad en e wele, a en em roas ive da gousket war eun tam torchenn en e gichen.

Hogen, ar paour kêz Moris ne raes nemed alteri epad an noz, hag antronoz, pa zavas an dud e voe ret mat lavaret hano eus ar medisin, ha mont da gerc'het e vamm. Yann a oa loc'het abred da gas patatez e kêr : « Starn ar gazeg koz, Oliv, eme he mamm, ha kemer hent ar Stang! lavar d'ezo n'eo ket kals a dra, arabad eo d'id o spounta. »

Oliv a en em dennas er meaz, heb eur ger, met outi he-unan en em glemme : « Neubeud a dra, a zo aes da lavaret, me a garfe e welet evit gouzout penaos eman! Ha ma teu da vervel? o Gwerc'hez santel, me a yelo da Rumengol er bloas a zeu! me a roio eur goarenn deoc'h, evel m'he deus graet mamm-goz en he amzer! me a ray tro ar chapel war bennou va daoulin! »

Emichans n'he deus ket promettet mont da Lourd war he zroad, met kement ha m'edo ganto ne ouie mui re petra lavare!

Edon o rei boued d'am femoc'h — respet deoc'h — pa dremenas Oliv e-biou d'am zi, he-unan er wetur, hi ken aonik! Sevel a ris va fenn hag e javaris : « Da belec'h ez es ken abred Olifik? pe seurt darvoud a zo en em gavet ma tifronkes kement ha ma res? »

— « Difronka ne ran ket, noun, emezi! stréfia avat ne laran ket rak eur friad am eus paket. D'ar Stang ez an da gerc'het mamm Moris a zo pilet diwar e varc'h hag a zo du-man abaoe dek eur noz. Dre ar prenestr em eus e welet ker gwenn hag an dillad, lien tano endro d'e benn. »

Mont a raes kuit, an dour en he daoulagad hag e sonjis :

— « Te, va merc'h, n'az peus ket c'hoant da ziskouez d'in, met, mar gellan, e labourin evidot memestra. »

Ha, da genta, evid Oliv hag he seurt a rank mont o-unan gant kezeg, pa zonjer an neubeuta, e verkan aman eun ali bennag hag a c'hell beza talvoudus dezo :

Arabad eo diskouez d'al loen ez eus aoun razan, santout a rafe dillo an dourn o krena ha n'en divije mui a fiansians en e rener, en e renerez. Arabad eo avat skei gantan evel ginaoueiën am eus gwelet hag a roe bazadou d'o c'hezeg p'o deveze aoun o-unan, pe pa veze droug enno ; an den eo a rankfe beza gourdrouzet ha kastizet hanter-amzer, n'eo ket al loen eo. A-wechou e kargo re warnan, a-wechou all e vezo Jaosk ar ranjennou gantan, al loen a streboto. ha piou a vezo kablus nemed e vestr? Sellit endro deoc'h hag e welloc'h eo ar re a zo chentil ous o c'hezeg o deus ar re vella, ar re reisa.

Araok mont en hent eta, e roer eur guchenn gerc'h d'al loen hag eun nebeud foenn. P'en em gaver e lec'h ma vez da vont, e vez distarnet gant habaskded, laket er goudor, torchet e gorf hag e ziwesker gand eun dorchenn golo, ma vez re domm dezan. Ma vez poud an amzer, ha m'en deus graet eur gwall-frapad hent, ez eo mat frota e ziwesker gand gwin-êgr hag e c'helei gand eul pallenn, eur gwiskad kolo dindannan, da zec'hi ar c'houezenn diwarnan, da c'houde rei eun tamm kerc'h dezan, ha, *goude eun ehan*, eun dournad foenn; m'en deus sec'het kinnig eur zailhad dour dezan *araok dibri*.

A benn diou eur e vez diskuiz al loen ma n'en deus ket bet re hirr pennad; met, m'en deus graet nao, dek, unnek leo, diou eur n'eo ket a-walc'h d'eza da ziskuiza.


E kreiz an hent, pa vez tomm tomm, ha pa zonjer en deus sec'hed al loen abalamour ma c'houez kals e ranker chom a-zav, diskenn eus ar weïur ha kerc'het eur banne dour d'ezan, gant ma ne vezo ket re yen an dour; arabad eo, evit-se, lammet an houarn-gwestegn eus e c'hinou.

Pa vez bet re a boultrenn war an hent, e c'heller gwalc'hi fri ha daoulagad al loen, p'en em gaver er gêr; pa vez pri, gwalc'hi e ziwesker hag e gof da viret ouz ar pri da staga ha da zec'hi outan.

Distarna mat ha kraouia al loen a raok rei netra dezan; dreist-holl pa vez kerc'h da rei.

TINTIN ANNA.

Goueliou eizvet kantved abati ar Releg



Chapel Trinivel, e Scrignac, ha skoued ar Gwalès a Vezaubran, bet hanvet abad er Releg d'ar 25 a viz gwengolo 1462.

Goueliou ar Releg, da hanter-Eost diveza, o deus bodet en dro da dron an Itron Varia, daou dad abad, an Tad Kaourantin, abad ar Melleraie hag an Tad Dominik, abad Thymadeuc, eleiz a chaloned hag ar veleien, unnek prosession hag eiz pe zek mil pardoner.

An Tad Dominik, e kreiz an oferenn-bred kanet gand an Tad Kaourantin, a gomzas eus an devosion d'ar Werc'hez hag eus ar vad graet, e pep doare, d'ar vro, gand ar venec'h. Testeniou anat eus o madelez a jom c'hoaz,


en o sav, e Trinivel-Scrignac hag er C'hloastr-Plourin.
 Goude ar gousperou, eur prolesion eus ar re gaera a reas an dro d'al lenn ha meuleudi ar Werc'hez a dre-gernas eus an eil penn d'egile d'ar geriadenn.

Raktal goudeze c'hoarierien ha c'hoarierezed Plouneour ha Scrignac a ziduas o c'henvroiz gand o feziou farsus hag o soniou-laouen.


Diouz ar pardaez iliz an abati a gemeras he mantell gaonv da ober kaonv d'he menec'h ema bemdez o c'hortoz o distro!

Istor abati ar Releg a zo bet skivet, e galleg, gand an A. chalon Perennes. Kavet e vez da brena evid ugent real, e Keriltud, 11, rue Algésiras, Brest.

Holl lennerien a gemero tro eus bloavez eizvet kantved an abati-ze evit prena leor nevez an A. Perennes.




Skoued visant Gerleo bet abad er Releg ha maro er bloaz 1476.



Skoued eur Poulard bet abad er Releg er XV^{vet} kantved.

An daou skoued-man a weler atao war groaz bered Trinivel.



Bretoned,

Gouelioù ar Bleun-Brug eo kaera gouelioù ho pro.

Bezit e Brest d'ar 4, 5 ha 6 a viz gwengolo a zeu.

D'ar zul 4, da 15 eur an Doktor Cornic a raio eur brezegenn da zigeri ar gouelioù.

Tro ho pezo goudeze da glevet strolladou kanerien Brest ha da welet gwella gourinerien ha gwella danse-rien Menez Arre.

D'al lun 5, da 9 eur ha da 2 eur, studiadegou er « Foyer des Arts », rue du Château, war an doareou gwella da harpa ar brezoneg.

Da 8 eur hanter, c'hoariadeg vras e c'hoarilec'h-kêr.

D'ar meurz 6, da 8 eur, oferen-n-bred, e iliz sant Loeiz ha prezegenn gand an A. Duparc, eskob Kemper ha Leon.

Da 9 eur, kenstrivadegou ar c'han hag ar brezegerez.

Da 1 eur, hanter e loc'ho, eus Kastell Brest, an Duk Yann III hag e bried Janned Savoia evit mont gand tud e lez ha tudchentil vrasa Breiz da zellet ouz ar c'hoariadeg vras graet en e enor e Kerarbecam.

Eur mor a gan e vezo Brest en dervez-se hag ouz pep ti hag ouz pep bruched e ficho bleun-brug menezioù Breiz.



Gwiskamant kaer Plouneour-Traez

Prenit kartennoù-post BREIZ NEVEZ

12 kartenn a zo graet gant Robert Micheau war c'hd Bro-Leon ha 12 kartenn war dud Bro-Gerne.

12 gwenneg e vez gwerzet ar gartenn : o goulenn pe e Kuziltud 11, rue Algeiras, Brest, pe e ti ar C'hourrier, 4, rue du Château, Brest.

Filhor an Ankou

Eun den eus Brieg en devoa daouzek krouadur ha poan a-walc'h o c'hounit bara d'ezo pa lakeas e wreg eun trizekvet er bed hag a oa stummet fall kenan. An tad, kaer en devoe klask, ne gavas paeron ebet d'e baotr bihan : den n'en devoa c'hoant da veza paeron eur c'hrouadur hag a oa da drizekvet oc'h en em gaout endro d'eun aoled.

Ar paourkaez tad a oa o tizrei d'ar gêr, tenval e benn, pa zigouezas gand eun den ha ne oa anezan nemed an eskern hag ar c'hroc'hen ; eur falc'h a zouge war e ziskoaz ; goulenn a eure ouz an tad perak e oa ken trist ha ma oa ha pa ouezas ar wirionez e lavaras d'ezan : « Ma kerez e vezin paeron d'az mab ? Me eo an Ankou !.. N'em eus ket kals a vad da ober d'an



O tizrei eus ar vadiziant.

dud ; met truez am eus ouzil pa 'z kwelan ken nec'het ha ma 'z out ! »

Ar paour kaez kouer pa ne gave ket gwelloc'h a zistroas d'ar gêr ; kaout a eure ivez eur vaeronez, en ardremez, hag ar vadiziant a voe graet diouz ar pardaez. An Ankou ne zellas ket ouz ar mizou rak n'eo ket arc'hant eo a vank d'ezan ; eva a voe graet kement ma o devoa bec'h an tad hag ar paeron o chom en o sav p'edont o tont d'ar gêr, en eur gana.

An Ankou en devoa hanvet e filhor Hollzent, met ne veze graet anezan nemet Sentou. Bep wech ma tremene dre ar vro e teue da welet ar paotrig bihan hag e roe dezan c'hoariellou ha kouignou ha gwegneien d'e vamm. Pa voe ar filhor en oad da gemeret eur vi-



An Ankou hag e filhor.

cher an Ankou a lavaras d'ezan : « Va mab, gwella micher a oufes kemeret eo an hini a vedesin ; dont a ri da veza brudet bras, rak en taol kenta dioc'htu e ouezñ pe e tle an hini klanv mervel pe barea. Ma tle mervel am gweli, — da unan avat e vezi ouz va gwel, — em sav e tal penn ar c'hlanvour hag e c'helli lavaret d'ar gerent n'eus pareans ebet ken da c'hortoz, Pa 'm gweli e kichen treid ar c'hlanvour e c'helli lavaret atao e pareo daoust pegement a zoare fall a c'hellfe kaout. Neuze e liviri rei d'ar c'hlanvour eur c'hoz tamm louzou bennak hag an holl a lavaro eo bet paret an hini klanv gant da louzeier ; en hent-se ne vezi ket pell ez pezo tapet brud vat ha dastumet danvez bras.

Sentou a heulias alioù an Ankou ; mont a eure da vedesin d'an Naoned. Atao ec'h en em gaye gand an



Merc'h klanv Duk Breiz.

bini klanv evel m'en deveze lavaret hag evelse e voe anavezet dillo evit beza eun den desket hag an holl o devoa fizians ennan ! Eun dervez e teujod da lavaret d'ezan mont da welet merc'h duk Breiz a oa o vont da vervel. P'en em gavas e kichen gwele ar verc'h yaou-ank e welas edo e baeron e kichen penn ar glanvourez,, ar pezh a verke edo'houman war he zremenvan ; gard eun taol lagad e klaskas gcunit an Ankou, met henman a hejas e benn evit lavaret nann. An duk hag an dukez a en em erbedas kement ouz Sentou ma klaskas henman dont war o sikour ; pa n'oa ket evit gcunit e baeron dre gaer, e troas penn d'ar gwele hag evelse an Ankou e lec'h beza e kichen penn ar glanvourez a oa harp ouz he zreid. Ar Falc'her koz a yeas en e hent goude beza diskouezet, gant kaunnar, e zourn serret d'ar medesin a oa o paouez c'hoari eun dro gamm d'ezan. Ar brinsez a bareas, met adalek an deiz-se, Sentou ne welas ket mui dremm an Ankou e kichen gwele e glanvourien ha fazia a eure, meur a wech, met, o veza ma oa bet gopreet mat gand an Duk n'en devoa ket ezomm da veza nec'het ; dilezel a eure e vicher a vedesin hag ec'h en em lakeas da vale.

Eun dervez ma treuze eur c'hoad bras e kavas e baeron war e hent ; pell a oa abaoe ma n'en devoa ket e welet ; an Ankou a rebechas d'ezan an dro gamm en devoa c'hoariet e tal gwele merc'h duk Breiz hag a lavaras d'ezan ouspenn : « N'az peus nemed eun nebeud munutennoù da veva ken. Mervel a ri da drede bramm da varc'h hag epad ma komzomp en deus lezet daou vramm ; taol evez ouz an trede ! »

An Ankou a dec'has ; strafuilhet holl, Sentou a gemeras eur maen hag a glaskas e lakat da stanka penn-a-dreñv e varc'h da viret outan da vrammat, met, a-vec'h m'en devoa lakat ar maen en toull ma vrammas ar marc'h gant kement a nerz ma strinkas ar maen ouz penn Sentou a voe ledet, a-stok e gorf,

war al letoun, maro-mik ; evelse e varvas filhor an Ankou hag abaoe n'eo ket da lavaret en defe bet filhor ebet.

G. P.

Keleier ar miz

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz east :

An A. Laurans, Lambezellec.....	1
An A. Rannou, person Moelan.....	1
An A. Pichon, kure Moelan.....	1
An A. Guellec, mestr-skol Moelan.....	1

Etre holl er miz-man..... 5

Gant gouelioù ar Bleun-Brug a zeu, fizians hon eus e kavimp an 23 rak-prener all a vank d'eomp c'hoaz evit tizout ar MIL. Raktal goude ema ar paperou er vouleraz.

Degas an hanoioù d'an A. Perrot, Rener *Feiz ha Breiz*, Scignac (*Finistère*) ar re o deus c'hoant da brena al leor a-raok ma-vezô moulet : degas an hano heb an arc'hant.

Ginivelez

An A. hag an I. Emmanuel Chevillotte a zo laouen o rei d'eoc'h da c'houzout ginivelez o merc'h Mari-Joseph.

Kastell Kergroadez

5 a viz east 1932.

Roazon ha Gwened

Pevar c'hant vloaz a zo bet, er bloaz-man, abaoe m'he deus kollet hor Breiz he frankiz a vro distag a-grenn diouz eur vro all.

Hor Bro n'eo ket gwall vras, gwir ec, met ar Vretoned a oa paotred c'houek ha broïou all a zo c'hoaz, en deiz a hizio, zoken en Europ, ha n'int ket brasoc'h egeti hag a gas o stal o-unan en dro ha ne garfent ket, a briz ebet, staga kar o gouarnamant ouz hini eur c'houarnamant all ha n'eo ket souez, rak *koll he frankiz evid eur vro eo gwasa koll a c'hell digouezout ganti*, goude koll he Feiz ha koll he Yez.

Daoust da-ze ez eus bet kavet e Breiz eun nebeudig tud hag a gave d'ezo e oa mat kana ha bruda ar c'holl-se hag en em voda a rejont evit kement-se e Gwened d'ar 7 a viz east diweza.

Eleiz a c'hevïer a zo bet lavaret eno: eul leor a vije ret skriva ma vije c'hoant d'o dispenn holl. Eur breizad kalonek hag helavar, an Aotrou Duparc, eskob Kemper ha Leon, a gredas sevel e vouez, koulskoude da lavaret d'ar Frans ar pezh a oa dleet lavaret d'ezi en eun deiz evel an deiz-se, met ar Frans n'edo ket kals e chal da zelaou mouez Breiz, rak e lec'h beza en iliz-veur epad oferenn-bred an pevare kantved an A. Herriot a gavas gwelloc'h chom da vragal e lec'h all...

Evit dihuna an dud da vont da c'houeliou Gwened, Bretoned all, e Roazon, o devoa, en deiz-se, eun eur a-raok sav-heol, bruzunet, e mil damm, gand eun tenn-min, eun daolenn hag a verke, *en eun doare dis-megansus evid Breiz*, hor Bro oc'h en em staga ouz ar Frans.

D'ar Vretoned-se, ha ne glaskent, pa vezo lavaret ar wirionez, laza na glaza den ebet, met hepken dis-

penn ar pezh a oa eur gaou anat da gement hini a anavez Istor Breiz, eo bet roet gand ar c'hazetenniou gall al leshaniou heugusa a oufed kaout, e galleg: « *des vandales, ... des malfaiteurs, ... des hurluberlus, ... des écervelés!* » ha n'eus nemed ar maro, war a lavar darn, — war leur-gêr Roazon, da gredi ec, — hag a c'hellfe kastiza, evel m'eo dleet, eun hevelep torfed!

Me oar 'vat eo gwelloc'h atao mont d'an dud dre gaer eget dre heg, met, pa vezer bet aet dre gaer, epad bloaveziou ha bloaveziou-ha pa ne vezer ket bet selaouet e teuer da skuiza hag eun den skuiz a zo da ziouall outan!

Ma eo ar skrivagnerien c'hal leshaniou divalo d'ar Vretoned a glask difenn enor o bro, pe seurt leshaniou a roimp-ni d'ar re o deus rannet hor Breiz e pemp pastell ha lammet diwarni betek he hano? Pe seurt leshaniou a roimp-ni d'ar re o deus laeret digant hon ilizou hag hon Anaon, o madou, d'ar re a glask mouga ar Feiz e kalonou ar Vretoned hag ar brezoneg e genou o bugale vihan?

Tenzoriou int, ar re-ze, ar brezoneg hag ar feiz, hag o deus eun tamm mat muioc'h a dalvoudegez ha n'heller ket he lakat zoken kenver ha kenver gant talvoudegez ar bern mein, plastr hag arem a zo bet distaget diouz moger ti-kêr Roazon, ha flastret dindan an treid evel eur velc'honedenn!

Klask a raer unvaniez met ne gemerer ket an hent evid en em gaout ganti:

Pa vezo anavezet ar gwir en deus pep den. Da viret yez e Dadou ha da heuilh o c'hredenn. Neuze eo e fissenno ar Peoc'h war an douar. Hag e chomo, dourn-ouz-dourn, gand ar Justis, e c'hoar.

Ne zissenno ket a-raok!

Ar c'homzou nerzus a lavare an A. Buleon, person iliz-veur Gwened, diwar lein ar *Scala Sancta* e Keranna, d'ar 16 a viz gwengolo 1926, a jomo atao

gwir; ra vezint klevet eur wech c'hoaz, gand bloavez ar peyare kantved, koulz ha re an A. Duparc a embannomp e penn kent a *Feiz ha Breiz*-man; ra vezint klevet e pevar c'horn ar Frans ha... komprenet:

« Ar *Bleun-Brug* a zav e benn 'trezek Paris gant
 « hardisiegez hag a lavar da vro Frans: — N'hellan
 « ket mui tenna va alan dindan ar zamm pounner
 « a daolit warnon hep paouez. Diouer am eus eus 'al
 « liberte hoc'h eus lammet diganen; roit frankiz
 « d'am bro da veva 'vel ma karo, hervez lezenn Doue;
 « laoskit ar Vretoned da gemz 'vel ma plijo ganto ;
 « laoskit int da zevel o bugale, evel ma tleer sevel
 « bugale badezet. Bras a-walc'h omp breman, hep ma
 « vefe ezemna d'hor c'has a-bouez eur stag...


« Frans, 200.000 Breton a zo maro evit difenn ho
 « frankiz; perak eta ne vefemp ket, ni ive, lodek, eun
 « draig bennak, er frankiz hon eus prenet ker ker
 « evidoc'h c'houi.

« Frans, graet hoc'h eus eul lezenn villiget evit dis-
 « partia ar priedjou an eil diouz egile. Klask a rit, er
 « memez tra, dispartia. Breiz ha Feiz; distaga va bro
 « gristen a vennit diouz ar relijion; hama ! kement-se
 « ne vo ket graet petramant e vo bec'h ! Goulennit
 « c'hoaz soudarded ganeomp, ma kirit, evit brezelat,
 « met eneou ar vugale n'ho pezo ket int biskoaz; —
 « Frans, klevit mat, ha komprenit mar gellit.

« Va Breudeur, Feiz ha Breiz a zo dimezet an eil
 « gand egile ha dimezet e chomint, gant sikour Doue
 « hag an Itron Santez Anna, keit-ma chomo Breto-
 « ned war an douar!


Evel ra vo graet ! »

Y.-V. PERROT.




Ar Rozenn Ruz


Gant
EVNIG-PENN-AR-C'HOAD



Er-beu-re ma-ha beu-re-maz-ez



oun-bez-e-doun-der-ar-c'ho-ad Di-gue-don-ma-don



dê-ne-yé-yé ! Di-gue-don-ma-don-dé !

Ar zonig-ma a zo bet kavet e gouelioù ar Varzed e Pondi, gant an Aot. Alan Gaudier eus Kelc'h Keltiek Pariz.

1


Er beure-man ha beure-mat,
 Ez oun bet e dounder ar c'hoad;
 Digue don ma diondène yé, yé !
 Digue don ma dondê.


2

Me a zo bet er c'hoad didrouz
 O klask bleuniou evit va dous.

3

'Vid eur plac'hig melen he bleo.
 'Met ne larin ket d'eoc'h piou eo!





4

Furchet ganin pep gwenojenn,
Ne 'm eus kavet 'met eur rozenn!

5

Eur rozenn ruz am eus kavet,
Ha d'am dousig 'm eus he roef.

6

Allaz! 'n eur c'hoarzin ha gant fent,
He deus he dizeliet, kerkent.

7

Ha seblantout a-rae d'in-me
Eo va c'halon he dizelie!

8

War an deliennou daspugnet,
Daerou a geuz am eus skuillhet.

9

Ha gant gwad ruz va rozennig
Me am eus skrivet eur zonig!..

Evnig Penn-ar-C'hoad.



Ho kazetenn d'eoc'h o bugale !

Jobig, Perig ha Ro-
parz gant o zadou koz
eo a welit aman o lenn
Feiz ha Breiz, goude
koan, e kichen eur
c'halvar, e disheol eur
wezenn goz.

Jobig. — Va c'haze-
tenn a zo kaer! han!
Perig? labouret mat
em eus.

Perig. — Da gaze-
tenn?

Jobig. — Ya! va
c'hazetenn! petra, ne
lennes ket c'hoaz *Feiz
ha Breiz ar Vugale*?

Perig. — Eo! eun
tammig!

Jobig. — N'eo ket
eun tammig hag ober
an neuz d'he lenn eo
a ranker, met hel lenn
penn-da-ben.

Perig. — O! n'es ket
da vont droug ennout
Jobig, na da veza feu-
ket gant ar pezh a lava-
ran!

Jobig. — Va c'haze-
tenn eo hag hini eleiz
a vugale all a Vreiz-
Izel, p'eo gwir eo graet
ganto!





Perig. — Graet ganto, pe-naos ?

Jobig. — Sell ouz Feiz ha Breiz miz gwengolo; ne weli ennan nemet geriou, fentus, istoriou ha betek tresennou savet gant bugale ha brezoneg yac'h a deu ganto pa lavaran d'it.

Perig (o trei pajennoù Feiz ha Breiz). — A ! ya ! gwir eo ar pez a leveres; te eo az peüz skrivet an ist r-man : *An Azen aet da zoner.*

Jobig. — N'eo ket, met va mamm, an hini he deuz he c'hontet d'in a-ratoz kaer evit *Feiz ha Breiz* ar *Vugale.*

Roparz (o tiskouez e labour e *Feiz ha Breiz*). — Ha petra leveres eus ar skeudenn-man ? savet ganc'h. Kaer eo, han ?

Perig. — Ya ! vat ! Met an dra-ze a ro kals labour d'eoc'h !

Jobig ha Roparz. — Pa labourer evit Breiz, al labour elec'h beza eur skuizder a zo eur blijadur kentoc'h !

Roparz. — Priziou kaer a vezo roet, koulskoude, da gement hini a gemero perz e kenstrivadeg an danvouzerien pe ar bennaouerien.

Perig. — Eur genstrivadeg a zo savet gant *Feiz ha Breiz* ivez !

Jobig. — Ya ! hag evid ar vugale hepken !

Perig. — Mat ! n'eus ket da lavaret nann, ober a rankin eun dra bennag ivez evit *Feiz ha Breiz* ar *Vugale.*

Roparz. — Me 'skrivio ennan.

Perig. — Er miz a zeu e vezo hano ac'hanoun ennan ivez !

Jobig. — Gwelet e vezo.

Roparz. — Ha d'ar Bleun-Brug, d'ar 6 a viz gwengolo a zeu e rankan mont da Vrest (a gemero perz e kenstrivadeg al henn. (An daou dad koz hag o deus klevet komzou o bugale vihan).

Yann. — A ! ta ! Olier, te lavare e oa maro ar brezoneg etouez ar yaouankiz !

Olier. — Plijadur am eus bet ouz o c'hlevet, Yann, o komz evel m'o deus graet ! Yez bennag ! hon tadou koz a vevo c'hoaz, a drugarez Doue !


Hag e weled an daeron o perlezenni war divoc'h an daou goz.

Yann. — Hag ar Vretoned, hentchet gant sant Erwan ha Santez Anna, a nevez, da garet, o bro, ha da gomz he yez, heb abun hag hep mez, e pep lec'h !

AR BREUR BRAS.

N'eo ket ebu c'hoaz kenstrivadeg an danvouzerien pe ar gennaouerien. Paout a ray betek gouelioù Nedeleg. Neuze eromp priziou kaer d'ar vugale o devezo degaset d'eomp eur skrid bennak.

Degas al labouriou d'an A. Perro, Rener *Feiz ha Breiz*, Signac (Finistère) a en em gargo d'o c'has d'ar Breur bras.



An Azen aet da zoner

Unan ac'hanoc'h en deus gouennet digant e vamm konta d'ezan eun histor evit Feiz ha Breiz ar Vugale ; setu hi aman :

Eun azen deuet da veza koz a deuas da zonj d'ezan, en devoa klevet, eun c'ervez, m'oa bet gand e vestr en eur foar e c'houlenned sonerien da vont da Paris.

Setu m'en em lakeas en hent ; p'en devoe bleet, eur pennad, e tigouezas gand eur c'hi.

— Petra res aze ? eme an azen.


— Koz oun, eme ar c'hi, ha klevet em eus va mestr, er beure man, o lavaret n'oan mui nemed eur c'holl-bara hag e oa mall va c'hrouga ; setu m'oun ec'het kuit.

— Deus d'am heul, eme an azen, me a zo o vont da zoner.

Degouezet pelloc'hik ec'h en em gavjont gand eur c'haz, doare skuiz d'ezan.

— Petra res aze ? eme an azen.

— Me, eme ar c'haz, n'oun mui mat da logota, rak ne welan ket hanter-sklaer ; bugule





an ti a oa o vont d'am beuzi hag oun tec'he kuit.

— Deus ganeomp, eme an azen ; me a zo o vont da Paris, da zeski beza soner.

Tost e oaant da eur c'hoad ; mont a rejont eharz pa weljont, war skourr eur wezenn goz, eur c'hillog...

— Petra res aze ? eme an azen.

— Klevet em eus va mestrez o lavaret n'oañ mui mat da netra nemet da ober eur podad sou-benn hag oun deuet aman d'en em guzat.

— Deus ganeomp-ni, ivez, da Paris.

Ar c'hi barbet a oa bet eun doktor a lavaras d'ar c'haz sevel, en eur wezenn uhel, evit gwelst ha ne welje ket eur sklaerjenn bennak vardro.

— E penn all ar c'hoad, eme ar c'haz, e welan doare eun ti, goulou eharz ; d'eomp da welet.

Pa errujont dirak an ti petra weljont ?

Eur vantenn laeron, endro d'an daol, aour hag arc'hant a-vernioù, kig ejenn ha kig maout, gwin ha b'ra, ne vanke netra.

An doktor barbet a lavaras :

— Gwelomp penaos e c'hellimp ober d'ar gantard-man skarza ac'hanen.


An azen a en em lakeas dirak ar prenestr ; ar c'hi war e chouk ; ar c'haz war diousskouaz ar c'hi, ar c'hillog war benn ar c'haz, hag e stagjont pep hini gwella ma c'helle, gand e ganaouenn.



E C'hellit kredi, al laeron pa glevjont eur seurt jo'ori, ne voe ket ezomm d'o fedi d'en em jacha. Dindan an ti o devoa eun toull en douar d'en em guzat ouz an archerien ; al loened a yeas neuze en ti, hag en em lakeas da zebri ha da eva ; p'o devoa kemeret ar pez a c'helle ober vad d'ezo, ar c'hi a lavaras :

— D'eomp breman da gousket ; an oaled a zo tomm c'hoaz aboe koan ; aze ez euz eur gwele brao d'ar c'haz ; ar c'hillog a bigno war an treus ; e traon an ti e welan eur guchen foenn a ray eur plas tomm d'an azen ; me' gouske e toull an nor, ha ma tosta unan bennak em bezo krog en e ler. Al laeron pa ne glevent mui trouz ebet, a deuas sonj d'ezo eus o arc'hant ar mestr a lavaras :

— Gwelit a ran glaou en galed ; alumetez a zo da enaoui ar goulou ! Daoulagad ar c'haz eo a wele evelse o lugerni ; pa dosteas an alumetez outo, ivinou ar c'haz a zankas doun en e fri :



ar c'hilbig gand e veg a venmas e zalla ; an azen en em lakeas da rual hag her strinkas ouz an nor ; ar c'hi a reas mintuka d'e zivesker ; al laerom a' en em lakeas holl da yudal edo deuet holl diaoulou an ifern d'o c'herch'a ; iec'het a rejont ac'hano d'am daou lahm rus hag abaoe n'int ket cizroet ken ; al Joened a jomas da veza e peoc'h en o maner .

AR BREUR BIHAN.

(Ar marvailh-man a zo bet skeudennaouet gand an Alarc'h.)

Geriou fentus hol lennerien



Olier en devoa prenet eur pennoc'h war zaou hanter gant Jakez ; eur vintinez, Olier a lavaras d'e amezog :
— Gra a giri, ma n'az peus ket a c'hoant da laza da hanter hepmoc'h, evidoun-me a zo o vont da laza va hini rak goullo eo va c'helern !

(Degaset gant Jobig an Eskob, 11 vloaz, Breles.)



Arzelig a zo kousket, skuiz gand an amzer comm, met epad an amzer-se al laboused o tremen a zreb e vara-mel hag e frouez.

(Kaset gant Ronan Guevel, Pleiber-Krist.)



— O va Doue, eme Fantig, Pelec'h ema va botezig ?

(Kaset gant Mikael ar Roux, eus a Roskov, 12 vloaz.)



Nag a blija-tur a vez Tira la le !
O vale war ar maez Digidonla don de !

(Kaset gant Roparz Kaouissin, Pleiber-Krist.)



— Petra oa a nevez er foar ?
— Kalz azened, ha souezet-oun bet o wetel ne oas ket.



Eun dijenstil a en em gavas, eun dervez, gand eur paour a oa o treuzi e barkeier : « Petra, eme an dijenstil, me ouezes ket emañ war va douarou ? »

— Ho touarou, eme ar paour, ha gant piou ho peus bet an douarou-ze ?

— Digant va zadou koz, na petra 'ta ?

— Hag ho tadou koz, digant piou o deus int bet ?



— Met, en em ganna o deus graet evit kaout an douarou-ze.

Daoust ha kredi rafes o defe o laeret, kouer divalo, eme an dijenstil, droug ennan ha prest da skel, en e gounnar !


— Breman ho komprenan, eme ar paour : war ho touar emañ ha c'hoant va c'has kuit ho peuz.

Ma kirit ec'h en em ganimp evel ho tadou koz.

An dijenstil eo a dec'has goude eun hevelep kentel.



EUR WECH E OA...



'Kaset gant Mikael ar Rouz, Roskov).

Divinadennou

I. — Rxd xx lxmmx
xbxnn fixmmx


Lakit ar vogalennou a vank en diou linenn-se.

II. — Rx grxvxt x bxxz
Rx brxxzg x nxxz.

Lakit ar vogalennou a vank en diou tinnenn-se.

III. — Mxllrxjxz drx hx Pxsx kxxllrxk
X rx d'xn xrc'h bxxz bx rxk.

Lakit ar vogalennou a vank en diou linenn-se.



IV. — Herriik a red a-raok eur c'hi; ar c'hi n'eman ket pell dioutan; e pelec'h eman?

V. — Pevar gvesklev a zo war al lenn hag a gaver raktal; eur pempet a zo ha n'her gwelit ket?

Arabad degas ar respontchou a-raok ma vezo lavaret hen ober er miz a zeu.

Feiz ha Breiz

Ar brezoneg, ha chom a ray ato beo?

Bez ez eus c'hoaz ouspenn eur milion a dud o komz brezoneg. E Kerne, e Leon, e Treger, e Gwened, e vez komzet brezoneg war ar maez en tiez, er parkeier, er marc'hajou, er foariou. E brezoneg e vez graet ar c'hatekiz, ar brezegenn a zul, e brezoneg e vez pedet, e vez kanet, e brezoneg e vez lennet Buhez ar Zent diouz an noz.

Er c'heriou, avat, eo dishenvel. Ar c'hatekiz, ar brezegenn-zul a vez graet e galleg, ha tud ker, zoken ar re a zo deuet diwar ar maez, a zo troet muioc'h mui da zilezel ar brezoneg. Ne fell ket d'ezo e komzfe o bugale e brezoneg, hag ec'h implijont eur yez hanter-c'hallek, hanter-vrezonek a laka da c'hoarzin ar re a anavez mat ar galleg. Gwelet zo bet traou farsus; an tad hag ar vamm ne ouient nemet brezoneg, hag ar vugale ne ouient nemet galleg. Penaos e c'hellent en em entent? O veska galleg ha brezoneg en eun doare euzus.

War ar maez ive awechou e kaver tud, war zigarez m'int pinvidik, hag a garfe gwelet o bugale o komz galleg hepken, ha ne lavaront morse dirazo ger brezonek ebet. Ar vugale-ze, dre c'hras Doue, a zesk alies ar brezoneg en despèt d'o zud, rak en eur vont hag en eur zont er skol hag e meur a lec'h all, e klevont ar vugale eus o oad o komz brezoneg, hag e teskont ganto.

Peurliesä bugale Breiz a gar komz brezoneg. O genou a zo graet evit ar brezoneg; evel ma kan al labourer, evel ma harz ar c'hi, evelse ive i a gomz brezoneg. Klasket zo bet meur a wech hag e meur a c'hiz difenn ouz ar vugale er skolioù komz brezoneg. Kement hini a veze bet klevet o lavaret eur ger brezonek en deveze taolioù baz war e vizied. Met kaer a veze ober, brezoneg a gomzent. Deski a raent ar galleg evelato a-nebeudou; en hor bro eo ret ive gouzout ar galleg, rak en dro d'eomp ez eus tud ha ne ouzont nemet galleg. Ar prefed hag an dud e karg peurliesä a gomz galleg, ha p'e gwir eo ret mont d'o c'haout bep an amzer, e ranker komz outo e galleg, hag evit-se anaout ar galleg.

Met ar Vretoned a labour mat er skol ne vezont ket pell evit deski galleg ha galleg mat.

Ar pezh a zo bet talvoudus evit miret ar brezoneg eo al levriou, ar c'hantikou, ar c'hanaouennoù. Epad pell amzer ez eus bet etre daouarn an dud eul levr-ofereñ, *Heuriou Briz*, leun a bedennoù rimadellet a veze desket dindan envor. Levriou Buhez ar zent ha re all, ar c'helaouennoù evel Feiz ha Breiz, ar c'hazetennoù evel ar *C'hourrier* o deus ive dalc'het beo ar brezoneg. Ar c'hantikou a vez kanet en iliz, ar c'hanaouennoù a zo bet ken talvoudus all.

Ma ehanfe an dud da lenn brezoneg, da gana e brezoneg, buan ar yez a yafe da goll. Rak-se kement hini a skriv e brezoneg, kement hini a zav kantikou, kanaouennoù e brezoneg, a ra eul labour talvoudus evit buhez ar yez.

Met ive ar gwir Vretoned a dlefe harpa ar re a skriv e brezoneg, en eur brena, en eur ingala o levriou. Levriou kaer a vez graet breman, enno brezoneg yac'h ha digatar, met siouaz! n'eus ket a fred d'ezo. Chom a reont gant ar re o skriv, hag ar re-man n'hellont ket en em denna. Perak e skolioù Breiz, pa vez roet ar pri-

ziou, e vez gwelet re alies levriou gallek hepken, levr brezonek ebet? Eun druez eo. Ra vo bep gwech roet e pep lec'h eun nebeut levriou brezonek, ha ma vez gwerzet o levriou, ar skrivagnerien o devezo plijadur o sevel levriou nevez.

Ar brezoneg skrivet a zo kalz gwelloc'h hirio eget gwechall.

Setu aman penaos e skrive ar Bris, beleg, e 1784, e *Collocou ar C'halvar*: « *En a zesq manific hoc'h exempl dime, va salver, penaos eo e tleer en em diatachi diouz an dud, ha penaos fonti an esperans var an dud ha pretandi caout souten diouto.* » Pe c'hoaz: « *Caout eun horrol bras ouz ar pec'het marvel ha songeal alies en dizurz terrubl a laca en un ene.* »

E pep pajenn e kaver hevelep traou. Hirio an hini a gredfe skriva evelse a vije lavaret d'ezan: « It d'ar skol da zeski brezoneg ha da c'houde e c'hellot skriva. »

Ar brezoneg skrivet a zo kalz gwelloc'h hirio. Met ar brezoneg komzet, ha yac'h e chom? E meur a barrez, ya. Met e meur a hini ive n'eo ket kaer ar brezoneg a vez implijet. E kichen ar c'heriou dreist-holl, e vez komzet eur brezoneg trefoet, leun a c'heriou gallek. Klevet zo bet tud o lavaret evelhen: « *Ouvrit ar varrirenn da Vossieu.* » Ouvrez la barrière à Monsieur.

Re all a lavaro: « *Beau temps a zo... Erru ar mauvais temps... Eur sacré temps a zo kouezet warnomp... War ar paper eo indiquet ar marche à suivre... Ar mariage a zo fixet d'an 20 eus ar miz... Na rez ket bile, pe na rez ket mauvais sang evit an dra-ze...* »

Bezomp leun a zoujans evit hor yez ha na deomp ket d'he stlabeza evelse. Na lakomp ket gerioù gallek pa vez gerioù brezonek. Daoust ha diesoc'h eo lavaret: « Brao, kaer eo an amzer », eget lavaret: *beau temps a zo ?* — War ar paper eo merket an doare d'en em gemeret... An eured a zo deiziet d'an 20 eus ar miz...

Na vez ket g'ac'haret, ankeniet, poaniet evit an dra-ze.... ?

Ar brezoneg a zo eur yez kaer pa vez komz mat. Karomp ar yez-ze, yez hon tud koz, herez santel a dleomp da viret gant evez. Gouzout galleg a zo mat, met gouzout galleg ha brezoneg a zo gwelloc'h. An hini a anavez diou yez, e lec'h eun tenzor en e spered, en deus daou denzor. Prederiomp war ar wirionez-ze.

Karomp ha studiomp ar brezoneg. Lennomp al levriou a zo enno brezoneg yac'h. Kanomp kantikou, kanaouennoù brezonek.

Ha ma talc'homp mat, ma n'hon eus ket a vez o komz brezoneg, ha n'eus ket da gaout mez, rak komzet eo abaoe meur a gant vloaz gant tud a galon, ma kar ar gerent komz brezoneg ouz o bugale, ma kar ar re a zo gouest d'hen ober sevel levriou nevez, kanaouennoù nevez, en eur ger, ma ra an holl Vretoned o dever, neuze ar brezoneg a vevo, ha keit ha ma vezo tud er beg douar-man, e vezo klevet ennan komz e brezoneg ha kana e brezoneg.

Y. U.



Itron Varia an Drezenn e Joslin, eskopti Gwened

Pardon Itron Varia an Drezenn, e Joslin, a zo unan eus brudeta pardonioù Breiz; bez ez eo ivez unan eus ar re gosa.

Hon tadou koz a gare pedi Itron Varia an Drezenn, rak hi eo he deus dalc'het Breiz en he sav, a-hed ar c'hantvedoù; hi eo a zifenne marc'heien Breiz er stourmajou hag a skoazelle he Duked.

Kastell Joslin

Evit laokat Breiziz da ziredet niverusoc'h da Joslin ha da gerzout war roudoù o zud koz, em eus sonjet dis-

kleria eun draig bennak diwar-benn Itron Varia an Dre-
zenn hag he firc'hiriaded.

1°) Komz a rin da genta eus ar *skeudenn* — 2°) goudeze
eus an *iliz* — 3°) d'an trede eus ar *feunteun* — 4°) d'ar
pevare, eus ar *pirc'hirinded* — 5°) bag en-diweez eus an
« *harzerezed* ».

I. — ISTOR AR SKEUDENN



I. V. an Drezen

En dervez warlerc'h e voe souezet bras al labourer; rak
ar skeudenn a en em gavas adarre etouez an drez en he-

Ar Werc'hez a zo
enoret e Joslin abaoe
an navet kantved. An
tad Izaac hel lavar d'e-
omp en e levr « al li-
lien etouez an drez pe
Itron Varia an Drezen
brudet e kêr Joslin ».
Skriva a-rae :

« Pell araok ma voe
savet kêr Joslin na la-
kaet e penn koutelez
Porc'hoët, ez oa eur
c'houer o labourât an
tamm douar emañ war-
nan bremañ iliz an
Itron Varia. Ez edo a-
zevri o trouc'ha drez
gant e fals pa welas di-
razañ, e kreiz ar
strouez, skeudenn an
Itron Varia galvet aba-
oue Itron Varia an
Drezenn en abeg m'oa
bet kavet etouez an
drez. »

Ar c'houer, laouen, a
gasas ar skeudenn d'e
di.

velep lec'h. Kaer en devoe he c'has gantan d'ar gêr, ar
skeudenn a zistroe atao etouez an drez.

Nec'hetoc'h eget biskoas, ar c'houer a soñjas goulenn
kuzul digant eur beleg. Henmañ a zalc'has ar skeudenn
da c'hedal ma voe savet eur chapelig el lec'h ma voe bet
kavet, p'eo gwir he doa ar Werc'hez diskleriet sklêr e
fello ganti beza enoret eno.

Kenta burzud

Eur burzud hag a lakeas ar skeudenn da veza brudet e
nebeut amzer eo an hini a c'hoarvezas gant merc'h al la-
bourer. Hou-mañ a oa dall.

En dervez ma voe lakaet ar skeudenn er chapelig paour
savet eviti gant kouerien ar vro, ar werc'hig a oa glac'har
en he c'hañon o klevet kan-ha levezeg an dud. Holl e
c'hellout arvesti ouz ar Werc'hez ; hi hepken ne wele
ket ar skeudenn vuzuduz.

Mot, prim, ar skeudenn a zo dirazi — he gwelet a ra
kerkouls hag ar re all. Burzud! Mari he deus pareet ar
plac'hig yaouank dall.

Eus a belec'h e teue ar skeudenn

Diaes a-walc'h eo gouzout penaos ec'h en em gavas
skeudenn ar Werc'hez venniget e kreiz park ar c'houer
etouez an drez.

Setu aman ar pezh 'oar kustum da lavaret war ar poent-
se. El lec'h end-eeun ma voe kavet ar skeudenn ez oa
gwechall, a greder, eur chapelig savet gand eun ermit en
enor da sant Leodegar (Leger).


Pa zoujer en devosion vras o deus bet a viskoaz ar
venec'h hag ar veleien eus Bro-C'hall evit ar Werc'hez
glorius Vari, n'oar ket evit beza souezet o welet he skeu-
denn e chapel sant Leodegar.

Kouezet en he foull — marteze distrujet gant an Nor-
maned — ar chapelig a voe kuzet buhan ha goloet gant
ar strouez. Skeudenn an Itron Varia a dleze ivez chom eno,
evel m'eo chomet skeudenn Santez Anna e park ar Bo-
senno, da c'hedal ar poent merket gant Doue ma tlee
dout adarre a-wel d'an holl.

Petra eo deuet ar skeudenn-ze da veza

Ar skeudenn vuzuduz kavet gant al labourer etouez am drez e dlle chom e iliz Joslin betek an Dispac'h. Neuze e voe taolet en tan gant ar soudarded fallakr. Epad ma leske ar skeudenn en tan e savas en ti eur c'houez spontuz en doare ma voe ret d'ar soudarded tec'hout.

Diou vaouez a galon a gredas neuze tostaat hag, hep beza diezet, e doare ebet, a c'hellas savetei daou pe dri damm eus ar skeudenn. An tammou-ze a c'heiler da welet bremañ c'hoaz e iliz an Itron Varia.



Tiez Koz Joslin

Skeudenn nevez Itron Varia an Drezenn

Goude an Dispac'h e voe lakaet ober eur skeudenn all. Unan gaer eo, e gwirionez. Diskouez a ra ar Werc'hez Vari, gwisket gant eur vantell hir alaouret. Da zeiz ar pardonioù e vez kaer meurbet da welet gant he dilhad seiz hag aour.

Kurunet eo bet er bloavez 1868 gant an aotrou Becel, Eskob Gwened, dre aotre an Tad Santel ar Pap Pi IX. 25.000 pirc'hirin a oa deuet en dervez-ze da gêr Joslin. Eur gouel kaer evel ma ne vez ket gwelet alies.

II. — ISTOR ILIZ JOSLIN

Ar chapel genta

A vec'h ma voe kavet ar skendeun vuzudus ma tiredas an dud da ginnig o fedennou da Itron Varia an Drezenn. Eskob Aleth — bremañ Sant Malo — a roas aotre da zont di da herc'hirina. Eur chapelig paour a voe savet evit goudori ar skeudenn.




Iliz Joslin

Graet e voe gant kouerien ar vro. Eur guchenn skourrou gwez skoulmet kenetrezo, setu chapel genta Itron Varia an Drezenn.

An eil chapel

Goude parcans burzuduz merc'h al labourer e kreskas niver ar birc'hirined. Holl e lezent eur profig evit sikour sevel eur chapel dereatoc'h.

Eur chapel nevez a voe savet, end-teun met eur chapel baour adarre, paour evel ar re genta, a deuas da bedi ar Werc'hez. Da vihana ar chapel goat-ze a oa kaeroc'h eun tamm mat eged al lochenn genta.



Eur c'horn eus diabarz an iliz

An Iliz kenta

An den jentil brudet Guethénoc, o chom e Kastell-dro, e Guilliers, a oa e zoni sevel eur c'hastell nevez. Nec'het e oa e keñver al lec'h a zibabfe.

Deuet en dervez da birc'hirina e-harz treid Itron Varia an Drezenn e chomas bamet da zellet ouz kaerder ar vro. En draonienn eur stêr a rede, ar stêr. Oust, hag a bep tu d'ez i roziou, menezioù goloet a wez kaer hag uhel. Kavet en doa al lec'h da zével e gastell ha savet e voe e-kichen

chapel an Itron Varia. Echu e voe gant e vab, Joslin, an hini a roas e han d'ar gêr.

An denjentil Guethenoc a oa eur c'hristen mat. Diaes e kave gwelet ar Werc'hez en eur chapelig dister epad ma save en ti kaer d'ezan e-unan.

Gant ar pez a roas e voe savet eun iliz — eun iliz roman hag a jom eun dra bennak anezi c'hoaz en iliz bremañ rak

An eil Iliz

Hag a zo bet lakaet e renk ilizou kaera ar bed gant an tad Santel ar Pap Leon XIII er bloavez 1891, seiz a viz gwengolo, n'eo nemet an iliz kenta savet gant Guethenoc, met kaeraet ha chenchet stumm d'ez i en doare m'emañ bremañ ar giz godek trec'h enni d'an hini roman.

An hini a zikouras da genta sevel an iliz-breman eo an denjentil Olier Glisson, pried Mac'harit Rohan. An aotrouned Simon ha Lanko, personed Joslin a gendalc'has gant al labour ha bremañ ne jom mui da echui nemet an tour.

Gant he chantele — he aoter mein marbr — he c'hador-brezeg e houarn goveliet, he zeir nev bolzet gant koat, he diou chapel : chapel an Itron Varia hag hini Santez Mac'harit, he gwer livet, Iliz Itron Varia an Drezenn a zo kaer meurbet he stumm. Rouanez an Nenv he deus he iliz kaer e-kichen Kastell ijinet-kaer ar Rohaned.

III. — FEUNTEUN AN ITRON VARIA

E holl pirc'hirinedou Breiz-Izel e kaver eur feunteun. E Joslin Itron Varia an Drezenn he deus ivez he hini.

Tud kêr a gar dont da gerc'het dour anezi evit o zud klañv. M eur a hini o deus kavet ar yec'hed dre eva eus an dour-ze.


Gwelet e vez ar birc'hirined oc'h ober an dro d'ar feunteun en eur bedi, oc'h eva dour anezi pe o c'hlebia o fenn gant he dour.

Ar feunteun n'emañ ket gwall bell eus an Iliz.

A-zioc'h ar feunteun emañ skeuden an Itron Varia, eur

mousc'hoaz o redek war he mizellou hag ar Mavig-Jezuz war he brec'h.

An dour, sklaer, a red dre eur c'han betek eur poull. Eno e chom eun pennad da drei hag ez a dre eur foennog d'en em deuler er stêr Oust.



Feunteun I. V. an Drezenn

IV. — AR BIRC'HIRINED

a) Tud ar vro

a) *Tud ar Vro* — ha n'eo ket souez — a zo bet hed ar wech gand ar re genta ha gant ar re galoneka o pedi Itron Varia an Drezenn.

Karout a reont he enori dreist-holl etre ano « al lilienn » pe gwerc'hez dinamm, al lilienn etouez an drez pe l'leun a c'hras etouez ar bec'herien.

Ar Werc'hez Vari d'he zro n'eo bet manket biskoaz da zifenn he bugale a bep seurt gwall-eur.

b) An Tregont

Etouez ar birc'hirined diredet da Joslin, ez eus bet tud vrudet.

Plou n'en deus ket klevet hano eus « emgann an tregont » ?

Ez edor er pemzek kantvet epad ar brezel etre Charlez Bleaz ha Yann Vontfort.

Ploermel a oa da Vleaz ha Joslin da Yann Vontfort.

E Ploermel e penn ar Zaozon ez edo Bembrough hag e penn Bretoned Joslin e kavomp ar marc'heg Beaumanoir.

A-eneb o ger, ar Zaozon a heskine e pep giz kouerien ar Vro.

Beaumanoir n'oa ket evit gouzañv eun doare-ober ken kriz.

— « Marc'heien Bro-Zaoz, emezan, kablus bras oc'h dre ma heskinit evelse kouerien baour ar vro. »

— « Ro peoc'h, Beaumanoir, a respont Bembrough. Ar Zaozon, araok pell, a vezo mestr e pep lec'h ». »

— « Soñijt eur sonj all — eme Veauvernoir — hennez n'eo ket mat. Kemeromp eun dervez evit an emgant. Gwelet e vezo neuze gant piou emañ gantan ar gaou pe ar gwir. »

— « Entetet eo, a lavar ar marc'heg saoz. Asanti a ran ha rei a ran d'it va ger ». »

Dibabet ez eus tregont marc'heg en diou gostezenn.

Beaumanoir en deus kemeret tud kadarn ha kristen evel-dan. Mont a reont da zaoulina dirak Itron Varia an Dre-

zenn. Goude beza kovesaet o fec'hejou, goude beza komuniet hag int war yun d'an emgann e hanter-hent etre Joslin ha Ploërmel.

Kriz meurbet e voe an abadenn. Ar gwad a ruihe ha koueza a rae ar varc'heien.

Sec'het a zav d'ar marc'heg kalonek Beaumancir.

« Ev da wad, Beaumanoir, hag e tremeno da zec'hed », a respont e vignon du Bois-Robert.

Gant ar vez hag ar gounnar ar zec'hed a dremenas hag an trec'h a jomas gant marc'heien gristen, an Itron Varia.

Ar bleunv-balan war o zokou-houarn ar varc'heien vreizat en em gave diouz an abardaez e iliz an Itron Varia evit he zrugarekaat.

Mari he doa kennerzet he marc'heien ha saveteet Breiz.

c) Breiz-Izeliz

Ar brud eus ar burzudou a veze graet e Joslin a lawae an dud da ziredet war ribl ar siêr Oust. Breiz-Izeliz a glevas hano eus Itron Varia an Drezenn ha Kerneviz, Tregeriz ha zoken Leoniz a ziredas eleiz.

Kement e vezent ma ne veze ket kavet a loeis avito er ostaleriou. Tremeno a raent an noz en iliz hag en eur park hanvet park an nozelennou en abeg d'an nozelennou kouevr a lugerne war dilhad a briz ar bardonerien.

Prezeget e veze d'ezo e brezoneg.

En dervez hirio ne weler mui nemet Gwenediz, dre eno, met prezeget e vez e brezoneg goude merenn evit perc'hired Breiz-Izel.

V. — AN HARZEREZED

Kalz a ano a zo bet diwar-benn harzerezed Itron Varia an Drezenn.

Petra int? tud, merc'hed dreist-holl, klañv gant an drouk-sant hag a gri heñvel awalc'h ouz ar chas. pa vezout e barr o droug.

Pareet e vezont gant relegou an Itron Varia.

Bez ez eus anezo c'hoaz, a glevan lavaret, ha dont a reont da c'houlenn ar pare digant an Itron Varia.

Evit Kloza


Pardon bras Itron Varia an Drezenn a vez graet bep bloaz d'an 8 a viz gwengolo deiz gouel ginavelez ar Werc'hez glorius Vari.

Gwechall e veza ar pardon bras da c'houeliou ar Penfekost. Dalc'het e vez atao d'ar goueliou-ze kement ha da hini Itron Varia-Hanter-east.

Ofis Itron Varia an Drezenn a vez graet er brevier d'an eil sul goude Pask. An ofis-se a zo bet roet gant hon Tad santel ar Pab Leon XIII d'an deiz kenta a viz gouere 1894.

Breiziz ker, pedit alies Itron Varia an Drezenn, difennourez Breiz ha ma c'helloc'h deuit d'he gwelet en he iliz-kaer hag en he bro dispar, e Joslin.

EUR JOSLINAD.



Tiez koz e Joslin

Perig hag Aziliz

Er miz diveza am oa ranket krenna va fennad-skrid, ha n'oa ket echu a-walc'h ar gentel diwarbenn ar c'hezeg, ha penaos entent ous eul loan; eur ger c'hoaz eta: red eo komz outan evit e lakat war evez, araok rei eun taol fouet d'ezan anez e c'hellfe ober eur fourradenn hag e vijec'h paket fall, marteze; komz outan a ranker ive araok tostaat outan en e speurenn, dreist holl pa vez o tibri; lod eus ar c'hezeg, ne c'houzanvout den war o zro pa vez eun tamm kerc'h ganto; risklus eo mont tost dezo heb komz.

Epad dek munud pa loc'her gand ar voetur e ranker mont goustad; an diskennou eo mat beza war evez mont d'ar paz pa vez gwall ziskenn, met derc'hel mat ar ranjennou ato, rak ma stokfe e droad ouz eur maen e pilfe al loan hag e c'hellfe tumpa ar voetur... hag an dud! Er saoiou sonn, pe re hirr, eo mat mont d'ar paz ive gand aoun an zizalanfe al loan.

Pa chareer, arabad eo morse lezel laosk al lérennou war gein ar marc'h pe ar gazeg. Red eo rei dezo da gompren, pe da anaout, o deus eur mestr evid o c'has, o derc'hel war an hent hag e rankont plega d'ezan, evelse e kemerint fisianz ennan, gouzout a raint e vezint harpet ma strebotont. Arabad eo ken neubeud chacha war benn al loan, na rei héjadennou d'e c'hinou; dont rafe a ha ne rafe van ebet evit santout kement-se, pe otramant, e vije skuizet en aner ha kalkennet d'ezan e c'hennou.

Derc'hel a ranker al lérennou gand an dourn kleiz, ar ranjenn zehou dindan eben etre an eil hag an trede pe an trede hag ar pevare biz; ar ranjenn gleiz a dle beza war c'horre, etre ar biz meud hag an eil.

Gand an dourn dehou e talc'her ar fouet hag ive al le-
renn a zo war-c'horre e ken kas na vije ezomm da hent-
cha eun tammik al loen a-zehou, rak an tu-ze, a zehou
eus an hent, e ranker en em deava peurlies, en em

renka pa deu eur c'har-dre-dan. Da ziuall ez eus, rak, p'en em gav eun darvoud bennag e vez ar gaou, ato, gand an hini n'edo ket el lec'h m'oa d'ezan beza. Kement-ma a zell ive ous ar marc'h-hou-houarn: en em zalc'hit dalc'h-mat a zehou, potred ha merc'hed yaouank, na 'z it ket da dreuzi an hent, na da jom a-gleiz war-zigarez ebet. Enaouit ho koulou pa vez kuzet an heol, an archerien ne c'hoariont ket war ar poent-ze, ha mat a reont rak eun danjer eo: goude beza war-evez, en em gav re a wall-
euriou c'hoaz. Ar re a zo war o zroad a dle ive bale, a zehou, tosta ma c'hellont d'ar c'hleuz.

Moris ar Stang a zalc'he tost d'e du, ha goulskoude gwelet a rit, e voe paket fall deiz ar redadeg-kazeg. Pre-
deriet mat ez eus bet outan ha n'eo bet nemed pemzek deryez e ti dud Oliv; e vamm a oa deuet raktal gand ar plac'h yaouank, met pa welas peger mat oa an dud outan, ez eas d'ar gêr, ne jomas nemed beteg ar gwener da noz; en deiz-ze am boa bet yod silet d'am lein hag edon o tomma eun tamm anezan d'am c'hoan pa glevis an nor o tigi ha gwreg ar Stang o lavaret: « Penos ez a ar vuhez ganeoc'h Anna? »

Eul lamm a ris war va daou droad: « Te eo, Tina? deus da danva ar yod astomm 'ta! » Hag hi oc'h azeza ouz an daol, laouen, ha me, kel laouen all: « Penaos e-man da vah? » — « War-well bemdez, a drugare Doue; ma kendalc'h e stago da labourat abarz ma kloza ar miz, ha me a zo mall d'in mont d'ar gêr, rak Fanch a zo inouet-maro ha va labour a jom da ober. »

— Ya, emeve, êsoc'h e vije d'id ma vije eur vaouez all asambles ganez, ha neuze, n'eo ket yaouankaat a rit-ken ho taou! »

— « C'houi lavar! n'eo ket mank e vez kinniget merc'hed da Voris abaoue m'eo deuet d'ar gêr eus a zoudard, met ar plac'hed yaouank a vrema n'int ket henvel ous ar re a oa gwechall, ha ne fell ket d'in e yafe va mab gand eur penn-avej pe eur plac'h diegus.

— « Estreget ar seurt-ze a zo, Tina! merc'hed fur a zo c'hoaz! nemed ez eo dister o anaout.

— « Han, ya; evel gwreg yaouank Keruhela: hounnez, diouz ho klevet, n'he deus si ebet! Met, ar re-ze a zo rouez

er vro! ha ne fot ket d'in ken neubeud e ve roet e sac'h da Vöris!

— « Bez dienkrez, emeve; eun dra bennag a lavar d'in e vezo friko du-ze araok an Asvent; da vab e ray eur fortun vat, dioutan, ha c'houi, ar re goz, a vezo eurus en ho kozni.

— « Ra vezo ar wirionez ganeoc'h, Anna! mil aoun am oa da gaout da verc'h kaër eun danserez pe eur vaouez diboell he divije desevet va mab gant marvailhou brao. Hogen, prest oun da zigeri va diwrec'h ha va c'halon d'ar plac'h yaouank kempenn ha fur a garo he fried hag a ouezo sevel he bugale e doujans Doue. »

Goude, e chenchis kount, rak n'em oa ket a c'hoant da rei dezi da gompren re, ar pez am boa lojet em spored. Lavarout a rejomp han'o diwarbenn an amzer hag ar boan a oa o savetei an eost, diwarbenn ar bara ne deus ket e varc'had war adrenv, hag ar gwiniz a zo kouezet da netra.

War-lene e c'helled en em denna gand e briz : pemp skoed war 'n ugent ar c'hant, e lec'h er bloaz-ma, goude kaout kement all a boan ez eo fall d'u warnan. Hag hon diou e c'hrosmolemp, eun tammig, rak lennet hon doa war ar gazetenn ez eo dleet tamall d'an elektourien, o deus lakaet « potred ar C'hartel » e penn ar vro, hag ar re-ze n'int mat nemed da brometti al loar d'an dud! he distaga, avat, a zo eun dre all! C'hoari o divije graet ma vije bet ker fall an traou en amzer an deputeed koz! a bep seurt o divije lavaret! « Ar gwazed, lod anezo, a zo re zôt, emezomp, kredi a reont kement sotoni savet gand an aotrouien-ze, kouezet eus lost ar c'harr, darn anezo, ha ne reont ket a fors eus al labourerien douar, ne reont stad ebed anezol met p'o deus ezomm eus o moueziou, e teuont da floura o c'hein! Ar bed a zo poanüs da welet, n'eus nemed gevier e peb tû! ha kostezen an A. Doue, an hini ne fazi morse, a vez disprijet war an dachenn: « Ar relijion, emezo, a zo mat evid ar merc'hed hag ar vugale. »

« Tina, emeve, setu perak ez eus nac'het outo ar gwir da voti! mevelien an diaoul a vije bet tomm dezo, a gav d'in, m'hon divije gelllet mont war-dro ar pôd, ni ive. Aoun o deuz razomp. »

— « N'oun ket souezet ous ho klevet, Anna, emezi, Fanch a zu-man e vez alies an A. Person o komz gantai hag e lavaront henvel o daou.

Met, n'eo ket inoui a ran; eman arru an noz; kenavo ar c'henta; eur zulvez bennag e teuin d'ho kwelet adarre.

— Diouz ma vezo ez in beteg du-ze, Tina, n'oun ket fall da vale: kenavo eta.

TINTIN ANNA.

FAZIOU. — *Em fennad war gouign ar Vadalen, e mezeven diveza, eo ret lenn : basa pe strapa ar gwenn hag nann stlapel kuit ar gwenn.*

E Feiz ha Breiz gwengolo p. 369, 31^{vet} linenn e lec'h goude ma vijen, lenn : goude ma vijent.



Eur genskrivadeg fentus

diwar-benn an daolenn stlapet diwar he sijenn.

| Ar Gevredigez *Arvorika* a ginnig kant skoued arc'hant, hag eun neubeud levriou kaër, d'ar skrivanerien a savo ar gwella Soniou plijadurus diwar benn an daolenn a zo bet brizilhet gant eun tenn-poultr en Raozon, d'ar 7 a viz Eost diveza.

Roet e vo 100 lur d'ar son wella en brezoneg unanet (K-L-T.) — 100 lur d'ar wella en brezoneg Gwened; — 100 lur d'ar wella en galleg Paris pe en galleg trefoët.

Tri barner a vo; unan evit pe rann-iez, an Aotrone Keravel, Efflam Koet-Skau, hag ar Merser a Erm.

Neb a verko an ton gant ar son, en devo eur poent ous-penn.

Kas al labouriou arok an 20 a viz Here da Daldir, rener an OALÉD, kelaouenn diouyezek, en Keraez, Kerne.

Pardaez eun dervez east

I

An heol a zo izelaet,
E dro en deus graet,
Pep tra a zo sioulaet,
Wardro hor maeziou;
Ar chatal a zo o peuri
Tro-war-dro d'ar vereuri
Laboused ar gouezeri
A nij warzu o neiziou...

II

Du-hont, er park, kalet 'vel an dero
Ar meder a ya war eün gand e ero
Diouz e zremm e ruih eur c'houezenn c'houero
Evit diskuiza e sav e gein
Neuze ec'h ev eur banne dour fresk,
E ziouvrec'h gand ar boan a lesk
Rak e skuizder a ya war gresk
Dremm e falz a zo ourlet ouz ar vein.

III

Trouc'ha, starda, savadenna,
Gwellât ar filzier hag o lemma,
Setu m'eo graet al labour tenna
Medet ar gwiniz melen-aour
Kaout a raint adarre peadra
Ar vilinerien da vala
Ar fournerien d'ober bara
D'ar pinvidik kouiz ha d'ar paour.

IV

Ar zaout a deu eus ar foenneier
Ar c'hezeg a dec'h eus o lanneier,
An dud a zilez o farkeier
Pa glevont an Angelus
Skuiz ar chatal, faes an dud
An dommder a zo bet yut
Al laboused a zo aet d'o c'hlud
Kuzet eo an heol skedus.

V

Dizelei a ra an dud o fennou
Finval a reont o muzellou
Etrezek an nenv ez a o sellou
Lavaret a reont Angelus an noz
Pep kristen mat keit ha ma vevo
D'ar Werc'hez ato, fidel a vezo
Mari, gant joa, hen digemero,
Da fin ar vuhez-man er baradoz.

F. JAFFRES



DISKAR-AMZER

Dindan pok an avel, hep ehan, diouz ar gwez
 Niverus d'an douar an deliou sec'h a gouez,
 Diwisk awr o lerc'h o blenchou;
 Araok ruilhal er pri pe en em goll er c'hleun,
 En er e nijellont, evel eskell hep plun,
 Ha leunia a reont an henchou.

Dindan falc'h ar maro, dalc'hmat, war leur ar bec.
 An dud a gouez, evel, d'an deziou hanv, an ed,
 Dindan genou ar filzier lemm;
 Hep evez euz an oad, e sko yaouank ha koz,
 Er memez toull e vint bleo gwenn ha jodou roz,
 Ha bouzar eo e vouez d'hor c'hlemm.

Dindan dent an amzer bemdez ve dispennet.
 Hunvreoù a bep seurt gant damant kempennet
 Hag a lake c'hoarz er vuhez;
 Eus re ar vugale hag eus re an tadou,
 Petra jom peurvuia nemet ken restadou
 A zeller outo gant truez?

Dindan pao an drubuilh, tud hag ' en em gare,
 A oa tomm o c'halon evel eun eost dare,
 A wel enni an tan mouget;
 Bleuenn ar garantez, kaer epad bloaveziou,
 A zo deut da c'hoenvi da fin an deveziou,
 Gant an holl frouez en doa douget.

Eun dra 'zo ne finv ket, pa gouez an holl draou all,
 Dindan falc'h ar maro pe bok an avel fall,
 Pe dindan dent an amzer kriz :
 Ar vad graet gant an den, dre ar c'hras en deus bet,
 N'hen deus klasket biskoaz meuleudi test ebet
 Ha diouz an nenv a c'hed ar priz.

J. L'HELGOUAC'H, O. M. f.

Sant-Brieg, 8-9-32.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz Gwengolo.

An dimezell Aline Deude, bourg Ploneis..... 1
 An A. Seite hag e bried, Nogellou, Cleder 1
 Leoriou rakprenet betek-hen : 977 + 2 = 979.

Gant e rakprenadenn unan eus hol lennerien a zegas.
d'eomp al lizer hegarat-man :

Cleder, 29 a viz eost 1932

Aotrou Person,

*Aman en ti-man, an holl a gar ar brezoneg; lennet e-
 vez Feiz ha Breiz bep miz gant kalz plijadur hag eurus-
 oun o welout pegement eo kaeraet, eun nebeut 'zo. Re-
 sevet e vez ouspenn. Kannad ar Galon-Zakr, ha kalz teo-
 riu-all e brezoneg a welan en ti. E-touez al leoriou-se,
 em eus an eurvat da welout da genta Buhez H. S. Jezuz-
 Krist, a vez lennet bemdez goude koan araok ar pedennou
 diouz an noz gant ar vugale pep hini d'e dro. Pa vo len-
 net Buhez Jezuz-Krist penni da benn e kenda c'hor da
 lenn Buhez ar Zent. Da zil goude lein araok sevel diouz
 an daol e vez lennet ivez Aviel ar Zul.*

*Ma vije graet en holl diez Breiz-izel ar pezh e vez graet
 aman, me ' lavar d'eoc'h ne vije ket gwelc' ar Brezoneg
 o vont war ziskar evel ma vez breman.*

*En eur echui va lizer e c'houlennan digant Doue, dre
 holl Zent Breiz, skuilha warnoc'h ha war ho labourtoir
 gliz santel e vennoz.*

Digemerit, Aotrou Person, va gwella doujans.

MAB AN NOGELLOU.

*Ma vije eleiz a lennerien evelse e pep farrez ne vijed
 ket pell evit adsevel hor Breiz kaeroc'h eget n'eo bet bis-
 koaz.*

*N. B. Hano rakprener kenta ar miz tremen eo an A. La-
 rans, Keraudren, Lambazellec, ha nann Laurans.*

BLEUN-BRUG BREST



An A. Perrot,
Person Scrignac,
Diazeour gouelioù ar Bleun-Brug

mit, ograouer sant Loeiz, an A. Juluan Chevil-
lotte, an A. Treguier, kelenner, e Sant Loeiz,
an Aotronez Robert hag Andre Mischeau, an Dime-
zelled Torcol, an A. A. Floc'h, Gourves, Nicolas, Que-
mener, Berthou, ha n'ouzon ket ped ha ped all hag o deus
roet o amzer hag o foan, evit ma vije eilvet war nugen-
t kendalc'h ar Bleun-Brug kaeroc'h eged ar c'haera eus an
unan war nugen- t all a zo bet en e raok.

Ma n'eo ket bet aet pep tra en dro, evid ar gwe'lla, den
ne c'hello nac'h e oa renket pep tra evit ma vije fuilhet
dre holl levenez ha sklerifenn!

Digoret d'ar zul 4 a
viz gwengolo, e Kerar-
becam, gouelioù Bleun-
Brug ar bloaz-man a zo
bet klozet eno adarre
d'ar meurz warlerc'h.

Kêr-Vrest, daoust pe-
gement a ziavaezidi a
zo enni, a reas ar pe-
z a oa en he galloud evit
harpa ar gouelioù bre-
zonek-se a zigoueze
d'ezo beza graet enni
evid ar wech kenta ha
falvezout a ra ganeomp
'rugarekaat aman, eur
vech c'hoaz, Renerien
gouelioù Brest, an Aot-
ronez Lombard, Roche-
mulet ha Lorho, Aot-
rou Person Sant Loeiz,
an Aotronez Cardalia-
guet ha Gueguen, skri-
vagnerien ar « C'hour-
rier », an A. Guiller-

D'AR ZUL

D'ar zul, da deir
eur, dirak eur hobl
tud renket, e Kerar-
becam, e komzou berr
ha distaget mat, an
A. Cornic, Rener
meur ar *Bleun-Brug*,
a lavaras e bre-
neg, da genta, hag e
galleg goudeze e
oa ar Bleun-Brug
eun emgleo savet evit
mirout da Vreiz ke-
ment tra gaer he la-
ka da veza eur vro
dishenvel diouz ar
broioù all: he feiz he
fardoniou, he chape-
liou, he gwiskaman-
chou, he c'horollou,
he gourinadegoù he
c'hanaouennoù ha
dreist-holl he yez
hep par: ar brezo-
neg = rak Breiz
heb ar brezoneg n'eo Breiz ebet ken !

Korollerien ouesk Poullaouen dastumet gand an A.
Gac ha renet gand an A. Martin, eus a Blestin, a zispakas
dirazomp, epad eun eur, korollou koanta Bro Gerc'h, ma
oa eun dudi o gwelet.

Gourinerien Scrignac ha re Blourin-Witalmeze a zis-
kouezas, goudeze, o nerz-korf hag o ijim.

D'AL LUN

Al lun oa dervez ar studiadegoù; rebeud a dud e ge-
meras perz enno daoust d'an dalvoudegez o devoa, kaout
a reoc'h e Feiz ha Breiz d'ar miz-man eun diverra eus stu-
diadenn an A. Uguen; diverra hini an A. Treguier a em-
bannimp ivez divezatoc'h; an darn vrasa eus hor mi-



An A. Cornic,
Eus a Zouarnenez,
Rener Meur ar Bleun-Brug

gnoned e lec'h beza er studiaded a oa a-gleiz hag a-zeñou, o labourat, a-zevri, da renka, a-nevez, ar pezh m'edo ar Mestr-Ministr Herriot o paouez direnka, da lavaret eo an degemer kaer a dlee Bréstitz ober da Yann III ha d'ar bried, Janned ar Savoia. Evit gellout rei ton d'an digemer-se e oa bet goulennet a-benn ar meurz sonerien ar Vortolode't ha kezeg ar C'houarnamant, met an A. Herriot en devoa nevez bet lec'h d'en em glemm eus Bretoned Roazon hag eus Bretoned Gwened hag o veza ma ne c'helle ket e dud koueza war ar re gablus e kavas mat evelato. Koueza war unan bennak : war Vretoned Brest eo e tizac'has e gounnar! Ne vezo roet netra ebet en holl d'ezo. eus ar pezh a c'houlennont! (1)

(1) Le Gouvernement a refusé la Musique de la Flotte aux organisateurs locaux. Il a de même refusé le prêt de chevaux de l'Armée. Etc...

On se demande pourquoi. M. Lancien, président du Conseil général, a déclaré au Conseil, en présence de M. le Préfet, qu'il n'y a pas de séparatisme breton.

C'est pourtant le prétexte séparatiste qui a été invoqué pour infliger ces nouvelles brimades à une réunion bretonne, et pour entraver le commerce brestois au moment même que des efforts si généreux sont faits pour le sortir du marasme.

Si le Gouvernement s'est tellement ému de l'attentat de Rennes, il est fort mal renseigné.

Seulement, il y a des gens qui ne dorment plus depuis que la Bretagne a célébré le Souvenir de ses 240.000 enfants-morts pour la France. Aucun membre du Gouvernement n'était présent. Deux cent quarante mille bretons ne vont pas le déplacement d'un ministre! Pas même le déplacement d'un préfet!. Mais il y avait 150.000 bretons et des Evêques. Sans doute « des gens » en ont pris ombrage.

A Vannes, les deux évêques bretons bretonnants furent in-solamment priés d'assister au banquet du 4^e Centenaire de l'Union de la Bretagne avec la France. Et ils y assistèrent. D'où fureur de « des gens ».

Alors, Brest, vous comprenez!.. Ces procédés sont indignes d'un grand pays.

Le Comité du Bleun-Brug, après un échange de vues cordial avec le Comité Général des Fêtes Brestoises, adopta l'ordre du jour suivant:

« Le Comité local du « Bleun-Brug », réuni ce soir, devant l'obstruction des pouvoirs publics: refus d'autoriser le concert sur la place Wilson et refus de permettre à la musique de la Flotte de participer à la fête du 6 septembre au vélodrome. Par suite de cette attitude hostile qui



Gourinerien Scrignac
Eul lamm skeudennaouet gant H. Schneider

Ar Vretoned, m'oarvat, n'o devezo ket ezomm ken, ken nebeud, da bignat war gezeg ar C'houarnamant? Pa n'heller ket o fiziout enno epad eun eur hepken en amzer ar peoc'h, ne welan ket penaos e c'hellfed o fiziout enno epad miziou ha bloaveziou en amzer ar brezel?

Daoust da vouzerez an A. Herriot e voe kavet kezeg a-walc'h, evelato, a-benn ar meurz, e Brest, e Plouzane, e Milizac, e Gwipavas hag er parrezioù all tro-war-dro ha bennoz Doue d'ar Vretoned vat a zo bet deuet evelse, kerent ha m'eo bet goulnnet outo war zikour Renerien ar steun-Brug.

AL LUN DA NOZ

Del lun da noz edo an nozveziadeg vras e sal gaer gouelioù Brest. Leun chek e oa ar zal. Er penn uhela e kichen an A. Cornic edo an A. Cogneau, viket vras, an A. Moenner, person Sant-Loeiz hag an A. Salvat, deuet da C'houelioù Brest en hano Felibred ar C'hreizteiz.

Korollerien Poullaouen ha Pont 'n Abad, kanerien Ker-

« est prise pour contrecarrer le succès des fêtes qui s'annonçaient pourtant grandioses, décide de se retirer, étant dans l'impossibilité absolue de donner aux fêtes tout l'éclat voulu et de réaliser le programme complet publié tant par les journaux que par les affiches. »

Suivent les signatures.

Cependant les membres du Comité ne voulurent pas que Brest et ses visiteurs fussent frustrés des fêtes attendues, ni le commerce local privé des ressources escomptées; surtout, il refusa de laisser mettre Breiz en quarantaine. A titre privé, ils continuèrent leur collaboration: les fêtes, malgré tout, auraient lieu.

De son côté, M. Lombard, président du Comité général des Fêtes Brestoises, adressa à M. Herriot, président du Conseil, le télégramme suivant:

« M. Lombard, président du Comité général des Fêtes Brestoises, présente ses salutations respectueuses à M. Herriot, président du Conseil. Fait appel à son esprit de justice et d'équité pour que les fêtes qui doivent se dérouler à Brest, cette semaine prochaine, revêtent un caractère grandiose. Vous seriez reconnaissants, Monsieur le Président, vous voir intervenir près Préfet du Finistère, pour qu'il revienne sur sa décision de ne pas relever, par sa présence, l'inauguration Foire-Exposition Brest.

« Demande votre intervention pressante près Ministre de l'Intérieur pour que les fêtes de la Bruyère des 4, 5, 6,



Korollerien Poullaouen

« et 7 septembre, organisées sous notre patronage et responsabilité, soient magnifiques. Cortège de 2.200 personnes, paysans, paysannes, dans leurs plus beaux atours. Impo-

« sant cortège historique; avons eu refus net, participation « Musique Flotte et autre musique militaire. « Connaissant votre amour pour la Bretagne, suis persuadé, Monsieur le Président, que vous ferez l'impossible pour nous aider afin que nos fêtes permettent à la population commerçante de Brest de pouvoir, malgré la crise actuelle, connaître quelques beaux jours.

« LOMBARD,

« Président Comité des Fêtes, Brest. »

M. Lombard n'obtint une réponse qu'au bout de vingt-quatre heures: M. le Président du Conseil autoriser M. le sous-préfet de Brest à assister à l'inauguration de la Foire-Exposition et à présider le banquet qui suivrait.

Quant aux Bleun-Brug, rien!

... La Fête du Bleun-Brug à Brest a été un triomphe. On a ri des mesquines et sottises interdictions officielles. Pas beaucoup. Parce qu'on avait, Dieu merci, le cœur au dessus de ça. Et la foule s'est donnée, à plein cœur, aux spectacles, aux concerts et aux études qui magnifièrent la petite Patrie, sœur de la Grande.

Vive la Bretagne messieurs, et vive la France!

Extrait du « Courrier » du 10-9-32.

ber, Sant Martin hag alj a oa eno. An A. Massé a zisklerias
pedenn ar Gedour.

Diou brezegenn, berr ha c'houek, hini an A. Cornic da



An duk hag an Dukez o vont da Gerarbecam

krugarekaat Brestiz hag hini an A. Salvat da zaludi ar
Vretoned en hano ar C'hreisteiz.

An nozveziadeg a badas betek hanternoz.

AR MEURZ

Daoust pegen abred edo oferenn ar *Bleun-Brug* lavaret
gant an A. Cogneau, ha daoust peger bras eo iliz sant
Loeiz Brest e oa eur bern tud enni abenn ma savas an
A. Duparc er gador; komz a eure eus ar seiz Sant ha
n'helle ket dibab eur gêr gwelloc'h eget Brest da oñ-
enni meuleudi ar Seiz Sant n'eo gwir parrez kosa kêr
oa parrez ar Seiz Sant.

Goude an oferenn e stagjod gand ar c'henstrivadegou;
betek kreisteiz n'oa ehan ebet gand an dud oc'h en em

gaout e ker; da ziv eur n'helled ket finval; Brest a-bez
gant an diavaezidi a oa enni, a oa war ar ruiou, ar bleun-
brug hag ar bannielou herminiget o ficha a-us d'ezo, o
c'hortoz gwelet disklaeria e taolennou beo eur bajenn
eus istor Breiz.

Breman ez eus 600 vloaz, hor Breiz a oa distag a-
grenn diouz Bro-C'hall; Yann III oa he Duk ha trede
pried heman, Janned ar Savoia oa he Dukez. Yann III



*Yann III (E. ar Floc'h)
ha Jann ar Savoia, e bried (M. de Réals)*

a oa eun den hag a gare ar peoc'h: lëshanvet e oa an
Duk mat ha gellet en devoa en em glevet gand ar Fran-
sizien hep lakaat re a zroug er Zaozon. Pignet war droun
Breiz, da varo e dad, er bloaz 1312. Yann III a varvas e
Caen d'an 30 a viz ebrel 1341; sebeliet e voe e bez e dad,
e Ploermel.

Peurliesha e veze o chom, e Bro-Wened, met, e miz mie-
zeven 1332 e teuas da ober eun dro da C'houeled-Leon.

ha mirout a faer atao' eul lizer bet finet gantan e Lok-Maze Penn-ar-Bed, d'ar 25 a viz mezeven 1332, da rei aotre d'ar venec'h a oa eno neuze, da ziskar eun nebeud tiez evit gellout sevel, en o her'h, mogeriou mat hag uhel da zifenn kêr ouz al laeroun-vor.


Taolenn an degemer laouen graet d'o duk mat gant Brestiz p'edo o vont da Lok-Maze Penn-ar-Bed, breman ez eus 600 vloaz, eo a oa bet c'hoant da lakat dirak daou-



An aïmezelled henor an Dukez

lagad. Bretoned an XX^{vet} kantved, d'ar 6 a viz gwengolo diveza! Siouaz! ar glao a deuas hag a badas o vont war wasaat beteg-ar pardaez!.. Diouz ar pezh a zo bet gellet diskouez evelato e oa aes gwelet petra vije bet ar gouel ma vije bet chomet an amzer war he zu.

Ar gourinadegou, ar c'horoll hag ar c'han, e Kerarbecam, dindan eur glao-evel ma oa, ne voent ket gwall lufus, ken nebeud, e c'hellit kredi.



Tudchentil Goueled-Leon

Kenteliou a zo da denna eus gouelioù Brest. Ha da genta : anat eo d'an hol skleroc'h eget biskoaz n'o deus netra nag ar Gristenien nag ar Vretoned da c'hedal digant ar C'houarnamant a zo breman: rei a c'hellont ar pezh a girint, met d'an dister dra a c'houlennint e vezo lagad.. Kenteliou a zo da denna eus gouelioù Brest. Ha troet kein d'ezo; rak-se, m'o deus c'hoant da veza selaouet e pep lec'h, e Paris kouls hag e lec'h all, ra deuint holl d'en em glevet : p'her graint n'eus mestr-ministr ebet ken hag a gredfe chom heb ober outo o lavarou.

D'an eil, anat eo d'an holl ez eus e Breiz, en tu all d'ar Vretoned, nevez aet e kêr, diwar ar maezioù tro-war-dro, daou rumm dud dishenvel, ar pezh n'oa ket dleet e vije: ar rumm brasa eo an hini emañ ennan ar re o deus mez o komz brezoneg hag a gred c'hoaz eo desketoc'h an hini ne oar nemet galleg eged an hini a oar brezoneg ha galleg, tud diwarlerc'h, da-



Soner an Duk
Herve ar Menn,

oust pegement a skoliou a zo e Brest ha ne ouezont nag Isior o gouenn na Yez o Bro ! Ar rumm bihana eo an hini emañ ennan ar re, — tud yaouank, dreist holl, — hag a zo en em laket, eus o fenn o-unan, da zeski ar pezh nezesked d'ezo er skolioù: ar rumm-se a ya war gresk bendez, hag a ziskouez n'eo ket maro Breiz, zoken e Brest a, drugarez Doue !

Er bloaz a zeu, red eo espercut, an heol, lagad an deiz, a skedo war gouelioù Bleun-Brug Pont 'n Abad. muioc'h eget n'en deus graet war Gouelioù Bleun-Brug-Brest ! Breiz da virviken.

Y.-V. PERROT.



Korollerien Poullaouen



KENETREZOMP

Trugarez da Jobig an Eskob evid ar skeudenn gaer savet gantan evid eur gontadenn nevez a embannimp aman er miz a zeu; trugarez ivez da Loeiz ar C'haer evid ar zac'had tanvouez en deus dastumet evit *Feiz ha Breiz ar Vugale*. Ar geriou fentus hag ar marvailhou koant a zo ennan a embannimp ivez e *Feiz ha Breiz ar Vugale* miz du.

Bugale all Breiz-Izel, grit evel an daouik-man : komzit, lennit ha skrivit ar brezoneg; dastumit, pennaout, tanvouezit, ar geriou speredok a glevit gant bugale hoc'h oad pe gand ar re goz a garit kement hag a zo o veva en ho serr. Degasit d'in ar c'homzou pe ar c'hontadennoù o deus ho laket da c'hoarzin ma talvezint ivez da lakat levenez e kalon ha war dal ar re vihan all eus hoc'h oad hag eus ho pro.


Ar Breur Bras.

TAOLIT EVEZ. — Kasit ho skridou hag ho skeudennou, rak ma ouezit skeudennaoui ho skridou nemet muioc'h a-ze a dalvoudegez n'o devezo ken, — da *Rener Feiz ha Breiz, Scignac (Finistère)*, a en em gargo d'o c'has d'ar *Breur Bras*.



Eur vintinvez a vae e tigouezas ganen gwelet eur mell buzugenn hir, hir ha teo, teo; o pourmen emedo hi, dibreder kaer, war an douar glizennek.

Eur voualc'h zu-pod, eur pigos melen brao d'ezi, a welas ar vuzugenn vras; plava a reas en he c'hichen; eur pennad e chomas a-zav da zellout, dizifians enni, oc'h en em c'houlenn: « daoust ha mat eo al loen-man da zebri? Daoust ha n'eo ket drouk? » Tostaat a ra ar voualc'h gant evez bras: « ne zebtant ket beza eur gwall dra; marteze n'eo ket mat da zebri! c'hoant am eus d'he zañva! » Hag e roas eun taol pigos trumm d'ar vuzugenn endra ma rae eul lamm a gostez. Ar vuzugenn a fistoul, a en em zifret o klask tec'hout kuit. Dizrei a ra ar voualc'h, hardisaet e hag e tispen ar vuzugenn gaez gant eur bigosadenn greñvoc'h: « O, emezi, eur vuzugenn eo al loen-man, hag unan vras c'hoaz, mat emañ ganti, pebeus kofad a rin ganti! »



Setu ar voualc'h o tebri ar vuzugenn, hast zo warni, ken marlonk eo ma c'hoanta lonka he freiz en he fez, eur gwall grogad he deus avat; aet an hanter ouz ar vuzugenn en he gouzoug e oa tost d'ezi mouga. Bec'hiet e oa al labous, dre ma chache a-bouez e gorf oc'h ober astennadou d'e c'houzoug; eur c'hrogad startoc'h, eun astennaden hirroc'h d'ar c'houzoug, ha pelloc'h e oa treizet ar vuzugenn.

Ken bec'hiet e oa bet ar varlonkez ma chomas eur pennad mat eno difiñv evel badaouet d'ezi. Mont a eure kuit peiloc'h, oc'h ober lammonigou pounner evel kerz eur bugel en defe graet re gofad krampouez.

N'ouzoc'h ket petra c'hoarvezas gant ar voualc'h goude se? En deiz warlerc'h he c'havis e kichen eur vodenn lore; war greiz he c'hein em-edo, he zreid savet warzu an nec'h. Ar voualc'h zu-pod, he figas melen brao, a oa maro gant re gorfad divar ar vuzugenn deo, deo, ha hir, hir.

Mat eo debri ouz ret, ober re gofad n'eo ket.
An Dimezell HERJEAN.



LUNEDOU

TAD KOZ

Bez e oa eur verc'hig vihan, nevez kaset d'ar skol hag a gave tenn deski he lezerennou; gwelet a rae, beb an amzer, he zad koz o lakat eul lunedou war e fri, bep wech ma kroge en eul leor pe en eur gaze'enn bennak ha setu ma c'houlennas digantan, eun dervez :

— Tad koz, perak e kemerit an tammon gwerse da lakat war ho fri?
— Evit gellout lenn, na petra 'ta, va merc'hig vihan!
— : Tad koz, eme ar verc'h, lakit i d'in ivez, war va fri, eur pennadig, ma welin ha me a ouezo lenn ivez.

— Tad koz, me n'oun ket evit lenn gand o lunedou!
— : A! n'oun ket souezet tamm ebet, merc'hig kaez, rak a-raok beza gouest da lenn gand an tammon gwer-man e ranker mont d'ar skol da zeski lenn!

An tad koz a reas he lavarou ouz ar verc'h vihan met houman kaer he devoa sellet adreuz al lunedou ouz al leor a oa dirazi ne wele nemet pikou du war baper wenn ha n'oa ket evid o lenn :

— Tad koz, me n'oun ket evit lenn gand o lunedou!
— : A! n'oun ket souezet tamm ebet, merc'hig kaez, rak a-raok beza gouest da lenn gand an tammon gwer-man e ranker mont d'ar skol da zeski lenn!

Adalek neuze ar verc'h vihan e stagas e-zevri gand he labour-skol hag a deuas a-benn da c'houzout lenn e berr amzer hag... hep lunedou!

Ar breur bihan.

A B C D E F G H I J K L M N O P Q R S T U V W X Y Z

A B C D E F G H I J K L M N O P Q R S T U V W X Y Z

C'HOARI TENNA



El porz ar skol Herveig ha Jobig a zo kannou ganto ; ar mestr-skol a deu d'o dispartia.

Herveig. — Ya ! aotrou, Jobig en devoa c'hoant da c'houzout pegement a jom pa denner 10 eus 17; seitek aval en devoa hag em eus tennet 10 digantan hag e chom gantan 7.

Ar Mestr-Skol. — Ro breman an dek

aval-ze adarre d'ezan neuze!

Herveig. — O! n'her gran ket; neuze n'en defe ket zonzj pegement a jom gantan pa denner 10 eus 17.

Skrid kaset gant Fransez Dillard, Skolach I. V. Wir Zikour, Brest.

Eozennig hag Annaik

Eozennig a zo kouezet en eur poull dour e c'hoar vras ouz e welet o tont ac'hano leun bri her gourdrouz :

— Ma n'eo ket eun druez gwelet e pe stuz emañ adarre, gant da vragez nevez flamm, war e genta lamm.

— : O ! Annaik, eme ar paotr, n'em eus ket bet amzer d'hel lemmel, araok koueza !



DIVINADENNOU

Responchou Ebrel, Mae, Mezeven

I. — Responchou divinadennou miz ebrel.

1. — Ar c'houec'hvet kloc'h a zo etre an tri uhela nemet emañ e benn an nec'h d'an traon.
2. — Ober trouz.
3. — Mervel.
4. — Penn ar vaouez, karget eus ar gloued, a weler war gorre an ti.
5. — Al labous a zo er wezenn, e benn d'an traon.

II. — Responchou divinadennou miz mae.

1. — An avel.
2. — Eur bramm.
3. — An dud'er bed-man 'zo ganet D'en em zikour, d'en em garet.
4. — Skour bihanna ar wezenn eo a ra lagad al lenner.
5. — Ar c'haz a zo e tu dehou an daolenn, war e benn.

III. — Responchou divinadennou miz mezeven

1. — ANNA.
NEIZ.
NICE.
AZEN.
2. — eur bourrenn.
3. — eur pod houarn.
4. — toenn an ti.
5. — etre an diou wezenn.

HANOIOU AR C'HOUNIDEIEN.

O deus respontet mat da 13 war 15 :

1. — Jan Normand, skol gristen, St-Thegonnec.
2. — August Goaraguer, Crec'h an Neven, Louargat.
3. — J. L. Plouhinec, Lesplomeur, Plomeur.

O deus respontet mat da 12 war 15 :

- 4. — Mari Rosec, skolach Lesneven.
- 5. — Louis Floc'h, Plomeur.
- 6. — Tanguy Creignou, Vourn, Cléder.
- 7. — Theresa Fave, Verger, Folgoat.
- 8. — Rosali Berthoulous, Rann Grannoc, Plougerne.
- 9. — C. Lescop, Lann-ar-Poullou, Breles.

O deus respontet mat da 11 war 15 :

- 10. — Jan-Louis Caer, ar Roc'h, Plouenan.
- 11. — J. Marc'hadour, Gottorn, Cast.
- 12. — Unan bennak eus Gwitevede ankounac'haet gantan lakat e hano.

Ma 'z eus etouez an daouzek gounideg-man unan bennak hag en defe c'hoant da gaout, evel priz, *leor an A. Gwilhou*, n'en deus nemet digas eur ger war-ze, da Rener *Feiz ha Breiz* a-raok ar 15 a viz Here. A hent all e vezo kaset eul leor all bennak nevez e priz d'ezo a-raok goueliou Kel-ar-Goanv.

Responchou gouere, eost ha Gwengolo, a dle beza digouezet ivez gant Rener *Feiz ha Breiz*, *Scrignac*, *Finistère*, abenn ar 15 a viz Here.

DIVINADENNOU MIZ HERE

I. — El lec'h ma vez txx
E vez toull an tx.

Lakit e lost ar gwerziou-se an teir lizerenn a vank.

II. — Pa ya pep hini en e xoxx
E ya, siouaz, pep tra da xoxx

Lakit e lost pep hini eus an 2 werzenn-se an teir lizerenn a vank.

III. — xn dx d p x n v x d x k,
xn dx d k x z x d x k.

Lakit en diou werzenn-se ar vogalennou a vank.



IV. — En dro d'ar rozenn-se ez eus eur valafenn (un papillon). Klaskit hen.

V. — E pelec'h ema ar c'haz a zo pignet er wezen-man ?

An diou zivinadenn-man a zo degaset gant H. Caouisin, eus a Paris.

ORNEMENTS D'ÉGLISE

ARGENTURE :-: DORURE :-: NICKELAGE
ORFÈVRERIE - TOUS BRONZES - LUMINAIRES

Paul PERROT

Atelier et bureau : 21, Rue de la République - BREST

Pluneret - Meriadec

Un Livre breton

A Meriadec Un vottage. Une croisée de routes avec quelques maisons. Même pas un bourg, ou à peine. Et voilà ce bourg de rien entré dans la littérature! Qui l'eût pensé?

C'est qu'à Meriadec a lieu chaque année, le 19 avril, une grande foire aux chevaux. Et depuis un temps immémorial c'est le principal événement commercial des campagnes de Vannes et d'Auray. Un bon prêtre, l'abbé Mary, qui fut vicaire de Pluneret, a voulu nous en laisser une modeste description. Cela a suffi.

Dans FOER VERIADEC, pas d'action, pas de drame, pas de grands éclats. La vie bretonne, de chaque printemps, et la grande foire. Pas plus, — et c'est plein de charme. Une sorte d'églogue si vous voulez, mais al-réenne, et se déroulant entre l'Arvoir, comme dit la Côte, et ce Meriadec où plusieurs choses ont une si parfaite patine!

L'auteur, l'abbé Mary, était lui-même du pays d'Auray. Né à Carnac en 1858, mort à Pluneret en 1902, comme écrivain il n'a voulu connaître que le breton d'Auray. et toute la saveur de celui-ci se trouve fixée dans l'opuscule qui vient d'être réédité à Lorient aux éditions de Dihunamb. Il y a des choses qu'on ne saurait noter, malheureusement; mais heureux l'écrivain qui sans le vouloir peut-être a su les rendre.

Et comme un Breton trop discret sur lui-même a consenti à écrire une excellente préface très documentée; comme l'artiste A. Marzin a bien voulu exécuter pour ce petit poème simple, mais d'une rare réussite, plusieurs beaux dessins fort fidèles, dans ce petit livre tout est exact, tout est charmant. tout est breton d'un bout à l'autre.

N.-B. Demander l'ouvrage à M. Loeiz Herrien, Kerrevé, Saint-Caradec, Hennebont. C./C. 241.28, Nantes.

Prix : 4 francs (Franco).

Feiz ha Breiz

Hor beziou koz



Beziou koz e Plogoff, Cleden ha Poullan.

Gwechall edo ar c'hiz da gaout ar berejou en dro d'an ilizou hag en doare-se e veze muioc'h a dro da vont war ar beziou hag ar re varo ne ve-

zent ket ken ankounac'haet ha breman ; ar vered a oa eul lec'h a dremenvan evid ar re veo koulz hag evid ar re varo ; goude an oferenn pep hini a gerze da deurel eur banne dour benniget ha da lavaret eur bedenn war beziou e dud ; diwar groaz ar vered eo e veze embannet nevezentiou ar barrez, hag er porz-gwered eo e veze, da zeiz ar pardon, ar ganerien o werza o soniou hag o c'hantikou.

Ar c'hêriou bras eo o deus, da genta, pellaet o berejou diouz o ilizou; ar vered dre ma kreske kêr a deue da veza re vihan hag o veza ma ne c'helled ket he c'hreski el lec'h ma oa e ranked, he c'has e lec'h all ; a-wechou all e kaved ne oa ket yac'hus kaout ar vered e kreiz kêr ha setu eun digarez all da bellaat ar re varo diouz an iliz.

War ar maez zoken e teu, a-nebeudou, ar c'hiz da lammel digant ar re varo an tamm douar pere'hennet ganto meur a gant vloaz a zo hag e kaser o relegou pell diouz an iliz ha pell diouz an dud en eur park, eur voger uhel en dro d'ezan evel moger eur prizon : evel aotn a zo na zigasfe ar beziou re a zonj d'an dud eus ar maro ! Ar berejou koz hag a oa ker brao gand o mogeriou izel, o c'hurunennad gwez ivin pe wez dero, o forziou war volz, o c'harneliou, o c'halvariou a vezo laket hiviziken da letonennou pe da blasennou foar !

Ar re binvidika a gaso d'ar vered nevez o beziou ha relegou o zud, hag ar re baoura a gaso o mein bez ganto da ober pontchou pe speurinier en o marchosiou !

Taman ha tamm e weler dismantri ar berejou koz; e Plogonnet, Poullan, Sant Hermier, Plouyann, Plougasnou, Roskoff, Sibiril, Cleder, Plougerne, Lanneanou, Poullaouen hag e meur a barrez all, diwar ar maez, e par deuet a-benn eus an taol ! E

Sant Hernin e oa eur voger mein-ben en dro d'ar vered; an Aotrou maer en deus graet he diskar ha neud-orjal dreinok a zo laket en he lec'h da stanka an dachenn; c'hoant en devoa zok n da ziskar eur chapel a oa eno a zo bet ouz e ziarbenn.


E Sant Noug a oa ivez eur porz-gwered eus ar re gacra, n'ouzon ket ped karrad mein-ben ouz hen ober, gouest da badout n'ouzon ket ped kant vloaz : diskaret eo bet breman ez eus nao pe zek vloaz : war zigarez diskouez d'ar re a dremene dre an hent, bez re varo ar brezel, eur bez ha n'eo tamm dishenvel diouz beziou all ar vered.

Daoust pegement e poagn Aotronez an Arzou Kaer da c'houlenn ma vezo miret er berejou koz ar c'halvariou hag ar beziou stummet braoa, peurlies a n'o selaouer ket ha ne vez ket lezet enno eur maen war eur maen ! Ar beziou koz-se, koulskoude, gant o lizerennou teo hag o skeudennou santel kizellet gant tud dizesk o devoa o zalvoudegez.

War « *L'Art populaire* », eur gelaouenn moulet e Strashourg gand Alzasiz, — eur ouenn dud hag a rank stourm kement ha ni ouz Gouarnamant Paris evit mirout he feiz hag he yez, — eo bet embannet warlene eur pennad-skrid savet, gand an Aotrou J. Gauthier, rener mirdi Istor hor Gouenn en Naoned, diwarbenn beziou koz Breiz-Izel; an darn vrasa eus ar beziou skeudennaouet aman a zo tennet diwar ar pennad-skrid-se.

Beziou tudhentil a weler c'hoaz, a-wechou, en ilizou; o anaout a raer diouz ar skouejou a vez outo hag a lies a-walch e weler warno skeudenn c'houryczet an Aotrou pe an Itron a zo sebeliet o c'horfou dindanno. Etouez beziou ar goueriaded ne gavan nemed unan hag e vefe eun den skeudennaouet warnan; e bered Gwilar, e kreiz etre Kemper ha Pont-Kroaz eo ema ar bez-se e weler warnan M. Bars, eus a Boull-Gwilar, gwisket gand e vragou bras, en e zav, e-harz treid ar groaz hag o

tenna e dok d'he saludi; eur galon, — marteze ar Galon Zakr, — a zo kizellet war ar groaz.



Eur maen-bez koz keur a vered Gwilar

Ar bez-se koulz hag ar re all a ziskouezomp amian a zo eus ar XVIII^{vet} kantved: ne gaver ket a veziou kueriaded hag o defe daou c'hant vloaz. An dud uhela er parrezioù gwechall a veze o beziou en


ilizou hag er chapelioù ha meur a hini anezo a weler c'hoaz e Langivoo, e Plouneour-Lanvern, e I.V. ar Joa, e Gwimaec, e Plouyann, e Lokronan hag e Penmarc'h, nemet e teu an hanoioù warno da veza diaes tre da lenn. Tud dizek a gaved hag e lec'h lizerennou a verke war beziou benviachou-labour en hini maro. E Penmarc'h e weler eorrioù war meur a vez, a-wechoù all bigi; e Gwitalmeze hag e Lanriouare e weled freilhou, pili, filsier, morzolioù, turkezoù, anneoioù, pouezioù holorachou. Er bloavezh 1750, o veza ma oa klenvejoù spegus er vro, Parlamant Breiz a zifennas sebelia ar c'horfoù maro en ilizou anez kaout kaoioù d'o lakaat; ar goueriaded pinvidik a gavas start ple-ga d'al lezenn nevez-se hag a enebas ouñti, er penn kenta, ar pezh ma c'helljont met gand an amzer, evelato, e teujont da ober evel ar re all ha da gas korfoù maro o zud d'ar vered etouez korfoù o c'henvroiz paouroc'h egeto ha re ar velien pe an noblans hog o devoa, dre izelegez, goulennet leza beziet ivez eno. Kosa mein-bez a gaver er herejoù a zo eus an amzer-se.

Beziou ar veleien a zo aes da anaout etouez ar re all rak eur c'halur a gaver warno. Bez unan eus personed koz Tregourez, e kichen ar c'halvar, a zo eur groaz vras gand eur c'halur warnan. Alies e veze eur skrid, tro-war-dro d'ar maen-bez, pe war ar maen-bez, en e hirder; peurliesia, koulskoude, ar skrid a veze kizellet, e meur a linenn war ledander ar maen. Gwechall ne veze ket kavet a groazioù, houarn pe vaen, en o sav, war ar beziou; ar c'hiz-se a zo bet deuet e penn kenta an XIX^{vet} kantved, koulz hag ar c'hiz da lakaat e penn ar bez eur maen da zaoulina.

Lizerennou ar beziou gwechall a veze seul aesoc'h o lenn ma veze bet toullet ar maen tro-war-

dro d'ezo, setu m'ho c'haved warnan evel war neunv ha war zibrad.

Lizerennou ar beziou breman a vez toulllet d'ar red, er maen, ha p'o devez eun nebeud bloaveziou ne c'hell den ebet ken o lenn !



Traou hag a weled kizellet war ar beziou koz, e Goullers e Eskibien, e Plogoff hag e Beuzec-Cap-Sizun.

E penn warlaez ar maen-bez e vez kizellet peurliesañ eur groaz gant c'herziou dindanni ; a-wechou e lec'h ar groaz e kaver an teir lizerenn I.H.S. a verk Jezuz Salver an Dud. An teir lizerenn-se gand ar groaz war gorre an H. a gaved war eleiz a vezioù gwechall. A-wechou a bep tu d'ar groaz e kaver daou kantolor, kalonou, stered, goulou

pleget da verka ar c'hany, daerou; ne vez ket diskouezet kals Hor Zalver Jezuz-Krist war ar groaz; e Ploeven her c'haver evelato gant daou gilhog unan a bep tu d'ar groaz !


E penn-an-traon ar maen-bez ne vez ket kizellet kalz a dra; war darn e kaver evelato eun traezer, eur c'haulaouenn he fenn d'an traon, eur penn-maro gant daou askorn bras dindan e kroaz eur pinsin dour benniget stuman eur groenn pe eur galonenn dezan ; gwechall e veze dour benniget atao war ar beziou; breman aliesañ hini a gaver warno eo dour glao; an dour benniget a zistan paoniou an Anaon; eun den o tremen dre Kemper breman ez eus daou c'hant vloaz a skriv e veze gleb atao leur iliz-veur Kemper dre ma veze ar merc'hed o kerc'hat dour a vozadou da deuret war beziou o zud.

Ne vez ket gwelet an dra-se ken; daoust da-ze kals devosion a zo atao e Breiz evid ar re varo, dreist-holl er parrezioù ma chom enno beo ar feiz. E Leon ez eus berejou dalc'het kempenn. Kae-roc'h e kaver koulskoude beziou tes ar berejou gwechall, harp-en-harp, evel e bered Tregourez c'hoaz en deiz a hizio; na kaera bered a gaver c'hoaz er barrez-se, gant he c'hurunennad gwez ivin en dro d'he iliz kinviet ha Doue ra viro na vefe dismantret.

Da vihanan, pa freuzer ar berejou koz, kentoc'h evit lakaat ar vein-bez da ober mogerioù pe da zresa an hentchoù, gwell e vije o renka en dro d'ar porched da zigas sonj d'an dud a-vreman eus ar re goz ne ouezer ket kals a dra diwar o fenn ken nemed emañ an darn vrasañ anezo er baradoz. An diavaezidi a deu ker stank en hanv, da redek hor bro, pa daolont o zreid en unan pe unan eus hor berejou n'int ket gouest da c'houzout, diouz eur gwel, emaint eno etouez Bretoned,

rak ar beziou n'eus a vrezonég warno nemet ha-noïou ar re varo.

Tra sebezus ! setu aze tud ha n'ho deus graet nemet komz brezonég epad o buhez ha pa varvont ne laker nemet galleg war o beziou.




Traou nerket war beziou koz e Langivod e Ploeneour-Lanvern e Locronan hag e Goulien.

Oc'h ober tro ar vered, e Scrignac, em eus kavet eur hez hepken gand eur skrid brezonek renket evel-hen: *Guilou Maltret Maro 1853.*

E Berrien, unan hepken hini Theophil Guyonarc'h.

E Guissény, unan hepken hag e ra eur mestr warno i meulendi e vevel; diveza gwech m'oun bet e Guisseny n'em eus ket gelllet koueza war ar maen-bez-se: m'arvat eo laket a dammou !



Dagu vez koz, ar c'henta anezo a zo e Ploeven hag egile e Goulien

E Piougastel-Daoulas, unan hepken, hini an A. Cardinal, Rener koz *Feiz ha Breiz.*

E Lochrist, unan hepken, hini ar Gonidec, den fur ha den gouizick, reizer ar brezonég.

Breinan ez eus pemp bloaz war nugen, oc'h ober

tro ar vered, e Gwinevez, e kavis bez an Aotrou Lan Inizan, azer al leor hep par *Emgann Kergiff*. Bez e dad ha bez e vamm a oa harp en e hini ha warno o daou e oa skridou brezonek, met war e vaen-bez e-unan ne oa nemet galleg; p'en devoa graet skridou-bez e dad hag e vamm e vije bet mat d'ezan beza graet e hini e-unan dioc'htu.

Setu ar pezh en deus sonjet ar barz koz kouerriad Juluan Godest, maro e ti e vugale, e Kerlaë, Kallag, da viz ar Foennou diveza oajet a 81 bloaz rak, war a lavar Taldir, war *An Oaled* (1):

« A-raok mervel ar barz brogarour-man en doa
« graet merka eur poz brezoneg war e vez en bered
« Kallag, gant aoun, emean, na vije ket bet sonjet
« ober gant e vugale ! »

Ar Vretoned hag a fell d'ezo beza Bretoned, beo ha maro a *heulio* skouer vat Juluan Godest.

G. P.

(1). — *Eur gelaouenn trimiziek a 96 pajenn : 28 lur er bloaz; he goulenn ouz an A. Jaffrennou, Avenue de la Gare, C/Chaix, Finistère. C/C 106.95 Rennes.*



Ar peoc'h hag ar brezel

N'eo ket c'hoaz kompennet an dismantr graet gant ar brezel bras 1914-1918; ar broiou a zo gwasket gant ar betc'h taolet war o gein; e pep lec'h ez eus kudernou da zirouestla; diaelet eo ar bed, hag evelato ez eus c'hoaz tud hag a garfe ober brezel a-nevez. An dud-ze n'e ket tud int, met kentoc'h diaoulou distlonket eus an ifern evit strafilha an douar.

D'eomp-ni, tud Frans, n'eus ket a rebechou d'ober. Rak, e gwirionez, ni a gar ar peoc'h hag a c'hoanta gwellet ar peoc'h o ren war an douar. N'e ket ni eo a zisklerio brezel d'ar broiou all, hag an dud a zo e penn ar broiou all n'o-deus aon ebet da gaout a-berz ar Frans, a c'hell kousket dienkreiz ma n'o-deus da deutal evez nemet ouzomp-ni.

Met er broiou all n'eo ket henvel. En Allmagn, goude ar brezel, ez eus bet e penn ar c'houarnamant tud a volonte vat hag a c'hoantae adsevel o bro dre al labour, an urz vat, ar peoc'h, an emgleo gant ar broiou all. Met hiniennou anezo a zo maro, hag ar re all o deus ranket rei an dilez eus o c'harg, hag en deiz a hirio ez eus adarre e penn an Allmagn tud demhenvel ouz ar re a oa gwec'hall, araok ar brezel bras, tud hag a fell d'ezo lakat an Allmagn uheloc'h eget an holl vroiou all, ober d'ar bed holl plega d'ezo. Mez o-deus o veza m'eo bet izelaet o bro gant an emgleo a beoc'h e 1919, hag e karfent goalc'hi ar vez-ze, adsevel an Allmagn er renk kenta; dre guz e preparont soudarded, o c'hirri-nij a zo bras meurbet o niver, ober a reont listri a vrezel hag a red buan, enno kanolioù evel n'eus ket el lec'h all. An dud yaouank eus ar skolioù bras a vez desket d'ezo karet ar brezel, karet ar vicher a zoudard, beza prest evit an deryzioù a c'hloar a zo tost d'en em-gaout.

Pa vez an traou evelse en eur vro, eo awalc'h cun culfenn evit lakat an tan da gregi, hag an tan a vije buan eun tan-gwall.

Eur vro all a zo, tost d'eomp, hag a zo en he fenn eur gwadl den ive, Mussolini. Heman a zo deuet mestr en Itali, breman ez eus daouzek vloaz, en eur mare m'edo an traou o trenka enni. An dispac'herien a rae freuz, a laere, a zismantre pep tra. Edo ar vro o vont da goll. Neuze eo e teuas Mussolini, eun den a benn, n'en doa aon rak netra, hag a lakeas urz en traou. An dispac'herien a en em guzas, rak kavet o doa o mestr, hag abaoe ez eus urz en Itali. Met mar deus urz, tamm liberte ebet eus mui. Ar re holl a zispall da Vussolini a vez kroget enno ha taolet er prizon, pe c'hoaz kaset da enezennou Lipari e kreiz ar mor Mediterrane, Mussolini a zo sikouret gant tud dibabet gantan, hanvet fasisted, eur roched zu ganto, hag a ra kement a vez gouleinet diganto. N'e ket hepken gwazed, met ive merc'hed, bugale zoken, a zo e armead Mussolini. Gwelet em eus, e Rom, mec'hedigoù, gwisket e du, o vont dre ar ruiou, e renk evel soudarded. O doue eo Mussolini : evitan int prest da vervel. Ha Mussolini a ra d'ezo prezegennou evit o entana; ezomm en deus d'ober evelse evit derc'hel e garg. Ar pezh a zo fall ha riskus bras evit ar peoc'h, eo ar prezegennou diskiant a ra d'ar fasisted bep gwech ma kav tro. An Itali, emezan, a zo bet kouezet en eur renk izel meurbet, abalamour n'eo chomet re bell heb ober brezel. Eur vro ha ne gar ket ar brezel a zo eur vro o vont da goll. Ar brezel a zo henvel ouz ar goell a vez laket en toaz evit ober d'ezan sevel. Ar brezel a ra ar poblou krenv, ar brezel a zeu a-berz Doue, rak anez ar brezel ar bed a vije kollet gant ar vreinadurez.

Hag en deiz a hirio an Itali he deus eleiz a dud yaouank ha ne c'houlennont nemet mont d'ar brezel, mervel evit an Itali, kreski brud ha galloud o bro, ma vo adarre an Itali, evel gwechall, mestrez ar bed.

Tud evel ar re a zo hirio e penn an Allemagn hag an Itali, e penn ar Russi, a zo da deurel evez outo, riskus eo evit ar peoc'h ar pezh a-reont hag a lavarent.

Penaos ez eus c'hoaz war an douar tud da garet ha da c'hoantaat ar brezel ? Ar pezh a zo bet gwelet epad ar brezel bras a deuse distrei diouz hevelep sonjou kement hini en deus eun tamm kalon en e greiz. Beza laket epad pevar bloaz soudarded keiz da veza dindan an douar, e toullou leun a fanik hag a zour, a skorn epad ar goanv, beza graet d'ar zoudarded mont war soudarded all d'en em ganna, d'en em laza evel loened kounnaret, beza hadet dre an holl vroioù kaon ha gla-c'har kriz, lezet e pep lec'h intanvezed hag emzivadeg diniver, beza rivinet an holl vroioù, piou a c'hell rei meuleudi da hevelep traou ? Den ebet, mar deo e gwirionez eun den. Ar brezel a zo eun dra spontus, euzus, hag en he fedennou an Iliz a c'houlenn digant Doue kas pell diouzomp ar vosenn, an naomegez hag ar brezel.

Abalamour da-ze e tleomp meuli hag harpa eus hor gwella ar re holl a labour evit ar peoc'h. Kement hini a zo bet e penn hor bro abaoe ar brezel bras en deus en em roet d'al labour-ze. Ha war ar poent-man Herr ot n'eo ket dishenvet diouz ar re all. Hen eo en deus lavaret, n'eus ket pell, e kuzuliadeg Lausanne : « An hini a gomz ouzoc'h a garfe gwelet o vont doun en hor spe-red hag en hcr c'halon ar gerioù kaera a zo bet lavaret biskoaz : « Peoc'h war an douar d'an dud a volonté vat ! »

Ar gristenien katolik eus pep bro a dle pedi evit ar peoc'h, hag ouspenn-ze, en o c'homzou, en o skridou, diskouez karantez evit an holl. Ra lezint a gostez ar gerioù flemmus a ro poan da glevet; ra ziskouezint fi-zians an eil en egile, ra vezint prest d'ober vad an eil d'egile pa c'hellint, ha ma rafent holl o dever e pep lec'h, e virfent ouz ar brezel da zont. Henez eo brasa menoz ar Pab ne ehan da labourat evit ar peoc'h, hag a garfe gwelet holl bugale an Iliz unanet etrezo dre liammoù ar garantez ar vrasa.

Pegen brao e vije beva war an douar, ma vije kaset kuit evit mat ar brezel, ma vije barnerien evit barn ar broioù evel ma zeas evit an dud ! Pa vez diemgleo, e lec'h ober brezel ha laza tud, e tlefed mont dirak barnerien leal, eun, ha senti-ouz ar varnedigez a zougfent.

Pedomp evit ma teuo dizale an amzer-ze. Y. U.

Perig hag Azilis

Er mare-man p'eo hir an noz, pa vez aet ar yer d'o glud hag ar pemoc'h d'e graou, e sarrañ klôz an nor hag ar prenestr, hag e choman eur pennad ouz an daol, pe e-kichen an tan, a-raok mont d'am gwele.

— « O va zintin, e lavare Mari, en deiz all, c'houi a dle beza inouet hoc'h-unan! den ebet da varvailhat ganeoc'h!

— « Inouet? emeve, n'anavezan ket ar c'hlenved-ze! Va zammou dilhad a gempennan gwella ma c'hellan diouz an noz; met ne c'heller ket beza ato o c'hriat; ar spered a rank kaout boued ha dilhad ive, ha n'am eus nemed ar pennad amzer benniget-ze de brederia outan. Gant pebez hast e lakan va lunedou, war va fri, evit lenn eur bajenn bennag eus « istor Breiz » pe eus « buhez hor Zalver J.-K. », pe c'hoas evit skriva, war ar paper gwenn, ar pezh a dro em spered, pe eun danevell bennag klevet gant ar dud. A-wechou e teu tud da reketi noz-vat da Anna goz; neuze e vez lorc'h ennon, evel just, hogen ne gavan ket diaes pa chomer heb dont.

Disul oa bet Per hag Azilis ous va gwelet: diwarbenn eur bern traou ez eus bet hano ganeomp! Perig en deus diskleriet d'in an doare da gaout em diorzic, patatez, kaol, frouez hag all; Azilis he deus merket d'in penaos he devoa graet an dra lipous he devoa aozet deomp abenn ar pardoun, ha gand aoun d'hen ankounac'haat hel lakan ainan raktal:

Kemerit pevar pe pemp vi, dispartiit ar gwenn diouz ar melen; basit ar gwenn; lakit da deuzi war an tan, en eur loiad dour, diou follenn « jelatine »; silit i, gand aoun na chomfe pouloud ebarz; a-raok o c'hemmesk gand ar gwenn-vi; eur podadig konfitur ruz ho pezo toueziet ive gand ar gwenn: neuze o lakeoc'h holl en eur « mouli », da lavaret eo en eur skudell pe en eur volenn ma n'eus ket a « voullou » all; red eo, avat, frôta eol oüs eun tamm paper hag hen lakat da c'helei fons ar « voull » ha tro-war-dro, dirodella ma c'heller. A bean antronez e vezo kaledet ar gwenn-vi: aes e vezo distaga

ar gouig ha brao e vezo da welet, war ar plad, e-kreiz an daol. Gand ar melen-vi ho pezo graet lipig mat da lakat endro. Al lipig-ze n'eo ket diaes d'ober, war an tan, gand eur banne laez dous, hag eun tammig sukr, nemed arabad eo e lezell da virvi petramant e tarsze. Grit an esa, ha me lavar deoc'h e lipoc'h ho mizellou!

C'hoas he deus lavaret Azilis d'in, ez oa hano da Vorris ar Stang da zimezi gant...

— « Gant Oliv? emeve.

— « Nann! tintin Anna; gant Sylvin a Gerandraon!

— « Evelato! emeve, n'eo ket kollet e skiant-vat gantan? o vont da derri e c'houzoug eman, kouls lavaret! eur plac'h diempenn! bleo fuilhet dezi! gwisket evel trullienou Paris! ha n'oar nemed sutal ha dansal! Kouls eo dezan mont gant Janed!

O welet pegement a zroug a oa ennon, Perig a lavaras:

— « An traou-se, va zintin, n'int marteze nemed inarvailhou toull, ha n'ouizouñ ket penaos eo et va hini goz d'o c'honta deoc'h, hi ker fur!

Met, Azilis, eun tammik kirius en deiz-ze, evit doare, a respontas:

— « Re vuan em eus komzet, marteze, Per, rak n'eo ket skrivet an embannou, met hano a zo gand an dud, n'hen nac'hi ket! Ha brema, livirit d'in, c'houi tintin, eus pe seurt Janed hoc'h eus lavaret hano?

— « Ar Janed-ze, va nizez, a veve war an douar gwechall-goz; eur benzodenn oa, ma 'z eus bet unan, hag abaoe e vez hanvet, evel eur c'hrenn-lavar, pa vez c'hoant da gomz eus eur vaouez dister. N'az peus ket klevet da donton Hamonig o konta he buhez d'comp-ni, du-ze? nann, o prederia gand an holl draou edot en dervez-ze, n'edot ket a-spered gant marvailhou Hamon!

Istor Janed

Eun dervez e voe kaset Janed d'ar foar gant he mamm intanvez, da werza ar vioc'h koz.

— Pegement a rankin kaout eviti, mamm?

— N'he lezi ket a vihanoc'h eged c'houec'h ugent lur; ro hi pelloc'h, d'an neb a lakai d'id ar priz uhela.

— Mat, emezi, hag hi d'ar foar gant he bioc'h; Pa

voa en em gavet war ar blasenn e tôteas eun den da zellet ous ar Penn-Gwenn:

— « Petra 'z peus c'hoant da gaout eviti? emezan.

— « N'her roin ket a-vihanoc'h eged c'houec'h tigent lur, eme ar plac'h.

— « Me a roio kant lur d'it, dichipot, eme ar prener.

— « Gwell a ze avat, eme Janed; va mamm a vo lorc'h enni, rak lavaret he deus rei ar vioc'h d'an neb a gin-nigje ar priz uhela.

Eur paotr yaouank, eur farser, a gleyas ar marc'had; sevel a raes war ar c'hleuz, eur billed hanter kant lur hag eur pez a zek lur gantan en e zourn hag eur pez a zek lur hag a bouez e benn e youc'has :

— « Ar vioc'h a zo d'in neuze emezan! rak ganen eman an uhela priz, p'e gwir emañ war an uhel! Hag e kasas ar Penn-Gwenn gantan, ha Janed a gemeras hent ar gêr, laouen, rak kaout a rae dezi ha divije menleudi digant he mamm. Siouaz! bazadou a bakas ha netra ken!

He mamm a fallgaloune, petr rafe 'ta ? intañvez oa, n'he devoa nemed eur verc'h, ha ne c'helle fiziout seurt enni!

— « Petra rin gant hounnez? ne gavo morse gwaz ebet! daoust ma n'int ket holl re fin, n'eus hini ebet sôt a-walc'h da vont ganti! »

Fazia rae! Fanch an Dall en devoa kemeret re vras atan dioutañ! edo arru war e benn d'an traon rak dle en devoa — p'en em gavas d'ober anaoudegez gant Janed; er c'hafé oa bet diou wech ganti; n'her c'have ket eur vaquez dreist, met pennherez oa, ha peadra he devoa ive; « gras ar briedelez a lakay eun tamm skiant en he fenn! emezan ». A bep seurt digareziou a glask an den evit kacut arc'hant, ha Fanch a yeas da c'houllenn Janed da bried!!!

D'ar zul war-lerc'h, mamm Janed a lavaras d'he merc'h, a-raok mont d'an oferenn-bred:

— « Kleo 'ta Janedig? hizio e teue da hini koz aman gand e dad; deiziet e vezo da friko; poagn eta d'aoza eur pred mat dezo; bez war evez eus ar zoubenn; laka ognon, karotez, kaol hag a bep seurt er pôd; gra eur guc'hennig krampouez; an tamm kig-man a zo da deurel er gaoter.

re vihan eo, met gant neubeud ouspenn e vezo a-walc'h.

Ar vamm gêz ne zonje ket pegen diot oa he merc'h! « Neubeud » oa hanô ar c'hi, rak n'oa ket bras an tamm anezan; ha kerkent m'he devoa troet kein, e krogas Janed er c'hi hag hen taolas en dour bero!!!

Goude, avat, e kabatas d'ober krampouez, da gempenn an ti hag an daol, da zerc'hel tan dindan ar pod!

P'en em gavas he mamm er gêr, gant Fanch hag e dad, e sellas ous an daol, ous an tan, sevel a reas golo ar gaoter... hag e laoskas eur griaden: « O ginaouegez m'az out! petra az peus graet? an dro-man avat e chomi plac'h yaouank koz! »

Fanch, tenval e benn, ne lavare gêr abed; met abenn eur pennad, en em zilas er maez; an hini koz a yeas war e lerc'h, hag an eil hag egile a stagas da huanadi; Fanch a skrabas e benn:

— « Ret eo d'in ober freuz, va zad, ha koulskoude em eus keus d'an arc'hant, ma n'am eus ket d'ar vaquez! Klask a rankan e lec'h all, evit sotoc'h eviti ne gavin ket! ma ran, ma kavan diou all ker sot hag hi e tisroin daveti! »...

— Lezomp Fanch da redet bro, hag e dad da ouela d'an arc'hant, emeve, ha lavar d'in, Azilis, ma n'eo ket gwasoc'h da Voris mont gant Sylvain eged n'oa da Fanch mont gand Janed? eur vaquez ha ne ra nemed ardou, ne zonj nemed enni he-unan, ha fall da labourat!

— « Mat a-walc'h a livirit, eme Azilis, ha m'her gwella warc'hoaz e rin eun tamm prezegenn d'ezan; ma karfe dont ebtege ennoc'h goude, e vijemp barrek anezan, a gav d'in. Hogen, al loar a zo savet, diwezal eo, deomp d'ar gêr, va mignoun, emezi, en eur lakat he dourn war skoaz Per. N'eo ket inoui a reomp, bezit dizoursi! plijadur hon eus bet o klevet istor Janed! c'hoas e c'hoarzin pa zonjin enni! ha mall am eus da glevet ha diskiantoc'h egeti a zo war an douar! »


— « Arabad eo d'id o c'hlsk e Breiz, nizez koant! emeve.

Hag e wellis an daou bried o vont asambles, en noz steredennel; hag e sonjis eun daeraouenn ous va malvennou: « Ma vijen bet mamm, e karfen beza bet daou vugel henvel ous ar re-ze, skouer ar barrez e pep doare ha koant evel an deiz. »

TINTIN ANNA.

Gien Buzig

E maner Lesnarvor, e parrez Plovan e oa o chom gwechall, eun dijentil pinvidik hag a oa piz mat. Eun amezog en devoa hag a oa o terc'hel tiegez e Pengleuziou: Gien Buzig; alies e veze e ti henman rak gwreg Pengleuziou n'oa ket eun all e



Maner Lesnarvor e Plovan

Kerne da c'houzout ober krampouez gwinniz-du koulz hag hi. An Aotrou a ouïe mat pe zervez eus ar zizun e veze lakat ar billig war an tan; en em gaout a rae atao d'an eur hag, heb ezomm d'e bedji d'eu wech, ec'h azeze ouz taol; eun dousenn grampouez amanennet teo n'oa ket re evitan; eur skudellad laez kaoulet a'z ae gantan d'o souba hag eur wech debret e bred, e ouïe kaout komzou

kaer da veuli ha da drugarekaat ar grampouezez hag ez ae achano laouen bras da veza graet eur pred mat ha marc'had mat.

Gien n'oa ket eun den ker sellus-se, sur a-walc'h, ha plijadur en deveze o klevet meuli e wreg, met, evelato en divije karet klevet e amezog ouz e bedji da vont, eun dro bennak ivez, d'er maner, da leina rak an Aotrou ne rae ket a c'hoap ouz e gof-ha n'oa ket fall azeza ouz daol.

Kemeret hep rei

A lak ar garantez da drei.

Gien eta, dre gomzou goloet, da genta, a glas-kas lakat an Aotrou d'e bedji da vont d'e di; henman avat, ne reas ket eur van evid e glevet. Eun dervez, evelato, Gien o welet e rae atao skouarn vouzar e amezog a lavaras d'ezan ken didroidell ha tra: « Mont a rankin, eun dro bennak ivez, avat, Aotrou, da danva ho keusteuenn ! »

— « A ! ya ! ya ! satordallik, eme an Aotrou, pa giri, avat, Gien ! deus, eun dervez bennak ! »

Bep wech, siouaz, ma tigoueze d'ezan mont d'ar maner, digor e skrin, an Aotrou ne veze ket e tro d'e zigemeret; gwech en deveze kemeret eur spurj hag e ranke chom hep debri, gwech all en deveze ezomm da vont da Gemper pe da chaseal ar penmoch gouez da Gerveal gand e vignon an Aotrou Tremenec: « Divezatoc'h e teui ! » a veze lavaret d'ezan ha Gien a ranke distrei d'ar ger, mezok.

Eur zulvez, goude m'oa distroet eus an oferenn-bred, Gien a oa goullo e gof hag a zonje en divije graet lein ar maer kals vad d'ezan: « Mont a ran da leina da Lesnarvor, emezan, d'e wreg, en eur lakat e chupenn gaera, ha, d'han Doue! me c'houlen beza pulluchet gand ar gurun ma n'hellan

ket kaout eul lein fetis digant ar bizied ar gernez-se a zo oc'h ober goap ac'hanon eur pennad a zo!

Ha setu Gien en hent, mar gouie. Digouezet er maner ec'h en em rinklas, evel eur zilienn, ha ken didrous ha tra, betek prenestr ar gegin a oa korn-zigor. Kuzet gand eur vodenn iliavrez e c'hellas-chom eno da zellet ha da glevet petra dremene en ti hep beza gwelet e-unan.

Azezet ouz taol, an Aotrou a oa o toulla eur chapeledad silzig gand eur spilhenn. En he sav en e gichen, e wreg a oa oc'h aoza eur gouignenn. Azezet e korn an aoled, ar geginerez a oa oc'h ober eur c'hempenna diweza d'eur c'hillog lart a-raok e lakat ouz ar ber hag, en he c'hichen, eun hanter penn penmoc'h a oa renket brao war eur plad da c'hedal ma vije fomm a-walc'h ar fourn vaen a oa e korn ar chiminal evit poazat ha resti ar c'hig a laked enni.

Gien a glevas neuze an Aotrou o lavarout d'e wreg:

— « Mac'harit, acun am eus na gouesfe war-nomp, breman, ozac'h Pengleuziou; ma welfe ar pezh emamp oc'h aoza d'hon lein e klaske kaout e zigoll evid ar c'hrampouez gwiziz du c'houero hag al laez tourgouilh am eus bet kemeret a-wechou en e di. Penaos e rafemp a c'hoarvesfe gantan d'out aze a-daol trumm? »

— « N'ez peus ket ezomm da veza nec'het, eme ar wreg; ne vezimp ket pell evit kuzat kement tamm kig a zo aze; kerkent ha ma vezo klevet Gien o tont er porz e laki da zilzig aze, e diretenn an daol; me a-azezo war va zoaz; Fant a daolo he c'hilhog er c'hrouf hag a lakaio eur bodez da c'hellei ar penn penmoc'h ha Gien, an *dr'han Doue* genaouok zanezan, n'en devezo gwelet netra! »

Gien, goude beza klevet an diviz penn-da-benn, a en em zilas gouestadik, er maez eus ar porz; rak-

tal e voe klozet an traou evel m'he devoa lavaret an itron a p'en em gavas ar c'houer er gegin e kavas dirazan tri den nec'het o klask gouzout petra da ober eus o amzer:

— A! mignon paour, eme an Aotrou o tislevigen, mat a-walc'h ez peus graet dont davedomp hizio; o varvailhat e oamp o c'hortoz an eur da vont da leina da di an A. Lezonnet da vaner Penkelennek; ro d'eomp da anaout an nevezentiou diweza.

— Nevezentiou? evidon-me n'anavezan ket kals a nevezentiou, eme C'hien, oc'h harpa e ilinou ouz an daol, nemet konta a rafen d'oc'h an abadenn a oa degouezet ganen, en deiz-all, pa can bet o trouc'ha brouan e geunioù Kerwenn.

— : Ya ! ya ! lavar d'eomp petra a oa en em gavet ganez.

— : C'hoarzin a reoc'h marteze, met evidon-me neuze n'em oa ket kals a c'hoant c'hoarzin; komprenit p'edon o treuzi gwaremm an Nedelec, e kichen ar vilin-avel, e lakis, heb e zonzal, va zroad, war eun naer, eun naer-viber, hir... hir... ya, n'em eus ket a acun o lavaret, avat, e oa keit hag ar chapeledad silsig magedet a gavan aman e diretenn an daol.


Ann aer lous-ze am flemmas em gar ha gwasa pezh a oa, n'edo ket va fenn-baz ganen, met o sellet en dro d'in e kavis eur pikol maen kement hag an hanter penn penmoc'h a zo dindan ar bodez-se, ha me em c'hounnar ha kregi er maen-se d'her stlepel gwella ma c'hellen war an naer a voe ker pladet he c'hof d'ezi hag ar gouign m'eo azezet an itron warni. Mat an dra-se a zo ker gwir ha ma 'z eus p'emp biz ouz va dorn ha ma 'z eus eur ger gaou er pezh a lavaran e c'houlennan beza displuet eus kern va fenn betek beg va zreid,

evel ar c'hilhog bras-man, sellit, a zo laket er
c'houfr-man da yena !

Dre ma koinz eus ar meuziou mat edod o vont
da aoza da lein, Gien o lake war an daol an eil
goude egile, nemet ar gouignenn, evelato, houn-
nez ne gredas ket he zenna eus a zindan an itron :
tud ar maner a goueze o meudig en o dourn : hini
ne grede ranna ger ; abarz ar fin, koulskoude e
tirolljont da c'hoarzin o fevar, gwalc'h o c'halon :

— Te, eme an Aotrou, ma n'out ket eur sorser,
a oa eze bremaik ouz hor selaou ! anez da-ze
n'ez piije ket gouezet ar pezh a ouezes ! Eur paotr
a spered out. atao, da vihanan, ar pezh a zo sur
ha pezh gwir ez peus gouezet ker brao dineizia
d'eomp hal lein, n'ez peus nemed eun dra da ober :
choin d'hen debri ganeomp, bremaik pa vezo prest.
Alo ! Fant ! gra tan aze dillo er fourn, ha laka
da gilhog ouz ar ber ma vezo dare lein ganez
ahenn ma sono taol kenta an Angelus. Da c'hortoz,
Gien Iuzig, d'eomp d'ar c'hav da welet ha ni 'gavo
eur vouailhad win koz bennak rak c'hoant am eus
e talc'hfes sonj edoug da vuhez eus al lein genta
az pezo debret e Lesnarvor.

G. P.



O sonjal en anaon

Ar Maro, gant e hent, tiz bras warnan, a gerz,
Bale ebet ne voulc'h e nerz ;
Noz deiz, war an douar, gantan savet e vrec'h,
Ez a d'an traon, e pign ouz krec'h.

Sentus ouz mouez ar Mestr, e peb amzer, e falc'h,
Ha morse ne lavar : « A-walc'h ! »
Ha, dindan e venveg, a bep liou, beb bro,
Bandennou tud a gouez diouz tro.

En e hast dibaouez, ne zouj nag oad, na stad :
Ar bugel a samm gant an tad,
Hag araog ar vamm goz, aet he bleo hir da erc'h,
En he bleunv, e tibrad he merc'h.

Ar maezjou s'oul gantan a vez eostet d'ar red,
Touzet a-dreuz, touzet a-hed ;
Ha dont a ra ivez a-benn euz ar c'heriou
Kuzet a-drenv o mogerio.

Mab Doue, war ar groaz, gourvezet en hor plas,
En deus santet e bokou sklaz ;
Ha Mari, deut he eur, 'vel he Mula-karet,
A zo bet gantan diskaret.

Poblou d'an traon a gouez, stank egiz an deliou,
Pa sailh warno an aveliou ;
Met, siouas ! pet bennag, en eun niver ken bras,
'Ma o eneou e stad a c'hras ?

Me ivez a gouezo, em lec'h ha d'am mare,
Ha penaoz ? Me n'ouzoun dare ;
Evelse, ra bedinn, ra veilhin, da veza
Prest evit an eur ziweza.

J. L'H., O. M.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz Here :

An dimezell Janig ar Meur (eil prenadenn) 1
 An A. J. Normand, Kerdro, St-Thégonnec..... 1
 Leoriou rakprenet betek-hen : 972 + 2 = 981.

Gant he rakprenadenn, J. ar Meur a zegas d'eomp al lizer-man :

Plistin-an-Trez, d'al lun 26 a viz Gwengolo 1932.
Aotrou Person,

Kas a ran d'ec'h an draig vihan-man da lakat en ho kelaouenn mar hen c'hav it dereat :

Ar c'haz bihan hag ar c'hi bihan

— Petra ' zo kiriek d'ar gwenan
Da zoni d'am heul ? me 'r c'haz bihan.

Sur a-walc'h ar pezh ' zo kaoz
Eo m'oun henvel ouz eur bod roz.

— Ya ! roz a laran, eme 'r c'hi
Ar vatez ' lare ' skuba 'n ti :

— Ar c'hoz kaz en deus adarre
Graet kramponez dindan ar gwele
Va skubellenn ' dorrin warnan,
Lez-hen, hardi ! mar hen tapan !
Ha m'ema 'r gwenan war da zeul,
Stregedout : glaskont ouz da heul.
N'ez peus ket ' zonz pelec'h out bet
O klask koavenn e lec'h n'oa ket
Er mel out bet fri ha mourrou
Hep torcha goude, da c'henou !

J. AR MEUR.


Degas an hanotou d'an A. Perrot, Renec Feiz ha Breiz,
Scrignac (Finistère) ar re o deus c'hoant da brena al leor
a-raok ma vezo moulet: degas an hano heb an ar hañt.

BINIOU MATULIN AR ZONER KOZ

*D'am mignon mat Herve ar Menn
e-kinnigan ar pennad-skrid-man a
greiz kalon.*

Eur zulvez, e miz mae diweza, e oamp bodet hor
pemp e « Ti-Yann Henvic » en dro d'eun daol hag e oa
warni pemp picheradig chistr eus gwella-chistr a zo e

Breiz. Laouen e oamp
o c'hellout en em vo-
da ken etrezomp Bre-
toned harluet er Ger-
Veur, rak e ti Yann
ec'h en em gavemp
eun tamm, evel er
ger.



Edomp dres o komz
eus dansou ha soniour
Breiz-izel pa zigoue-
zas en ti, Matulin, ar
soner koz, evel m'hel
leshanvemp, gwisket
e glazik gand e viniou
en e visac'h. War

c'hed e oamp da glevet gantan toniou ar vro ha setu
perak her pedjomp da azeza ouz taol hag e lakejomp
degas d'ezan ivez eur picherad chistr.

— : Gant plijadur, kenvroiz, eme Vatulin, eo e tis-
tagin d'ec'h soniour kaera Breiz-izel.

— : Diskouez aman da viniou, a liviris d'ezan, p'en
devoe gletiet e c'hourlanchenn.

— : Dioc'htu, sell! ha Matulin a dennas eus e yisach e viniou kruvet ha duaet gand an amzer.

— : Setu ar benveg burzudus! emezan, laouen.

Gwelet hon devoa meur a zac'h biniou all a-raok henman, met hini Matulin n'oa ket henvel ouz ar re all, war unan eus e gosteziou e oa eur pensel:

— Petra eo an dra-ze 'moun-me, o tiskouez gant va biz, an tamm ler a oa bet ranket spega war ar zac'h m'oarvat evit stanka eun toull bennak:

— An tamm pensel-se en deus e istor ha n'eo ket da lavaret ho pefe amzer da jom d'e zelaou.

— Chom a raïmp d'az selaou, sur a-walc'h, 'moun-me, o tiskarga d'ezan eur picherad all a chistr.

— Trugarez! eme ar zoner, ha Matulin goude Leza skarzet e c'houzoug, laket e dck ouz kostez e benn, hag e zaouarn etre e zivesker, — evelse eo ec'h en em lakae atao p'en deveze eun dra bennak da gonta, — a stagañ gand e istor: Kenvroiz, gouzout a rit e karan kals ar biniou-man ha gouzout a rit ivez peger brao e koroll gantan korollerien Bretoned Paris...

O soubla hor penn e tiskouesjomp d'ar marvailher e kavemp e oa gwir ar pezh a lavare ha Matulin a gendalc'has:

— Mat va biniou en deus e istor hag an tamm lersa a welit speget aze a zo eun tamm kroc'henn aer-viber eus gouenn ar gwas a aered a zo er bed; pa guitañs Breiz-Izel evid ober tro ar bed war an « Tourville » e oa tenval va fenn, e c'hellit kredi, ha, koulskoude, c'hoant gwelet traou a-bell am oa ha karout a raen ar mor. Gouzout a raen e spegje klenved ar gêr en-noun hag e kasis ganen va biniou. E c'hellit kredi, e kavis war al lestr eur genaouok bennak da c'hoarzin d'in, met n'oa ket nec'het gand an dra-se. Edomp o vont d'an Indez. Eur wech digouezet e porz Yanaon e chomchomp eno epad eun nebeud sizunvezioù; eun dervez, eur c'hamarad ha me a c'houlennas diskenn

d'an douar bras, hag ez ejomp da ober eur bale er c'hoajou tosta da gêr.

— Ha ma kasfen va biniou ganen, 'moun-me?

Va c'hamarad a vouse'hoarzas, hep lavarout na ya, na nann, met mat em oa graet kemeret va benveg. Edomp o kerzet war lez ar ster Gadavari, laouen da c'hellout hale, gant hor c'habestr war hor moue; kemeret a raemp plijadur o strinka war an dour eun toulladig bili koat a oa deuet ganeomp hag o selaou laboused ar broiou tomm da gana:

— Na pebez bro gaer eo houman a lavaras va c'hamarad o welet gwez ha labouset an Indez, ha na peger brao e vije chom da veva dre aman!

— Azezomp eur pennad, e dishecl ar gwez bras-se!

Va c'hamarad a dorras eur skour korz hag a c'houlennas ouzin:

— N'ez peus ket eul las hag eun higenn da staga ouz ar vaz-man ma welimp ha pesked a zo er Gadavari:

— Gwir a-walc'h a leveres; me gred eun eus tra pep tra ha ni da azeza er geot hir da renka hol linenou.

Ken dibreder ha tra e oamp eno hon daou pa welis eun dra hir bennak ha troïdellus o lakat ar geot da finval ha kerkent daou bik rus a skedas dindan ar wezenn desta d'eomp: eur pikol aer, hir ha du, eur c'hobra, a zave e benn etrezek ennomp, eun dek troatad bennak diouzomp.....

Va c'hamarad, a welen o klask sevel en e zav da dec'het ac'hano; en aoun da veza gwelet gand al loen lous a oa dirazomp e stardis e zourn d'ezan ar pezh ma c'hellis; ar paotr paour n'oa ket evit gouzout pegen danjerus e oa finval pa c'helle an aer, en eul lamm koueza warnomp; lakât a ris va ivinou da zanka en e zourn hag e komprenas ar pezh a c'houlennan digantan hag e chomas hep finval. D'ar genta finvadenn hon divije graet e vije bet sailhet al loen hudur-se

warnomp, e lec'h e vije bet aet kuit, marteze, ouz hor gwelet oc'h ober ar maro bihan. Ar fizians-se hon devoa, met, en eun taol, setu ma weljomp eur c'hobra all o sevel e benn eus a douez ar geot, harp em c'hamarad ; gwenn e teuas da veza hor pennou d'comp hon daou evel pennou tud varo hag hon daoulagad dis-pourballet en hor penn gand ar strafuilh a oa eur spont o gwelet. Kredi a raemp e oa digouezet hon eur ziweza hag en em erbedi hon devoa graet ouz an Aotrou Doue da c'houlenn pardon outan eus holl bec'hejou hor buhez ; graet e oa ganeomp ; va c'hamarad a oa ker gwenn hag ar zae lien a oa warnan ; e zent a stlake en e benn hag eur c'houezenn yen a rede hed-a-hed e zivoc'h.

An daou gobra, lavaret e vije, o devoa c'hoant da lakat hor strafuilh da badout ha nec'het o devoa doare da veza o klask gouzout war behini ac'hanomp hon daou koezeza da genta ; o amzer a gemerent ; horjella a raent gouestadik o fennou hag e weled o godellad kontamm o c'houeza hag o tic'houeza.



En eun taol e welis va c'hamarad o serra e zaoulagad hag oc'h harpa e benn ouz ar wezenn ; doare en devoa da veza maro gand e aoun ; en hent-se, da vihana, n'en divije ket a ezomm da c'houzanv ar poaniou a deu warlerc'h flemmadenn an aered louis-se.

Va unan e oan chomet hep koll va

anaoudegez hag e peden an Aotrou Doue ha santez Anna da zont war va sikour ; a greiz pep kreiz e kave d'in e teue eun ene mat d'am skoazella : eul labous o tremen, d'ar red, a-uz va fenn n'oa ken !

An daou gobra, gand o daoulagad lemm o para warnoun, a vire ouzin da finval ; ma teufe unan anezo, da zistrei e benn diouzin e c'hellfen distaga eun taol mat gant va c'horzenn war benn egile ; diskiant e oa mont da stourm ouz loened evelse, gand eur benveg ker gwak all hag a dorje d'an distera taol a skojen gantan ; en hent-se, marteze, koulskoude em bije krennet va foaniou spouronus.


Laouen e vije bet ma m bije bet gellet koll va anaoudegez evel va c'hamarad ; va spered a jome ganen ha dirak va daoulagad e welen atao an daou benn aersse n'o devoa nemed eur c'hoant : va flemma !

Graet em ca le da vont war va zroad da zantez Anna ar Palud ma c'helljen en em denna, hep droug ebed, eus an toull fall-se m'oa kouezet ennan. Ne welen mui nemet liou ar maro war ar c'hoat m'edon ennan hag en eun taol, e teuas eur zonz d'in ; hep finval nemed an nebeuta ma c'hellen, e kasis beg va biniou d'am genou ; kaer em oa bet teurel evez, unan eus an diou aer a welas va finvadenn hag a zutas gant kounnar !


Ha me, ha mall e oa, ha staga da c'hoari eun ton c'houek ha dudius. An diou aer a jome sebezet ; ne gollen ket ar gwel anezo hag e kendalc'hen gant son va biniou da luskat al loened-se n'o deus nag eskell na treid hag a deu da c'henel eus ar viou evel al laboused.

Pennou an aered a welenn o vont hag o tont da heul an ton a c'hoarien ; o daoulagad n'oant ket ken ker rus na kel lemm ; o c'hounnar a goueze tamm ha tamm ; doare o devoa da veza moredet ;

er nos qou...
er nos qou...



c'hoari a raen atao an hevelep ton hag, en eun taol,



setu me a lamm war ar c'hobra tosta d'in, moustra azoare, war e c'houzoug hag e vouga; an aer a reas al lamm pe zaou hag a gouezas, war ar geot, maro-mik. An aer all a jome c'hoaz; e c'hellit kredi n'ean ket bet diou vunutenn oc'h ober he stalouz ar genta; an eil aer a oa moredet; evit beza suroc'h e c'hoartis eur pennadig all c'hoaz gant va biniou ha pa welis e oa kousket al loen fall e sailhis warnan hag her mougis evel ar c'henta.

Goude beza graet eur bedennig c'houek da drugarekaat an Aotrou Doue hag an Itron vat Santez Anna ez is daved va mignon. Lakat a ris va dourn war e hini da welet ha kerzet a rae c'hoaz e wad :

a drugarez Doue, buhez a oa ennan c'hoaz. Gand eur banne dour yen e wale'his e dal hag e teuas d'ezan e anaoudegez.

E c'hellit kredi n'hon devoa ket a c'hoant da jom wardio eno ken da glask pesked ; dizrei a rejomp e ker ha pa bignjomp war holl-lestr hepken ec'h en em gavjomp er maez a zanjer. Mat, paotred, an tamm pensel-se a zo eun tamm eus krœ'henn ar c'hobra; hien digaset em eus ganen evit derc'hel sonj met pa bleuistr va spered er pezh a oa digouezet ganen er c'hoat milliget-se n'oun ket evit mirout da grena!

Ha setu aze perak, paotred keiz e lavaran hag e liviria n'eo ket va biniou henvel ouz ar re all; saveteet en deus va buhez d'in!

Ha da gloza an istor, e liviris da Vatulin:

— Mat, breman, e komprenan perak e kares kement da viniou : ober a ra dudi an aered.

— : Ha dudi ar Vretoned, dreist-holl, eme Vatulin o peurlonka e bicherad chistr.

*Skrivet ha skeudennaouet,
gant an Alarc'h.*



KELEIER AR MIZ

Petra livirit eus an dra-ze?

War eur gazetenn c'hallek ha ne zempl ket he skriva-gnerien hep gaou a leveront ez eus bet klasket dispenn, en deizioù breman, sae an Tad Yvon, Bener mision bras Plougerne, dre ma lavare ez edo plas bugale ar gristenien er skolioù kristen :

« Kaer ho pezo youc'hal, koulskoude, a lavare d'ezan « mignon ar skolioù dizoue, ar gounid a jemo atao gand « ar C'houarnamant = war 4.800.000 bugel a zo breman « er skol, 4.000.000 a zo e skolioù ar C'houarnamant hag « 800.000 hepken er skolioù kristen. Petra livirit eus an « dra-se? »

Petra lavaran?

E rit, hep gouzout d'eoec'h, meulendi ar skolioù kristen. Gwechall pa oamp-ni en oad da vont d'ar skol ha pa n'oa skol dizoue ebet er vro, an holl virgale a oa hag a c'helle beza e skolioù ar C'houarnamant.

Breman ec'h anzavit ez eus 800.000 ha n'emañ ket. Pe war goll pe war c'hounid ez a eta skolioù ar C'houarnamant? Me' lavar ez eont war goll.

Ha ma 'z eont war goll, daoust pegen harpet int e pep giz, petra zigouesfe ganto eta ma vefe graet d'ezo ar pezh a raer d'ar skolioù kristen, ma ne rofed ket eur gweneg na d'o sevel na da baea hini eus o mistri?

Breman ne 'z a ket kaer an traou ganto, met, neuze, da vihanan, e vijent gwelet, hep dale, o koueza en o foull an eil goude eben.

Ya! tudou keiz, — c'houi hag a zo dizoue, war ho meno, — m'ho pijs ranket, gant hoc'h arc'hant hoc'h unan, sevel hag harpa ho skolioù dizoue evel ma rankomp-ni sevel hag harpa hor skolioù kristen, pell a zo, ne vije ket bet hano anezo; met savet int bet d'eoec'h gand arc'hant dastumet diwar goust an holl, gand arc'hant tud

hag an darn vrasa anezo n'o deus bet c'hoant ebet biskoaz : ez afe ar gwenneien o devoa gounezet diwar boan o divrec'h da stourm ouz Doue. Hag ez afech c'hoaz d'ennem veuli eus ho skolioù ? En ho plas me' rofe peoc'h rak,

Gwella mevel.
Eo tevel.

Savomp beleien nevez ! Red eo !

E Gwened eo bet graet, e hanter ar miz tremen, *kendalc'h ar sevel beleien* ; eur c'hardinal, hini Lyon ha pemzek eskob bennak a oa en e benn.

N'eus ket hanter a veleien ken diouz an ezomm a zo evit derec'haj ar feiz en he sav hag he takat da skedi evel m'eo dleet e rafe : setu, aman, war gement-se, eme unan eus skrivagnerien *Semaine Religieuse* Gwened, eur brezegenn berr ha c'hourek, klevet en hanter tremen, hag e c'hellfe hon lennerien tenna talvoudegez anezi :

Va breudeur ker,

Breman ez eus hanter kant vloaz ne oa ket eur penn-kris'en en eur vro, eus an Afrik, hanvet an Ouganda ; beleien eus ar vro-man a zo bet aet di ; ar bayaned a zo bet badezet ha kristenet ker mat int bet ma 'z eus breman 300 faotr yaouank er c'hloerdi bihan ha 70 er c'hloerdi bras.

En hanter kant vloaz diweza-man ivez ho parrez kristen a zo bet kaset beleien d'ez, met ho parrez hag a zo 1.500 den enni n'he deus roet, 50 vloaz a zo, beleg ebet en holl d'an eskopti ; dizale eta e vezo ret d'an Ouganda digas eur beleg bennak dre aman d'ho kelenñ war gwrioneziou ar feiz, rak me a zo koz hag, e c'hellit kredi, ne badin ket atao ! ya ! eur beleg du a ranko dont du vadezi ho pugale, da venniga hoc'h eureujou, d'ho kovez ha da c'houarn ho parrez...

Ar gwiragez hag ar merc'hed yaouank a zo ouz vu-selaou a c'hell kuzat o fenn en o brennidenn da c'hoarzin kement ha ma kirint, met re wir eo ar pez a lavaran : Ya ! ya ! ma kendalc'h an traoù da vont, evel ma 'z eont breman, e vezo ret d'ar veleien zu dont dre amañ do skigna ar feiz evel ma 'z eo ret d'ar zoudarded zu dont da zifenn harzou hor bro ouz an Alamaned.

Kaeroc'h gras eget honnez a garfen beza bet da rekeli d'eoc'h. en hano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel, Evelse bezet graet !

Tadou ha marimou, klevit klemmou an Eskibier ; klevit klemmou ar parrezion o vervel ; roit danvez beleien d'an Iiz ; eur beleg, a vez beleget, koulz lavaret er gêr ha war barlenn e vamm.

Ma vije komzet atao eus ar veleien, dirak ar vugale, gand an doujans a zo dleet, e vije kavet danvez beleien a-walc'h er vro. Biskoaz, n'em eus klevet dispenn eur beleg en ti kristen m'oun bet savet ennan ; ma 'm bije bet graet, eur wech hepken, n'eo ket da lavaret e vijen bet beleg breman. Doue a daol, hep bloaz, had beleien a-walc'h e kalonou ar baotred vihan ; ma ne ziouanont ket, hanter amzer, an tadou hag ar mammou, dre jom hebreurel evez outo, eo o flastr liag o moug.

Kerent kristen, lakit ho pugale da zouja ha da garet ar veleien ha, neuze, gand meur a hini anezo e savo c'hoant da vont da veleg.

Y.-V. PERROT.

AR BREZONEG E BREST

E Feiz ha Breiz ar miz a zeu e vezo kavet eun diverra eus ar studia-lenn dalvoudus en devoa graet an A. Tre-guier, kelenner e skolach Sant Loeiz, e Bleun-Brug, Brest.

Divinadennou miz Du

I. — D + w + r g + k +, d + w + r g + z, k + z.
 D — w + r l + g + d n + v + z + k + t + r + z.
Lakit en diou werzenn-se ar vogalennou a vñnk.

II. — Kichen du-man 'z eus eur maner
 'zo-dionallet-mat ouz al laer,
 Ha n'eo ket gand eur c'hi eo c'hoaz,
 Me' laro d'eo'h goude warc'hoaz.
Degaset gant Tanguy Creignou, Cleder.

III. — Pegement e kousto triouec'h sardinenn, eur
 gwenneg hanter ar zardinenn hanter.
Degaset gant M. A. Moat, Kerfrevat, Tregarvan.



IV. — Boparz, leaner
 bihan *Feiz ha Breiz* a skr
 eul lizer d' « ar Breur
 Bras ».

E pelec'h ema e bod-liou
 gantan ?

V. — Janig a ouel o veza
 m'he deus kollet korn bu-
 tun he zad koz; kemerit
 truez outi ha livirit d'ezi e
 pelec'h ema ar c'horn.



Ni 'zo en tan hag en anken.
 Tan dindannomp, tan war hor penn,
 Ha tan war lae, ha tan d'an traon :
 Pedit evid an anaon !

(Kanaouenn an Anaon, Barzaz-Breiz).

Eur ger d'ar merc'hed bihan

Eun neubeud miziou a zo, unan eus hol lennerezed a skriva
 d'eomp e oa eur Vretonnez zihun; an Aotrou 'n Eskob e-unan
 en devoa lavaret d'ezi n'oa ket merc'h da Vreiz kousket, evel
 ma 'z eus kals, met, ma 'z eo bet dihun eur pennad bennak,
 ar baotrez kaez-se a rank beza en em roet da gousket adarre,
 rak abaoe m'hon eus digoret aman kenstrivadeg an dañvoez-
 rien. — digor ivez, na petra 'ta, d'an tahvoezered. — etouez
 ar respouchoù am eus bet ne gavan nemet respouchoù paotred
 vihan; ar merc'hed bihan n'o deus degaset netra; kousket int
 chomet epad an hanv; kreñ 'ran, koulskoude, e plij d'ezo
Feiz ha Breiz ar Vugale, giskouezit neuze ivez eta, dre ho
 skridoù ez oc'h ker gouest hag ar baotred d'e gaeraat ha d'e
 astenn. Holl yugale Breiz-Izel a dle en em unani en dro d'ar
 bizzoneg, evit hen eskri, hel lenn, her skriva !

Degaset d'eomp eta, kent ma c'helloc'h marvailhou berr,
 gerioù fentus, skoudeñnoù graet gant ho pluenn, skouderioù
 brouderez hag all, en eur ger ar pezh a ra plijadur d'eo'h, et
 ger, hag ar pezh ho peuz desket er skol.

Klevit 'ta! n'heller ket chom kousket edoug an holl amzer!

Ar Breur Bras.

Taolit evez. — Kasi, ho paperou kenta ma c'helloc'h da :
 M. le directeur du « *Feiz ha Breiz* », Seignac, (Finistère), a en
 em gargo 'o c'has d'Ar Breur Bras.

Frizioù kaer kenan a vezo roet evit peh oberenn a vezo
 kavet brao a-walc'h da veza moulet e *Feiz ha Breiz*.



Lizig d'he contr. -- Perak, tonton Per, n'ho peus ket a zeni ?

— Kouezet int, va merc'hig.

— Ha perak n'ho peus ket o dastumet ?

Ar mestr-skol. — Lavaret em eus d'eoc'h penaos e vez graet ar gountell. Lavar d'in, breman, Lanig, peseurt lodenn eo ar wella enni.

Lanig a jom mut evel eur pesk.

Ar mestr-skol. — Me a ya d'az sikour da gaout ar respont; eus peseurt lodenn eus ar gountell eo ec'h er em zervich an aliêsa da dad ?

Lanig (gant eur mousc'hoars). — Eus an cistoufer a zo en he c'heim, Aotrou !

Maeronez Marivonig he deus promete eur verc'hodenn d'he filhorez vihan a-benn he gouel, unan gaer hag a gomzo zoken. Daoust da-ze e weler an daelou o pignat da zaou-lagad ar verc'h :

— Petra, eme he maeronez, ne blijjo ket ar verc'hodenn-se, d'it ?


— Nann! avat, gwelloc'h eo ganen ne gomzfe ket! Ma komz, e c'houlenno an holl frouez hag an holl vadigou digant va mamm ha Petra jomo ganen-me neuze ?

Hi! Hi! Hi!

Eus tremeniad a c'houlenn ouz Laouik krog en e bemp bloaz, abaoe gouel Mikael diveza :

— Petra 'ri, pao'rig, pâ vezi bras ?

— Rei madigou d'ar re vihan! eme Laouik.



Per. — Lavar d'in 'ta, Janig, petra eo farsusa tra a zo er vro ?

Janig. — Jaketa Beg-a-raok, sur a-walc'h, a rank gouzout atao petra dre-men e kement ti a zo er barrez !

Ar mestr-skol. — Perig, lavar d'in pe-ra vez graet gant ar gloan ?

Perig ne lavar ger.

Ar mestr-skol. — Sell, gant petra eo graet 'ca vragez, ma n'eo ket gant gloan eo !

Perig. — Gant bragez kez va zad. Aotrou!

Dagu ziavaeziad a zell ouz eur maner koz; bleiner an auto o deus kemeret da ober o zro a lavar d'ezo :

— Ar c'hastell-man a zo bet save: er XIV^{vet} kantved.

— Ya! brao a-walc'h eo, eme ar re-man, met perak 'oar aet d'e zevl keit all diouz an hent-houarn !

Theresaik tri bloaz a zo bet gourdroutet gant he zad, dre ma n'oa ket bet fur a-walc'h; nebeud amzer goudeze, he zad a lavaras d'zei :

— Pok d'in breman, ha peoc'h war ar pezh a zo tremenet.

— O ! nann, va zad.

— Perak 'ta ?

— Poan a' rafes c'fin ker kalet all ha m'eo 'ca varo.

Ar geriou farsus-mann a zo bet kaset gant J.-L. Caer, eus ar Roc'h, e Plouenan; kemerit skouer warnan, lennerien ha lennerezed bihan Feiz ha Breiz.



Maro kalonek eur c'hristen yaouank



E bloaveziou diweza an xviii^{vet} kantved e savas eun Dispac'h spontus e Bro-C'hall; ar roue Loeiz XVI a voe dibennet ha pennou bras ar Republikaned a gemeras e zañvez hag e c'halloud.

N'eo ket hepken ouz ar roue eo ec'h en em gemere an Dispac'herien-se; c'hoant diskar ar relijion o devoa ivez; lezennou fall o devoa savet evit dont a-benn eus o zaol hag ar veleien ne blegent ket d'ezo n'o devoa nemed eun dra da c'hortoz : ar maro pe an liarlu.

Kristenien virvidik hag a oa skeudenn ar Galen Zakr war o c'halon ha gwad yac'h dindan o ivinou a en em glevas hag a glaskas diarbenn soudarded ar Republik.

Eun dervez unan anezo a gouezas, heb e c'houzout, etre d'acuarn ar re-man :

— Paotr, a voe lavaret d'ezan, aze dirazout ez eus eur groaz prenn, hag aman, e kichen, eur vouc'hal. Kemer ar vouc'hal-man ha diskar ar groaz-se hag e vezi lezet da vale !

Ar paotr yaouank ha n'en devoa ket aoun rak e skeud a grogas er vouc'hal, a bignas deleziou ar




groaz, a stouaz dirazi, a droas warzu gwaskerien e feiz hag a lavaras :

— Ar groaz a zo aman, o terc'hel astennet divrec'h an Aotrou Krist d'hor benniga, n'hen disakrin ket, met gwas-a-ze d'ar c'henta a deui da glask trabas outi; mervel a rin kentoc'h eged en em zaotri gand eur pe-c'hed ken heugus hag an hini ho peus c'hoant am lakañ da ober !

Eun tenn fuzuilh hen diskaras met kroaz Hor Zalver he devoa, da vihana, kavet eun difenner hag an Iliz eur merzer muioc'h da renka etouez he bugale er baradoz.

RONAN PLEYBER-KRIST.





GLAODA ar BOUTEGER

En eun ti soul, harp en-hent bras, a veve ar paour kaez Glaoda hag e bried Mena; e vicher oa ober boutigi ha panerow ha Mena pa veze brao an amzer a 'z ae war lez an hent gant he bioc'h zu.

Eun dervez, Glaoda a-lavara d'e bried:

— Ne welan ket sklêr ken da labourat ha c'houi a vez skuiz o klask bevans d'ar vioc'h; denet ez eus d'in sonj da veza klevet lavaret ez eus tud hag a c'houlenn sikour ouz an daoul ha ne vank netra d'ezo!

Kerkent ha m'en devoa lavaret e gomz e welas eur pikol tra; tres eun den d'ezan, en e zav dirazan gand eur yal-c'had aour:

— Setu aze, emezan, peadra d'eoc'h ho taou da vev di-breder ha da zibri friko hervez ho c'hoant; abenn dek vloaz me a deuo adarre, dre aman. Kenavo!

Glaoda hag e bried a veve eurus, en o zi soul, kement ha ma c'hell an den beza eurus er bedman; an dek vloaz a dremenas, evel eul luc'bedenn; eur veurevez e weljont mesir an diaoulou o lakaat e dreid war dreujou o zi:

— Ema echu ar



ar marc'had, emezan, deuit d'am heul!

— : Ni 'zonje, eme C'hlaoda, ne oa c'hoaz tremenet nemet pemp bloaz abaoe ma oac'h bet aman!

— : Met! p'eo gwir e welan n'oc'h ket skuiz c'hoaz, war an douar, me deuo d'ho kaout abenn teir gwech ha ma livirit d'in hoc'h oad; ma ho lezo e peoc'h! Pe oad am eus, a gav d'eoc'h?

— : Pemp bloaz ha tri ugent, eme C'hlaoda.

— : Kazeg! eme baotr ar c'herniek. Kenavezo war-c'hoaz!

E c'hellit kredi an daou goz kaez a bedas holl zeni ar baradoz da zont war o sikour. An amzer a oa yen; an erc'h a goueze war an douar; ar c'hamfart, daoust da ze a en em gavas abred:

— Divinet ho peus, hizio?

— : Dek vloaz ha tri ugent, eme C'hlaoda.

— : Koll adarre! eme Lusifer, a c'hoarze etre e zent o sonjal en divije kompagnumez da vont gantan, en dervez warlerc'h.

An daou goz kaez ne gouskjont berad epad an noz. Antronoz abred, Glaoda, a lavara d'e bried:

— Mont a ran da wellet ha me a c'hellô tena eur vetenn (1) da Lusifer goz; er straed zoun ez eus eur wezenn gleus da guzai. Mont a ran enni; goudeze e vezo gwelet.



Ha Glaoda er wezenn gleus; dem-goude, p'edo Paolig o paouez tremen, ar bouteger koz a en em lakeas da gana :

— Koukouk ! Koukouk ! Koukouk !

— : Setu aman eur c'hoari, avat, eme an diaoul; eiz vloaz ha tri ugent am eus ha biskoaz n'em eus klevet ar goukouk a kana hag erc'h teo war an douar!

M'hen asur d'eoc'h, Glaoda n'edo ket e zaou droad gantan er memes botez da zont en dro. P'en em gavas en ti, dre an nor a-dre kein, edo ar blogorn war dreujou an nor all, pres warnan :

— Setu me, deuet adarre, evid ar wech ziweza; pe oad am eus ?

— : Eiz vloaz ha tri ugent, eme C'hlaoda.

— : Koll oun ganez, eme an diaoul kounnaret.

Paotr e forc'h a yeas ac'hano en eur lezel a bep surl malloziou hag e weled an tan o strinka eus ar vein, bep kammed a rae !

Abaoc ne lakas ket e dreid en ti souk ha Glaoda ha Mena a vevas e peoc'h keit ha ma plijas gant Doue.

AR BREUR BIHAN,

Skeudennaduet gand an Alarc'h.

(1) *Eun dro-bleg.*



Feiz ha Breiz

Ar Brezoneg e Brest ⁽¹⁾

Daoust ha brezoneg a zo c'hoaz e Brest ? a c'houlennoc'h ouzin pa 'm gwelit o staga gand ar studiaden-mañ war stad ar brezoneg e Brest.

Hag e livirin d'eoc'h :

— Ya ! a drugarez Doue ha ken beo ha ken karet eo c'hoaz er gêr-mañ ha biskoaz.

E Breiz-Izel e komzer brezoneg ha brezoneg dreist-holl ; e Brest e komzer galleg ha galleg dreist-holl, met, daoust da-ze, ar brezoneg a vev, zoken e Brest, eun tamm e kuz, mar kirit, met beva ar ra. Trec'het eo bet eun tamm, da welet, ha kement-se a zo digouezet dre ma teuas da Vrest, da heul mistri nevez Breiz, pa voe staget hor Bro ouz ar Frans, er bloaz 1532, eur bern diavaezidi a oa e kargou ar C'houarnamant hag a oa fae ganto deski yez hor Bro ; an dud-se ha ne oant deuet da Vrest nemed en eur dremen, war o meno, a en em blijas etouez ar Vretoned hag a zimezas gant Brestadzed, met o bugale, siouaz, ne voe desket nemet galleg d'ezo ha setu penaos, a nebeudou, eo deuet, e parrez ar Seiz Sant, parrez kenta Brest, niver ar re ne gomzent nemet galleg da greski.

(1) Prezegenn graet e Bleun-Brug Brest d'ar 5 a viz Gwengolo 1932.

Eur bern Bretoned ivez a zo deuet da jom e kêr, diwar ar maeziou tro-war-dro, evit labourat er porz pe e lec'h all ; dimezet int zoken gant Bretonezed, met o brasa mall o vont e kêr a voe lezel o brezoneg er gêr ; ken etrezo, priedou, e komzint brezoneg, c'hoaz, a-wechou, met ouz o bugale ne gomzint nemet galleg ha setu aze perak e c'heller lavaret ma 'z eus 100.000 den e Brest, en deiz a hizio, ez eus 50.000 da vihanan hag a zo o veva bemdez skoaz-ha-skoaz gant Bretoned hep beza gouest da ranna eur ger ganto, ma n'eo ket eun druez !

N'eo ket hanoiou brezonek eo a vank etouez kêr-riz Brest ; he fersoned a zoug hanoiou ha n'heller ket lavaret ne vefent ket breizek : an Aotronez Moenner, Bervet, Milin ha Bellec.

Er micheriu all e kaver ivez hanoiou kaera Leon, Treger, Kerne ha Gwened : Pouliquen, Guyader, Corr, Roscoat, Calloc'h, Mocaer, Jacuen, Gellebart, Kerneis, Kerboul hag all ; an dud-se hag a zo e kargou uhel a oar brezoneg hag her c'homz hep mez ebet hag en hent-se ar C'hallaoued a zo en dro d'ezo pe ar Vretoned o deus nac'het o gouenn hag a vev en o serr ne gradont ket teurel kement a zismegans, hag o divije c'hoant, war ar re a zalc'h da yez ar vro.

En tiez kenwerz hag en ostaleriu n'eo ket tud a vank o c'houzout hag o komz brezoneg ha ne vezer ket souezet pa zeller ouz hanoiou mistri an tiez-se : Kerbiriu, Pengam, Riou, Abalan, Touz, Cadiou, ar Bilhan, ar Eras, Lohu, Guivarc'h, ar Borgn, Branellec, Gloanec, Gourvez, Kervevan.

Ma 'z eus eleiz a dud diwar ar maez hag a deu e kêar da c'hounit o bara ha ma 'z eus kals

hag o deus mez eus o gouenn, ez eus ivez, a drugarez Doue, eleiz a re all hag a zalc'h mat da wiskamant ha da yez o farrez.

E Rekourans emma karter tud gourenez Kraozon ; tud ginidik eus a Blougastell a gaver e pevar c'horn kêr ; e Sant Varzin e kaver tud Leon, Treger ha Kerne hag an (dud-se) hag a en em zarempred bemdez ne lakeont ket keit amzer hag ar skrivagnerien evid unvani o brezoneg.

Ar mitizien ivez daoust m'emañt alies o serviça Gallaoued a jom hep nac'h o gouenn.

— Goulenn a rit ouzin eme eur vatez d'he mestr perak e talc'han d'am gwiskamant ha d'am brezoneg ; ma 'm dije dilezet va gwiskamant ne vijen ket bet ken en ho ti rak n'ho dije ket bet ezomm ac'hanoun ha m'hen dilefen e lavarfec'h d'in mont gant va hent. Ma tilesfen va brezoneg ne ouesfen mui penaoz komz ouz an Aotrou Doue hag ouz va zud koz.

Ma karfe ar Vretoned derc'hel goenv ha komz o brezoneg, hep mez, e pep lec'h, e kêr ha war ar maez, n'eus den, na gouarnamant ebet hag a c'hellfe herzel outo : Salaouit, n'eus ket gwall bellou e oa bet kondaoned, e gaou, gant Lez-Varn Brest, eur plouadkerne dre ma ne ouie ket a c'hallég a-walc'h d'en em zifenn : gelllet en divije lavaret d'e varnerien ar pez a lavaras eun dervez eur Provansad d'e re :

— Perak e teuit-hu da glask ober ho parnerien dre amañ pa ne ouezit ket zoken hor yez ?

Ar Provansad a voe kondaonet raktal gand e varnerien evit beza taolet dismegans warno dre ar gomz flemmus-se, met ar varnedigez displeal-se a voe torret nebeud goude gant barnerien Lez-Varn Uhela Paris : « *Ce n'est pas outrager un*

tribunal, eme ar re-man, que de revendiquer les conditions nécessaires de toute bonne justice. »

Ma fell d'eomp gwelet hor brezoneg o c'hounit e kêr Vrest hag e kerioù all Breiz-Izel an tachennoù en deus kollet, e rankimp gouzout sevel war hon treid evel ar Provansad kalonek-se.

Ma fell d'eomp ober vad d'ar brezoneg, kenta tra hon eus da ober eo dispenn al lavarou treuz a red etouez hor c'henvroiz hag a ra gaou outan.

Darn anezo a gred eo desketoc'h an hini ne oar nemet galleg eged an hini a oar brezoneg ha galleg!

Darn all a gred seul vuioùc'h a vrezonég a ouezo o bugale ha seul nebeutoc'h e ouezint a c'halleg.

Diskianterez an dra-se met eun diskianterez hag eo red he dispenn: seul-vui a yezou a ouezo eun den ha seul denoc'h e vezo.

Eur yez a zo eur prenestr digor war hor spe-red hag e c'hellomp drezam gwelet petra dremen e bro ar re her c'homz; seul-vui a yezou a ouezimp ha seul-vui eta ec'h astennimp hon deskadurez; eun den hag a oar diou yez a dalv daou zen!

An eil tra a vefe da ober eo skigna hor sonioù brezonek etouez an dud.

N'eus bro ebet o kaout sonioù ker kaer hag hor bro Breiz-Izel; Breiz eo bet a-viskoaz bro ar gannerien; breman mil bloaz hag ouspenn Gwenc'hlan a gane:

*Pa guz an heol, pa goenv ar mor,
Me 'oar kana war dreuz va dor,*

*Pa oan yaouank me a gane,
Pa 'z oun deut koz me 'gan ive,*

*Me gan en noz, me 'gan en de,
Ha me keuziet koulskoude!*

Ma oa barzed gwechall hag a zave gwerzioù trist ha sonioù dudius, o gouenn, a drugarez Doue, n'eo ket aet da hesk.

Peadra a gaver da gana e Kanaoüennou ar Bleun-Brug; e Sonioù Taldir, e trede leor Sonioù Fleiz ha Breiz, a gaver da brena e Ti-Breiz, 11, rue Algésiras, Brest.

An trede tra da ober eo lakat ar vugale hag ar yaouankiz en dro d'eomp da zeski yez, istor ha douaroniez Breiz; gourc'hemennet stris eo bet ober skol war an holl draou-se gand an Aotrou Duparc, e holl skolioù kristen an Eskopti.

N'eo ket ar gerent, nag ar vugale zoken eo a vez atao ar muia a-eneb ar brezoneg.

Bugale Skolach ar Wir Zikour dre eun enklask graet en o zouez er bloaz 1923, o devoa lavaret perak o devoa c'hoant hag ezomm da zeski ha da c'houzout mat ar brezoneg. Re skolachou all Brest, re ar merc'hed koulz ha re ar baotred, a respontfe ivez breman c'hoaz, m'oarvat, ma vije goulennet outo, ar pezh a respontas bugale ar Wir Zikour:

— Ni a fell d'eomp deski ha gouzout mat ar brezoneg, rak ne fell ket d'eomp nac'h hor gouenn: Bretoned omp rak hon hamoioù hen-diskouez ha p'eo gwir ez omp Bretoned e fleomp gouzout komz brezoneg.

— Ni a fell d'eomp deski ha gouzout mat ar brezoneg, rak darempred hon devezo gand ar Vretoned, hor c'henvroiz, hag eur vez eo d'eomp

chom hep gouzout petra leveront pa vezont o komz ken etrezo.

— Ni a fell d'eomp deski ha gouzout mat ar brezoneg rak seul-vui a yezou a oar eun den ha seul desketoc'h e vez hag e brezoneg e kaver eur bern tenzoriou gouest da gaeraat ha da binvidikaat an uhella sperejou.

— Ni a fell d'eomp deski ha gouzout mat ar brezoneg, rak mezus eo gwelet, en eur gêr vras evel Brest daou rumm dud o vevs skloaz-ha-skloaz hag enebour koulz lavaret an eil d'egile dre ma nac'h unan anezo deski yez egile. Ni venn ma ouezo holl vugale Brest diou yez ar Brezoneg hag ar Galleg ha ma c'hellint dre an diou yez-se deski kentoc'h a-ze kement yez all o defe ezomm pe c'hoant da c'houzout!

Ha pa c'hell bugale Brest harpa o goulennoù war hevelep digareziou ne welan ket perak e c'hellfed chom pelloc'h heb ober outo o lavarou!

*Bretoned, savomp hor c'halonou
Ha touomp e talc'himp atao
Da vale war roudou hon tadou
Keit ha ma 'z ay ar bed en dro.*

Treitour biken !
Kentoc'h mervel!


C. TREGUIER,
Kelenner e Skolach Sant Loeiz.



Sebastian ar Balp

Kabiten ar Bonedou rus

Hano a zo da zevel, en unan pe unan eus parrezioù ar Poher, eur skeudenn da Sebastian ar Balp, bet noter e Kergoff ha lazet en Ty-Meur, e Poullaouen, d'an 2 a viz gwengolo 1675, dre drubarderez, gand an A. Montgaillard.



Kastell an Tymeur en amzer ar Balp

Ar c'helou-se, na petra, en deus rannet ar Vretoned adarre, ne oar den e ped kostezenn, darn a-du, darn a-eneb.

Petra reas eta ar Balp ?

Lakaat e genvroiz d'en em zevel ouz an tailhou pounner a lake ar roue Loeiz XIV da boueza war ar Vretoned, evit gellout kas e vrezelioù bras en dro.

Daoust hag eur gwall dra e oa kement-se ?

Lezennou a zo hag e flear enebi outo.

En deiziou-man p'ema ar Frans gwasket dindan an tailhou kant gwech gwasoc'h, hep gaou ebet, eget ne oad gwechali goz en amzer ar-Rouaned, pa 'z eus kement a zienez, e pep bro, ma lavar ar Pab n'eus ket bet kement a drubuilh biskoaz, er bed, abaoe amzer an dour-beuz, evel ma 'z eus breman, daoust ha red e vezo kaout abeg ha fuzuilha kement hini a en em glemmo hag a lavaro n'eo ket evit paea ken e skodenn d'ar C'houarnamani; sonjit 'ta e rankomp lakat e kef ar Republik an drederenn eus ar pezh a c'hounezomp bemdez !

Hep beza eur zant, n'eo ket da lavaret e vefe ar Balp ker rus ha ker kris ha ma lavar tud a zo; ar pezh a zo sur, n'eo ket bet kaset e gorf d'ar vered hep kroaz, na beleg, na dour benniget, ar pezh a vije bet digouezet gantan, hep mar ebet, ma vije bet an torfetour skrifus a lavar darn.

Setu aman, war-ze, petra 'zo bet tennei gand an Aotrou Kerebel, person Poullaouen, diwar baperou koz Kergloff:

« Corps de M^e Sébastien Le Balp, notaire royal de 80 ans ou environ demeurant à Gars an Groas, décédé au château du Tymeur à nuit du deux ou trois jour du pr^m mois, a été enterré en l'église trévielle de Kergloff par vénérable Messire Jean Le Gall p^rtre de Pouloën assisté du sous-Hourman, curé. E^t assistent au convoi funèbre Mathieu Riou, son beau frère, Azne Riou sa veuffe qui ne signent.


Ce jour quatrieme septembre m^l six cent sep tante cinq.

HOURMAN.

Korf Sebastian ar Balp a voe douget eta gant lid bras da iliz Kergloff, kroaziou, bannielou ha relegou sent ar barrez, o kerzet en e raok ha seheliet e voe dirak an aoter vras; e enebourien gand ar gasoni o devoa outan hen tennas ac'hano, her stlejas, astennet war eur gloued, e henn troet warzu an douar, eus a Gergloff d'an Ty-meur hag hel lezas eno, krouget, a-wel d'an holl, evit beza peurzishen-velebet gand ar p'ked hag ar brini.

Sebastian ar Balp — hag a oa eta en e wir wella, 30 vloaz, — ma ne vije ket bet lazet, dre drubarderez, evel ma voe, en divije, da gredi eo, torret he ereou d'hor Breiz hag adgounezet d'ezhi he frankiz, er bloaz 1675; tenn e vije bet ar stourmad, met, ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv!

Eun enebour touet d'ar C'hallaoued e oa eta ar Balp hag eur gwall hini ha setu aze perak o devoa kement a gas outan evel m'o devoa: p'int bet gouest da zaotri e gorf



Iliz Kergloff

maro, evel m'o deus graet, int bet ker gouest all ivez da zaotri e vrud vat: kondaonet eo bet gant gouarnamant e amzer; ne weler ket e vefe bet kondaonet gant beleien e vro; rak-se a-raok e gondaoni a-grenn, digoromp hon daou-lagad ha klaskomp sklerijenn : ar wirionez dreist pep tra!

Pa ne gléver nemed eur zon
N'heller klevet nemed eun ton.

Hep dale, eul levrig emaeur o sevel a daolo eur sklerijenn nevez war istor ar Balp ha neuze, e c'hellimp dougen eur varnedigez eünoc'h eget breman diwar e benn.

Setu aman, da c'headal, ar pezh hon eus kavet hon-unan: met, ret eo d'eomp hen anzañ, ne anavezomp diwarbenn Sebastian ar Balp nemed ar pezh a zo bet skrivet gant e enebourien touet ha setu perak eo ret teurel evez atao war ar pezh a leveront.



Eur bonned rus

Er bloaz 1675, ar roue Loeiz XIV hag a veze ato goulo e yalc'h, a lakeas, — daoust m'oa difennet mat outan ober kement-se gant lezenn Emgleo ar bloaz 1532. — tailhou nevez, e Breiz, war ar paper-timbr, al listri-kegin staen ha war ar butun; hano a oa zoken da lakat tailhou war an holen evel ma ne vije ket a-walc'h a wiriou dija war ar gwin-ardant evit lakat arc'hant ar Vretoned da goueza, bep bloaz, a vil lurion, eus pep parrez, e yalc'h ar Roue bras.

An nevezenti-se, digouezet e Breiz, en eur bloavezh m'oa fall du an eost a lakeas ar Vretoned da vont e kounnar rus eus an eil penn d'egile da Vreiz. Ne livirin ket aman petra dremenas etre Roazon ha Pont'n-Abad; lavaret a rin hepken ar pezh a dremenas e kosteziou Keraez, e bro Bastian ar Balp.

Mab oa Bastian da Fanch ar Balp, eur miliner o chom

er Vilin-Veur, e Kergloff; e dad, ha ne dlee lezel gantan memet dle ha skoueriou trist hen dimezas er bloaz 1662, d'e zeitek vloaz, gant Anna Riou, merc'h Maze Riou eus a Vagoarem, e Kergloff; prena a eure d'ezan, eur garg a noter, digant Louis ar Baellec, noter e Kergloff; 1.200

lur oa ar priz; dek vloaz goude, an noter nevez a dlee c'hoaz 900 lur da Louis ar Baellec, beleg, mab an noter koz. Pa voe kaset d'al Lez-varn, Bastian ar Balp a ziskouezas eur paper hag a verke en devoa e dad prestet 900 lur da Louis ar Baellec, an noter ha p'eo gwir en devoa paet 300 lur all ne dlee gwenneg ebet ken eta d'e vab beleg.


Ar varnerien, — met piou a oar ne fazient ket, — a glevas c'houez ar gaou gant ar paper-se diskouezet war an diwezadou ha Bastian ar Balp a voe klozet e prizon Montroulez, er bloaz 1673; er bloavezh warlerc'h e voe silapet e prizon Keraez; wardro hanter mezeven 1675, koueriaded e vro, — leshanvet ar « bonedou rus » dre m'edo ar c'hiz ganto da zougenn bonedou al liou-ze, en amzer-ze, — skuiz o welët an tailhou o vont war gresk dalc'h mat, a dorras dor e brizon hag hen dibabas evit beza o c'habiten.

Bastian ne gollas ket e amzer; d'ar 7 a viz gouere, an dra-ze a oa da zul, paotred ar Bonedou Rus a zailhas war di an Aotrou Chateaufort, paotr ar gwiriou war ar gwin e Keraez ha tro-war dro; e arrebbeuri a voe laeret; e baperou devet; e win evet; unan eus e vevelien lazet; d'ar zul-ze ivez, ti ar Porcher, noter e Spezet a voe laeret; e wreg, en he strafuilh a en em guzas en iliz, a-dre kein an aoter vras; pevar dervez goude kloc'h an tangwall a voe sonet e ugent parrez ar Poher; 6.000 den a zailhas war 'gastell Kergoët e Sant Hernin hag a lakas an tan ennan en aoun na deuje da goueza etre daouarn an A. de Chaulnes, gouarner Breiz, o brasa enebour.

Ac'hano darn anezo a yeas da gastell an Ty-Meur, perc'hennet neuze gant Mauriseta 'r Plœuc, intañvez markiz Kervaon, hag a oa dimezet, goude maro he gwaz kenta, gant markiz Montgaillard. Ne ouezer ket pe ez edo ar Balp en o fenn pe ne 'z edo ket; ar pezh a zo sur laeret e voe, da vihana, eleiz a draou er c'hastell ha devet eul lodenn vat anezan. Ar Bonedou Rus a lake an tan e tiez paotred ar gwir hag e kestell ar vistri a oa anavezet dre ar vro evit beza re stris e kenver o merourien, met ne rejont droug ebet d'an dudchentil vat a

gavent war o hent; evelse, aotrou ar Rusquec, e Lokeoret ne voe klasket trabas ebet outan.

Tamallet eo bet ar « Bonedou Rus » da veza lazet an dudchentil a zisplije d'ezo ouz o staga a-istribilh ouz touriou an ilizou, met ar re a damall an torfejou-ze d'ezo n'o deus ket gellet biskoaz rei hano *unan hepken* eus ar re o defe bet krouget evelse.



Ar pez a jom eus Kastell an Tymeur goude m'oa bet devei gant ar Bonedou Rus

Ar pez a zo sur eo e klaske Bonedou Rus ar Poher lakat an dudchentil da vale ganto ha da gaout mat Leor Gouennou ar Gouerien, « le Code Paysan » edont o paouez sevel a-unan gant bonedou Glas Kerne-Izel, e chapel Itron Varia Treminou e Ploveur, harp e Pont 'n Abad, d'an 2 a viz Gouere 1675; ar Balp, da gredi eo, a oa ivez er vodadeg-se. Dre an tamm « Code Paysan »-se e weler o devoa c'hoant ar gouerien d'en em lakat war an hevelep renk-gand an noblans; goulenn a raent ma c'hellje an dudchentil dimezi gant merc'hed ar goue-

rien hag ar gouerien ivez, na petra 'ta, gant merc'hed an dudchentil... ma vije rannet, evit netra ar butun-gand ar bara benniget, en oferenn-bred, da zul... ma vije paeet ar veleien diouz o labour ha netra ken... ma vije barnet ar prosezou heb ezomm da rei eur gwenneg d'ar varnerien... ma vije taolet evid atao ar paper-timbr d'an traon..., ma vije difennet chaseal adalek miz meurz betek miz gwengolo... ma vije diskaret ar c'houldriou... ma vije



gellet kas ed da vala d'ar vilin a garfed ha ma ne vije ket kel laer ken ar vilinerien...

Dre-ze e weler ne oa ket fall holl kement-tra a c'houlenne Bonedou Rus ha Bonedou Glas Kerne, er bloaz 1675. Evit ma ne vezo den e gwask, eo mat lakat pep tra en e blas, hag ar bec'h e kreiz ar c'hraz!

Ar Balp a oa mestr ar Poher hag a lakeas en e benn mont da gemeret kêr Montroulez evit gellout, dre ar porz-mor kaer a oa eno, kaout skoazell ar Holland a oa neuze

he listri o vont hag o tont harp en hon aochou: evit gellout dont gwelloc'h a-ze a-benn eus e daol Bastian a glaskas eun den a vicher da lakat e penn e wazed. Markiz an Ty-Meur, an A. Montgaillard, bet kolonel e rejimant ar Champagn a gave gouest da gas e afferou da vat hag e c'houlennas outan bale e penn e Vonedou Rus warzu Montroulez; Montgaillard, hag a zaremprede kals gouarner Montroulez, a rae skouarn vouzar hag a lavare d'ar gouerien, evid ober aoun d'ezo, en devoa ar roue ousspenn 6.000 soudard e Kastell an Taro.

Sebastian ar Balp e lec'h bale raktal warzu Montroulez a vennas neuze bale warzu Kemper; lakat a eure seni kloc'h an tan-gwall e holl barrezioù ar Poher ha boda a eure 30.000 den; d'an 2 a viz Gwengolo 1675, diouz an noz, e tigouezas en Ty-Meur gant 2.000 anezo hag e pedas an A. Montgaillard hag e vreur da vale ganto, en o fenn; da hanter-noz n'o devoa ket gallet c'hoaz dont a-benn d'en em gleve; skuiz, ar Balp a lavaras d'ar markiz, o kredi gellout e c'hounit evelse, kentoc'h a-ze: « Ma ne deuit ket d'hon heul, ni ho krégoùz prenest ho kambr aze, bremaik! »

O klevet ar ger-se ar markiz a yeas e kounnar, a denas a-daol trumm e gleze hag a doullgovas ar Balp; henman a gouezas raktal d'an douar, a-stok-korf, maro-mik, hep beza bet amzer na tu d'en em zifenn!

An A. Montgaillard a gemeras neuze eur c'houlouenn en eun dourn ha gand e gleze en e zourn all e redas eus an eil penn d'egile d'ar c'hastell en eur youc'hal abouez e benn: Laz! Laz!

Diouallerien ar Balp strafuilhet a dec'has gand an 2.000 den a oa gourvezet war ar c'holo pe war al letoun, tro-war-dro d'ar maner; ar Bonedou Rus o welet e oa maro o c'habiten a zistroas pep hini d'e gêr.

Dre e daol kleze, aotrou an Ty-Meur, eur gall, ginidik eus al Languedoc, en devoa diarbennet ar Bonedou Rus; soudarded ar Roue a c'hell hiviziken bale dienkrez eus an eil penn d'egile da Vreiz hag an duk de Chaulnes, ober adarre e vestr ha dourn ar mestr-ze a voe kalet: « E kostezioù Kemperle, emezan, en unan eus al liziri

a skrivas neuze, gwez an hentchou bras a bleg gant samm an dud a zo krouget outo! »

Dre vrabanserez, m'oarvat, eo e skrive, gouarner Breiz, eun hevelep komz euzus ha n'eo ket la lavaret e vefe bet laket krouga, goude an Dispac'h-se ousspenn 20 pe 25 den, er Poher.

Loeiz XIV, neuze, n'eo ket boued d'ar brini eo en devoa ezomn, met tud da vont da rouenvat, war e listri bras! ha setu perak. Lez-Varn Kemper a gondaonas da vont d'ar galeou: Nikolas ar Gall, Per ar Gaonac'h, Jerom Lasul, Gwilhou ar Mao, Gwilhou ar Prat, Visant Donnartz, Per Lagadec, Loeiz an Teo, Alan an Daugant, Kaourintin ar Pennec, Herve Robin; kaset e voent d'ar galeou, gant chadenn ar c'haleourien, en dro d'o c'horf, d'ar 17 a viz c'houevrer 1676; laket e voe da vont d'o heul Yann Aseouët, kondaonet gant lez-varn Kemperle, Gloada an Douarain, Gloada Lavageain ha Fañch Bottorel, kondaonet e Kastellin, Yann Dello, eur beleg, eus a Geraëz, kondaonet e Keraëz, Thepaud ar C'horr, eun dihentil, Alan Maillard, eur beleg eus a Lanvenegen, e kichenik Guisriff.

Etouez ar re all a voe kondaonet hag a zoug hanoioù brezoneg e kavomp Julian ar Mel, Yann Toulmen, Yann ar Fischoux, Jaketa an Hostiz (houman a voe gwialennet, a-zoare, dirak an holl d'an 13 a viz mae 1676) ha Maze al Lardic heb ankounac'haat Gwilhou ar Baudouet, eur beleg, koudaonet d'ar galeou, e Konk-Kerne hag aet da heul ar jadennad galeourien d'an 29 a viz meurz 1677. Hanoioù an dud all bet kondaonet, d'ar galeou warlerc'h Dispac'h ar Bonedou Rus a zo hanoioù Bretoned ginidik eus a Vreiz-Uhel.

Sebastian ar Balp oa kabiten ar Bonedou Rus; ma vije bet gallet e dapa ez-veo e vije bet diframmet e gorf d'ezan war eur rod. Pa n'oad ket evid ober poan d'ezan ken, e klaskjod, da vibana, ober dismegans d'ezan ha da gement hini a oa bet a-du gantan.

E gorf a oa bet sebet, gand ar brasa enorioù, e iliz Kergloff d'ar 4 a viz gwengolo; ne voe ket lezet pell e peoc'h e douar benniget iliz e vadiziant; d'an 12 a viz

here warlerc'h, daou ugent dervez goude e varo, an A. de Marillac, unan eus evesaerien ar roue e Breiz, a c'hourc'hemennas da lez-varn Keraez ober e brosez: goulennet e voe ouz Intanvez an Ty-Meur ha ne zisplijfe ket d'ezi gwelet sevel, war ar rod, e kichen he c'hastell, korf



Korf ar Balp, savet war ar rod, e penn-bali an Ty-Meur, evit e gastiza da veza kredet enebi ouz tailhou re-bounner ar C'hallaoued.

brein he c'henvroad: ne lavaras ket nann-ha raktal ar c'horf paour-man a voe stlejet, war eur gloued, bruzunet e izili outan, a daoliou baz-houarn, ha savet goudeze, war eur rod, e penn bali ar c'hastell.

Kerent an hini maro, war a leverer, a deuas, nebeud goude, da gerc'hat, ar relegou, en noz hag o bezius a-nevez, e iliz Kergloff.

An A. Montgaillard ne jomas ket pell beo warlerc'h an hini en devoa lazec'h. D'an 12 a viz gwengolo en unan eus ruiou Keraez, daou zenchentil hag o devoa kas outan pell a oa, an A. Pontgan, breur da Itron Kergoët, hag an A. de Beaumont, hel lazas a daoliou kleze hag e intanvez kaer he devoa digeri prosez da vuntrerien he gwaz ne c'hellas morse lakat al Lez-Varn d'o c'hondaoni: an A. de Chaulnes o difenne.

Bet oun bet, breman ez eus c'houec'h vloaz o welet ar pez a jom eus kastell an Ty-Meur hag o sellet ouz eun ti e Garz-ar-Groaz, e Kergloff, hag a leverer oa ti ar Balp, met an ti-ze a zo bet savet er bloaz 1703 evel m'eo douget warnan e daou lec'h; a-dre an ti-se, ez eus eun ti koz laket breman da graou; en henez, avat, e c'hellfe beza bet Sebastian ar Balp o veva, p'eo gwir paper koz e varo a verk e oa o chom e Garz-ar-Groaz. Demdost d'ar geriadenn ez eus eur c'hroaz-hent hag er c'hroaz-hent-se eur groaz ha warni eur C'hrist hag eur Werc'hez, dibennet breman, hag a dle beza gwelet kabiten ar Boudou Rus o tremen dre eno meur a wech.

Ha setu aze petra a anavezet diwarbenn Sebastian ar Balp. Ioul en devoa da zifenn e genvroiz a oa eleiz anezo reuzeudik bras o doare: « O mistri, e meur a lec'h, eme an Tad Lefort, Reiner Tadou Kompagnunez Jezuz Kemper, n'o devoa ket muioc'h a drez outo eged ouz o c'hezeg » ha tailhou nevez ar C'houarnamant a deue c'hoaz d'o gwaska; n'oa ket enebour touet an noblans rak Markiz Nevet hag hen a skrive liziri hegarat an eil d'egile; ne reas droug ebet da aotronec'h an Ty-Meur p'eo gwir e voe tamallet ar markiz e-unan da veza bet re a-du gantan. Doujans en devoa evid ar veleien ha tri belega a varvas er galeou evit beza e harpet; pa deuas beleien Poul-laouen ha Plouye, gant 6 pe 700 den, war zikour Aotronec'h an Ty-Meur, prizoniet en o c'hastell gand ar Boudou Rus, Sebastian ar Balp a reas outo o lavarou.

Freuz a zo bet graet; tiez a zo bet devei; madou a zo bet laeret; eun den bennak zoken, siouaz, a zo bet lazet, lezennou ar brezel a zo kalet met piou a c'hell lavaret n'o devoa ket a wir ar Vretoned da glask diskar eur C'houarnamant hag o gwaske evel an hini a oa neuze?

Daoust hag ouspenn skanvaat stad ar gouerien e klaske ivez ar Balp terri an ereou a stande, gwasoc'h gwas, ar Frans en dro d'hor Breiz?

Martezel!

Eur wech c'hoaz ne lavaran ket e vefe didamall a-grenn ar Balp, met poan a ra d'in klevet ober eun torfetour eus ar re grisa anezan: Barnomp an holl, gant evez, ar re varo koulz hag ar re veo!

Diaes eo anaout ar wirionez. Tud a zo ha ne zellont ket petra da lavarout eus ar re n'emaint ket, eus ar pezh a c'halvont o c'hostezenn, ha gouzout a rit ervat:

Ma chom ar vrud vat e toull an nor
Ar vrud fall a ya beteg ar mor

Gwelit petra n'eus ket bet skrivet, e kazetennou ar C'hallaoned, en deziou tremen, diwarbenn ar Vretoned o devoa diskaret skeudenn roue ar Frans, diwar he zron, e Raqzon, d'ar 7 a viz Eost er bloaz-man.

Hag en deziou-man 'ta, petra ne leverer ket adarre diwarbenn ar re a drouc'has an hent-houarn e Ingrandes d'an 20 eus ar miz tremen?

Hag epad ar brezel bras diweza nak e spege en dud ar c'hlenved-se hom eus tro da glask e ziarbenn breman c'hoaz!

Selaout an istor-man tennet eus Buhez ar Pab Beneat XV, nevez skrivet gant ar senatour Crispolti, Renez ar *Messaggero*, unan eus kazetennou galloudusa kristenien an Itali:

Eun dervez an A. Crispolti ha tri aotrou bras all a oa aet da welet Beneat XV; unan eus an tri-man a c'houlennas ouz ar Pab skriva eul lizer kalet da ziarbenn krisder ar vrezelourien hag henvel ennan zoken ar re gablusa, en eur rei da anaout d'ar bed-holl o zorfejou gwas:

— Anaout ar wirionez, war draou a zo, eme ar Pab,

a zo diaes bras, hag ez eas da glask en eur stal, eus e gampr, eul lizer sinet gant eleiz a dud a renk uhel d'her pedi da gas e c'houardrouzou d'an Alamagn dre n'o devoa an Alamaned fuzuilhet eur Vikel-Vras, er Beljik:

— Tost eo bet d'in kredi ar pezh a oa merket war al lizer-se ha kerkent all em hije bet graet ar pezh a c'houlenned ouzin ennan:

— : Ha perak, Tad Santel, eme vignon an A. Crispolti, n'ho peus ket graet eun dra hag a vije bet meulet gant ar bed kristen a-bez?

Ha Beneat XV a yeas d'eur c'horn all eus e gampr hag a gemeras en eur stal eul lizer a oa nevez digouezet gantan: ar Vikel-Vras hag a lavared a oa bet fuzuilhet gant an Alamaned eo a skriva d'ezan da rei da anaout e oa pell diouz ar freuz ha yac'h mat er Holland. Hag ar Pab a lavaras:

— Gwelet a rit ac'han petra ne vije ket bet a dro da lavaret eus ar Pab ma'm hije bet graet ar pezh a c'houlennet ouzin ober!

En affer Bastian ar Balp ivez arabad d'eomp barri re vuan; fazia a c'hellfemp; gedomp ma vezo dispaket holl baperou prosez ar breizad-se dirak hon daoulagad a-raok her meuli pe hen tamall re en holl!

Karomp ar sklenjienn ha klaskomp ar wirionez.

G. P.



Franses ha Louiz

Breur bras Louiz a zo maro. Taget gant eur c'hlenved fall, eo bet meur a viz war e vele, hag, eun abar-daez, ar beleg a zo deuet d'ar gambr er c'houec'hvet estach, dindan an doenn. Gant madelez en deus komzet pell amzer ouz ar c'hlanvour a zelaoue sioul ha gant evez. Ar gommunion, an Nouenn... Hag epad an noz warlerc'h, ar breur bras a zo maro, heb en em glemm,

laouen hag eürus... Ha breman emamp er vered, deiz an anterramant. Aet int kuit ar re a zo deuet warlerc'h ar c'horf; met Fransez a jom ena, e kichen Louiz. Kregi a ra e dourn e vignon bihan, hag e valeont en aleziou, e kreiz ar beziou renket a bep tu.

Fransez. — Kendalc'h da lenva, va mignon ker, rak kement-se a ra vad.

Louiz. — Ma ouesfes!.. Oh! peger mat oa evidon araog e glenved! Hen eo am c'hasé d'ar skol, ha da c'houde e rede da vont d'e di-labour. D'ar zadorn, pa zistnoe, bet e bae d'ezan, atao e tigase d'in eun dra ben-nak.

Fransez. — Ah! ya, eur breur ez poa eus an dibab.

Louiz. — Ha neuze, aon am eus ne vije maro dre va faot d'in-me.

Fransez. — Penaos 'ta?

Louiz. — Ya, eur zulvez en doa va c'haset d'ober eun dio vale d'ar c'hoad. Hag e tirollas warnomp eur glac spontus. N'edo ket hor mantellou ganeomp. Neuze e kemeras e jiletenn war-c'horre da lakat d'in. Antro-noz edo krog ar paz ennan. Hag abaoe eo chomet klanv.

Fransez. — Met n'eus netra da rebech d'it. N'hellas ket divinout petra a vije c'hoarvezet.

Louiz. — Gwir eo. Met kaout eur breur evel hennez, ha gouzout n'her gwelin mui! An dra-ze a zo kalet!

Fransez. — Met gouzout a rez her gweli a-nevez.

Louiz. — Ya, ya; evelse e vez lavaret. Met, ha sur out?

Fransez. — Ya sur oun. Met kredi a rez e Doue, emichans?

Louiz. — Ya, sklaer eo.

Fransez. — Mat, gwelet a rez penaos en deus Doue renket an traou er bed. E pep lec'h ez eus urz. Gwel an heol, al loar, ar stered, an douar. Goude ar goanv e teu an nevez amzer, an hanv. Beb bloaz an douar a ro d'eomp kement hon eus ezomm. Pa daol al labou-

rer ed en e barkeier kempennet mat, e teu d'ezan east, hag e vez digollet eus e labour... Urz a zo e pep tra. Hag e kav d'it n'eus ket a urz e buhez an den?... Sonj mat. Da vreur a zo maro evit beza diskouezet karan-tez evidot. Evit pae n'en deus bet er bed-man nemet klenved ha poaniou, hag e karfes e vije echu an traou evelse? Daoust ha kement-se a vije renket mat, gant urz?...

Hag an holl dud keiz-ze a zo henvel outan... An tadou-ze o deus kollet o yec'hed dre labourat re evit sevel o bugale... ar mammou-ze a zo maro e kreiz ar boan... ar zoudarded-ze o deus skuilhet o gwad evit hon difenn, ha n'o deus bet pae ebet... hag ez eus eleiz a laeron, a hañhned pinvidik bras... Daoust hag an dra-ze a zo mat?

Louiz. — Gouzout a ran... Met, bez ez eus kement a dud o lavaret n'eus mui netra da c'hedal goude ar maro.

Fransez. — Traou diskiant a lavaront, va mignon. Ha neuze, sell mat. Lavaret a reont evelse, met ober a reont dishenvel; ober a reont evel pa vije eun dra ben-nak goude ar maro.

Louiz. — Penaos an dra-ze?

Fransez. — Daoust ha ne vez ket savet skeudennou da dud maro abaoe meur a gant vloaz, n'o deus mui hini ebet eus o lignez war an douar? Perak sevel d'ezo skeudennou, ma ne greder ket e ra an dra-ze eun tamm plijadur d'ezo? C'hoant o deus ober plijadur d'ar re varo, ha kredi a reont e welont ar pezh a zo graet war an douar evito.

Louiz. — Gwir eo.

Fransez. — Ar gredenn-ze a zo ennomp. N'hellomp ket asanti e vije fin da bep tra goude ar maro, rak neuze ne dalvesfe ket ar boan beza fur, onest, madele-zus. Ma ne vije nemet ar bed-man evit beza eürus, neuze pep hini a glaskfe kaout ar muia danvez, ar

muiia plijadur, hag ar buana ma c'hellfe. Ha gwaz a ze evit ar re all! Ar c'hrenva a vije ar mestr. Gwelet a rez petra e vije neuze ar bed! Brezel, lazerez, dizurz.

Louiz. — Ya, met ar pezh a ra poan d'in, eo sonjal n'hellan mui netra evit va breur bras. Ah! ma vije bet c'houmet ganeomp, em bije d'am zro gounezet arc'hant evit prena traou d'ober plijadur d'ezan.

Fransez. — Met muioc'h a c'hellez evitan. Mar deman c'hoaz er Purkator, kement pedenn a lavarez evitan, kement poan a c'houzanvez a zo talvoudus d'one. Mar deman er baradoz, eo eürus da viken. Kenderc'hel a ra d'az karet, hag evit ober plijadur d'ezan, bez santel, fur eveldan... Gwelet a rez, atao emaoch unanet... »

Dont a ra an noz. N'eus mui a dud er vered. Eun diwaller, soudard koz, diou groaz war e vruched, a dosta ouz an daou vignon...

An diwaller. — Allo, bugale, met eo kuitaat; distroit d'ar gêr.

Fransez. — Ya, Aotrou. Met an hini bihan aman en doa kalz poan, hag edon oc'h her frealzi.

An diwaller. — Kollet en deus unan bennak?

Louiz. — Ya, va breur bras.

An diwaller. — Mat, selaou, va mignon bihan. Lavar d'in e pelec'h em an ar bez, ha me, bemdez, pa rin va zro, a lavaro eur bedennig warnan.

Louiz. — Neuze, c'houi ive a gred e wel ar re varoac'hanoimp.

An diwaller. — Ya, va mignon, kredi a ran, rak, evel ma lavaro eur beleg soudard-lazet gant an obus a frikas d'in va brec'h. « Ma n'ez a ket hon esperans pelloc'h eget ar vuhez-man, ni a zo ar re walleürusa eus an dud. »

• Y. U.

Perig hag Azilis

Daoust ha klevet hoc'h eus ar c'helou? d'ar zul araok an Asvent oa bet an embannou ha prest goudé ar bloas nevez e vezo ar friko!

— Friko piou? emezoc'h:

— Hini Moris! deue; eo ennan e-unan, a drugare Doue! N'eo ket gand an danserez eo ez a, petra bennak ma rae an neuz da veza touellet ganti, met gand Oliv, ar bôtrez vat, ne c'hell ket hanter-drugarekaat an Aotrou Doue da veza selaouet he fedennou!

Deiz kel-ar-goanv, p'edon arru er maez eus ar wered, ec'h en em gavas Moris ganen:

— Ha d'eo'h, Tintin goz; seder oc'h atao?

— Ne 'z a ket re gaer, va faotr emeve, n'ouzoun dare ha d'az eured e c'hellin mont!

— Evelato, emezan, n'hoc'h eus ket kredet er sorc'hennou savet gand an dud? emaoun o vont da zimezi gant Sylvin?

— Feiz! emeve, n'am befe ket roet kalz a veuleudi d'id m'az pefe graet an taol-ze? Tamm boedenn-benn ebet, hag eun hano divalo! setu aze ar vaouez.

— Ha d'ho sonj, va zintin, gant piou eo d'in mont neuze? emezan.

— Anaout a rez va sonj, pell a zo! gouzout a res e pelec'h ez eus eur plac'h yaouank fur, leal, eün a spered; eul labourerez vat ha n'eus ket a veskellou ganti: hounnez he deus joa ouzit, n'eo ket eben eo!

— Eus Oliv e lavarit hano, n'eo ket? Me oar n'eo ket henvel ouz kentoc'h, pa n'oa nemed avel en he fenn, met ne zell mui ouzin, ne vez ket kals o pourmen ha... ne gredan ket komz outi!

— Mat, me lavar d'id e c'helles ober! ne baki ket da sac'h, bez dinec'h!

War ar ger-ze en deus va c'huitaet, ha me a bede Doue d'e sklerijenna...

D'ar zul war-lerc'h e teuas laouen d'am c'haout, met gand Oliv am oa klevet araok! mall bras he devoa da ziskouez he levenez!

Va zrugarekaat o deus graet o daou, ha koulskoude n'am eus graet nemed alia Moris ha rei fisianz dezan. Brasa joa ar re goz eo gwelet ar re yaouank laouen en onestiz, o heuilh an hent merket d'ezo gand o C'hrouer.

Setu aze eur pôtr yaouank ha ne ranko ket redet-bro, evel Fanch. Brema e teu da zonj d'in n'oa ket echu *istor Janned ganen!* ma kirit ec'h echuin!

Rak-se, eta, goude m'en devoa gwelet ar paour kez ki er pod-soubenn, bleo hag all, Fanch, donjeret a en em lakeas en hent, da welet ha kaout a rafe ken diskiant ha Janned war an douar.

Eul leo pelloc'h eged an Naoned, e welas tri gwaz war doenn eun ti-soul, o zri o chacha war eul liamm, a oa stag ous kerniel eur vioc'h, a oa tri all d'an traon oc'h esa dibrada da gas war an doenn.

— « Oc'h ober petra emaoch? emezan.

Perc'hennez ar vioc'h a lavaras:

— « Ne weles ket pegen drus eo ar peuri war an doenn? me am eus kemennet d'ar re-man kas va bioc'h di da beuri leun he c'hof! »

Setu, eme Fanch outan e-unan eur vaouez ker sot ha Janned!

Eur pennad bale diouz eno, hor reder-bro a welas eur vamm, he faotrig bihan ganti war he barlenn, eur gountell en he dourn, o klask rakla eun tam bennag eus penn ar c'hrouadur! ar paour kêz bihan a youc'he hag en em zioualle gwella me c'helle :

— « O mamm griz, eme Fanch, chomit a-zav! emaoch o vont da laza ho paotr!

— « Den yaouank, eme ar vamm, me oar vat petra rañ! tok va mabig a zo deuet da veza re vihan d'ezan, hag e rankan bihannaat e benn! »

Mat! eme Fanch, n'am eus ket ranket mont pell evit kaout diou vaouez ker sot ha Janned, diskiantoc'h zoken! hag e tizroas war e giz. Mont a reas adarre wardro Janned, rak kaout a rae dezan e teskfe eun tamm skiant en e serr. Ar friko a voe graet dindan eiz dervez; met Janned, bet genaouegez pa oa plac'h yaouank, a jomas genaouegez pa oa dimezet, ha Fanch a fallgalone! Eun dervez, e kavas e wreg azezet, war al létoun, e-kichen ar harz, nevez laket an dilhad da zec'ha ganti :

— « Petra res aze? emezan.

— « O c'hedal an dilhad da zec'ha emaoun! emezi.

Etre daou, e chome al labour da ober hag an arc'hant a ruilhe atao! — « Da baour ez aimp gand eur vaouez ken dibreder »! eme ar paour kêz Fanch :

Hag, eun dro, inouet maro ha dinerzet e galon, e sonjas mont eus ar vro, er maez eus Breiz!

— El lec'h m'az eus eleiz a verc'hed diskiant, emezan d'e dad, ne vezo ket sellet kement ous va gwreg, hag e c'hellimp ober hon treuz! Allo, Janned, emezan chach an nor war da lerc'h ha deus ganen! »

Eur pennad hent en devoa graet dija pa glevas unan bennag oc'h huanada hag o klemm, evel ma ra eur c'hristen daou-bleget dindan eur bec'h pounner; trei a reas e penn, muioc'h evit sellet eur wech c'hoaz ous e di hag ous e zouar, eged evit gouzout piou a derme evelse, ha petra welas?

Janned, an no war he c'hein, dihalanet dija o klask mont da heul he fried !!!

— « Lavaret az poe graet d'in chacha an nor war va lerc'h! c'hoari am eus bet evit he distaga eus he mudu-rennou. O! me zo tomm d'in! »

Tost ouz eur c'hoad edont; an noz a oa arru warno; azeza rejont e-kichen eur wezenn zero hag e savjont an nor war ar skourrou izel evit kaout goudor ha kouskat eur frapad! A-vec'h m'edont eno sioul o daou, ma teuas laeron da ziskuiza ive dindan ar wezenn deo; da ziskuiza... ha da lodenna ar pezh o devoa laeret: aour, arc'hant ha traou all. A-greiz o c'hont, e voent spountet gant eun dra bennak o koueza warno: « Holla!!! eme Janned! Kement oa en em zi-fretet ma riklas an nor diwar ar skour, Fanch, hag e vuia karet a voe taolet war an tri laër! ar re-ma a dec'has buana ma c'helljont en eur grial: « An archerien! an archerien pe an diaoul! »

Janned, mestrez war an dachenn, a gargas he godelloù a draou laeret hag a redas beteg ar gêr:

« Han! emezi d'he gwaz, boued gounezet hon eus brema! »

An nor a jomas el lec'h m'oa kouezet, hag ar wreg a jomas diskiant epad he buhez. Araok mervel e lavaras da Fanch :

— « Eur yaouez all a ranki klask da c'houzout petra eo an talvoudusa: pe an arc'hant pe ar skiant, met ne gavi hini ebet ker fur ha me na ker pinvidik! »

Me a gav d'in ne zentaş ket Fanch outi! chom a eure intanv; bet paket eur wech, ne fote ket dezan beza diou hag ar c'hren-lavar a zo gwir: « Kaz skaolet gant dour tomm en deus aoun zoken rak dour yen! »

TINTEN ANNA.

D'AN NEC'H

An amzer diganit a lamm da vloaveziou,
Buhan ez ay d'an besk feunteun da zeveziou;
Ha war eur palleun gloan pe war eur c'hoc'hed pell,
Hep mouez hag hep allan, e kouski a raok pell.

Petra eo da vuhez, paourkaez krouadur fall,
Nemet eur pennad-bient etrezeg ar bed all?
Echu e vo ganez da veach hep dale,
Ha goude pebez gobr, ma vez eün da vale!

Graet gantan e labour gant aked hag evez,
An den a douch e bae, pa vez fin d'an devez;
Doue d'e vugale, dirazan deut diouz tro,
En eun doare kaeroc'h, priz o labour a ro.

Da gorf, war an douar bet lojeiz ar c'hlenved,
Bet, goude da varo, preiz flerius ar prenvéd,
Diouz ar bez a zavo, fresk, skanv, skedus meurbet,
Ha n'en do mui warnan an ankou gwir ebet.

Ne anavezi mui an naon nag ar sec'hed,
Nag ar c'hlemm, nag ar c'haon, ganet diouz ar pec'hed,
Hag euz da zaoulagad, gleb-dour d'an euriou fall,
Ne gouezo war da jod mui ken daelou gwechall.

Da galon ankeniet, da galon baour he doa
Tanvet muioc'h a boan eget evet a joa,
Da galon bet flastret gant morzol ar maro,
Eur gened hep he far en nenvou a garo.
Buan ez ay dan besk feuten da zeveziou ;

Da volentez ivez, bet mil gwech tost d'he c'holl.
Bet hejet heb ehan gant an avellou foll,
Gant skeulm ar garantez stag ouz barlenn an Tad,
El lec'h dudius-se, ne chanjo mui a stad.

Da spered, (c'burzud), da spered, a ! hennez
'N do al lodenn genta, kristen ha kristenez,
'Vel ar yeot, doue er waz, dre ar maesiou bleuniet,
Gant mor ar wirionez e vezo peurleuniet.

Met, siouaz! va c'homzou a zo komzou netra,
Rag an nenv d'an douar a guz ar pez a ra;
Eur evelato piou bennak a boanio:
Da viken, en e di, gant an Oan e koanio.

Trubuilhou az pezo, a bep seurt, a bep liou,
Enkreiz en da ene hag en da gorf gouliou;
N'eus forz, d'an de merket, laouen te zilhuo
Hag ar Mestr gant e c'hloar da dal a guruno.


J.L'HELGOUAC'H, O. M. I.

SANT-BRIEG, 11-11-32.


KAN-EURED

Komsou gant an ao. MEVEL.

Ton nevez gant an ao. MAYET.




Tad, Mab ha Spe-red glan er ba-ra-doz o ren, Tri ferson



e-vu-rus en eun Dou-e hep-ken. C'houi hag ho peus krou-et an




nenv hag an dou-ar E-vit ho ka-ran-tez hag e-vit ho klo-



ar: As-ten-nit, en deiz-ma, war daou bri-ed kris-ten, Ho



tourn holl gal-lou-dus, ma ve-zint eur skeu-denn Eus



hoc'h un-va-ni-ez Hag eus ho san-te-lez.

I

Tad, Mab ha Spered glân, er baradoz o ren,
Tri ferson evurus en eun Doue hepken,
C'houi hag ho peus krouet an Nenv hag an douar,
Evit ho karantez hag evit ho kloar:
Astennit en deiz-ma, war daou bried kristen
Ho tourn holl-galloudus, ma vezint eur skeudenn
Eus hoc'h unvaniez
Hag eus ho santélez.

II

O tad ho peus, en Nenv, eur Mab ouzoc'h henvel,
A bep amzer ganet, ker mad ha ken uhel,
E fell deoc'h rei dreizan, da gement den a zo,
Buez 'vel hoc'h hini, ato trec'h d'ar maro;
Evel ma roit bleuniou da bep nevez amzer,
E ti ho pugale lakit buez seder
Hag ato levenez
E serr ho karantez.

III

O Mab, gloar an Tad, bepred en e gerc'hen
Hag eus e vadelez mellezour diroufenn,
C'houi ho peus kemeret korf hag ene dister
Evit doni er bed-ma da veza hor Zalver :
Roit gras da bep pried d'ober 'vit egile
'Vel peus gret hoc'h-unan e kenver pep ene,
O rei deomp ho puez
'Vit hor silvidigez.

IV

Ha C'houi Spered Santel, tan beo ar garantez,
En Tad hag en e Vab; ni wel, dre ho furnez,
En dro deomp er bed-ma, an urz o ren pep tra.
Ha gened hon Doue dirazomp o para:
Ama renevezit kalon an dud nevez
D'o lakat d'em garet dre nerz ho karantez,
Hag o dezc bepred
Braso'h evurusted.

V

Jezuz, Mari, Joseph, e tiik Nazareth
Skeudenn ken burzudus an uhela Dreinded,
C'houi ho peus digaset an Nenv war an douar
O veva 'vit Doue er boan hag er c'hlaç'har:
Selaouit pedennou kerent ha mignoured
O c'houlen diganeoc'h evit an daou bried
Peb vad hed-o buez,
Dreist holl ho karantez.

Cl. MEVEL.

Imprimatur,

Kemper, 20 gwengolo 1930,
P. MESSENGER. Vikel-Vras.

*Esout a c'heller ar c'hantik-man da brena e presbital Gwikourve
pe e Ti-Breiz. 11, rue Algésiras, Brest.*



Ho skoazell, bugale !

Ezomm hon eus, ac'hanoc'h, muioc'h eget biskoaz, bugale Feiz-Izel. Deuet eo an amzer evidoc'h da zihuna ha da zevrel war ho treid, da vat !

Gant harp ar strolladig lennerien a zo deuet davedomp betek-hen e welomp e c'hellomp kerzet war raok gant muioc'h-mui a fizians; goulenn a reomp hepken ma 'z ay c'hoaz an niver bihan-se war gresk hag eur wech c'hoaz e lavaran: Amzer da zont *Feiz ha Breiz* a zo etre ho taouarn.


Rak-se 'ta, diskouezit d'eomp emaoch aze, en ho sav, prest da rei an dourn evit kaeraat ha gwellaat *Feiz ha Breiz*.

Abenn eun nebeut deizioù e tigouezo adarre gouelioù laouen ginivelez ar Mabig Jezuz er c'hraou. Evel eleiz a vugale all, c'houi lennerien ha lennerezed karet a lakaio ho poutou en oaled; goulenn a reoc'h meur a dra ouz ar Mabig Jezuz; goulennit ivez digantan ho kommananti, ma n'oc'h ket komanantet c'hoaz da *Feiz ha Breiz*; n'oufec'h ket kaout, evid ar bloaz nevez, kaeroc'h kalanna !

Ober a raimp kement tra a vezo en ho galloud evit ma vezo *Feiz ha Breiz* 1933, eun dudi evid al lagad, ar spered hag ar galon: eus ho tu, klaskit d'eomp lennerien ha lennerezed nevez !

War-raok, bugale ha Breiz da virviken !

AR BREUR BRAS.



A LA JEUNESSE BRETONNE

A partir du *Feiz ha Breiz* de janvier 1933, qui paraîtra à l'occasion des fêtes de Noël, nous nous proposons de développer encore notre partie enfantine et d'y joindre chaque mois une douzaine de pages qui intéresseront tout spécialement nos jeunes gens et nos jeunes filles: entre *Feiz ha Breiz an Holl* qui intéressera toute la famille et *Feiz ha Breiz ar Vugale*, vous trouverez donc *Feiz ha Breiz ar Yaouankiz*.

Nous osons espérer que cette innovation sera bien accueillie par tous nos lecteurs et lectrices.

Feiz ha Breiz a une grande et noble tâche à accomplir: faire l'éducation et l'instruction bretonnes de la jeunesse catholique de Bretagne, et comme dans cette jeunesse nous comptons nécessairement plusieurs qui ignorent complètement notre Histoire et notre Langue nationales nous nous efforcerons de les leur apprendre et insérerons, dans ce but, tous les mois, quelques pages d'Histoire et des exercices bretons-français et français-bretons.

Pour que notre mouvement breton progresse constamment nous demandons à tous nos lecteurs et lectrices leur plus active collaboration.

Feiz ha Breiz doit être la Revue de tous, écrite par tous, propagée par tous !

Nous espérons donc que nos premiers collaborateurs trouveront de nombreux imitateurs qui lorsqu'il s'agira du salut de la Bretagne n'hésiteront pas à répondre immédiatement: Présent !

Evit Doue ha Breiz, war raok !

FEIZ HA BREIZ.



An Tan-gwall

Gwechall e oa, e Kerizel, eur merour hanvet Fanch ar Mengam; eur penn-fall a zen e oa hag an holl o devoa kas outan; drouk kenan e oa ouz e vevel bihan Mikaelik ha leshanvet e oa, gant eleiz, Fanch ar Gouez.

Mikaelik a oa eun emzivad, hep tad, na mamm, eur c'hrennard dek pe unnek vloaz, ha Fanch en devoa e gemeret da baotr-saout.

Mikaelik a oa mat da labourat evid e oad; sikour a rae e vestr da hada, da c'houennat ha d'ober an eost.


Perak eta en doa Fanch kement a gasoni ouz e vevel bihan? M'oarvat, ne ouie ket e-unan.

Ar paourkaez krouadur ne veze roet d'ezan da zebri nemet bara koz, hanter louet alies, hag eur banne dour d'e zouba. Fanch avat epad ma rae e baotr saout e bred a veze oc'h eva eur banne gwin mat hag o tebri bara ha kig sall, evel eur marlonk, en ostaleri dosta.

Eun abardaez, Fanch ar Gouez a deuas d'ar gêr diwez-toc'h eged en deziou-all.

— Mikaelik, emezan gand eur vouez c'haro, e pelec'h emaut ?

O veza ma ne glev e respont ebet e yeas eun droug spontus ennan; kemerout a eure eur fouet hag e reas tro ar vereuri; kaout a eure ar paotr, er c'hraou, ouz e c'houzella hag o lakat boued d'ar chatal.



— : Aze, emaut, lam-pour fall!... Deus aman dioc'htu ma vezo desket d'it diouall gwelloc'h an ti eget na res!

Mikaelik spontet a oa chomet en eur c'horn, hep respont; neuze e vestr, en e gounnar, a zistagas eun taol fouet gant an a-dreuz e benn; eun taol dourn d'e ziskar d'an

douar hag eun taol troad da ober d'ezan pignat er zolier, hag eur wech eno e vorailhas an nor warnan; ar paour kaez bugel, blonset tu ha tu, a gouezas, war leur ar gampr, badaouet hag hanter varo!

Ha setu hen dihonet ' demi-goude gant tommder an tan ha c'houez kreñv ar moged.

— Petra 'zo 'ta? emezan, enkrezet. Daoust ha krog e vefe an tan en ti ?

Siouaz! re wir oa edo an tan-gwall e Kerizel; flammou rus a veze gwelet o tont eus ar c'hraou, dre ar prenecher, gand eur moged teo a droidelle en dro d'ar geriadenn.

— Petra oa en em gavet?

Piou en devoa laket an tan-se?

Mikaelik strafuilhet holl a youc'has, a-bouez e benn; tud a ziredas, met an nor a oa morailhet gand ar paotr koz ha prenestr ar zolier a oa re voan evit ma c'hellje eun den tremen drezan.

An tan eus ar c'hraou a rede da lipat toenn an ti; ar paotr bihan pen-follet a youc'he atao, met an avel ha trouz ar c'hoatach o strakal a vire ouz an dud da glevet e glimmou.

Epad an amzer-se Fanch a oa en ostaleri; unan ben-nak a redas da lavaret d'ezan edo an tan-gwall e Kerizel; o klevet an nevezenti-se, Fanch a deuas da veza gwenn evel eun delienn-baper hag a redas ac'hano en eun tenn.



En eur vont gand e hent e teu eur zonj en e spered:

— Va Mikaelik, emezan daoust ha ne vezo ket devet ?

Ha Fanch da redek buana ma c'helle, ken e tenne e voutou an tan eus ar vein; erruet dirak e di e youc'has d'ar re holl a oa eno gant sailhadou-dour o klask mouga. an tan :

— Va mevel bihan Mikaelig a zo er zollier!

Fanch, goude m'en devoa roet e roustad bazadou d'e baotr-saout en devoa lezet e letern er c'hraou hag henman o koueza eo en devoa lakat an tan da gregi er plouz. hag eus ar c'hraou, an tan n'oa ket bet pell evit kregi en ti.

— Mil malloz d'in, a youc'he Fanch koz, en eur skrabat e benn, graet am eus ar pez ne rafe ket al loened gouez ; gant ma teuio an Aotrou Doue, da vihanan, da gaout truez outan !

An dud o devoa poan o laza an tan; er miziou du edod hag an avel a oa krenv; ha setu ma weljod, e toull ar prenestr eur penn: hini Mikaelik.

— Eur skeul buan! a lavaras an holl.

N'oa plas ebet evit lakat ar skeul ouz ar voger; re a dan a oa.

En eur ober kov-moan Mikael, a c'hellas dont er maez, dre ar prenestr... kregi a ra er voger... ar moged a zo ker krenv ma rank serra e zaoulagad... rinkla a ra... kregi a ra c'hoaz er vein... hag e kouez, a-fardigleo, en tan; en eul lamm hen tenner ac'hano... n'eo ket maro c'hoaz, a drugarez Doue.



.....
War eur gwele, Mikael a ziskreiz; eun den ankeniet a zo en e gichen; Fanch ar Mengam an hini eo; sellet a ra truezus ouz e vevel bihan; ar medesin en deus lava-



ret n'eo ket aet doun an deo hag e pareo :

— Paourkaez paotr, eme Fanch, ha lavaret eo dre va faot eo en em gavet kement-man ganez!

O klevet klemmou e vestr Mikaelig a zihunas hag a reas outan eur zelle karantezus :

— Perak e ouelit ?

— : O! paourkaez paotr,

mantrus eo e vijen aet da ober kement all !

— : N'eus droug ebet !

— : Va fardoni a res, Mikaelik ?

— : Ya! en hano va zad ha va mamm, hag en hano Doue ho pardonan !

— : Ra vezo meulet Hor Zalver! Hiviziken, eme Fanch ne vezo ket a ezomm da skuba ken an ostaleriou war va lerc'h-me; an ti-man a vezo da di te ha vezo va mab ha nann va mevel !

Skrivet ha skeudennaouet gant

Ronan Pleyber-Krist.



Eun darvoud mantrus !




E kreiz, e lec'h: Tinval a ra lenrit: Finvall a ra.

N'eus den fin ne gav e goulz




I. — Yann ar Fistouler a oa eur paotr drouk ha n'oa mat nemet da ober troiou fall d'an dud. Teurel a eure tachou lemm, eun dervez, dirak auto Heloisa ha Ronan, bugale an Aotrom Maer, a oa caskennet eus o c'harr evit mont da ober: eur weladenn d'an tiegez tosta.



II. — Heloisa he devoa gwellet Yann oc'h ober e daol fall; chom a eure sioul; Yann a zontje er blijaer en divije dizale o welou ar rodou o koll o c'houez hag an auto o chom a-zav, met Heloisa a lavaras d'he breur petra en devoa graet an ailhon.



III. — Heloisa ha Ronan, goude beza' graet o zro, a bignaps adarre en o auto, met Ronan e lec'h he lakât da vont war an tachou hel lakeas da zont war he c'hiz; Yann, hag a oa dres a-dre ar c'harr a dapas digantañ eur pok ker kalet ma voe strinket a-stok e gorf e foz an hent bras.



IV. — Han'er vadaouet e chomas eur pennad, o klask gouzout petra a oa digouezet gantan, met pa deuas ennau e-unan, e welas en devoa kavet eun all, hag hep beza ken drouk, a oa, eñ nebeuta, ker fin hag hen.

KELEIER AR MIZ

Gouelioù Holl Geltiek Brest

Hano a zo da ober, er bloaz a zeu, gouelioù holl-geltiek e Brest; er vodadeg kenta graet er miz tremen eo bet diskleriet, e vijent diazezet war diou goz reolenn hanter-vrein deuet eus kostezioù Paris: unan anezo an « neutralité religieuse », da lavaret eo nag a-du, nag a-eneb Feiz hag eben an « neutralité politique » da lavaret eo, nag a-du, nag a-eneb Breiz!

Gwall zislivet ha gwall varvlivet e vezo kavet ar gouelioù-se, 'm eus aoun, hag an darn vrasa eus ar Vretoned a ray evel o renerien, ne vezint nag a-du, nag a-eneb!

Etre Ingrandes ha Champtoce

D'an 20 a viz Du ez eus bet graet, ez-vihan, en Naoned, ar pezh a oa bet graet ez-vras, d'ar 7 a viz Eost, e Gwened, da lavaret eo gouelioù en enor d'ar pevar c'hantvet bloavezh aboc m'eo bet staget hor Breiz ouz ar Frans. Evit digeri gouelioù Gwened, eun tenn-min en devoa diskaret, diouz moger ti-kêr Roazon, ar Roue Charlez VIII, diwar e dron.

Evit digeri gouelioù an Naoned daou denn-min all, da 5 eur diouz ar beure, a ziframmas, eus o flas, ralhau daou hent-houarn, etre Ingrandes ha Champtoce, da lavarout eo harp ouz harzou Breiz, diou eur bennak hepken araok ma tlee tremen, dre eno, an A. Herriot, ar mestr-ministr a oa deuet adarre da ren gouelioù lorc'hus an Unvaniez. Den ebet n'eo bet glazet; tra pep tra a oa graet evit ma ne vije glazet den ebet; n'eo ket glaza tud eo a glas-ked nag e Ingrandes nag e Roazon! met hepken diskouez da C'houarnamant Frans n'eo ket deuet an holl eürusted e Breiz, warlerc'h an Unvaniez hag e c'hellfed e lec'h ober brezel e pep doare, da ene hor Bro, e harpa hag e zifenn!

Daoust ha kompren a ray en taol-man?

Bec'h am eus c'hoaz ouz her c'hredi rak poud eo a spe-red !

Nevezentioù laouenoc'h

D'ar 14 a viz du eo bet eureujet e iliz Perros, gant an A. Bellec, Vikel Vras Sant-Brieg, an A. Jalm Connan hag an Dimezell Mari Clou, an A. Yann Charlier hag an Dimezell Yvona Connan.

Hor gwella gourc'hemennou d'ar priegoù nevez.

Leor an A. Gwilhou

O deus rakprenet al leor e miz Du :

An A. Brochen, kelenner e kloerdi Sant-Brieg.....	2
An A. Lesvenan, person Landudal.....	2
An A. Appere, kloerdi bras Kemper.....	1
An A. Guerch, kloerdi bras Kemper.....	1
An A. Cousse, kloerdi bras Kemper.....	1
An A. Corre, kloerdi bras Kemper.....	1
An A. J. Kerhoas, kloerdi bras Kemper.....	1
An A. Miossec, kloerdi bras Kemper.....	1
An A. Cadiou, kloerdi bras Kemper.....	2
An Dimezell M. Yv. Picart, Guerruas, e Gwikourvest.....	1
An A. Queguiner, Scignac.....	1
An A. Perrot, Scignac.....	1
An A. Eugène Le Roux, Roscoff.....	1
An A. Geraint Dyfnallt Owen, Carmarthen Breiz-Veur.....	1
An A. Rene Caouissin, Pleyber-Krist.....	1
An A. Andre Prat, Pleyber-Krist.....	1

Etre holl 19

Leorioù rakprenet betek-hen :

$$981 + 19 = 1000.$$

Ha setu, diwar ar miz-man klozet da vat, rakprenadenn leor an A. Gwilhou emaoamp breman o vont da gas d'ar voulerez raktal ha fizians hon eus e vezo etre daouarn hon lennerien abenn daou viz bennak aman.

Divinadennou miz Kerzu

I. — Gwxll xx kxrxntxz xtrx dxxx
xgxt n'xx mxdxx lxx z xr c'hrxxx.

II. — xl lxc'h mx rx trx hx lxnx
'chxll pxp dxn lxxxt ehxnx.

III. — Px vxz xn xrc'h wxr xn dxxxr,
Nx vxz sxr nx txmm nx klxxxr.

Lakat er c'houec'h linenn uheloc'h ar vogalennou a
vank.



IV. — Ar paotr bihan-
man a zo o tenna patatez;
e pelec'h eman e bigell ?

V. — Aze e welit eun ti;
e herc'hen n'eman ket pell;
pelec'h eman ?

Digas responchou divinadennou Here, Du ha Kerzu, da
Rener Feiz ha Breiz, Scrignac, (Finistère), abenn Goue-
liou Nedeleg.

Etrennes Bretonnes !

FEIZ HA BREIZ, en l'année nouvelle 1933, sera le bien-
venu dans tous les foyers bretons,
parce que **FEIZ HA BREIZ** sera la revue idéale des fa-
milles bretonnes,
parce que **FEIZ HA BREIZ** sera la revue des Ecoles chré-
tiennes,
parce que **FEIZ HA BREIZ** sera la revue des Cercles d'é-
tudes,
parce que **FEIZ HA BREIZ** sera la revue de la Jeunesse
bretonne,
parce que **FEIZ HA BREIZ** sera la revue de nos petits
enfants,
parce que **FEIZ HA BREIZ** sera la revue de tous et de
chacun.

OUI, CAR...

Vous y trouverez chaque mois, sous une belle couver-
ture en trois couleurs, à partir du N° de Janvier 1933 :

- 1°) Un grand roman inédit, magnifiquement illustré,
- 2°) des contes et histoires de tous genres et de tous
pays,
- 3°) des articles religieux, des vies de nos Saints bre-
tons, des notices archéologiques,
- 4°) des Gwerziou et Soniou, accompagnées de leurs
mélodies,
- 5°) des pages ravissantes d'Histoire de Bretagne et
des leçons de langue bretonne,
- 6°) un Cours ménager, un traité d'Agriculture,
- 7°) des saynètes et monologues pour nos artistes bretons,
- 8°) des Récréations amusantes pour tous,

9°) Notez enfin que pour nos jeunes gens, nos jeunes filles et nos petits enfants, nous aurons, tous les mois, **22 PAGES SPECIALES ABONDAMMENT ILLUSTRÉES.**

50 pages illustrées pour un franc, constituent une **VERITABLE SURPRISE**, à la portée de toutes les bourses.

Il est impossible, en effet, de trouver actuellement dans le commerce pour ce prix triplé, aucune revue française analogue dominant un tel luxe d'illustrations inédites.

SOUTENEZ LA PRESSE BRETONNE.

Il n'y a pas seulement que la Bonne Presse en langue française qui soit Bonne Presse ; la presse en langue bretonne, quelle que soit la ville où elle s'édite, peut l'être tout autant, grâce à Dieu, et c'est aux Bretons nécessairement qu'il incombe de la soutenir et de la développer.

Si vous voulez être tenu au courant du mouvement breton catholique des *Bleun-Brug*, dont le XXIII^e congrès se tiendra à Pont-l'Abbé, en Basse-Cornouaille, les 3, 4, 5 et 6 Septembre prochain, abonnez-vous à *Feiz ha Breiz*.

ABONNEZ-VOUS, c'est bien !

ABONNEZ-VOS AMIS, c'est mieux !

ABONNEZ-VOUS dès maintenant ce sera parfait, et en tout cas avant le 15 décembre — dernier délai — si vous voulez recevoir tous les numéros de l'année 1933.

L'abonnement d'un an individuel :

Pour toute la Bretagne est de : 13 francs.

Pour la France et ses colonies : 15 francs.

Pour tous les autres pays : 20 francs.

Notez bien : L'abonnement collectif, à la condition de prendre au moins 5 numéros, est de 10 fr. l'an par exemplaire.

Prière d'adresser les abonnements collectifs et individuels à M. Fr. Georgetin, administrateur de « *Feiz ha Breiz* », 4, rue du Château, Brest. C./C. 44-40, Rennes.

TAOLENN 1932

KENTELIOU

PAJENN

Sonjezonou evit ar bloaz-nevez, gant L. B.	3
D'an dud yaouank, gant Y. U.	6
Perig hag Aziliz, gant Tintin Anna: 11, 48, 107, 140, 148, 236, 270, 332, 369, 412,	454
Pegen galloudus eo ar bedenn hag ar binijenn.	45
Ar Peoc'h etre ar Poblou, gant Y. U.	89
Hent ar Groaz	93
Me a fell d'in reiza va buhez evel a girin, gant Y. U.	104
Dansou-noz, Dansou-sul, poent e oa! gant Y. U.	133
Mamm Doue, gant an Tad Mateo Crawley-Boevey ..	177
Ar vaouez à nerz-kalon	221
Ar Galon-Zakr tronet en ti, troet gant Tintin Anna	265
Puhez tud va farrez, gant Loeiz ar Floc'h	281-336
Clemenceau hag ar c'hardinal Mercier, gant Y. U.	213
Bretagne et France, discours de Mgr Duparc.	353
Penaos sevel bugale, gant Tintin Anna	366
Ar brezoneg, ha chom a ray atao beo? gant Y. U.	397
Ar peoc'h hag ar brezel, gant Y. U.	451
Ar Brezoneg e Brest, gant C. Tréguier.	485

ISTOR

Moudennou ha Kestell, gant G. P.	15
Chapel I. V. ar Joa, e Penmarc'h, gant G. P.	62
Chapel Lokrist e Koray, gant G. P.	95
Sant Koz Breiz, gant J.-L. Gouzien	101
Gwez ivin berejou Breiz, gant G. P.	119
Penaos e veze hanvet maer Brest er XVII th kantved,	145
Sant Erwan, Tad hor Bro, gant E. Berthou	179
Peorien Breiz-Izel, gant G. P.	189
Sant Peran ha Sant Keran, gant G. P.	225
Skouarniou Bretoned, gant G. P.	247
Lizerennou koz ar Vretoned, gant G. P.	317
Chapel Sant Kaourintin, Trinivel, gant G. P.	328
Gouelioù eizvet kantved Abati ar Releg	373
Roazon ha Gwened, gant Y.-V. Perrot	382
I. V. an Drezenn e Joslin, gant eur Joslinad	401


Hor beziou kaz, gant G. P.	441
Sebastian ar Balp, gant G. P.	491

SONIOU HA GWERZIOU

It betek Betleem, gant an Tad L'Helgouac'h	1
Gwerz koz Markiz Pont-Kalleg	66
Kanaouenn ar Goa v, gant an Tad L'Helgoualc'h ..	111
Nevez-amzer, gant an Tad L'Helgouac'h	138
Klemyanou, gant Tintin Anna	143
Monig, gant Tintin Anna	199
Da Vari, gant an Tad L'Helgouac'h	209
N'eus ket 'giz barz Bannaieg	243
An tri Angelus, gant Taldir	286
O donsder! gant an Tad L'Helgouac'h	288
Sant Yann hag Herodez, gant Yann Wilhou	293
Ar Bara, gant an Tad L'Helgouac'h	330
Yez hon Tadou koz, gant an Tad L'Helgoualc'h ..	365
Ar Rozenn ruz, gant Evnig-Penn-ar-C'hoad	385
Pardaez eun dervez east, gant F. Jaffres	416
Diskar-Amzer, gant an Tad L'Helgoualc'h	418
O sonjal en anaon, gant an Tad L'Helgouac'h	463

MARVAILHOU

Boutou-Ier Yann ar Garreg, gant G. P.	24
Ar Mabig Jezus e snkr, gant H. Caouissin	29
Paolig hag an Aval, gant H. Caouissin	34
Pesketaerien, gant Yvonig	52
An teir bran, gant G. P.	113
Pask, gant H. Caouissin	148
Promesa Erwan Garadeg, gant H. Caouissin	155
Bleun-Lann, gant Yvonig	201
An Arab lezirek	240
Istoriou diwarbenn ar c'hizier e Breiz, gant G. P. ..	273
Breiz, gant G. P.	273
Ar goukou, gant Y. U.	289
Filhor an Ankou, gant G. P.	377
Gien Buzig, gant G. P.	458
Biniou Matulin, ar-zoner koz, gant an Alarc'h	465
Feiz ha Breiz ar Vugale, 22, 61, 68, 165, 211, 253,	
298, 340, 387, 432	477
Bleun-Brug, Brest, 309, 375,	420



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.cef.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011